

Yeun ar GOW

**Ar
Gêr
Villiget**

Danevell varzus ar Vretoned

**Ar
Gêr
Villiget**

Ar
GER
tobiliv

" Ar skrid-men a ginnigan, gant anacudegez-vat da J. Cozmerais, ma
mab-kaer, en deus bet ar vadelez da ziskoacha din, e meur a leor, kement
em boa ezomm evit e sevel hag a gemeras ar boan da adskrive kempenn ar
brouilhed a ris anean. "

Yeun ar Gow

IZ, A R G E R V I L L I G E T

ooo

gant Y E U N A R G O W

Pennad kenta

A L L E A N P E N E D D O U R

Duspenn hanteret e oa an noz, pa genas eun eostik er c'hoed divent ha tañval, tost d'eun digoadenn sklêroc'h, gwaskadet tro-war-dro gant melladou gwez deliaouek. Sioul e oa pep tra war-bouez nebeud, nemet e save, bep eur mare, eun hiboudig kufiv ha leun a beoc'h e-touez an deliou oitaskrena dindan anal an êzenn-hañv. A-wechou, ive, e trouze ar strouez hag ar bodadennoù keuneud yacouank, pa dremene dreizo loenedigou preizer o klask o boued.

Pa dregernas mouez heson ar c'haner-noz, a tavas krenn an trouzouigou, evel ma vije bet sebezat ha boemat ar c'hoedeg meur e-unan gant an hud dudius hag iskis a skigne ar sonerez lirzin. Amañ hag ahont e kenas d'o zro ecstiked all, evel heklecioù niverus o respont da ganouenn lapous an digoadenn, doare gantañ da veza eur mestr muziker o kentelia braudeur, eun dudi o c'hlevout ive, hogen divarrekok'h egetañ eun nebeud da embreger o mouez. Hag e-keit ha ma rede, a-dreuz skourrou bodennek an dero kant-vloaziek, bommoù flour ar ganiri astlammus, eur c'horn eus an oabl stered-ennet a ree eur volz arc'hant louet a-uc'h d'an digoadenn motet en ha c'houek.

Setu m'en em silas a-nebeudou, koulskoude, eun damskleur dispis hag a seblante sklerijenna skoaz an deñvalijenn a rane dindan ar gwez. Eun den a ziskoachas eus an noz, a-ziadrefiv eur garreg a oa war laz an digoadenn. Sonn ha didrouz e kerzas, evel eur skeud, war-zu eur rodo a gamm-igelle war-bouez nebeud ac'hane.

Eur stoc'h mein ha mouded, a-dreuz ar waz, a sac'he an dour enni oc'h ober eur poullad don ha peuz-ledan hag eur riboulig, ar stoc'h a laoske an dour-koll da redek izaloc'h e-barz an nanz.

Lemel a eure an den ar gwisk a c'hoice a gorf hag, en eur lakaat sin ar groaz en e gerc'henn, e tiskennas an dour betek e chink. E sellou trest d'an nec'h ha barr e galon a garantez hag a feiz, e pedas gant eur vouez don ha gredus. Meuli a eure oberou kaer ha diniver ar Grouadalez, ha goude beza trugarekaet an Aotrou eus E vadalez e-keñver mab-den ha goulennet digantañ nerez ha skoazell da gelenn ervat Aviel E vab d'ar re

n'hen anavezant ket, e kendalc'has gant seiz salm ar Binienn, ken estlammus enno hirvoudou glac'harat ar pec'har hag e fiziefs e trugarez Doue.

"Aotrou, ma Ho ped, n'am zamallit ket e barr Ho kounnar ha mirit diouzin kastiz ho puanegez.

"Aotrou, Ho pezit truez ouzin, rak ma eo bugel ar sempladurez. Roit din pare ha kennez, Aotrou, rak strafuilh a zo ennon betek mel va eskern.

"Ya, spouronet ha saouzanet holl eo ma ene. Ha C'houi, Aotrou, pageit c'hoaz e chomoc'h bouzar ouzin ?

"Distroit ouzin, Aotrou, ha saveteit ma ene beuzet en anken hag er glehar. Grit ma vin salvet da viken dre c'halloud Ho trugarez ken divent.

"Rak den ne viro nep koun ac'hanoc'h ar maro; ha picu Ho meulo e goueled islonk euzus en Ifern ?

"Hireaz em eus bat deoc'h ha trevell em glac'har. Bemnoz e c'hleban ma gwele gant daelou a anken hag a geuz.

"Trellet ha spouronet eo bet ma daoulagad gant t'erdre Ho puanegez; ha betek ma c'hozni on bet dalc'het a-touez ma gwasa enebourien.

"Tud fallakr, diouzin, pellañt holl gwitibunan. Rak selaouet en deus an Aotrou mouez ma glac'har.

"Bat em eus ma goulenñ digant an Aotrou. Digemeret en deus an Aotrou ma fedann.

"Ra vo mezekaet ha spouronet ma enebourien. Ra gilint ha re dec'hint dioustu, gant ar vrasa mez, e-kreiz ar spont...

Gorrek ha frêz e oa mouez ar peder hag a tibune ar selmou war eun ton ledan ha frouus. Pa gouezas diouz e c'henou pozioù diweza ar garmou sakr, edo dare an deiz da c'heneal. Sklerast e oa an oabl ha freskaet an êzenn noz, evel ma c'hoarvez alies e-raok ma sav an heol.

Tavet e oa an sostiked da gana. Hogen al lepoused a glevet war an deiz, dihun da vat a-benn neuze, a strinke a galon laouen, war-zu o C'hrouer, o zoniou skiltre pe fleur, o c'houitelladennou hag o grougous klouar ha kar-antezus, pep hini aneo hervez yez e ouenn.

Hag an holl vouezioù-se, o sevel a-unan war-aun-dro, a ras eur safer estlammus, leun a varz hag a zudi.

Den an digoadenn a guitaas ar poull hag a eure eur gwask d'e varo hir ha d'ar bleo, hiroc'h c'hoaz, a goueze deñt war e chouk. E zent a strake en e benn gant an anoued en devoa tapet hag ec'h hastas da wiska ar sae taolet gentañ war el leton a-raok e gouronkadenn.

Diskabell ha diarc'henn, ha bopred o pedi, e kerzas dindan ar gwez bras, e-lec'h ma ne oa ket re stank an drez hag ar strouez da vihana. Neuze e klaske eun ode pe eur riboul da vont e-biou hag e talc'he da vale hep ehan. Sep eur mare o stous da ziframma irvin gouez ha panez moc'h diouz an douar hag e c'hoarne ar gwirizioù aneo en eur panerig gwial a zouge en istribilh ouz e gain. A-wechou e kutuilhe mouar, per trelonk hag avalou trefk-put a

lakae ive da heul al louzeier dastumet.

Pell meurbet e padas e gerzadenn. Treuzi a eure tskadou koadet gant gwez a bep seurt : dero, fao, bezo hag onn. Baz' e oa, ousspenn, kelvez, masper gouez ha kerzin. P'en em gava war lein eun duchenn dizolo, e wela oc'h en em astenn dirazañ traoniennou bras ha koadet ha krec'hennou treutoc'h ha disteroc'h ar gwez warno. Mont a ras dibaouez ha di-frê, hep ar bihana harp da anelat. E-pad tsir eur pe ousspenn e taolas an eil troed direk egile ha setu m'en em gavas da c'houde er penn all d'an digoadenn en devoa kuitaet eur preddad kent.

Savet e oa an heol hag e vannou lintrus, gwir vouse'hoarz eur mintinvez hafv, a sklerijenne dremm galet ar c'harzour, homañ, daoust d'he neuz just ha tafval, anet warni gwisk eur vadelez dispar. Ouz groñch an den eur bero rouz ha peuz-hir en o zouez eun nebeud neudennou arc'hantet. Lein ar penn a oa touz betek an diskoarn, ha diouz ar c'hil a koueze war an diskoaz eur guchenn vleao a-liou gant ar bero. Ar c'horf treut-gagn a oa bras hag askornek hag a oa gwisket gant eur sae graet gant kroc'hen eun annou vriz re laosk ha kalz re frank an dro deñt. Diskenn a ras azalek ar c'herc'hann betek hanter an diou c'her noz.

Azeza a eure an den isklas war eur mên da grignat eur banezenn ouez ha da zibri eun nabeud avalou kriz, goude beza gwisket Doue war ar boued dister edo o vont da gemerout. War-lerc'h ar seblant prede-se, e trugarekaas an Aotrou da veza bet truez outañ en e zienez ha, ker-kent, a risklas a wiskamant betek e dailher ha, gent eur vilastrenn flammus e skourjezas e gorf, bruska ha keñc, diskoaz, divrec'h ha dives-ker, ken a barze ar gwad dindan ar c'horc'hen, bewech ma flifloue ar wialenn.

Ar peurrest eus an deiz a dremenas ar badenn hag ar pinijennou. P'edo an heol o vont da guzat, ec'h en em zastumas en e logell, eur waskadenn savet war bevar skourr senket en douar ha goloet gant eur vriad strouez. E-pad hir amzer e padas c'hoaz hag ez eas da gousket war eun dornad radenn sec'h, eur mên gantañ dindan e benn, da c'hortoz ar mare da sevel antronoz evit kendare'heal gant an hevalep buhez, a dieb beza hafvel bemdez betek e varo.

x
x x

Er penn kenta eus eil hanter ar pempvet kantved goude donadigez Hor Salver, a voe ganet eur bugel e Iwerzon, a zo eun enez-pall er mor bras, an oabl anei tafval dalc'hmat gant eur vorenn latrak pe ar c'hoabre dourek a zouge war-zu anni aveliou gwalam ha korrog. Hervez

darn e oa mab ar c'hrouadur da zaou bried ezomak ha paour; hogen, darn all o deus lavaret e oa a-ouenn "penntiernad vras". E gerent n'o dije ket anavezet lezenn ar gwir Doue hag a vev e tañvalijenn ar baganiez. Ne ana-vezas, moarvat, na Padraig, sant hag abostal meur lvarzon, na Kieran, barz kristen ha brudet eus ar vro-se. Soull vrasoc'h a-ze, ma'z eo gwir kement-se holl, ar burzud a reas an Aotrou o tont da zibab ha da c'hervel ar c'hrouadur ha d'ober aneaf, diwezotoc'h, skignex gradus Aviel ar C'hrist hag unan eus e vrasa sant !

Ar pezh a zo anat, avat, eo e oa Ronan eur bugel a spered digor ha lemm, a galon trest d'ar perziou-mat ha laun a skiant hag a boell. Kenteliet e voe gant tud a zoujañs Doue, menac'h hep mar, rak estreget an Drouizad a roe deskadurez d'o diskibien yaouank war draou ar bed ha kavrinou o c'hred-annou kuz, ne oa nemet beleien ha servicherien an Dreinded Sakr o pleustri, e-kefver ar yaouankiz, gant skianchou an douar-mañ ha, dreist-holl, gant kelennadurez gwirioneziou o relijion santel.

Pa voe e barr an deskadurez a c'halled da rei deaf, a vadoberourier, o welout o feiz hag e vertuziou kaer, a gaves e oa deuet ar mare d'o c'hervel d'eur stad a vuhez uheloc'h dre sakrament an Urz, rak, ma oa bras meurbet an eost da zatum, evel ma lar ar Skritur, e oa bihan siouaz, niver an eosterien. Ha setu ma asantas an den yaouank, e galon bouzet el levenez hag en eüstrud, dont da veza unan eus an darbarerien kalonek-se a astennas rouantelez Hor Salver war gorn pella ar bed koz, hag e voe beleget.

Eun novez, p'edo da vat o kousket, e voe dihonet gant eur sklêr-ijenn vuzudus hag eun ôl, o skedi e-kreiz bannoù lugernus, en em ziskouzas deaf. Hag e klevas kannad ar Baradoz o tiskleria deaf e oa bet dibabet gant Doue evit ober eur gefridi hir ha poenius, en tu all d'ar mor, war an douar bras.

"Er gevred d'an enez-mañ" a lavaras an ôl, "ez eus eur vro, anvet Arvorig, e-lec'h ma ren levezon an drouk-spered ha fals-kredennou ar baganiez. Kê di ha, dre ar skour a rei deo, dre da bedennou birvidik ha da binijennou kalet, prezeg da Arvorigiz lezenn ar gwir Doue hon Aotrou Holl-C'halloudek. Sev, eta, ha kerz hep delea palloc'h. Eul lestr dare da lakaat da oual a gavi er porz tosta ha warnañ e vi digemet gant morzerien ar bouz d'ober an treiz. Lavar kenavo da viken d'az pro hag az pezh fiziañs e skoazell ha madalez Doue !"

Steuza e eurs neuze ar sklêrienn drellus hag ar weledigez ken dis- par ha Ronan, o trugarekaat an Aotrou da veza bet dileuret gantañ da seveni. E vennad e-kefver broiz reuzadik Arvorig, da sevel diwar an dornad plouz a dalveze deaf da wals ha da gerzout war an hent a gase d'ar mor.

Hogen, pa voe al lestr en donvor, e savas eur gortentenn spontus hag hen hejas hep ehan e-pad eun nebeud daveziou. Dihentet diwar e roudenn e kan- treas war an tonnou pennfollet ma ne ouie mui ar vordoidi e pe lec'h eus ar mor en em gavent. Bihan e vovafe e oa war ar bouz ha diouer bras o devoe a voued hag a zour dous. Ha setu, goude ma voe tremenet ar barrad amzer, ma eo- rias an dud-se o lestr dirak ar c'henta begad douar a gavjont direzo, gant

ar soñj da gavout ennañ ar pezh a fazie deo ar muis, da lavarout eo eur banne dour da zistana o gourlafechennou devet ha disec'het gant an avel- vor ha fru sall an tarziou diroll.

Siouaz ! ar begad douar ma touarjont warnañ ne oa nemet anezennig Molenez, eun nebeudig tud paour hepken o vava enni. Ken dibourvez e oant o-unan ma ne c'helljont rei an distera tra d'ar re a oa bet gwallgaset gant ar gortentenn. N'o devoe ket, zoken, eur banne dour dous da ginnig deo da derri o sec'hed. An dour a implijent da voze boued a zestumet e kelornioù he listri all pa veze glac.

Tizet e voe kalon Ronan gant ar gwel eus o dienez hag a pedas Doue ma plijje gantañ lakaat da darza eun eian dour yac'hus e-kreiz an enez.

Ar pezh a c'hoarvezas kerkent rak, an eun toull a oa er garreg e savas, dre vuzud, eur vermann dour fresk ha sklêr hag hen leunias e berr amzer. Hag eneziz ha tud al lestr, souezet gant eur seurt marz, a gaves o gwalc'h e zour da eua ha d'an em gempenn.

Hennez a voe ar burzud kenta a eurs ar manac'h santel ha Molen- eziz, anaoudek en e gefvez, o deus roet d'an eian n'eus nemeti en o enez hag a waler c'hoaz hirio an deiz, an ano a "Buñs Ronan".

Eur pennad amzer e chomas ar manac'h an enez, o lakaat e brader da gelenn d'ar re a reo o annez enni gwirioneziou ar relijion gristen ha da zuzki deo karout Doue. Diwezotoc'h e kavas, e Porz-Liogen a zo porzig Molenez, eur vag d'her c'has, a-drauz ar vrac'h-voz, d'an douar bras. Savel a eurs gant stêr an Aber-Ildud betek ar c'hanber a ra ar stêrig Janeu oc'h en em daurel enni hag a touaras al lec'h anvet abeo Pont Ronan, deuet da veza da c'houde Pont Reunan ha Pont Reun. Moarvat ne oa ket galvet d'ober eno a ziazez, rak, o voza hedet ar Janeu, a-enep d'he red, ec'h en em gaves en tolead a ze set d'ober parrez Lokronan ar Fank, pe Lokronan Leon.

Toull an Naon, er vro-ze, didrouz ha gloet e c'hlevez, a blijas kalz d'al leun a eurs e venoz da sevel enni e logell e skeud gwaz bras eur c'hoed dero. E amzer a dremene er bedenn hag ar pinijennou zusta hag oc'h ober vad d'an dud gwalleürus ha nammet. Buan e radas er vrud eus a vado- berou dre Vro-Leon a-bez, dreist-holl goude m'an doa roet ar yac'hed, an eno an Aotrou, da glafvourien a vev en e amezeg. E gomzou halavar a c'houenze da Zous eun niver bras a angoù ha bemdez, e tirdo davetañ eun engroz Leoniz, darn da glavout e brezegennoù birvidik ha santel ha darn all, ampuzilh, mac'hagnet pe o johina, da glask ar pare d'o nammou.

E-pad pail a renas Ronan eur vuhez heskinus, gouestlat holl da c'hloar e Zous ha d'ar garantez e-kefver e nea. Met kement ez ae bemdez war gresk an dud han darempred, ma n'en devoa mui, hervez a soñj, amzer a-walc'h d'an em rei d'an Aotrou dre ar bedenn hag ar binijenn. Hag e tivizas outañ e-unan ez aje da Garna, eur c'horn-brô ha n'anovez ket c'hoaz, da zibab eun takad didud ha digavandenn da ziazeza e beniti.

Pa gavas a oa deuet ar mare da guitaat Bro-Leon, e tilezas e logell hep gouzout da zen ha, tizet gantef ar ribl anei, e treuzas lenn-vor Brest hag e tilestras en tu-all d'ar stêr Elorn. Hogen ken don e oa chomet an efvor aneaf en tolead m'en devoa greet ken bras burzudou ha skignet ervat e feiz antanet, ma reas Sant Pol, deuet da veza kenta eskop Bro-Leon, sevel eur gouent leanezed dek vloaz bennak diweztaoc'h, da lavarout eo war-dro ar bloaz 500.

Kerkent ha digouezet war zour Kerne, e kerzas Ronan etremek ar c'hreistaiz d'ar vro, e-dreuz tuchenneu koadet ha stankenneu koant, ar re-mañ geot druz ha glas ha gwaziadou dour sklêr hag hiboudus. Pa selle ouz en dremmwel, diwar lein an torgannou, ne gawe diouz tu ar rstar, nemet koajou ha koajou o sevel ouz tor an uhalennou pe o tiskenn war ziribin ar stankenneu, ha diouz tu ar c'huz-heol, oufouigou ha plegou-mor arc'hantet hag o virvilhat dinden sked lagad an deiz. Dre ma pallez gant hent ar su, e sablante Klouarc'h an amzar ha dudusoc'h ar mēziou eget e goualed Lecn.

E-biou da veur e gêrig ha bourc'hodenn e tremenas, svel ar re e reomp-ni outo bremañ Daoulaz, ar Faou hag Argol. Hogen gwell e kave, koulskoude, e-lec'h haulin an hentchou bras, dibaot meurbet d'an ampoant, mont gant ar gwenedennou striz hag an hentchou trouz a rede dre ar mēziou rak truezusoc'h e oa ar gouerien hag ar veserian, ouz ar beorien reuzadik, eget tud ar c'hêriou.

Diwar lein ar menez a voe anvet Menez ar C'houm gant Breiziz, e welas, war ribl ar mor, eur mell kêr dispar. Megeriou uhel ha ledan ha c'hel-c'hic ha toannou he zier kear hag he faleziou pinvidik a luc'he, ar palled, gant allazig skinou alcouret lagad an deiz o tiskenn a-nebeudou en tu-all d' ar bed. N'en devoa klavet ano biskoaz ar manac'h baleer eus ar goadad tonius-se, gwir skoudenn ar vrazoni ha n'eo ket daveti e kerzas. Savet e oa tristi-digez hag enkrez en e galon o sonjal ez pec'hejou niverus a veze grêt anni, hep mar, o veza ma ouie e oa annezidi ar c'hêriou, laosk, dibredet ha gadal, gwascoc'h da darri lazenn Doue eget ar bloueziz dizanvez a vreve o c'horf el labour evit o maga ha dastum madou deo.

A-benn an noz e oa en em gavet al lean er c'hoadeg meur m'hon eus grêt anaoudogez gantef er penn kante eus an danavell-mañ. War e grede e oa didud ar c'hornad ha leun eus a beoc'h an toleadou dizarompred. Plijout a reas deaif kalz an digondenn sioul an devoa diskoachet ha, laouen e galon ha dibredet e spered, e lavaras outaf e-unan an devoa Doue sevenet e c'hoant d'aul lec'h ken deraet evit sevel e beniti. Trugarekaat a eus an Aotrou hag e veulas E vadalez ken brokus ha neuze, brevet e gorf gant e hir gerzadenn hag e boull-kalon ouspann hantar-c'houlle, e c'hoarvezas e-tal eun dorvenn da ziskuize e-doug eul lodennig eus an noz. E-keit-se e skeda iskie ha trellus ar gouleier e tier kear ha palaziou ar gêr vras, da sklirijenna ebatou diroll ha plijadureziou orgedus he annezidi re-vak.

Hogen endra m'en em laouenne Ronan eus ar vuhez didrouz ha digavandenn en devoa menoz da zen er c'hoadeg meur, ne ouie ket pe vennad oa hini Doue en e gefver.

Eil Pennad

GOURKUNV AR C'HOADOUR

Tremenet e oa an hafv ha tremenet ive an diskar-amzer a livas hag a aleoursa ken dudius hag an eun doare ken marzus gwez, plant, radenn ha bodennou a lies gouann ar c'hoad.

Pa welas an deliou o veleni, e lavaras Ronan outaf e-unan e oa deuet ar mare deaif da zastum pourvez evit tremen an amzer fall a oa o tostaet. E-leiz a finij hag a vez a gavas dinden ar fao hag an dero ha, tro-war-dro d'ar bodennadou kelvez, e oa briz an douar gant ar c'hraof. Boutegou gwial a eure ar manac'h hag hefi d'o launia re z gant an eost a roe Doue deaif ken brokus. Frank a-walc'h e oa bremañ al logell da c'horren ar bevañs en devoa kavet pe gutuilhet, rak, goude labourat kalet, hep skoazell nep bevneg, e kavas tu d'he brosaat, d'he zoi ha d'he c'hloze gwalloc'h ha da rei dei muioc'h a startijenn.

Ha setu ma teuas ar goafv gant e zaveziadou gloe inouus, e varradou gloe-pil ha kazarc'h, e rao tao, e erc'h gwann-kann hag e skorn du. Daoust da grizder an amzar e kendalc'he al lean, hep an distara kemm, gant e vuhez a bodenn hag a binijenn. Bemdez, d'an hevelep eur, e tiskenne betek e c'houzoug e poull ar rodo da c'houlenn truez ha trugarez an Aotrou ha da gana seiz salm estlamus ar binijenn. Ha goude, bepred diarc'hen ha ken fall-wisket ha kent, e gorf hag e izili sonnet he brondu gant an anoued hag e zent o kinnig brevi en e c'henou kemant a stroke e javedou an eil ouz eben, e rae an hent hir her gweljomp ar wech kenta oc'h haulin.

An deiz ma c'hoarvezas an darvoud a zo ano aneaf polloc'h, e oa ken kalet ar skorn ma rankas Ronan, a-benn ober e gouronkadenn bumedziek, terri gant eur mēn poumner ar glerenn a c'holos ar poull. Tefval-sac'h e oa an emzer liou an erc'h warni ha ken du ha tao e oa ar c'hoabr ma raent eur volz izel ha glac'harus etre an douar hag an nefv. Korfo rivet lapou-sedigou maro a oa dinden ar gwez ha bagadou brini o koagal hag o klask peadra da chom beo a blafve hag a dournie a-uc'h d'ar c'hoad divuhez. Sep eur mare e save yudadennou raouliat ar bleiz o kontren ha war c'hed eus eur preiz bennak.

Edo al lean o tistrei d'e waskedann war-lerc'h e gerzadenn voaz deuet da veza anatot'h-anata bemdez ar roudann anei da haul ar wenedenn o devoa grêt roudou e gammejou. A-greiz-holl e klavas eur vouz ankeniet ha

strafuilhet, dispis ha diverzus deaß da genta, o c'houlenn skoazell. Sko-
deget e voe gant ar galvou-se har sabetus eun nebeud o veza ma krede edo
en eur c'hoznad didud-kaez, hep nep den ganet unnañ. Ar garmou hag ar c'hriou-
se o tostaat buan a ziskoueza deaß e oa bet faziet rak tud, pe eun den da
vihana, a veve en tolead ha ne vije hiviziken ken digenvez ha m'en dije karet
beza. Hag e pegas ennañ kerse hag himnêz d'ar maread dizarempred edo o paouez
beva en e zigoadenn guz. Ha, koulskoude, avit senti ouz mouez e galon hag ar
garantez a die mab-den d'e nesa, e ranke skora hervez e c'halloud an nep a
c'helve ken truezus.

"Harz ar bleiz ! Harz laer ganas ma defvadez kêz !" a voe ar grie-
denn diweza a dizas diskouarn Ronan. Ne chomas ket ar manac'h etre daou soñj
hag e tilammas kerkent war-zu bevann an digoadenn. Eeun d'an ampost e sailhe
er-mêz eus ar c'head eur mell bleiz erzu, peg e kroun eur gloaneg bras ha
pounner, bec'h gantañ e zougen. War-bouez nebeud dicutañ e rede eur c'hrenn
gwaz war e lerc'h, gantañ eur gontell hir en eun dorn hag eur wal ivin kalet
begot ken lemm hag eur goaf en dorn all. Sebezet-holl e waies ar reder al
leñ dizifenn ha goull e zaouarn o tont a-benn, war eeun, d'ar skrapet ran-
klez. E zorn dehou er vann oc'h ober sin ar groaz ha ken dichek ha dispost
hag eun diouganeur eus an amzer gent o villiga anabourien Israel, e c'hour-
c'hennas Ronan d'an aneval fero chom a-sav ha deskori e laerdenn.

"Harz amañ loen digernez ha yud" emeañ. "Na da ket pelloc'h ha dis-
taol da breiz d'e berc'henn. An urz-se a roan dit en ano an Doue bea !"

E giz eun talm gurun e kroze ar c'hoznou hag ar bleiz, spouronet
hag o krena, o zeoulines direk al leñ hag a lakaas ar penn-dafvad a-harz
e dreid. Ha kerkent, lostek ha choulas deaß, e tistroas d'ar c'head, mell
bras warnañ gant eon da gacut eur mestaol digant an hini hen heulie ken
c'hoantik d'e laza. Hemañ, estlammet hag alvaonet direk ar burzud, a selle
gant eur souez nac'hik ouz Ronan e gemere, moarvat, evit ar brasa hag ar
galloudusa strobinnell e oa bet biskoaz.

Eur c'hrenn den e oa aneañ, hen lavaret hon eus, na bras na bihan,
na treut na lart, hogen e barr an oad, koujorn ha frotmet mat ha kalet e
liou. Gwisket e oa gant dilhad gros ha rust an danvez anec : eur spoon pe
saa kougoulek o c'holei ar penn gant ha chourik hag o tiskenn, e donre eur
vantellig verr, eus an diskoaz d'ar brusik hag hanter ar c'heñ; dindan e oa
eun doneg gant milginou, hir ha flafchet diouz an tu arak hag a dape uhel-
oc'hik eget an daoulin; difennet e oa an diou c'har gant eur braca, pe vre-
gou, striz a-walc'h hag o vont war voana betek ar moustroid, a-lec'h ma oa
stardet outo kempenn an diou flocenn gant lereñnouigou, arc'henou kroc'hen,
solennou teo dindano, a wiske an treid.

Ken prim hag eur sarr-lagad hag evel eun hufvire e oa tremenet an
darvoud saezus. Disaouzana a eure, svelkent, perc'henn ar penn-dafvad ha,
doujus hag anaoudek, e komzas ouz al leñ :

"Ho trugarekaat a ran a-greiz kalon", emeañ, "evit ho madobez em

c'hefver. Mirat hoc'h eus din, diouz skilfou didruez ar marlonk ganas,
ar pep gwella eus ma feadra, ma danvadez vat hag a vo mamm, m'am bez
chafs, d'eun toradig oanet a-benn an nevez-amzer. Eur sorser galloudus
ha leun a ijin ez oc'h, hep mar, pa'z oc'h bet trac'h, hep stourm ha
dre nerz hud ho preou hepken, d'ar preizer digalon, a gujas ken sentus
d'ho torn savet d'an nec'h ha d'ho kourc'hemenn strobinnellus.

Mil bennoz deoc'h, eta, den madelzus. Plijout a rafa din ho
tigell eus ar proder hoc'h eus kemeret o savetei ma loenig, hogen paour-
raz on ha n'ouzon ket petra e c'hallfen kavout da ginnig deoc'h. Eur
wech c'hoaz, eur sorser bras ez oc'h, e gwirionez, hag ar vrud ac'hanoc'h
a embannin dre ar vro."

Ar manac'h, o respont, a oa tafvalzet e zremm dic'hoarz ha sec'h.
"Den reuzeudik," emeañ, "den dallet gant ardou an droukspered hag ar
c'hredennou diboaell er fals-doucou, n'eo ket me an hini a zo o paouez
ober ar paz a seblant dit ken marzus, hogen an Doue bea E-unan, an Doue
n'eus nemetañ, a grouas an Nefv, an douar hag ar mor hag a zo mestr war
bep tra. Ar sorserien, mevelien villiget an Ifern, ne dint ket servicherien
d'an Aotrou a zo gantañ, ha gantañ hepken, pep galloud war ar vuhez hag
ar maro, an dud, al loened hag an traoù krouet. Oc'h ober ar burzud emacut
o paouez gwelout hag ac'h estlammas kement, n'ean nemet eur benveg etre
E zaouarn, eur benveg da ziskoaz dit E nerz hag E vedelez, rak te, moar-
vat, en deus galvet da veza dreizon, me E veleg distez ha dizellid, unan
eus E vugale birvidik ha feal.

"Ma ano a zo Gourkuñv", eme an den, "me gwreg a reer Kaben outi
ha tri bugel hon eus, daou vab hag eur verc'h, yac'h ha divac'hagn o-zri,
a drugaraz d'an doucou e geheliomp. Deñl on bet a-viskoaz d'hon doucou
ken niverus ha, dreist-holl da Daudetea pe Lugus, mestr meur ar micherieu,
ha da Darenis, an doue a c'hourc'hemenn d'al luc'hed ha d'ar gurun, ar
re-ze end-eeun hag a zo anvet gant tud iz, ar-geoded veur, a gomz eur yez
dishefvel diouz hon hini, ar c'henta Mercurius hag an eil Jupiter. Kalz
re all, galloudusoc'h an eil eget agile, a c'hallfen envel deoc'h difazi
a-walc'h. Met marse, avat, ne walis hini aneo o seveni, o-unan pe dre
hanterouriez eun den marvel bennak, nep taol ken saezus hag an hini a-
maoc'h o paouez ober. Rankout a ran anzav, eta, eo brasoc'h beli, ijin
ha nerz ho Toue eget ze hon doucou-ni ha dezo em eus e rocc'h din E anaout
hag em lekeoc'h dindan E warez, ma kavit, da vihana, ez on dellezek eus
eur seurt eurvad."

"Gourkuñv", a lavaras Ronan, "n'eus nemet eur gwir Doue hepken
hag hennez eo ma hini. Ar re a adarjout n'eus ket aneo; ganet hepken eus
froudennoù ha faltazi tud touellet gant an Aotrouant ha n'anavezent ket
er wirionez, siouaz deo ! Hogen, dont a ri ive da veza bugel d'an Aotrou
goude m'az pe bet kelennadurez diwar E benn ha p'en devo redet war da dal
dour an sakramant santel a ro ar vuhez."

"Gant laouenedigez," eme ar c'headour, "e tigemarin ho kelenna-
durez, rak kredenn em eus d'ar paz a livirit. Ho pedi a ran, eta, da zont

betek ma zi d'hor c'hentelia holl, ma gwreg, ma bugale ha ma. Emaon o chom en tu all ha tostik a-walc'h d'ar Stif, ar wazig a dreuzit e-kerz ho troiad pemdeziek diouz ar mintin.

"N'emaon ket hep gouzout abaoe pe da vare e rit hoc'h annez er c'hoad-mañ. Ho spia e ris alfas, dre guz ha gant disfiziañs, o veza m'am boa aon e vijec'h bet eun divroad kriz, evel ma'z eus bet kalz, o tont d'o-ber droug dre amañ.

"Da genta ec'h evesais, noz-deiz, kement a reoc'h hag e chomis a-befet gant ho toare ken reuzeudik da veza hag ho lidou ken iskis, rak n'eo ket er stumm-se ec'h enoromp hon doueoc. N'ho kwelis morse o leza nep aneveal da wellat ho pevañs; morse kennebaut n'hoc'h eus anaout an distera koc'had tan da boazat ar gwiriziu kalet ha dizazun a zebrit kriz ha goular evel ma vezont. Ha, dre hir-amzer, e teuis da soñjal o cac'h unan eus an dud dinoaz-se, deuet eus an tu-all d'ar mor, a glovis komz aneo gant souez, hag a vourr, n'ouzer perak, o vava digenvez hag er vrasa dienez, el lec'hieu distro ha gouesa."

"Ar re-ze hag a gavez ken iskis," a drouc'has al lean, "a zo tud en em ouestlet d'ar gwir Doue evelon. O fal, ha n'o deus nemetañ, a zo skigna a-dreuz d'ar bod-holl, gant skoazell o fedennoc hag o finijennoc dister, an anaoudegez eus an Aotrou, o Mastr, hag eus E vadelez dispar."

"Bremañ, avat," a gendalc'has Gourkufv, "ha daoust ha ma'z eo dispis din c'hoaz ar youl ho plain war'hint ar gefridi sebezus hoc'h eus dilennet, e sav levezon ennon p'en deus rost tro ho Trua din da geja gant unan eus E wella servicherien, ganeoc'h-c'houi ken barrek d'ober implij ervat eus ar galloud en deus fiziet ennoc'h."

"Moarvat ez oc'h a ouenn an estrenien-se a zo en em gavet amañ, eun deiz, eus a vroieu tramor, rak komz a rit o yez a zo kar-nes d'hor galieneg-ni. An divroidi-se ive, war am eus klevet, n'o deus evelloc'h nemet eun Doue ha fae a reont war hor re-ni. Met evito, peurvuia da veza gwelloc'h tud eget keodediz Iz, didruez, kriz ha tust da waska ar gouerien beour, ez eus darn an o zouez hag a vez gwall-zichek an hor c'hefver ha ne heulient ket bepred lezenn ar vadelez, ho reolenn a vuhez. Er gêr-veur o deus, koulskoude, eus c'hoziad kantvloaziek ha santel, eus beleg bras eus o relijion, a reont eskop outañ, d'o c'hentelia ha d'o lkaat da gaholia o Doue. Eun den eo, Breizad avalto, hag a zeus ganto eus o anezenn ball, met, siouaz dea, dalc'het eo war e wele gant ar c'hleaved hag a vouez ne vez klevet mui gant an neubeudig eus e genvroiz a vev e ker Iz ha, nebaotoc'h c'hoaz, gant ar re a zo stzewet amañ hag ahont dre ar vro."

"Eval-se", a c'houlennas al lean, "ez eus ive Breiziz an tolead-mañ evel e Bro-Leon, e-lec'h m'edon kent. Ne ouien ket e gant on em astennet betek amañ, hag e oa eun eskop ar gêr vras hoc'h eus komzet anei. Daoust din da gant euz euz ar c'hêriou, e rankin mont betek ennañ d'e saludi ha da c'houlenn, cuspenñ e vennoz, a alioi fur ha santel."

"Ne don ket Breizad, e enez Iwezzon on ganet hag a-barz komz yez Breiziz eo bet ret din ho deski. Ar re-mañ, evel ma c'hanvreiz, a zo holl

kristenien, a drugarez d'an Doue a enoran ! Met, allas ! e-touez ar grientien ez eus meur a hini ha ne vezont ket atao santus ouz an Aotrou hag a vez, a-wechou, tost da ken fallskr hag ar baganed ha n'Hen anavezont ket. Hor preder, ma hini hag hini al leaned-all galvet gant Doue da embann dre amañ E lezenn, a zo, cuspenñ digas ar baganed d'ar feiz, d'oc'h ha mirout war hent ar silvidigez ar grientien laosk o deus her c'huitast.

"Petra e ouezez c'hoaz eus ar Vreiziz diazezet ar vro-mañ ?"
 "Den santel," a respontas ar c'hoadour, "eur roue, Galoes ano, o deus e Kemper, eur gêr grefv hag eur c'hasstell, savet gantañ war ribl ar stêr Udad. Heñ eo a zo bremañ parc'henn d'ar vro en deus anvet Kerne, o veza ma'z eo dauet, hañ hag e dud, eus eun tolead o tougen an havelep ano, du-ze, e Enez Vreiz. Kristen eo ive, a-dra-sur, met didruger a-wechou ha lemm ha kalz meurbet barvenñ e gloze."

"Doue da rei dea ar c'h'ras", eme Ronan, "da ren ar rouantalez nevez gant furnez hag en eun doare kristen ha reiz, evit brass mad hor relijion santel hag hini e sujidi."

"Hogen eman an noz o testaat ha mall eo dit distrei d'ar gêr. Felloc'h e tle baza enkrezet da dud diwar da benn."

"Deus d'am c'h'avout arc'hoaz hag e teskin dit ar gwirioneziou a rankez da c'houzout evit baza e karantaz ha dindan gwarez an Aotrou. Kê 'ta ha ra gouezo puilh E vennoz warnout ha da dud !"

x

x

x

Antronc ha bamdez da c'houde, koulz lavarout, e teuas ar c'hoadour da logell al lean. Komzou helavar Ronan a dize kalon Gourkufv, eun ano hag a zerec diouz ar gwella ouz an den-mañ, hebask, hagarat ha mat e gwirionez. Kentelia a eus ar c'halenner an diskibl, oc'h heulia da-nevellou meur ar Skritur Sakr, krouidigez an Ilez, brazoni Lusifer hag o warizi ouz Doue, trec'h an Aotrou war sperejou an Droug, o dachadigez da viken e tan grizias an lfeuz, geneliez ar Bed, krouidigez hon tud kenta, pac'hed Adam hag Eva e Baradoz an Douar hag ar c'hasstiz a gouezas warno hag o gouenn war-lerc'h o zorfed, ar Bromesa a eurs an Aotrou e roje deo eur Salver evit o dasprena he mirout diouz kraban an Aotrou, buhez ha trubuilhou uheldedou Israel hag ar Bobl Diuzet o c'hortoz, a-pad milvedou hir donedigez an Dasprenez, ginivelez ar C'hrist Jezuz e kraou Betleem hag E vorzerinti spontus war ar Groz evit silvidigez mab-den.

Fromet ha diduet war eun dco gant ar vouz norzus hag entanet her boeme hag hen douge da zigemrouet hep diskred, ar gwirioneziou santel,

ar c'headour a savas ennañ eur c'hoant birvidik d'ar sakrament a raje aneaf eur c'hristen. Met gant eon na vije ket maro-tre goall koz ar baganiz e ene e ziskibl ec'h ampulle ar manac'h ar mare ma roje deafl ar badiziant. Diswizienna piz a ranke, emeaf, al louzeier fall dicuz an douar a zifraoste da lakaat da struja kaer bleuniku priziuz ar wir feiz.

Meur a wech, dicuz e du, ez eas Ronan betek ti ar c'headour. Hiaret en devoa e droiad a dremenas, neuze, en tu-all d'ar Stif, o tiskenn izelloc'h eget an ti-se a oa, war a lavaror, el lec'h a zo bet anvet ar Ger-nevez abaoe.

Dister ha paourik, kalc'hiek ar furn aneaf, e oa annez Gourkufv hag e diogez. Ar mogerioù, nep prenastr enno, o devoa eur sac a dri droatad hanter pe war-dro ha grêt e oant bet gant peulioù koad gros sanket o fenn en douar ha stanket kloz ar skoachou etrezo gant eur c'hemmask pri-prad ha plouz dreilhet. Banal a oa aet d'ober an doann hir-veget hag hefevel ouz krogenn eur vrennikenn hag eun toull ez gorm anei, da louskel da zivogeddi an caled a oa dindan, e-kreiz al leur-zi.

E-barz al lochenn defval, digu skabell dopes hag eun daolig stummat digompes ha pounner. Nep gwele, avat, o veza ma kouske an holl o fenn trest ouz ar vogez hag o zread ouz an caled, war eur c'houziadenn blouz pe c'heat sec'h ha frondus a veze dastumet hep mintin diwar al leur-zi. War an caled eur gaoter arem hag, ouz ar vogez, dalc'het gant ibilhou sanket onni pe an istribilh outo, eun nebeud benviji hag armoù, eur vouc'hal, eur falz pe ziou, eur falc'h, eur bigell hag eur bal houarn, eur c'hlaouierad birou, eur wareg ha kavilli gwial da basketa. Er-mêz ha tostik d'an ti, e oa eur c'hêl grêt gent diskourrachou gwez, ennañ eun nebeudig geored ha defved.

Ar wech kenta m'en em gavas al lean war an troujou, edo an tad, ar vamm hag an tri bugel er gêr. Keber, ar wreg, pouz-yaouank c'hoaz met kalat he liou ha dremmet tafval, a oa ganti war he fenn eur ouel verr hag a guze he bleo. War eur sac hir o tiskenn betek he moustreid e touge eun doare mantell vilginek ha berroc'h.

Dervgen ha Egan, ar baotred, a oa daou grennard war-dro daouzek he dek vloaz, hag o gwiskamant a denne da hini o zad. Lella, ar verc'hig ha n'he devoa ket ouspenn seiz pe siz vloaz, a oa gwisket gant eur saez hir stardet gant eur gouriz en dro d'he dargroiz ha bleo redallet o fuilha war he diskoaz.

"Doue d'ho mire yac'h ha salo er bed-mañ ha da roy dec'h, er bed all, er vuhez hag an eukusted a bado da viken !" eme Ronan an eur zigouezout en ti hag o sevel e zorn d'o benniga. Gourkufv hag e zacu vab o taoulina direk al lean, a hetas deafl donedigev vat en o zouez. Gouzout a ouie ar baotredigou e oa ar manac'h an devoa lamet defvadez o zad diouz geol ar bleiz hag e sellent outañ, maronik eun nebeud, hogen dispourball ha ranell o danouleged gant ar gwel eus an den ken galloudus ha dispont. Klask a reas an tad trugarskaat Ronan da veza miret deafl e zafvadez rak eur c'holl bras e vije bet d'an tiad a-baz maro al lean. Met al lean n'her selarue hag a eure deafl ha d'e vibien sevel diwar an douar. "Tud vat, emeaf, an enor a rit din na deo

dleet nemet d'ar gwir Doue, hag Heaf hepken eo a zellez Hen trugarskaat deafl hag e tiskouezfec'h Deafl hoc'h anaoudegez-vat."

E-keit-se e chome Keber yen ha diseblant, o tarc'hal he merc'h dre he dorn. Ne zistagas ket eur gomz da drugarskaat Ronan; en anep, he daouleged, kez enno, a selle outañ, kivioul ha dre zindan. Gwall-skoueriet e oa ar vacuez gant an divroad o tisplega, dre skouerioù splenn ha sklêr, ne oa nemet eun Doue hag e oa ret dilezel ar gredenn d'ar fals-doueou, ijinet gant an diabol evit touella tud an douar, ha dre-se, o c'has gant da rouantelezh an droug. Merzout a reas, o welout an evez hag an aked a lakae he fried hag he daou vab d'her selarue, edont o tremen dindan e veli hag e kollje-hi he levezon warno.

He c'hasoni a droas e kounnar ha dichek ha gwallon, setu-hi o lavarout :

"Hon tadoù araozomp o deus enoret ha doujet an doueou sakr hor skoazell ken mat en hon ezommu hag hon laka da gacut spi en eur vuhez welloc'h. Ra skorne he teod en ho kenou, c'houi divroad truilhek n'ou-zomp a ba lec'h e teuit, o wallgomz aneo hag oc'h o dispriza. Ra gouezo o malloz warnoc'h hag ar re, evelloc'h, hag a ra fae warno !

"A-hand-all, labour hon aus d'ober ha n'eo ket o selarue ho sor-c'hennou hor booud da zibri. Rak-se, it ac'hann, mar plich, hag hon laoskit e peoc'h !"

Diwezatec'h e tistroas al lean d'al lochenn ha, dre gomzou hegarat, e plaustras d'he lakaat da brederia war wirioneziou er feiz kristen ha da drai kein d'he fals-kredennou. En enor e voe, daoust d'e habaskad ha d'e bruzegennou peellek ha pouezus. Ahartat a oa ar wreg tagneus he gouzvennek, hag eur wechad, e barr eur geoud buanagez, e keneras eur geunadenn gant Ronan d'e gas er-mêz.

Diwar neuze e voe enat deafl e kolle e amzer ganti hag ac'h ahanas da zarempredi al lochenn. Hogen, Gourkufv hag a zacu vab ne ankouant ket an hent d'o logell hag a zac di bewsch ma kavent tro, hep gouzout da Gaben, rak houmañ a reas gwasas ma c'hella da virout outo da welout ar manac'h. Daoust da ze a teuent a-honn, evel dre laer, da heulias e gelennadurez hag e kroske o anaoudegez eus al lezenn nevez a brezege Ronan deo ha kement-se seul vui ma oant c'hoantik d'ha deski.

Eun deiz e lavaras al lean d'ar c'headour her c'have dallezek ha barrek da zigemarout ar vadiziant hag her roje deafl hep gortoz pall. Ar vugale, avat, emeaf, a oa c'hoaz yaouankik hag o devoa ezom da vont dounoc'h e anaoudegez ar wir relijion a-barz beza kristenat. Met, siouaz ! e-ser hege ha dismagafsi ar manac'h, e klaske ive ar wreg, ken lies gwech ha ma c'hella, distrei he fried hag he mibien dioutañ, hag, o veza ma c'houite d'hen ober, e veze ganti dalc'hmst trouz, rasailh ha gwall-vuhez. Ha ken bras e oa he drougiez ouz an den santel, ma touas e lamje a vuhez digantañ, e doare pe zoare.

Hogen burzud an dafvedez miret diouz skilfou ar bleiz a oa bet ken brudet gant Gourkuñv ma tisede a bep tu, davet al lean, tud klañv ha gloezet da glask ar pare. Ha Ronan, en ano ar gwir Doue, a roe deo yac'hed ha pareafis hag o alie da zillezel o falskredennou evit heulia kalonik gourc'hemennou an Aotrou. Hag a-barz nemeur, e voe gounezet gantañ d'ar feiz kristen en darn vrasa eus tud an tolead-se a anved neuze ar Porzoed.

o

Trede pennad

Badiziant Gourkuñv

Klouaret e oa an amzer ha diskornet an douar. Er gwez dizellh ha kinvisk, e tevas ar brofsoù, e tiskouez anat ado an nevez amzer o tostaat. An deiz-se, p'en em gavjont an eil gant egile, e lavares al lean d'ar c'headour :

"Arc'hoaz, mab kazet, e c'helli en em laoueneat ha meuli an Aotrou, rak ar c'headeg-mañ, Koad an Neved pe an templ, bremañ kouezet en e boull, hogen gouestlet, gwachall, gant da dardou'eur fals-doue, a welo o kelliadennañ, evit ar wach kenta, had sperius an Aviel. Deus ar c'hoaz, kerkent ha tarz an heol, betek ar poull ma vezan bender o kouronka ennañ, hag e roin dit sakramant ar vadiziant."

"Ma bennoz deoc'h, tad ker," eme C'hourkuñv, "p'am c'havit del-lazek da veza digemeret e rouk ar gristenien. Ar c'helou-se am laouena, e-dre-sur, ha morse ne drugarekain Doue a-walc'h, na c'houi kennebeut, evit eur c'hras ken kaer."

"Ha setu ma vin fougeat bras o kinnig deoc'h eun dorzig vara, evel eun testeni distar eus ar garantez don a vagan ouzoc'h. En doare-se em bo tu d'ho lakeat da greski c'hoaz ma levenez, ha mertoze hoc'h hini, p'ho kwelin o frealzi ho steon hag ho poull-kalon gant eur bouetach yac'husoc'h eget ar gwriziou kriz ha goular e rit ho magadurez enao."

"Ma bennoz dit, ma mab," eme Ronan, "avit da soñj trugarezus hag an aluzenn gaer a ginnigez din. A-walc'h eo din ar frouez hag ar gwriziou a lake Doue da sevel ken puilh er c'head-mañ ha ne vonnañ kaout digentañ natra muioc'h. Koulskoude, ha da verke hepken eun deiz ken talvoudus dit hag hini arc'hoaz, ec'h asantin dibri eun tammig bara gant ma vo ennañ hanter ludu. Re-vat a vefe bara digemmesk d'eul lean gouestlet e vuhez d'ar binijenn."

Antronoz vintin, d'an our divizet, e tiguozas Gourkuñv, eun dorzig gantañ dindan e gazel, e-tal ar poull, e-lac'h ma kavas ar manac'h oc'h e c'hortoz.

- Bremañ, eme d'ar c'headour, "pa anavezet kement a zo ret

da c'houzout eus kelennadurez ar relijion sakr a heulien-ma hag ar feur emañ o vont da ober gant Doue hag az liammo outañ da viken, goulenn ouz an Aotrou rei dit neuz da chom feal deñt bepred ha dalc'husted a-walc'h da veza eur skouer a santalez evit da genvroiz a-keit ha ma vevi, da c'hortoz kaout da zein a eürusted er Gwennva ma ra ar gristanien Baradoz outañ."

Pedñ a rejont a-gevret ha, da c'houde, e tiwiskas Gourkuñv e zilhad hag e tiskennas en dour betek e ziou groll. Ar manac'h a eure hañvel hag, en em gavet en e gichen er poull e c'houlennas, a vouez uhel, ouz e gavandad :

- Ha dare out da zinac'h ar fals-dousoù ac'h eus keheliñ betek-heñ hag ardou ha beli ar Spered fallakr en deus dalc'het keit-all ar vro gêz-mañ en defvalijenn ?"

- Ya !" a respontas Gourkuñv, leun a saouez, "anzav a ran n'eus nemet eur gwir Doue, hoc'h hini, den santel. Anzav a ran dirazoc'h ez eo ar fals-dousoù am eus enoret nemet touellerez hepken. Grataat a ran trei kein, hiviziken, gant skoazell an Aotrou, da bompadou Satan ha da fallagriez ar bed. Hag e c'houlennas, a holl neuz ma c'halon ha ma ene, dont da veza bugel da Zeus, dre vartuz galloudus dour er vadiziant."

- Ra vo grêt neuze hervez da c'hoant !" eme Ronan.

Hag e kemeras eur vozad dour a laoskas da redek war benn ar c'hoadour, en eur lavarout : "En ano an Tri Ferson eus an Dreinded, Tad, Mab ha Spered, az padezan, Gourkuñv, ha re gendalc'hi, dindan an ano a zouez hag a zo bet dibabet mat, war a welen, da veza eun den a boc'h ha leñ ha plijet gant an Tri Ferson rei dit kement perz mat a dle kaout pep gwir gristen !"

- Evelse bezet grêt !" a lavaras ar c'hoadour e barr al laouenidigez.

War ribl ar poull, pa vont en em wisket, oc'h en em strinkas ar c'hristen nevez ouz treid ar manac'h d'e drugarskaat. Met hemañ a eure deñt sevel hag a bokas deñt gant eur garantez a dad. Hag ec'h azezjont war al leton da dafva ar bara leun a ludu a dreuzella o dent o **atrakal** dindano.

- Az boued-mañ," eme Ronan neuze, "a zo eur mark eus eur pred-all a ramp diweztaoc'h, rak, siouaz, n'em eus bremañ na bara dic'hoell na gwir da larout an oferenn ha, dre-se, d'az lakaat da gemezout perz er banvez burzudus ma tebrer ha ma ever ennañ kozf ha gwad ar C'hrist, dindan spesou talvoudusa magadurez mab-den. Hogen, a-barz pell bras, moarvat a teuy eur mare ma c'hellloc'h, te hag ive ar gristenian a savo niverus er c'hornad-douar-mañ, terri naon ha sec'hed hoc'h eneoù gant ar boued mazzus-se a ro brokus Doue d'ar re Her c'har.

Arc'hoaz," a gendalc'has al leñ, "arc'hoaz ez ain de Iz, ar gêr gevrinus-se a welis an diswel anei diwar leñ ar menez, p'edon o tont d'ober ma annez ennañ, ar gêr-se hag a gomzez anei, war a seblant din, gant doujañs nec'hik ha kasani guz. Hervez ar pez a lavarjont din, eun deiz, ez eus enni eun eskop o chom, da lavarout eo eur beleg santel ha leun a furnez bet dibabet gant an Aotrou evit beza eun tad hag eur bleiner d'E vugale.

Evel eur mab karadek ha sentus, e tleñ en em lakaat dindan beli hag

e gourc'hemenn an tad speredel-se, ar prifa-se eus hon liz hag en em rei deñt da anaout. Ha setu perak em eus grêt ar menoz da vont, arc'hoaz, betek ennañ."

- Tad karet," eme C'hourkuñv, "eur reolenn striz ha garo, douget gant pennadureziou Iz, ar gêr didruez, a ra difenn d'ar beorien, d'ar glaskerien-voued ha d'an dud reuzaudik o neuz ha fall-wisket, da lakaat o zraid er geoded. Pep hini eus he dek dor a zo diwallet gant gwardou gwallon, dare bepred da seveni an urz kalet, da ganna ar geiz a gred tostaat ha d'o c'has kuit diwar-dro. An am eus, eta, e vefec'h gwallgezet ganto, rak, gant ho kwiskamant paour hag ho neuz digempenn, ho kemerfent, hep mar, evit eur c'hantzeur ezomnek o klask en em sila e kêr dre laer.

"Heug o deus kêriz, breinet gant ar binvidigez, o buhez diroll ha plijadureziou ar c'hig, ouz an dudigou reuzaudik hag en dienez a vez ar gwel aneo eun tamall flammus da galeter ha krizder o c'halon.

"Deoust da ze, pa vez gant ar geiz pourvez ha boued saourus da gas d'ar marc'had, o laosker da dremen, pa'z eo gwir e plij da liz an dinell vat hag ar chegenn. Kent a ze, ma 'z afec'h d'ar geoded, lakaomp gant eur bouteged dluzed, ne vefe ket direiz an digemer grêt deoc'h. Arc'hoaz, eta, a-barz ma kemaroc'h penn hoc'h hent, e kassin d'ho logell eur bouteged pesked fresk eus ar rodo-mañ e-lec'h ma'z int stank a-walc'h.

- Doue d'az tigello evit da vadelez," a zistagas ar manac'h trist ha prederist. "Met penoer kredi eo ken didruez ouz ar beorien tud ar gêr-se a zo enni koulskoude, eur c'hannad a-barz Doue ?"

- An darn vras aneo, da lavarout eo kement hini war-bouez nebaud ha n'eo ket Breizad, a gendalc'h da gehelia dre guz an dousoù koz, deoust da brozegennou an eskop hag a valeñien ha da urzicu groñs ar roue breizat, perc'hann d'ar gêr.

"Pignomp uheloc'h, mar kirit. Ac'hano e tiskouezin deoc'h Ker-Iz evit m'ho po disaouzan anei, ar pez a dalvezo deoc'h, marteza, p'ho po he zizet."

Sevel a rejont o-daou betek eur garrig hir, ha c'hañz a-rez gant leñ ar gwaz brasa, hag e selljont diwarni war-zu ar c'hoaz. Yen e oa an avel ha sklêr ha digoc'hen an cabil, dindan an heñ gwenn a arc'hant ar mor, an dremmwel. War ribl an doureier e oa eur gêr, bras-divent, hag uhel ha mogerioù, dek toural beget-lemm warno, unan e-kichen pa a-uc'h da bep dor, hervez ma lavaras ar c'hoadour. Er c'hreiz anei e spumantad savadurioù bras, tiar ha paleziou tonius, hag ive eun dro hag a seblantas da Ronan eun iliz, gant eun tour dischu.

- Hannez," eme C'hourkuñv, "eo an templ a lake ar roue breizat sevel d'ar gwir Doue. Hogen n'eo ket echu c'hoaz ha tremen a ray meur a vlovez a-raok ma'z ay ar mên diweza da vaga an tour ennañ.

"Amañ dirazomp ennañ an hent bras ho kaso war-beun d'an nor a

zigor diouz tu ar reter. Ac'hano, betek ar porz-mor, eo treuzet kêr gant ar gaera strêd a c'houfed da welout e nep lec'h, ledan ha frank ha bevennet a bep tu, da genta, gant stalioù dispar ar varc'hadorien binvidik ha tier kran ar baremantourien ha pennou ar verdeidi, pelloc'h, an he c'hreiz, gant palezioù an uhelidi, ha goude, tostoc'h d'ar porz, gant annezioù disterc'h an nozerien listri hag o micherourien. Hogen ne oufen lavarout deoc'h a pe lec'h emañ ti an eskop na, zoken, palez ar roue rak ne dan ket alies da Iz ha ne anvezan mat, e gwirionez, nemet ar marc'h-alac'h."

Edont war an distro, hag en em gavet en digoadenn pa sailhes Keben war-zu enno, ganti kunuc'hennou en he genoù ha mein en he daouarn.

- Loen didalvez !" a c'haizma ar felladenn war he fried, "mez eo dit koll da emzer gant eun den a netra, eul laoueg doñjerus hag eur chaoker komzou goull, diegusoc'h c'hoaz egedout pa ne ra mann eus e gorf diskurlu ! Dallet out gant e sorc'hennou hag e ardoù arziet hag e laoskez da wreg ha da vugale en dienez avit heulia eur furlukin ha selaou e galennadurez diskiant ! Kê d'az labour ha na zistro mui war e dro pe e tamanti kalet !"

Kounnaret-hall e oa, feulz ha ruz-tan he daoulagad hag an sonenn e skoach he diweuz. Dallet ha trevariet gant he c'houfed droug, e savas he dorn hag e stlapas gant narz aur mên pounner ouz Ronan a voe tizet e-kreiz e dal.

- Dal, emañ d'al lean, "ha ra vo friket da benn divalo gant ar mên-mañ, te hag a zo kiriek da lakaat ma fried da drai gant sotonioù ha bel-biaschou didalvout !"

Glozet e oa bet Ronan hag ar gwad a rede diouz e dal war e zremm hag e varn.

- Maouez, emean, "pa zroug am eus grêt deoc'h oc'h heñcha ho pried war hent ar wirionez hag ar vadelez kristen ? N'eo ket ar predadoù berr en deus tremenet em ser o deus miret outañ da gas e labourioù da benn ha da bourveza sketus, deoc'h ha d'ho pugale, peadra d'ho maga ha d'ho kwiska da-reat. It didrouz en-dro d'ar gêr, m'ho ped, da bleustri gant ho ti hag ho pugale ha plijet gant Doue ho lakaat habaskoc'h ha didêri ho kalon !"

Paget en devo ar c'hoadou e brec'h e wreg da denna diganti, dre hag, ar mên all a zalc'he en he dozn.

- Lastez a c'hour, emañ deñ, "trac'h eo da nerz d'am hini, mat, daoust da ze, ne viri ket ouzin da gaout tu war an hailhevod-mañ abred pe ziwezat, dre widra ma vez ret. Hen touet em eus da Deutatis ha da Dorianis, hon doueou meur, emañ o klask diskara !"

Neuze, o lauskal an daou bried gant o riot, ez eas ar manac'h d'e logell.

x

x

x

Antronoz vintin, p'edo Ronan o tistrei d'e waskedenn, goude beza bet o pedi hag o kouronka er poull, aval boaz, e kavas enni eur boutegad dluzed kaer, galnet a vroen hag a raden, digaset deñ gant Gourkufiv, e-keit ha ma oa bet est ac'hano. Kerzent e predas gant eun doarn kraoñ-kelvez ha kelor hag, o samma ar pesked dindan e gazel, e kemeras penn an hent da vont da Iz. Dre eurvad evitañ, ne wade mui ar gouli e oa en e dal ha ne c'houzave ken droug kriz gantañ.

E-pad pell e kerzas etremek ar c'hornog, dindan ar gwez, hep kavout ar roudenn eus nep den ganet. En izelenn, avat, e oa rouesoc'h ar gwez, bodet amañ hag a-hont, dre vouchadou. Tachennouigoù douar difraostet gant ar bigell ha gounidoù arret a oa strewet etre ar bouchadou gwez ha muioc'h en draonienn, e kaved, tost d'eur waz pe d'eur feunteun bennak, lochennoù soul heñvel nuz hini Gourkufiv. Ne welas ket al lean ne-meur a dud. E goueled ar stankenn, plên ha digoadoc'h eget an uhelennou, e oa, koulskoude, gwazed ha merc'hed o tispac'ha douar atil gant o bin-viou dopes ha pounner hag eur mesaar bennak oc'h evasaat e loened.

Dre hir gerzout, e tiguezas Ronan war an hent meur a gase d'ar geoded kevrinus hag e kendalc'has gant e roud.

Pevare pennad

A r Pennkadour Leuhemel

Ti ar pennkadour Leuhemel, e Iz, a oa eur villa donius, unan eus ar re gaera a c'helled da gavout an darn-se eus kêr. War ar Strêd Greiz, pe Vie Mediana edo an digor aneañ troet d'ar c'hreisteiz.

Etre ar strêd hag ar savadur a dalveze da annez e gwirionez, edo an atrium, ennañ en e greiz eul leurenn gant eur poullig, e furn eur gantenn bevennet gant mein benet flour, e-lec'h n'en em zestume dour an toannoù pa veze glao. Eus a greiz ar poull e taole eur stivell, war-hed eun nebeud troatadou d'an nec'h, eur strankad dour sklêr a goueze en dro dei, avel eur barred glao, e beradou stank ha teo, par da berlez prizius p'n lakae bannou an heol da skedi.

Daou lab hir, stummet kear, unan a bep tu d'al leurenn, a oa harp o c'heñ ganto euz eur voger ha douget o zoennou, dicouz an tu arak, gant pilarou mein benet a zoars. Al labou-se, enno arrebouzi a dalvoudegez vras, a oa saliou-digamer evit an uhelidi a veze o wladenni ar parc'henn.

Eus al leurenn e tremened, dre eun trepas, e-barz eur porz kloz, toet gant eur gwiskad tano a vein treuzwelus, anvet mika geneomp hirio an deiz. Tro-war-dro d'ar porz, hogen hec solier e-uc'h deo, edo ar c'hambrou da gousket, ar sal-gibelle, ar sal-dibri, enni gourvezennou ha taolico bihan da brede, hag ar c'heginou. A-dreñv, liorzou bras, leun a wez hag a blant bleunvek deuet a bell-vro.

Pa zihunas Leuhemel, an deiz-se, e pare an heol mintin en e gambr. Kousket fall en devoa grêt, rak an darzenn a veze gantañ bep eur mare, abaoe an toel goaf a depas, tri mir kentoc'h, o stoum euz preizerien vor deuet da zilastra war-dro Pennmarc'h. Kalet e oa bet ar pegad ha trec'het an slouberien, met ar gouli don a oa e nozded ar pennbrezelour hen dalc'has gourvezet. Bremañ e oa gwellaet dea, hogen ne baree ket buan ar gouli hag en deveze predadou poan diwrnañ. Duspenn an droug-penn hen heskine, e oa chalet e spered o klask gouzout pe da vare e vije barrek da bignet war varc'h ha da vrezeli adarre, da heul Galon, e roue.

Ar garg a oa bet fiziet ennañ gant hemañ, unan uhel, koulskoude, pa oa bet lakaet e penn ar gwardou o devoa kofridi da ziwall Iz ha da virout enni

an urz vat, ne blije ket dea, nemaur. Boazet a viskoaz da ren eur vuhez dieub ha dibreder e koejou ha meziou Greiz, e vro c'hinidik, oc'h hemalc'hi al loened gouez, bualed, ouc'hed ha bleizi, hag oc'h en em ganna euz ar Saizon pe euz laeron-vor Iwerzon, e oa inoude dea beza klozet en eur geoded vogerist, e-touez annezidi estren dre ar ouenn hag ar yez. Eval e genvroiz, e kasae an tier hag ar paleziou mein, heñ hag a oa bet savet hag en doa bevet, betek e dregont vloaz en eun ti soul brasoc'h ha frankoc'h, avit gwir, eget lochennoù tud-all e veuriad.

Edo, eta, o keane war eun nebeud kroc'hennou blevek a dalveze dea da c'hourvezenn, rak ne oa ket evit gouzout ar gwelsoù a oa ar c'hiz eneo e Iz, eur c'hiz da dud ha n'o devoa ket gwad gour an o gwaziedou.

Gant ar c'hozn bual a oa en e gichen, war hed e vrac'h dioutañ, e laoskaas eur voudadenn ha, kerkent e teuas eur gwaz er gambr. Eur mell den e oa, yaouank c'hoaz, bleo ha baro-ruz dea, ha daoulegad sklêr ha glas en e benn. E keltieg fall ha kemmesket gant eur yez all diannav, e saludas ar pennkadour hag e c'houlennas outañ :

- Petra a fell deoc'h, mestr ?

Tagnous e vouez, rak n'edo ket war e du mat, war-lerc'h an noz-vez posius an devoa bet, e c'hourc'hemennas kintus :

- Oswald, caeth digristen an diaoul, digas din ma lein ha buan !

Naon du am eus deoust d'am zerzenn. Ha n'ankouc ket leunia pod ar chouchenn rak dare on da zidota gant ar sec'hed ruz a zav din ma staoñ ha ma gour-lafchenn. Goude a c'halvi, da zont war ma zro, ar mazeg daonet-se a anver Aurelianus. Arabat dit chom da yarz, gra prim ar gefridi pe da lâr a memento !

Eun nebeud miziou kentoc'h, e oa bet tapet an den a-kreiz eun emgann euz eur bagad Daniz, e genvroiz, ha miret abaoe, gant ar pennkadour avel kaez pe sklavour.

Didrouz, e kuitas Oswald kambr e vestr ha, dirale, e tistroas gant eur podad chouchenn hag eur mell morzed kero o tivogedi war eur plad. Met, o welout ar meuz, e kounaras Leuhemel :

- Sklavour diboell ! ennañ, "ha n'ouzout ket emañ hirio ar gwener,

an deiz ma varvas ar C'hrist euz ar groaz, ha ne c'hell ket eur c'hristen mat evelon, war-bouez koll e eno ha mont d'an ifern, dibri kig eur seurt devez ? Laosk ar chouchenn ganin ha kas diwar-wel an tamm kig-se, pagan digalon ! Me a rank keout pesked d'am mein ! Hast afo har c'hemenn d'ar c'hoz keginer ha lavar dea har bruzunin didrouz ma tale c'hoaz muic'h ! Klevout a rez ?

E-keit ha ma troe ar sklavour e seuliou da vont ar-mêz gant ar meuz, e stagas ar pennkadour e ziweuz euz ar podad chufere hag e lonkas an hantou aneañ en eur pennad. Euz d'an ampoent e teuas tro ar gambr eun denig treut ha moal, gwisket gant eun toaz gwenn ha hir o tiskenn dea, betek a draid hag o tougen eur voestig prunn an e zorn. N'en devoa ket amzer d'ober e c'hourc'hemennou na da heti damat d'ar mestr bruizat kan prim ha ken buanak e tarzas kunc'hennou hemañ :

- Ha setu te, mezeg didalvez !" a gria Leuhemel. "Ne dalv ket muioc'h eget felc'h eur c'hi maro da zrammou ha da louzaier flêrius. Ha bepred am dalc'hi amañ da ziwaska poanieu garo, p'am eus kement a ezomm da veza barrek adarre da varc'hekaat ha da vrezeli evit ho tifann, te ha da vroiz didalvoud, diouz an diavêzidi norman a zeu da zrusta an tolead-mañ ? Ha ! ma vije bet war ma zro unan eus ar benedourien vreston-se, a veve du-mañ an hor c'hoajou don, pell 'zo e vijen bet yac'h-pesk, padal ez eus gorbann c'hoaz em gouli ha ne zistag ket an derzenn diouzin ! Ha n'ac'h eus ket kavet, pelloc'h, remed d'am droug ?"

- Aotrou", eme ar mezeg, goude beza lamet ar stelenn diwar ar gouli ha sellet outañ gant evez, "ho louzaouet em eus hervez skiant ouizieker ar vezegie he ne greden ket e c'hellfed kavout barrekoc'h egodon war an dachenn-se. Grêt o deus vad ma dremmou deoc'h ha ne gollan ket ar fiziads d'ho parez. Ar pez a zo kiriek na yac'hait ket buanoc'h eo al levezon hag ar galloud he deus war ho korf eur steredenn drougobarus ha disnav em eus merzet en oabl, abaoe al loar nevez. Hogen, setu amañ eun evach burzudus, em eus azotet gant eur mên-gurun malet munut, lagad eun naer-voz, kalon eun touseg hag eur bodig sour-c'heotenn bet e glec'h en douz-glae a-pad seiz sizun. Gemdez ec'h evoc'h eur banne aneaf hag, a-bann seiz sizun all ac'hann, e vo torret nerz ar gwall-blanedenn a zo warnoc'h hag ec'h en em gavoc'h ken yac'h ha ma'z on ma-unan."

Ar c'hemprou-se, distaget e latin, a lakeas kounnar ar pennekadour da greski :

- Lavaret em eus dit lies gwech, penn azen a zo ac'hanout, komz din e yez ar Vrestoned ! He desket ac'h eus, tost da vat, abaoe m'emaomp dre amañ hag, hep mar, e ranko an holl he gouzout pa'z omp mestr dre amañ. Displeg din 'ta, evel ma'z eo d'aset, ar pez amadout o paouez druilha ha chaokat !"

Aet bestod gant ar bec'h a rae da glask e boziou ha da savarat kempenna ma c'helle, e troas Aurelianus e guzuliou en eun trefoedsch keltiek ha latin. Ne vezas ar Breizad, eus ar c'hemmesk iskis-se, nemet e tle dibri mein-gurun, eul lagad naer-voz hag eur galon douseg evit adkavout ar yec'hed :

- Luc'hed ha taran ! biskoaz kemend-all !" a c'hoarfe heñ taeroc'h-taera, "gant eun dromm disoalek hag heugus e fell dit ma nanna, strobinneller ha kontammer ma'z out !"

Ede o paouzistaga ar bomm-se p'en em gavas er gambr ar sklavour danat hag unan eus gwardou kêr armet hag herveziet, peg e brec'h ar manac'h Ronan.

- Mestz" eme ar c'henta, "kaset en deus ho keginer unan bennak da gerc'hat pesked d'ar porz mor e zo pellik mat ac'hann, evel ma ouzoc'h ha rak-se, ne vo ket dare ho lein dioustu. Hogen harzet en deus unan eus ho kwardou eur c'hantreer a zo gantañ eur boutegad dluzed fresk, hag a c'hellfe, mar kirit, beza grêt fritozenn ganto evit ho mezenn."

A-raok m'en devoe bet amzer Leuhemel da respont, e oa tostast ar gward da lavarout :

- Pennekadour meur, evit seveni ar reolenn a virer a-viskoaz er gêr-mañ hag a re difonn d'ar geiz ha d'ar gantreerien paour ha didalvez da lakaat

o zreid enni, em eus grest gouzoc'h emenn da hemañ da bellast p'ado o tont en tu-mañ d'an nor. Pa na gile kammed em eus gourdrouzet rei ba-zaou dea. Neuze e tisklerias din ez eo eur beleg kristen hag e teu da iz da welout an eskop ha d'an em lakaat en e c'hoarfe hemenn. Gouzout ouzop ez oc'h c'houli, evel hoc'h holl gennoiz, doujus e-kefver hemañ hag hoc'h eus berzet gwallgas beleien ho relijien. Setu perak, e-lec'h kas an den-mañ kuit diwar-dro, em eus kavet gwalloc'h hen digas dirazoc'h da glavout petra am bo d'ober aneaf hag, ive, eus ar boutegad pesked a zo gantañ."

Ar gwel eus ar c'hantreer, touz e benn hag hir ar bleo war e chouk, a euz da Leuhemel aneaf e oa hemañ eur manac'h kelt hag a laouennas e galon. Marteze ive, e oa aet e goudad tarzenn a-biou ha distanet eun nebeud da c'hor e c'houli. Hag heñ, habaskoc'h e vouez, da c'houlenn ouz Ronan :

- Ha gwir eo ez oc'h eul leon penedour, gouestlet ho puhez ganeoc'h d'ober pinijenn ha da bedi Doue ?"

- Pennekadour," a respontas ar manac'h, e keltiek ken reiz ma voe souezet ha fromet an uhelied, "beleg ha servicher on d'an Aotrou, e gwirionez. En eur c'hoarfe bras, pellik ac'hann, e vevan digavandenn er bedenn. Douet, avaldoc'h, eus an tu-all d'ar mor, e toueris da genta, en eur c'hoarfe-douar anvet bremañ Bro-Leon, e-lec'h ma prezegis lezenn Doue. Abaoe em eus grêt ma annez er c'hoarfe-se na ouien ket eus pe daked a Vro-Arvorig emañ. Pa glevis gant eur c'hoarfe paour, amezeg din, ez eus eun eskop er gêr-mañ, e ris ma menoz da vont betek aneaf, evit en em lakaat dinden e velli hag en e c'hoarfe hemenn. Mat harzet on bet gant unan eus ho kwardou an abeg ma'z on fall-wisket ha ma'z eo difennet ouz ar beorien dont er gêr-mañ, ar pez a zo eun dismegerc'h d'Her Salver a le-var eo ar rauezidien ar ze dosta d'E galon hag e tleont kaout skoz ha peadra da zibri digant ar ze emañ madou ar bed-mañ en o c'herz."

War e welan, ez oc'h klavv ha nammet ha truez em eus ouz ho stad poanios. N'em eus netra er bed nemet an dluzed-mañ hag o c'hinnig a rafen deoc'h gent plijadur ma ouefen e tigemerc'h ma frof ha m'ho skoazellfe da grefvaat ha da adkavout ar yec'hed."

- Laosk raktal en den santel-mañ da vale didrabas e kêr, evel ma plijo gantañ," a c'hoarfe hemennas Leuhemel d'ar gward, "ha diwall e vefe grêt hep droug dea."

"Ha deoc'h ma gwella bennoz evit ho prof, den Doue", emeañ da Ronan. "Hogen, daoust ma kavan saourus-keneñ an dluzed, n'on ket evit o digemerc'h, p'hoc'h eus ezomm hoc'h-unan aneb evit ho pred, c'houli ken treut ha liou an naon war ho tremm. Mirit ho pesked, etc, mat ho pezit soñj da bedi evidon, ma plijo gant Doue ma dibonnis ha rei tu din, en doara-se, d'E servicha gwalloc'h hiviziken ha da servicha Gralon, ma roue ha mestr, a zo gwaraer ar reiz kristen en tolead-mañ."

- Pennekadour," a lavaras al leon, "eun den ruet ha kalet out,

ha, moarvat, didruez a-wechou evel an holl vrezelourien-all, hogen eur galon vat ha trugarezus a lamm en da greiz. Kemer ar pesked-se a grafvay da gorf, rak n'eo ket me o debro. Ma n'o c'hamez ket, o roin da bsourc'h a gedon. Met ouspenn ar prof distar-mañ a ginnigan dit en ano Doue, az po unan-all dre ma dozn, digant an Aotrou, mar kerez da vihena.

"Goulenn pardon digantañ eus da bec'hejou, grata beza ma-deleuz ha truezou ouz ar re ac'h eus beli warno ha re e frankiz d'az sklavour danat, hag e vo selaouet da bedenn ha ma hini gant Doue a roy dit ar paze eus da c'houlit war an eur."

Chom a eure Leuhemel sabetuet hag hogos diskredik da heul ar c'hom-zou sebezus distaget gant ar c'hêz manac'h truilhek. Hogen bras o oa e fiziafs o gelloud tud Doue, ha, daoust d'ar c'heuz en devoe da goll eur sklavour yaou-ank, kzañv hag aktus d'al labour, e lavaras, o tridal gant al levenez :

- Den santel, anzav a ran dirazoc'h hag ar re a zo amañ ez on eur pec'hez bras hag e pedan Doue da deurel ouzin, an E vedelez divuzul, eur zell a druez ha da lemel diwarnon pouez gravus ma gwallou. Grataat a ran, avit an amzer da zont, beza mat ha just e-kefvez ma nese ha kement hini am eus beli warnañ. Ha grataat a ran ive ober eun den diaub eus ma sklavour danat, ma taurvez an Aotrou parea ma gouli ha kas an dezenn fall diwar ma zro."

Skedi a reas dremm distroñk ha barvek al leon gant eur sklêrijenn dreist-natur hag e savas e zorn da ober sin ar groaz a-uc'h d'ar c'hlañvour :

-Ra blijo gant Hor Salver a c'housafvas kement evit mab-den," emeañ, "daskori dit ar yec'hed evit ma c'helli E servicha gwell hiviziken !"

Ha kerkent e savas Leuhemel diwar e welle Krec'hin hag e Kerzas war leurenn ar gambir ken dilu ha tra; direk daoulagad saouzanet ar re a oa eno.

- Moullet re vo Doue" emeañ d'al leon, "avit eur burzud ken estlammus ha meulet ive ho santelez p'En deus ho kavet dallezek d'ober implij eus E c'halloud !"

Ma oa ket ar sklavour evit kredi n'edo mui a perc'henniez Leuhemel ha pa ne voe ken en arvar eus e eurvad, ac'h em strinkas d'an douer ouz treid Ronen, da genta, ha re a vestr, da c'houde, rak meizet en devoe komzou an daou zen ha test a oa bet eus ar pazeñs.

- Den santel, "emeañ d'ar manac'h, "ken souszus eo ar paze am eus gwellet ha ken marzus eo an eurvad a zau din ma rankan ho trugarekaat hag anzav eo ho Toue trec'h d'ar re all, zoken da Ddin, hini ma broad. C'hoant em eus d'E annout ha da zeski E lezenn evit mont diwezatoc'h, d'he deski d'am meuried, m'am befo ar c'hraz da zistrei d'am bro, eur wach bennak !"

Ha da Leuhemel e lavaras :

- Pennkedour meur, ma mestz hael ha brokus, re gouezo warnoc'h bennoz ha gwarez an Doue-se en deus roet deoc'h, adarre, yec'hed da servicha ho hag ho priñs. Ho trugarekaat a ran a wir galon, eus ar frankiz a zaskorit din. An talvoudusa tafzor eo a c'hell eur gour da gaout. Ober a rin implij vat aneañ da habaskaat al lusk entanet a zoug ma c'henvroiz d'an drañh ha d'ar proiz."

Eul levenez fresalzus e voe da Ronan laouenedigez Leuhemel hag ar sklavour diaubet ha fiziafs en doa e promesa hemañ a tistroje e-touez e genvroiz da vruda madelez ha gelloud ar gwir Doue.

E-keit-se e oa dilavar, gant ar saouzan, ar gward-kêr, eun Ar-vorigad dizeek hag a reñk izel aneañ ha, dreist-holl, Aurelianus, ar mezeg ken gouzidik, war a lavara. Eun den amgredik a oa, stag e galon ouz an arc'hant hag ar madou hag enni nemet nebeud-tra a fiziafs e gelloud e zoueou nag e hini Ronan, avitad da veza klavet beleien Iz ac'h ober ano aneañ hag eus E vuzuzdou. Sofjal a ras e oa al leon eur strobiller anaoudek war ar c'hlañvojoù hag ar braou, gouest d'e lemel digant ar glañvourien. Hag eur c'halz eus e zervez en dije roet evit gouzout ar pez a ouie ar manac'h war ar skiant-se.

Edo Ronan o vont da gimidi diouz ar pennkedour, pa lavaras hemañ deañ :

- A-barz nameur, den Doue, e touy d'am zi, da verenna ganin, ar gour santel Distin an Baalog, ma zad kovesour hag hor beleg meur war-lezoc'h an eskop. Eun enor bras a vefe din ma chomfec'h da broda geneomp, ar pez a ray tu deoc'h ouspenn d'ober anaoudegez gant eun den leon a vertuzioù hag ho lakay da veza digemzet gant an eskop, e vestr, an hini a vennit komz outañ.

Ma asantas ar manac'h da gouviadenn an uheliad, ne voe ket gant ar menoz da gaout tinell vat, hogen gant ar soñj hepken e c'helli, ac'h ober anaoudegez gant ar beleg bras, kaout besoc'h a ze dor zigor en eskopti.

Ha setu penaos, avit ar wach kenta, ac'h en em gavas ar penedour Ronan gant Distin an-Baalog.

Pempvet pennad

Di war-benn

perc'hannidigez Iz gant Gralon

ha meur a zarvoud-all

Tri edont gant o fred e sal-debri frank ha sklêr ar penn-kadour
Leuhemel : ar perc'henn e-unan, ar manac'h Distin an Baelog, person-meur Iz,
ha Ronan, lean penedour Koad an Neved.

Eur c'haer a zan, e barr an oad, e oa an uheliad, ma e zremm ha
livrin e ziou chot. Diskabell e oa o bannet bleo rouz-gell hag e touge dilhad
kran, evel ma tere euz sur penn-vrezelour eus e reñk, gant eun doneg vezer
ruz-flamm o tiskenn betek hanter e ziou vorzed hag eul lavreg glas ha barr.
Gwisket e oa e droid gant arc'hennou lîr, kentrou housn outo hag e zeou gof-
gar gant eun doare heuzou lian sklêr ha striz, warno lietezennou a-liou oc'h
an em groazia an eil war eben betek e zeoulin. En istribilh euz e c'houziz e
weled eur gouglefiv pauz-hir e-barz eur gouhin lîr kalet.

Ar manac'h Distin an Baelog, touz an hanter a-reok eus e glopenn,
hervez giz al leoned kelt, a c'halle kaout daou-ugent vloaz pe war-dro. Eun
nauz nerzuz hag hegarat a bare war o zremm draut ha sac'h, prederiet bepred
gant ar soñj eus brasa klod Doue hag ar gwella doare da c'hounid deñ aneou
paganed Iz. En e zeoulagad don, tafval ha birvidik, o lintrañ dindan eun tel
ledan ha kulvennou stank a-liou gant ar c'histin ao, e teve eun tan iskis
ha feulz hag a droe, bep eur mare, e sellou kuñv ha leun a vadalez. War e
bouezig e komze, frêz ha plên e vouez, evel eun den helavaz ha boazet da bre-
zeg.

Dre ar furm ha devoe, e tenne e sac da hini Ronan, met an danvez
aneñ, e-lec'h beza kroc'han blevk ha disneuz, e oa burell gros ha tafval,
troc'het ha gwriet e zoare, rak mennout a rae e vije gwisket derañ beleien
Iz anez beza dismagafset krann gant kêriz, troet da zisprizout, dre guz, ar
Vretoned, o mistri. E-lec'h mont diarc'henn, e-giz al lean paour, e oa gantañ
solennou koad, dalc'hat euz e droid gant lezennou striz.

Bobet en dro d'eun daol, azezet ha n'eo ket gouzvezet, evel ma plije

da dud Iz, war waleou prede deust ar c'hiz aneo eus Roma, e oa deraouet
an tri den gant o merenn, kerzent ha galvet gantañbenoz an Aotrou war ar
boued edont o vont da gemerout. Frondus ha blizin oc'h en em skigne dre
ar sal c'houez saourus ha c'houek ar fritozenn dluzed, oc'h hillige difron
ar bredourien.

Leuhemel, ha ne ouie ket penaos diskouez e levanez hag a anaou-
degez-vat da Ronan evit ar yec'hed en devoe adkavet dre vertuz e bedenn,
her pedas hag hen aspedas meur a wech da zibab an dluz brasa ha koara.
Dinac'het e voe krann ar c'hinnig gant ar penedour a zebzas hepken eun
tamm kreun soubet en eur banna dour.

Distin an Baelog, kennebeut, ne oa ket troet war an dibri hag a
heulie, etrise ma c'helle, reolennou kalet ha fur al leoned vrezizet. Hogen,
dre sevenadigez euz ar pennkadour, e tafvas unan eus ar pesked, o nac'h
grofs, evelato, ar gwin han alie da ova. Eur wir garseen d'an uheliad, a
lavaras d'e gouvidi e oa e win eus ar gwella a oufad da gaout e Bro-Noned,
eun died dispar aneñ, trec'h d'ar c'houeka chouchenn, hag a lakao droe
ha tomm kalon an nep a dorre gantañ e sac'hed ?

Ha satu ma lavaras :

- Tadou mat ha kiloeed kerantezus, eun enor bras eo din ho kaout
emañ ganin euz taol, hogen chalet an ive na deurvezit ket digeri ho poull-
kalon, evel ma ran-ma, d'ar meuz ha d'ar gwin-mañ ken mat koulskoude.

"Gouzout a ouzon arvat n'eo ket dre zispriz ne fae e chomit da
ziouerout ho lod eus eur gefalon hag eur gwin a zo ken c'houek d'am staon,
dreist-holl abaoe ma plijas gant Doue, dre c'halloud ho pedennou-e'houi,
Ronan, E servicher karet, rein din yec'hed e-nevez. Eun drugar, avot, a
vije bet din ho kwalout oc'h ober chagenn am ser. Hogen ra vo graet hervez
ho youl pe vennit houlin ken striz ar reolenn a binijenn savet gwechall,
evit ho silvidigez hag hini tud ar bed, gant ar sent, leun a furnez, a
brezegas an Aviel d'ar Vretoned. Ho meulaudi a rin d'hon eskop santel
Gourmaelon, Doue d'e viro deomp c'hoaz pell amzer, daoust d'an oad vras
ma'z eo bremañ anni !"

- Perak, pennkadour", eme Ronan, "beza chalet pa n'omp ket ken
broust ha te war an debri hag an eva ? Ezomm en deus da gorf a veadurez
krefv d'han lakast adarre e-ratre-vat, war-lec'h ar mestral a euz dit
klefvel. A-drugarez Doue ez omp yec'h hon-daou, an Tad Distin ha ma, hag,
evit ar peze a sell ouzin da vihana, e c'hellan lavarout e preden hirie
kankoulz hag eur roue en e balez, rak n'eo ket bemañ e tabren eus ar bara-
mañ e zo eur gwir fest d'an nep a vez laouen pa gav, an douar, gwizicou
e-walc'h da grignat.

"Arabat, eta, hor meulfec'h da C'hourmaelon a ren e-unan, moar-
vat, eur vuhez ken rust hag hon hini. Met komzit din aneñ, m'ho ped, o
veza ma n'ouzon netra diwar e benn. Pa livirit ez eo koz bras, e tle beza
ganeoc'h er gêr-mañ, abaoe pell' zo ?"

- Hon eskop, eme Distin an Baelog, "a zo emañ ganeomp abaoe ma
taujoimp d'ar vre-mañ da houl Gralon, da lavarout eo e vo c'houec'h vloaz

a-benn ar Sizun Wenn. Tost da bevar-ugent vloaz en deus bremañ pe, marteze, ouspenn ha kent, e Enez Vreiz, edo en hor penn, eun nebeud menech all ha me, bodet gantañ, en eur c'hoad don, da bedi an Aotrou ha d'fe servicha. Pa eure hor priñs Gralon e venoz da guitaat hon enez ha da zont d'an toled-mañ, gant ar Gornubiiz o oa sujidi dea, da bere'henna eur vro nevez, ha da ober anei rouantelez Kerne, e c'houlonnas skoazell hon tad Gourmaelon, rak ezomm en devoa anezhañ hag aus e venec'h da vireout ar feiz e-touez e bobled ha da c'hounit da Zoue anezhañ tud ar vro edo e soñj aloubi hag a oa holl pagoned, war-bouez hiniennoù, marteze. Neuze, goude beza hir-brederiet ha pedet an Aotrou d'e sklerijenna, ec'h asantas hon abad beza sakret eskop, gant eun den santel aus ar reñk-se, o veza ma tlee d'erc'hel an hevelep karg ar rouantelez nevez. Ha war-lerc'h ar feur a voe grist diwezatac'h etre ar priñs ha pennadureziou Iz, anavezet ganto e veli warno, e teuas Gourmaelon da chom ar gêr-mañ, o tere'hel gantañ eun nebeud aus e venec'h da brezeg hor relijion da gêriz. Ar re-all a gasas dre bevar c'horn ar vro gant gouc'hemenn da ober hevelep labour. Met, siouez ! bras meurbet eo an eost a zo fi-ziet ennomp ha bihan niver an eosterien."

- Pennas ?" a lavaras ar penedour, souezet-mik. "Ha c'houec'h vloaz n'eus ken abaoe ma tilestras Breiziz ar c'hornad-mañ ? Pennas, eta, o deus gallet tec'hidi, kannet moarvat gant ar Saozon, en em zizeza ken mat ennañ e ken barr amzer, kemerout eur gêr difennet ha mogeriet evel hounañ ha sevel e vro eur rouantelez urziet mat ? Edo e gwelarn goualed Arvorig, bloaz a vo war-dro hanter an haf a zay o kalenn komz Doue d'ar boblañs, anei eun niver bihan e Arvorigiz hag eul livad rouez a Vreiziz trec'het gant alouberien german gouez ha kriiz. Eno e oa deuet ar Vretoned-se da zouara, en o fann eun uheliad bennak aus o gouenn, kalonek ha dispont a-dra sur, hogen ken paour ha ken rivinet hag int hag, en abeg da se, re zinerz da urzia ar vro a-zoare ha da zizeza e c'halloud warni ervat. Ha c'houi ho pijs savet ha perc'hennet eur vroad nevez, ken buan-all, natra nemet gant skoazell hoc'h armou ha labour ho tivrez'h ?"

- Ni tud trec'het ha tec'hidi ?" eme Leuhemel, lorc'hus ha feuket. "Biskoaz n'omp bet kannet na trec'het ha, ma'z omp deuet da Gornubia Arvorig, a anvomp bremañ Bro-Gerne, ez eo hepken dre youl Gralon, hor roue kedarn ha fur, ar gouzon n'eus ket par dea e nep lec'h, Doue d'eo viro doomp !"

- Ne vennen ket ho feuka," a respontas Ronan, "hag ho pedan d'am digarazi ma n'eo ket plijet deoc'h ma c'homzou, Sebezot on, avat, gant ar pezh a glevan ha laouen e vefan o c'houzout hirroc'h diwar-benn ho tonedigez e Arvorig."

- Dezravelli a rafan deoc'h kement tra dre ar munud," a zistegas ar pennekour, "met, marteze, e vefe mat deoc'h ive klavout eno aus an darvoudou e c'hoarvezas e Enez Vreiz abaoe derou ar gantved-mañ. Hon tad doujet, Distin an Baalog, ken helavaz all ha ken gouiziek war an traou-se, o displeg deoc'h gwelloc'h egedon, ken evit beza kavet meneg aneo er skridou koz, ken evel test e-unan e zaxn aus an dagoueziou-se."

Ha belag Iz, war c'houlenn o zaou gavandad, a eure deo an danevell-mañ :

"Ar bloaz 428 a welas eun toullad Saozon o tiskenn e Breiz; hogen a-baz n'ameur, e voent taollet er mor ha ne gredjont rui distrei e-pad pell. Er bloaz 455, e voe ganto eun argadenn-all, kalz gwasaoc'h ar wech-mañ, o veza ma oant niverusoc'h ha gwelloc'h armet. Tre-war-dro da Lunden, eur gêr e-kreiz eun toled hag a zae gant al latin abaoe mare ar Romaned, eo e touzjont. En desped da aneblez ha stourmadou kalet an toled, e rajont o diazezh hag o annez ennañ, goude beza mastroniet ar gêr. Daou vloaz warn-ugent diwezatac'h, a 477, e stagjont adarre da zilestra, hogen, ar wech-mañ, war-du ar c'hreistaiz d'an anez. Harzet e voent d'en em astenn pelloc'h gant ar Vretoned a gavjont d'o diarbenn. Met, allas, dre an abeg aus an dizunvaniez a rane e-touez ar re-mañ, ne c'helljont ket o c'has kuit. Hor braudeur aus al lec'hioù aloubet, dreist-holl re doland Lunden, e chomas, ar pep brasa aneo, da zomsklavet pe da verourien dindan an divroidi a eure des labourat an douarou evito. Ar re-all a dec'has kuit, darn davet o c'henvroiz dioub ha darn-all da c'hourenez Arvorig."

"Er bloaz 477, d'an oad a dregont vloaz pe war-dro, e oa Gralon eur priñs doujet ha karet hag eur brezalour brudet. War-lerc'h aloubadeg ar Saozon, a savas eur strollad killeed ha gwizien da vont da stourm outo, e-unan gant tud aus ar meuriadou nesa en em gevredet gantañ. Met, daoust d'eo daoliou kaer ha da re ar gadourien a-du gantañ, ne voe ket skorzat ar vro aus an alouberien."

"M'o deus Breiziz perziou dispar, nerz-kalon hag emroldsted, o deus ive siou aus ar falla hag ar vrezoni hag ar warizi eo ar re-ze. Menned Gralon a vije bet unani a genvroiz en eur rouantelez frammet ha reizet a-zoare, en eur stad grev ha n'he dije anavezet nemet beli eur mestr hepken. Neuze e vijent bet didre'h hag o anebourien, gant son rak o nerz, o laeskje dizrost, didrasas hag e peoc'h. En anez, avat, e pleustas Gralon da gevredes start, en eur bouchad fetis, broadouigou niverus Broiz, distag ha dieub an eil diouz eben, daoust da liamm ar yez hag ar ouenn, ha dare bepred d'an em zrailha kenetrezo diwar-benn an distera digarez. Ha setu perak eo chomet, abaoe en hor bro c'hanidik, hag e chomo, moarvat, da viken, ar baganed ouz ha digernez-se o deus plouiet warni. Dre fazi Breiziz a-unan e vo, eta, ma teuent da goll o frankiz, o madou ha betek o yez zoken. Hep mar n'eo deus ket gwelut ar pep gwas aus an trubuilhou o gortoz en omzer da zont ha re zizezet e vo dao kaout keuz d'o dievezet ha d'o dizunvaniez, pa ziredo warno, adarre, strolladou-all a Saozon villiget, niverusoc'h-niverusa bewech."

"Pa c'houitas Gralon war e venoz da genstrolle da vat e genvroiz diauj ha direiz, e teuas dea ar soñj da zivros ha da glask eun toled ec'hon a-walc'h evit ma c'hellje sevel ennañ, gant skoazell e veuried, eur wir rouantelez diazezet ha frammet diouz e zoare. Spierien a gasas, dre guz, da Gornubia Arvorig hag a klavas ganto e oa tudet rouez gant eur boblañs kar d'e hini dre ar ouenn hag ar yez, ha ne vije ket diess kavout

enni douarou d'e veuriad. Abaoe, emezo, ma oa bet dismantrt impalaerded Roma gant argadennoù hag aloubadennoù ar Varbared, e oa diberc'henn, koulz lavarout, ar rann-se eus Arvorig ha drastet, bep eur mare, gant preizerien-vor a zeue enni da laza ha da laerez. Hep mar, ne vije ket drouklouen an Arvorig-se, o kaout eur priñs dispont ha galloudus d'o difenn hag e pleg-jent deat hep enebi. Koulskoude, emeo c'hoaz, e oa eno, war ribl ar mor, eur gêr vras, anvet Iz, pirvidik ha kale'hiet gant mogerioù kaur hag uhol-meurbut, gouest da warzi, diouz kement argader an ennezidi anei, tud a ouenn roman evit an darn-vuia ha na gomzent nemet latin. Da zisfizout a vije outo, eta, o veza ma oa tu da gredi na zigemerjont ket a galon vat di-avêzidi o tont d'o lakast en o dalc'h ha da ober deo suja ha paea an tailhou dleet gant pep dalc'hied d'e briñs pe d'e roue.

An disacouzan a roas deat e spierien a startas e Gralon e youl da zivron. Dizale e vodas e gerentiez hag e gilead da gemenn deo e venoz ha da c'houlenn outo o ali. Ken toullat e oant gant ar c'hoant da c'hounit brud ha danvez ha ken plijet ha fougest e voent gant an dazrevell a eure deo ar priñs eus ar vro dianav, ma z'oeas an darn vrasa aneo a-du gantañ. Kerkent ec'h en em aozjont da drouzi ar mor gant o gwagez, o bugale, o gwizien hag o servicherien. E-keit-se e kase Gralon kannedad da feurmi al listri hag ar bagou a oa ret da gaout evit an treiz. Ar vrud eus an difrêou-se en em skingas buan hag, a bep tu, e tirede brezelourien da ginnig o skoazell d'ar priñs dispont anavezet e pep lec'h dre e daoliou kaur, e boell hag e ijin. Hogen, a-barz kavout digemer en e arme, e rankent toui deat dre o le gwazoniez ha foalded reiz. Hag, eun deiz, e savas an heol war eun engroez diniver a listri hag a vagou a lakeas neuze da oual war-zu ar su.

"Dizarvoud e oa bet an treiz rak, a drugarez Doue, e oa chomet he-bask ha kompes ar mor. Gouzout a ouie an dreizidi e pe lec'h dilestra, o veza ma oant kenteliet gant spierien Gralon deat ganto war al listri. Eun draezenn gaer ha frank, en eun tolead didrouz ha digenvez; o devoa dibabet evit douara. Pellik mat, avat, e padas an dilestredag, rak ne c'halle ket an holl listri tostast a-gevred ouz an eod. A-nebeudou, koulskoude, e lakeas an dud o zroad war an douar hag e tiskergjont o armou, o fouvez hag en nebeud kezeg e oa ganto. Da c'houde, e kaseas Gralon kannedad da gement lec'h, betek kêr Iz zoken, da embann e zonedigez ar vro ha da rei da c'houzout na vije nemetañ hiviziken, priñs ha perc'henn dei hag ha difennje diouz skrapadennoù ha lazerez ar breizerien a veze dalc'hmat oc'h ha drastet. Hag, e gwirionez, ne zaleas ket an urz vat hag ar peoc'h da ren rak, kerkent ha ma tilestre, e tu pe du, divroidi mennet da ober droug, e kavent kadourien vreizet da sailha warno ha d'o laza hep truez.

"Buan e teuas Arvorig, ar gouerien, ar bobl dister hag ar geiz dreist-holl, da garout Gralon, o welout o c'hellent, dinden gwarez lezennou ha reolennoù fur, beva didrabas ha mirout frouez o labour, kent an arvar bepred. Ne oa mui ar vistri hag ar berc'hanned kalet ha drouk evit nozout outo, rak barnerien leal a oa da vras ar gwir diouz ar gaou. Setu ma paent, hep re a gerse nag a ziegi, an tailhou dleet a c'houlenne ar priñs diganto. Daoust

ha ma oant c'hoaz paganed, ne rajont ket digemer fall d'an nebeud leaned en em gavet en o zouez hag e meur a lec'h, dinden levezon ar re-mañ, e tilezent o fals-kredadennoù evit en em rei d'ar gwir Doue. Hogen, betek-hen eo chomet re-vihan an niver eus hor beleien evit skarza da-vat ar baganiez eus ar vro a-bez. Fiziañs hon eus, avat, da gas al labour-se da benn, o veza ma teu deomp bremañ bep bloaz, eus Enaz Vreiz, strolladouigoù menec'h santel, entanet o c'halon gant ar c'hoant d'hor skora da brezag emañ an Aviel.

"Met donedigez ar Vretoned e Kornubia Arvorig, pe Gerne, evel ma lavaromp bremañ, ne voe ket diouz doare kêriz Iz, paganed pirvidik ha faoùs, tust da zismegafsi kement den na oa ket eus o c'hêr. Evito ne oa ar Vretoned nemet barbared, eun nebeudig sevenoc'h, marteze, eget ar re a zraete Bro-C'hallis d'an ampoent. Abaoe an dismantr en em gavet gant impalaerded Roma, e veze Iz dizalc'h e bep sujidigez ha gwazoniez. Renet ha meret e oa gant eur c'huzul meur, emañ ar vegenn eus he c'heodediz pirvidik, pennadureziou otus ha mac'hom aneo. E penn ar c'huzul ha devoa eun uheliad galloudus kenañ, koz ha doujet bras, e ano Cornelius. Eun digemer yen a eure da gannad Gralon pa zadjont da c'houlenn, en ano o mestr, ma enzavez Iz e notrouniez. Hogen, fur ha poellek hag eveziek na roje digarez d'ar priñs divroad da feuka, ne zistagas nep gourdrour na komz kasas. Gwellet en devoa, diwar ar mogerioù-difenn, ar gadourien estren, niverus hag arnoziet a-zoare o c'hronna ar geoded. "Eur respont ho pe a-benn tri deiz ac'hann", emañ, "amzer da voda kuzul-kêr da gaout e ali digantañ". A-benn an termen divizet, e kumennas da c'hralon ac'h asentje izili ar c'huzul d'e c'houlenn ma laoskje gant tud Iz o gwirioù a geodediz, ma ne lamje diganto nag o frankiz nag o lezennou hag o boeziou koz ha ma hegie ^{n'ho} e nep giz, ar pez a vije ret dougen war eur feur dre skrid, sinet ha siellet. Hep mar e kave gwelloc'h tud Iz kodiens eget enebi ouz an alouberien, daoust ma oant gouest da dalout outo ervat, a-dreñv o mogerioù uhel ha ledan. N'eo ket ar bevañs en dije grêt diouer deo, aas eo gouzout, pe oa distoc'h ar mor dirazo. Met pebez rivin d'o c'henwarz, avat, ma chom-jent dizarempred gant annezidi-all an tolead a brene diganto o holl zian-kachou ha tresouerez azet hag a roe deo kement a arc'hant da c'hounit ! An abag pouezusa d'en em glevout dre gaer gant ar Vretoned a oa hennez rak bez' e oa c'hoaz meur a hini-all, da skouer laoskentez ha diegi tud kêr d'en em ganna ouz brezelourien dispont ha gouziek da vrezeli, ha setu ma voe sinet ar feur hep nemeur a dabut.

"E-keuz ar gouelioù a voe lidet gant kêriz en enor d'o notrou nevez, e voe digemeret Gralon, en o zi, gant Cornelius ha Patricia, e bried. Eur verc'h pennheroz o devoa, anvet Stella, pemp bloaz warnugent deiz, marteze, d'an ampoent. Ha setu ma kouezas ar priñs e karantez ar plac'h ha m'he goulenas da bried, daoust ha ma oa eun hanter kosoc'h egeti. Intafvet abret en e vro c'hindik, hep beza bet nep bugel digant ar wreg net dioutañ, e oa deat c'hoant deat da sevel tiegez a-nevez, gant ar spi en dije eus mah da genderc'hal e lignez ha da gemerout e lec'h,

diwezotoc'h, e penn rouantelezh Bro-Gerne edo o paouez diazeza. N'eur ket evit lavarout ma plijez Gralon da Stella, gwall vras ar c'hemm etre o diou and, met an ali, pe ar goure'hemenn a roas doi he zud, ken troet gant mad ar geoded ha gant o hini o-unan, a voe a bouez bras da gaout he esant diganti. Ha da zeiz an eured, grêt gant hon tad Gourmaelon, e kurunas ive an eskop an daou bried roue ha rouanez Bro-Gerne. Eur bloaz war-lerc'h e varve Stella, goude beza lakeet er bed eur vore'h a voe anvet Ahez Dahud hag a ra an holl outi, bremañ, ar brifsezig Ahez.

"Ha setu dre vras," eme Zistin an Baelog, "an danevell eus istor Gralon hag eus an doare ma voe perc'hennet ar gêr-mañ gantaf."

C'houec'hvet pennad

Ar weladenn da Iz ha d'he eskop

Kimadet o devoa an daou lean diouz ar pennkadour Leuhemal hag edont oc'h heda ar via Medianna, ar strêd hir meubet a gase da greiz kêr. A bep tu dei, ec'h en em astenna, hep ehan, diou rafkenned tier bepred kaeroc'h-kaera. O vont hag o tont gant ar strêd, e oa stank an dud, darn war droed ha darn-all e kêrri skeñv diourodek, stlejet gant koubladou mir-c'had bihan ha herrus, unan a bep tu d'ar wall-garr. Diskabell ha gwisket kran e oa an holl, ganto an dro d'o c'horf bep a bez danvez gwenn hag hirik, dalc'het en istribilh ouz eur skoaz. Faeüs e oa o neuz hag e pare an dispriz war o dremm o kavout, war o hent, an daou vanac'h gwisket iskis ha paour. Hogan, ne doale Ronan nemeur a evez outo ha, prederiet gant an danevell edo o paouez klevout hag he devoa bet levezon war e spered, e lavaras d'e gavandad :

- Kristen e oa Stella, emichafs, a-barz ma voe lidet he eured ?"

- Ya," eme Zistin, "badezet a oa bet, met diaes eo gouzout hag hen e troas kein e gwirionez d'ar baganiz ha ma ne oa ket kement-se aun taol-gwidre da douella Gralon ha da veza deust mat dea. Er gêr-mañ ao ken pilpouz ha ken kivioul an dud ma ne c'haller kaout nep fiziañs anno. Meur a vloaz 'zo e labour a-zavri hon tad karet Gourmaelon, hag e velsien evit o gounit d'ar gwir Doue. En anez, avat, rak ar ra a ra van da zont d'hor relijion santel, gant aon rak ar roue pe evit plijout dea, ne zaleont ket da zistreiñ d'o zec'hou koz, d'o buhezegaz diroll ha da ghalia, dre guz, o fals-doueou. Endra ma reont an neuz da eneri hon Aotrou, da sul ha da gefver ar goullioù peuz, e chom o c'halon e strad ar fallagriez ha stag direol ouz madou ar bed hag ar plijedureziou hudur."

- Ha nep hini aneo n'eo bet dedennet gant komz Doue na mennet d'he digemerout ez-leal ?"

- A drugarez d'ar C'hrist ha d'E vamm santel, hon eus aun nebeudig kristenien vet e-touez ar geiz hag ar sklavourien, met, sic'hoaz ! distrik meurbed an niver anec. Daoust da urziou Gralon, embannet evit ma vije truzekoc'h o mistri ouz ar seurt astud, a vezont bepred gwallgaset, kestizet alies e gaou ha sammet a labour dreist o nerz hag o galloud. Loened paour

n'eo ken ar geiz-se, draetet mezus gant o ferc'henned hag hep eun auflenn spi e wallafe o stad en amzer da zont. N'eo ket souez, eta, e c'homont disablant pe e skrignont goapaüs p'hor c'hlevomp o prezeg deo an habaskted ha p'o aliomp da c'houzañv hep klamm evit kaout diwezatac'h ar vuhez a bado da viken."

- Eur gefridi rannalonus eo hoc'h hini," eme Ronan adarre, "ha kent gwec'h gwelloc'h eo beza o tarampredi kouerien, dizrouk ha diwidre peurlies, eget ar gêriz-mañ brain pe galedet kalon eun darn aneo gant ar vrezoni hag an arc'hant hag hini eun darn-all gant ar reuzadigez ha krizder o mistri."

"Ha pa soñjan, pe dud eo tad-kaer ha mamm-gaer Gralon ? Dinac'het o deus, moarvat, o fals-kredennou hag ez int gwir gristenien douget d'ar mad hag e roont skouer d'o nesa ?"

- Azabet deoc'h fazia," a respontas Distin, "he dint disheñvel, e nep doare, diouz uhelidi-all kêr-lz. Dirak o mab-kaer e tiskouezont beza tuet gant hor relijion santel, met dic'houvez deañ e talc'hont d'o boazioù fallakr ha d'o c'hredennou diaoulek. Ha gwasa pez'zo, emañ ganto ar briñsez-zig Ahez, o merc'h vihan, a zesavont, hep mar, evel eur baganezig !"

- Doue hag ar Werc'hez d'he diwalle ha d'he miro diamm a bac'had ! eme al lean penedour. "Penaos kredi n'en deus ket he zad he miret gantañ en e balez, da veza savet e karentez hag e doujañs an Aotrou ?"

- Meur a abeg a zo da gement-se," eme Zistin, raktal war e c'hez.

"Da genta, hervez boazioù lz, e tle eur bugel, kollat e vamm gantañ abred, beza maget ha desavet gant e dud koz e-doug ar bloaveziou kenta eus e vugaleaj? A-hend-all, abaoe ma'z eo maro e bried, n'emañ mui ar roue o c'hom er geoded-mañ. Marzet en devoa e teue, war o bagou, ar breizerien-vor hag an alouberien estren da ober gwaskerez e-kreiz ar vro betek al lec'h m'en em deol ar froud Theier er stêr Odad, hag e reas e venoz d'o diarbenn o sevel eno eur c'hastell bras, tost da zismantroù kêr an Erered pe Civitas Aquilonia, evel ma ras ar Romaned outi. Emañ ar pezh labour-se war-nes beza peuraezet ha, tro-war-dro deañ, e ra kalz eus tud ar c'hornad o annez, evit en em lakaat dindan e warez. A-barz pell, e vo, en dro d'ar c'hastell, eur gêr nevez o anvimp Kemper. Hounnez a vo kêrbenn rouantelez Kerne a-bez ha Gralon, hor roue, a ray enni e annez hiviziken."

"Eun dra ouspenn. A-barz diazoza e rouantelez evel m'he gwelomp hirio an deiz, e rankas ar priñs plousteri dibaouez ha stourm kalet. Kalz diesteriou ha trubuilh a roas deañ Rivelan Mur Marc'hou ha Kongar, an daou uhelid her skoazelles ar gwella da ostenn e veli war Gerne. Rai a eure deo geprou talvoudus ha douarou oc'hon ha strujus gant an diviz a vijent gwizien feal deañ ha sentus bapred en e geñver. Met, allas ! gwall-zister, war o meno, e oa ar c'haradon e-skoaz o strivou hag o fonn da skora Gralon ha, di-anaoudek ha drouklaouen, e tinac'hjont ar sujedigez a dleent deañ, oc'h en em sevel en o enep. Gouzout ouzoc'h pezañ e kuitas Enez Vreiz : klasket en devoa kevreda ar meuriadou vreizat dindan eur mestr hepken, gouest ha barrek koulz war dachenn ar brezel hag hini ar pecc'h, a raje aneo eur vroad unvan

ha nierzus. War-lerc'h e c'houitadenn er c'heñver-se, dre giriegez digaset, diangloa ha gwarizi e genvroiz tramor, e krede beza kaset e vennad da benn e Bro-Arvorig. Na voa ket evit gouzañv a vije diskaret e labour hag, ar gounnar o virvi ennañ, e prietas d'an daou drubard eur c'hastiz garo meurbed. Rektal e sailhas warno ha, goude beza trec'het o c'hadourien, e lemas diganto o douarou hag o madou-all hag o lekens d'ar maro.

"Moarvat e talvezas ar gentel didruvez-se da zistans o c'hoantegez diriz d'an uhelidi a c'halle beza goubet d'en em zistaga diouz ar roue, rak bremañ, bewech ma kriz e dal, e krenont dirzañ. Met ar pal a garfo Gralon tizout a vefe, war e ganter, unani holl doleadou Arvorig dindan e veli hag ober ganto eur rouantelez vrasoc'h ha kreñvoc'h eget hini Kerne, eur rouantelez sentus ouz al lezenn gristen ha gouest da dalout ouz lano pobladoù gouez ar zeter a gendalc'h da ~~siel~~ zic'hlannia war C'halla a-bez. Salo e rafe berz er c'heñver-se, ma'z eo hervez youl Doue hon Aotrou ! D'am meno, koulskoude, hag a-raok staga da seveni e venoz nevez, e tlefe kaout koun en deus kefridi da gas da benn eun dlead grovus kenaf hag a bouez bras evit amzer da zont ar feiz en e rouantelez, ha tenna e werc'hig Ahez digant e dud-kaer ha rei doi kalenadurez kristen an hini eo !"

- Doue d'ho kleve," eme Ronan, "ha da warez o ar briñsez-zig korf hag ene !"

x

x x

Pell a oa e kerze an daou vanac'h gant ar strêd hep beza tizet kreiz kêr. Eur geoded hep he far e oa lz, e gwirionez, gant he steudadou tier bepred kaeroc'h-kaera. Ruzioù-all, striscoù-hik eget ar Strêd Kreiz, a dreuze houmañ tu ha tu, oc'h ober kroszhafchoù ha laurgêriou frank, e-kreiz darn eus ar re-mañ eur founteun pe eur skaudenn vnan marmor, pe c'hoaz eur stivell o strinka he dour d'an nec'h.

E darnou-all eus kêr e oa bodet tier marc'hadourien, outo stalioù leun a bourvez-dibri, a zervez dilhad, asiz, mezir ha lien, a vragerizou ha braoigou acur hag arc'hant hag a varc'hadourez prizius a bep seurt.

Pallec'h edo paleziou an uhelidi hag ar penadureziou e kerz, savadurioù kren ha nouzist pirvidik aneo, diouz stumm arz ar Romaned. Er penn uhela d'eul laurgêr divent, e oa eun ti-kouronka bras meurbed, e-lec'h ma veze, o neu hag o kibella. ar gêriz re-faüs ha re-gizidik evit mont da sauba o c'horf er mor. Er penn-all, oc'h en em gave an dachenn emgann, gronnet gant eur mell mogez galc'hiek, enni deroziou o talvezout da skiner hag o tiskenn a-nebeudou betek laouron ar pagadou. A-raok donedigez ar Vrestoned e veze lakaet gourenezien a-vicher d'en em

leza warni dirak ar babl. Hogen difennet e oa bet ar gwall c'hoariou-se gant Gralon hag, abaoe, ne waled eno nemet gwella kadourien ar roue, pa veze tournamant ganto.

-Mall am eus pelloc'h d'en em gavout gant eun iliz," eme al lean ponedour da Zistin.

- Ne dint ket stank er gêr-mañ," a respontas ar manac'h person, "pa n'hon eus nemet seiz enni. Ha c'hoaz, ma vefent leun bep sul... Siouaz ! eun nebaudig Breiziz, kollet e-kreiz eun engroez a baganed a welomp hepken o tarempredi hon lec'hioù santel, rak an niver bihan a gristenien hon eus, e-mesk ar sklavourien, ne vezont ket dieub da zont deo pa garont.

"Met setu ma iliz-parrez, eur gner o hini oval ma weloc'h. Kent e oa eun neved gouestlet da Wener, pa Venus, douezaz hudur an orged, ar pec'had marvel dreist-karet gant Iziz. Eus an neved euzus, skarzset dioutañ an droukpered dre nerz pedennou efodus, e reas hon eskop Gourmaelon eun tibedi d'an Intron Varia, mamm santel Hor Salver ha skouer a c'hlanded."

E stumm savadurioù Gregiz e oa iliz-parrez Distin, dei, diouz an dinvêz, eun talbenn tric'hornek douget gant eur reñkennad pilerou maen, hir ha rizennet war o had.

Trei e rejont enni da bedi ha goulo he c'havjont, war bouez eun den, eur manac'h evelto, daoulinet e-harz an aoter.

E-kreiz kêr, edod o pleustri gant eur peiz labour, marzus dre an had, al lec'hed hag an uhelder aneñ. Micherourien a bep rumm, mæsonerien, kizellerien, kilvizien ha darbarerien, a boanie da-vot war eur pennober, heñchet ha kenteliet gant benazezerien ouiziek ha mistri-labour barrek. Eur savadur nevez e oa, pounner ha postek hag, ouz eur penn aneñ, eun tour ledan diveg c'hoaz, hogen uhel-mat ha kuzunet gant eur c'haridell vein benet.

- Houmañ e vo iliz-veur hon eskop Gourmaelon," eme Zistin an Baelog. "Dre urz ha dre vrokusted Gralon eo ha saver, o veza m'en deus fiziñs e vo tud d'ha leunie p'hor bo, gant skozeñl Doue, grêt kristenien vat eus paganed kêr Iz. Meulomp hor roue, eta, evit e vadelez ha plijet gant an Aotrou e tauy e c'hoant da wir !"

Gant ar skeulioù harp ouz an tour, e pignas an daou lean betek ar c'haridell : "Gant eun taol-lagad ac'hann," a lavaras Distin da Ronan, "e weloc'h kêr a-bez. Sellit, da genta, ouz an dremmwel ! Daoust ha ma'z eo diñs o marzout frêz, setu ar mageriou-difann a zo o kalc'hia ar geoded, evel eur gouriz main, warno an dek toural savet a-uc'h d'ha dek dor. Etrenek ar c'hornog, etrezi hag ar mor, eo lec'hiet he forz, eul lennad dour sebezus dre ar vent he deus, leun a listri gwerniet uhel, stag ouz an eor, holl e samma pe o tisamma marc'hadourez.

- Tro-dro ha tostoc'h deomp, nousped mil ti ha palez kenedus ha mæneriou dudius beva enno, strêjioù hir ha ledan ha leurgarioù dalc'het kempenn, enno eun engroez diniver o firbouchat, heñvel ouz eur grugell verien estlamus ! Truz am eus ouz an dudigou-se, rak amañ emomp e-kreiz domani an droug hag ar pec'had, er gêr digalon ha kriz, er geoded a daol he dismagañs war gonz Doue

ha na soñj e nemeti he unan, en he curvad, en he c'hof, en he finvidigez a zastum diwar goust labour ha poan he sklavourien hag en he flijedureziou lous ha dinstur. Evit troc'ha berr, houmañ eo kêrbenn villiget an Aerouant ! N'ouzon ket petra 'ray Doue anei, mat ma chom bouzar ouz E vouez hag aheurtat en he buhez diroll, evel ma'z on techet da gradi, em eus son bras he defe gwall-gastiz diwezatac'h.

"E nestad ar porz," a gendalc'has Distin, "ez eus sanailhoù bras da virout pourvez ha marc'hadourez, skiberioù ha labou e-lec'h ma seller ha ma vogeder ar pesked a zigas ar besketserien d'an eod ha lec'hioù pe dachennou a aozer warno listri ha bagou a bep ment. Eno e labour hep ehan, gwasoc'h'aget loened-samm, eur boblad sklavourien ha tud kaiz ha n'o devez da c'hoar nemet boued distar ha dilhad truilhek. War-sav kerkent ha goulo-deiz, tre betek an noz tafval, skourjezet alies ha ganuzet o pep doare, war zigorez e lugu-dont pa gavont an tu pe a tisplij o labour d'o mistri, e renont eur vuhez eus ar reuzadika. Diouz an noz o bernier e lochennoù diskloz, da gousket war eun dornad plouz, mell-divell, mat pe fall, ar re-mañ o pleustri da gontammi o c'halon d'er re-ze, dreist-holl d'an nebaud kristenien habask a gaver en o zouez, dre skouerioù hudur ha komzoù a gasoni.

"M'hor bije bet amzar, e vijemp ast betek enno hag e vijec'h bet test, hoc'h unan, eus krizder pinvidien Iz !"

Ankeniet ha prederiet, e chomas Distin tavantek a-greiz-holl a-keit ha ma edo Ronan, ken doaniet-all heñ ive gant komzoù a gavandad, oc'h arvesti ouz ar c'hornog, bevannet ar pellder gant ar mor glas-tefval.

- Hevez gwelout," emañ, "emañ Iz e-barz eur vantrenn kala donoc'h aget live ar mor. Ma 'grade kaout daoulagad lemm ha, marteze, int toulllet gant sklêrdor feulz an oabl digoc'henn hag e reont din fazia."

- A drugarez Doue," a lavaras Distin, "eo yec'h ho troulagad hag e welont kerkouls ha re eur sparfell. Amañ, e gwirionez, eo bet deut an douar da buka a-nebaudou a-had an amzerioù hag emañ kêr-Iz, hirio, izeloc'h aget ar mor."

- Ha n'hoc'h eus ket nec'h a teufe an doueier da haul eur reverzi pe eur barr-amzar bennak, da zic'hlannia ha dont da veuzi ar vantrenn hag ar gêr vras war eun dro ?"

- Doue, ra viro e c'hoarvezfe ken gwas darvoud. Skrijus e vefe stad hor c'hêriz o vont, a-vil-vern, gant an Aerouant. Hogen, nousped reverzi ha gwall gorventenn a zo bet abaoe ma'z eo izelast an dachenn amañ, ha n'en em gavas netra grevus gant Iz. Gwarezet eo diouz buamegez ar mor gant eur stankell uhel ha hir, seiz leo had dei ha startijenn a-walc'h enni da dalout ouz ar gwaso tarziou. Evit gwir, dirafvet ha disac'het e vez alies darnou anei gant ar gwall-amzer, mat

kerkent ha lekaer a-navez e-rette vat hag, evel se, e rank ar mor chom e-barz e naoz."

- Eun dra, koulskoude, am laka souezet. Penaos e ra al listri da zont er porz pe d'o quiteat, pa'z eo gwir e vez izeloc'h an dour ennañ eget er miz ?"

- Pa vez tre pe izel-vor, ec'h en em gav rez dour er porz gant hini ar miz hag e vez aes, neuze, d'al listri ha d'ar bagou tremen, da vont ha da zont, dreist ar skluziou a zo er c'haneliou a gas d'an donvor. A-hend-all, pa vez bres an dour er mor, e sarrer ar skluziou gant melloù doriou a-rem da viorout ouz al lano da c'houeledi ar porz hag ar geoded da heul.

"Alc'houez doriou ar skluziou, eun alc'houez aour hag a zo arouez ha merk ar veli war ar gêr-mañ, a veze kent bepred gant ar roue ouz e c'houzoug, hag ar priñs, bewech, eo a zae e-unan d'o digeri pe d'o sarri gantañ. Pa gwita Gralon Iz, e vez fiziet an alc'houez e Cornelius, an tad-kaer, ha brunañ emañ en e gerz. Ma tistro ar roue adarre, avat, ne fazio ket da ad-kermerout an alc'houez aour."

x

x x

Diskennet e oa an daou vanac'h diwar c'haridell tour divag an iliz nevez hag set betek an eskopti a oa demostik ac'hane. Lakaet an devoa Distin an Baelog kemenn d'an eskop ez aje, gant eul leon penedour c'hoantek d'e anaout ha da gaout e vennoz, da ober gweladenn deñf ma c'hellje, da vihana, o digemerout. Asentet en devoa Gourmaelon d'ar goulenn ha, p'en em gavas an daou weladenn e ti ar prelad, o voent kaset d'eur sal frank ha digefkl, netra anni nemet eur mell kroaz prienn kultiek ouz ar vogez noaz hag, a-iz dei, eur gador vrac'hek keinet uhel ha savet war eul leurennig pe eur sichenn a dri dorez.

Klaffidik, kebac'h hag ampustuilh da gerzout, e teuas an eskop d'ar sal, harpet gant brec'h eur manac'h yaouank oc'h ober kazelig deñf. Azeza a eure war ar gador vrac'hek, e-keit ha m'en em strinke Distin ha Ronan ouz e dreid da boket d'e walenn arc'hant ha da c'houlenn e vennoz.

Eun den mentek hag askornek e oa Gourmaelon, koz douar, daougrommet ha ken sec'h e-gorf ma oa set da relegenn digig, kouz lavarout. Hir ha gwenn-kann, o lintre evel an arc'hant, e tiskenne e vlec flour ha gwagennet war e ziskoaz puket. E neuz, leun a boell hag a veuzded, a oa hini eun den a ouenn uhel, padal e oa meoet e zremm dic'hoazh ha balc'h gant sellou kufiv e zaoz-laged lemm.

Gantañ, en eun doarn, edo e gannelig goad beget gant eur blegenn hir,

nep troellenn anni. Eur miftr tougn ha peuz-ledan a c'holoe e benn ha, war e wiskamant distar a vanac'h, e touge eur c'hap hir diger an tu a-raok aneañ, glas-dour e liou war c'horre ha ruz-flamm dinden.

- Eskop santel, hon tad mat ha karet," eme an daou gavaded, "plijet ganeoc'h hor benniga ha goulenn warnomp gwerez Doue an Aotrou hall c'halloudek !" KerKent e savas Gourmaelon e zorn a-uc'h d'o fann hag, oc'h ober warno sin ar groaz, e lavaras : "Doue, hor c'houer modeluzus, da skuilho puilh warnoc'h, bugala, E drugeraz hag e c'hascou kaera ha d'ho mire bepred diouz ardou fallok an Aercouant ! Ha brunañ en ho sao, m'ho ped, ma salacouñ ho komzou !"

- Tad mat," eme Zistin, "ho tuzarekaat a ran da veza taurvezet hon digemerout hag hor benniga. Ho mab Ronan a zo amañ ganin, beleg ivez d'ar gwir Doue, en deus treuzet ar mor da zont d'ar vro-mañ evel-domp. Da genta e touaras a Goueled Leon, gant ar menoz da veza eno digenvez en eul lec'h kuz. Pa voe anavezet en tolead dre e vertuziou hag e vadoberou, e tostaas an dud outañ hag e prazegas deo Aviel Hor Salver, o lakaet eun niver bras aneo da drai ouz Doue. Da c'houde, oc'h en em gavout dedennet muic'h gant stad a vuhez azormek ha ken dallezek ar benedourien eget gant hini oberiantoc'h ha prederiusoc'h, koulskoude, embannerien komz Doue, e tiazegas e beniti e Koad an Neved. Hag, abaoe meur a viz, e tremen eno e amzer e-kreiz eur sioulder talvoudus d'ar bedenn ha d'ar binijenn. Mat dooust d'e youl da veza dizerepred, a plijas gant an Aotrou lakaet tud distar eus e amezeged da ober anaoudegez gantañ ha, neuze, ken entanet ha biskoaz, e pledas d'o gounit d'ar wir gredenn. Ha setu m'o deus grêt berz e gomzou lavar hag e skouer vadeleuzus, pa'z eo gwir e vadezas eur c'headour dec'h diweza, ha p'emañ war-nes kristena re-all.

"Hogen pa glevas e oa eun eskop er gêr-mañ, e tivizas dont betek ennañ d'en em lakaet, doujus ha sentus, en e c'houer-hemenn, evit bresa mad Iliz Hor Salver. Ha setu heñ amañ dirazoc'h, leun a azaoez en ho keñver ha mall gantañ da veza sklerijennet war ar pezh e vo e zlead hiviziken."

- Eskop santel, ma zad," eme Ronan d'e dro, "bepred e vin dare da seveni, gwella ma c'hallin hag hervez ma galloud, kement urz a rooc'h din da heulia. Ma kavit ez eo ret e kuitafen ma feniti da vont da lec'h-all, her grin gant plijadur, dooust pegement bennak ez an en em staget outañ. Ne vern pe c'houer-hemenn eus ho perz am c'havo ken sentus hag ar re em befe digant Doue e-unan."

Hagarat hag eveziek, ec'h aersas Gourmaelon ar penedour diwar-benn e vro c'hinidik, e gerent, ar vistri hor c'helannas, an eskop her belegas ha kement an devoa grêt pe a oa c'houervezet gantañ abaoe ma tiazegas Breiz Tramor. Gant elevez e respontas Ronan, o tevel war ar burzudou estlammus a sure en ano Doue. E vrasa dud, emañ, e vije bet, e-ser kalenn e goadourien, kenderc'hel da henta Koad an Neved betek a vraz, p'her galve lusk e galon da avesti hep ehan ouz oberou ar c'houer ha

d'en em ouestla dibaouez d'ar bedenn, disamm a braderiou drastus ar bed. Hogen deuet e oa deñf da soñj n'en devoa ket ar gwir da chom dizalc'h diouz an eskop, pa oa unan er vro, hag en abeg da ze, e toue d'en em lakaet din-dan e velli.

"Ma mab," a lavaras Gourmaelon gant madelez, "eui servicher gredus ha kalonek oc'h d'an Aotrou ha maull e ran hoc'h emroustet hag ho sentidigez. Er gêr-mañ, siouaz ! eo ken kaledet an dud er pec'hed, ma chomont hall, koulz lavarout, diseblant ouz gras Doue hag aheurtet en o zec'hou direiz, daoust da strivou poanuis ha da brezegennou entanet ma beleien. Niverus a-walc'h eo ar re-mañ, eta, da bleustri gant hor c'hefridi, pa'z eo aner ha difrouez hon labour.

"Eur gwir frealz eo din klavout hoc'h aus kavet, er c'hoadeg meur, Arvorigiz, seun ha dizrouk tuet d'ho selaou ha da haulia ho kelennadurez. Talvoudusoc'h, moarvat, eo bet da Zoue ho trevall er gouelec'h eget hon hini e Iz. Distroit di, hep marc'hed, da ziazeza donoc'h rouantelez Hor Salver ha ra gouezo E vennoz hag hini ar Wazc'hez, E vamm, war ho labour. Grit gwella ma c'helloc'h, eno pe en takadou-all m'ho keso deo spered Doue, rak ne vannan, er c'heñver-se, kaout nep mestroni warnoc'h, o veza ma ouezo an Aotrou hoc'h heñcha gwelloc'h egadon. Hogen, a-barz ma kimiadoc'h diouzin, e c'houlennin ouzoc'h kaout eñvor en ho pedennou aus keodediz reuzedik Iz, evit ma plijo gant Doue tizout o c'halon hag o mirout diouz gwall-gastiz E vuanegez."

Evel-se eo e voe klozet an diviz-se a laouenaas Ronan, nec'het betek neuze hen dalc'hje an eskop da brezeg d'ar gêr fallakr ha bouzar, gouestlet a-viskoaz d'an Droukaperad.

Seizvet pennad

Sevennet eo urz ar roue

Diwezet e oa anei hag edo an noz o tent buan. Mare koan o tostaet an devoa goulloet ar strêjou hag, eus an amc'houlou a oa enno, e weled a bep tu ar goulsier oc'h enaoui en tier.

O tremen a-biou d'eur savadur troc'h, dre a vent hag a stum pinvidik, da re geare an darn-se eus kêr e lavaras Distin da Ronan edont dirak ar palez ma rae Gralon e annez ennañ pa zeus da Iz. Daoust d'ar roue da veza neuze e Kemper gant e lez, e veza sklêrijannet bamnoz, kement ha da gefver eur gouel bras, hervez ar gouc'humann grêt gant ar priñs a-unan. "Hag, a drugarez Doue," a gendalc'has Distin, "ne vez amañ nap dizurz. Ar roue n'her c'houzafve ket, na kennebeut Ritian, maestrouer ar palez, Breizad kalonek ha kristen a-zeara. Eur wir enezenn a booc'h frealzus eo an ti meur-mañ, a-touez kement a baleziou-all ma ran enno bepred ar c'hedalliez, an huduriez hag an tacho diroll... Pebez eurvad a vefe din gellout, evelloc'h, beva pell diouz orged ranngalonus ar gêr villiget-mañ ! Ha kerout a rafen kaout aotre da vont ive da brezeg d'ar gouerien ha d'ar bloueziz rust ha gouez, hogen yac'h hag seun o c'halon, an despet d'o gwall-youlou ha d'o c'hredennou direiz ! Met, pa'z an stag amañ, pedit Doue m'am ho habaskted ha nerz a-walc'h da bleustri, hep fallgaloni, gant ar rukagn a glaskan difroueza, rak an Avial a dis beza embannet d'an holl vroadou ha poblou mat pa fall."

Ar penadour a anavezas e oa hetusoc'h o stad eget hini ar manac'h person hag a c'hritas pedi evit ma raje berz beleien Iz a-touez an eneo didrugar fizist enno. Nebeud amzer goude, en e di, e priente Distin, d'e gavanad, ar pez a vije ret deñf da gaout antronoz evit lavarout an oferenn. Rei a raje deñf ive, amañ, a-rak ma tistroje d'ar c'hoad, pa ouis e oa paour rez ha dibourvez a bep tra, kement a oa dao evit kinnig eno an eberz sentel, da lavarout eo, eur mên aotar, eur c'holar gwex-strink, bara di-c'hoell hag eur vuredidig win. Gant lavarez e trugarkeas Ronan e vedoberrour hag e tiskouezas deñf a anacoudegez-vat. Ti hag oz an devoa ive digentañ evit an noz, gant ar c'harantezusa digemer.

Antronz vintin, a-bred, e lavaras ar penadour, e barr an eürus-

ted, e oferenn e iliz ar barrez m'edo Distin person enni, gouestlet evel ma ouzoc'h, d'an Intron Varia. E-pad hir amzer e chomas da bedi e-harz skoudenn ar Werc'hez venniget ha uhel edo an hacl en eabl pa guitans Iz, goude beza kimiadet diouz Distin an Baelog, al lean ken hegerat.

War an distro, oc'h odkavas ar strôjou hir, ar goadediz dispriuz ha lorc'hus a selle outañ goapaüs ha gant fae. Gwasoc'h, avat e oa ar vugale pa gredas darn aneo e wellgenn hag e gunuc'henni. A-greiz ma trouze eul leurgêr, eur strollad krennarded warni o c'hoeri, e sailhas ar re-mañ da hopal warnañ ha d'e voinata. A bep tu e save ar youc'h hag ar rasuilh par da hini eun torad chas digernoz. "Klasker boued ! Kell bara ! Mez-a-walout ! Tra didalvez !" a c'harme ar baotred gant kasoni. Tizet e voe Ronan gant meur a vên ha neuze, diforvilet, gant ar glozadennou, eus ar prederiou teñval hez gwaske diwar-benn Iz, e tistroas dinac'h ouz an hailhoned d'o diar-benn. Skodaget war an taol, oc'h ehanjont gant o rouz e-pad eur munud pe zrou.

- Bugale, " ama ar penedour, e vouez o tregerni, "pe zroug am eus-me grêt deoc'h pa vannit ma leza e daolieu mein ? Ha n'an defe ket eun divroad sioul ha kufv ar gwir da dremen en ho kêr hep beza gwallgaset ha lakaet deaif e vuhez en arvar ? Ha disevnoc'h e vefec'h eget ar pobladoe gouez a ziskaras galloud Roma hag a zo doujus, e pep keñver, ouz an estrenien a dremen dre o douarou hep klask noazout outo ? Penaos, eta, ez oc'h bet desavet ken fall ? Hag azo emañ frouez ar galennadurez a roas deoc'h ho tud, int-i kenteliet, koulskoude, gent ar venec'h vreizet a zo en o zouez, war o dleadou e-keñver o nesa hag holl lezennou koer ar C'hrist, an den-Doue a varvas evidomp war ar Grouz ?"

Eus an engroez yaouankizou, sebezet gant ar gourdroz dic'hortoz, e savas eur vouez kintus ha leun o gasoni da luc'hac'h war Ronan : "Ar sklavour flêrius !" emañ, "Ra gouezo warnañ kounnar hon doueo ! Emañ o kavout abeg en hor c'herent hag o klask hor mezekaet, o lakaet a-uc'h deomp barbarez euzus ha beleien yen hag estren eur relijion diskiant ! Kotou d'al lastez amprevan ! Ha bec'h d'al laoueg kristen, ken a zraske e eskern !" Kerkent o tirollas, a-nevez, ar youc'h hag ar safar hag e kouezas ar vein war al lean hag en dro deaif, ken stank hag eur gaeud grizilh pa vez en he gwas. Hogen na badas ket pell ar c'hoeri divalo : ar gwel hepken eus eur gward-kêr, oc'h en em ziskouez e korn al leurgêr, a voe a-walc'h da ober d'al lamponidi kemaout an tec'h, evel eun torad galveni dichouet diwar eun dachennad ed.

Ma na oa ket re c'hrevus ar bloñsoe hag ar c'hignadennou e korf Ronan, e wade e galon, koulskoude, gent ar señj eus kriizdar krennarded Iz, ken fallakr o-unan hag o c'herent, hag eus ar strivou bec'hius ha mantras a samnje c'hoaz menec'h ar gêr didrugar, a-barz lakaet enni da gollida had karantezus an Aviel. Hag eun diboañ a voe deaif pa dremenas dindan ar volz a case en tu all d'ar mogeriou, en em gavout war hent an distro da Goad an Neved ha d'ar peniti a gare.

War-dro eun eur diwezatec'h e save firbouch e ti ar pennkadour Leuhemel. Eun nebeud kentoc'h e oa douet eur marc'heger da zigas deaif eul lizer eus Kemper, a-berz ar roue Gralon. Leuhemel ne ouie ket lenn, nag hini eus o vrezelourien kennebeut, ha bet e oa en eur redadenn war gein e varc'h-omgann, o c'houlenn skozell Distin ar Baelog da c'houzout petra e zouge ar skrid.

Eun darn aneo, meneg ganti edod war-c'had a stourmajou nevez hen laouanaas dreist gofvor, rak kalon eur gour kadarn e lamma en e greiz. An darn all, avat, her mantras hag a zižnas e benn, o veza ma ne blija ket deaif trubuilha nag ober divalo d'eur madoberour.

Ha setu, penn-da-benn, ar paz a lavare al lizer :

"Gralon, dre c'hres Doue, roue ha priñs Bro-Gerne, d'e servicher feal ha kalonek, ar pennkadour Leuhemel, kabiten meur gwardou kaded Iz hag eveseacien riblou Mor ar C'hornog, salud hegerat ha karadec !

"Kemenn a reomp dit hon eus padet hon-unan ha lakaet pedi Doue evit ma plijje gantañ parea ar gouli tapet gent e gwall-begad Penmarc'h, o stoum ouz kadourien divadez eus broiou an Hantex-Nez ha fiziñs hon eus eo bet klouet hor goulenn hag ez out bremañ yac'h ha saio, dre drugarez hon Aotrou Holl-C'halleudak.

"Ma'z out barrek bremañ da varc'hekaet ha da seveni ma urziou, laka bade raktal an holl gadourien ha gwardou a c'hell koded Iz diouerout ha sailh ganto, dioustu, war ar bagad preizerien frizon a zo dilestret tro-war-dro da Grothon, hevez ar c'halou em eus bet ac'heno.

"Ma n'out ket gouest c'hoaz, da-unan, da gas ma c'hefridi da benn, a tloi he fiziout en eil pennkadour Gwionvarc'h, da vez ha skoazellor, a zo eun den dispont hag a benn.

"Mennout a reomp e vo flastret an dresterien ha skarziet ar vro aneo e barr amzer.

"A-hend-all, laka herzel ha digas deomp da Gemper kenta ma c'helli, evit beza barnet geneomp, eun divroad, Ronan e ane, a zo o veza e Koad an Neved, hag a demaller da veza grêt eun torfad spontus.

"Kemenn deomp timat kement az po grêt evit seveni hor gourc'hemennou ha ra vi bepred dindan gwarez Doue hag E sent !"

Chifet ha doaniet, e oa chomet Leuhemel da sellout ouz Distin, o klask divinout petra a soñje eus an urz a roe Gralon da herzel ar pene-

dour : "Penaos," e lovaras, "e c'hallfen-me kaout ar galon da lemel e frankiz digant an den madelezeus en deus roet din ar pare, digant al leon santel gouestlet d'ar bedenn ha d'ar skrijusa piniennou ? Pieu 'ta a zo bet fellekr a-walc'h da zroukkomz aneaf ha da alia Gralon d'e gastiza, rak n'on ket evit kredi eo Ronan eun torfedour ? ... Paneve d'ar breizerien daonet se a zo douet d'hon trubuilha, e vijen set gentañ d'o zifenn dirak ar roue, da zougenn tasteri eus ma fareafs varzus ha da embann a vouez uhel n'eo ket d'eun torfedour en dije roet Dous ar galloud da ober burzudou ... Allas ! Allas ! war-dro ar frizoned laer-se e ranken mont hag eon em eus e c'hoarvezfe gent ma madoberour beza barnet e gaou, e-keit ha ma vin-me o vrezeli !"

- Ma mab," en devoa respontet Distin an Baelog, "eun den hael hag onest a zo ac'hanout, ha plijadur a zo din gwelout da anaoudegez-vat e-kefver ar penedour santel. Arabet dit, evat, en em chala ouspenn ma'z eo ret gent an dizeur e c'hoardrouz koueza warnañ ! Touellet eo bet ar roue, moarvat, o klevout eun enebour da Ronan ac'h e damall e gaou, hogen, gouzout a cwezo Dous rei tu d'E servichez d'en em sach a eus e eKadenn !"

Fraezet ha dinae'het eun nebeud, e oa distroet Leuhemel d'o di ha galvet Gwionvarc'h kerkent hag ar vrezelourien e-tailh de argadi ar breizerien. "E-keit ha ma vi o reiz a pep tra," emeaf d'e skoazeller, "ez nin-me da ober eur gefridi-all, en ano ar roue. Ra vo dare pep den gent e armou, pa vin en em gavet dizale diouz ma zroiad rak din e fell mont, gent hor strollad, da frae ar frizoned !"

Ha, gent mall, en devoa kemeret penn an hent a gase d'ar Porzoad, o kredi e tije Ronan buan, pa ouie, hervez Distin, war-dro ped eur eus an doiz e kuitas kêr. A-had meur a lea, e redas d'en tuz gent e jao hop diraez an hini a glasko hag edo war-nes distrei war o giz, eKrezet gent ar sefj e oa tremen mall daaf bale, gent e gadourien, ouz al laeron-vor frizon... Eeun d'an ampoent eo e spurmantas, ar pellder, eun den o vont diraez gent an hent. A-barz nemeur, o tostent outañ, ac'h anavezaz ar penedour o kerc'hoat dife war e dreid noaz.

- (Tad Ronan ! Tad Mat !" a c'harmas Leuhemel, ankaniet e vouez, "an dizeur a zo warnoc'h, hag an hini e zo dileour an ho kefver eus ar burzud a rajoc'h d'e barea eo en deus bet kefridi da gemenn deoc'h ar gwall-gelou !"

- Dous d'az pennigo, ma mab," a zistagas Ronan dibreder. "Nep dizeur, astraget koll gras ha trugarez an Aotrou, ne c'hell ma eKrezi. Ma buhez ne deo nemet dister dra hag he dilezel a zefen laouen, ma vefen dirarv da vont diouti da dafva an eürusted a bado da viken. Komz eta, hap eon d'am mantra ha d'am zourel an dristidigez !"

- Doanias bras eo din, den santel, rei deoc'h da c'houzout em eus bet goure'hemenn, a-barz ar roue, d'hoc'h herzel ha d'ho kas da Gempoz da veza barnet, evit eun torfed ho pijs grêt, ar pezh n'on ket gouest da gredi."

- N'ouzon ket petra, em oberou, a c'hell beza lakeat da dorfed gent ar roue. Hogen p'ac'h eus bet an urz, gra da zlead hop en em ziga-rezi, rak na dout nemet eur banveg etre daouarn da vestr hag eur banveg a rank plege da youl an nep a ra implij aneaf."

- Siouez ! Tad mat, anavezout e ran Gralon. Evitañ da veza, peurlieas, eur prifs brokus hag hael, e vez ive, meur a woch, kriz ha didruoz. Ma'z eo bet touellet gent hoc'h enebourien, e vo didrugan ou-zoc'h hag e ray deoc'h, marteza, gouzav maro kalet ha mazus. Ma karfec'h ma selaou, hoc'h alifen da dec'hout ac'hann ha da vont da guzat d'eun taled-all, e-lac'h ma n'hoc'h anavezfe den."

- Bugel rouzeudik ! Te, an hini hag e die sentidigez d'az roue, eo a vonn e drubardi hop marc'had na kerse ? Petra a rez 'ta eus da zlead a stad hag eus da fealded roet dre le-douet ?

- Teurvezet pardoni din ma ali, tad karet, pa ya, war ho mano, an enep d'al lealded. C'hoant em boa, hepken, da virout ma madoberour diouz eur c'hastiz gravus n'en deus ket dallezet, pa n'eo ket kablu.

- N'eo ket dit-te da veza trideg pa n'ouzout mann eus ar gudenn, na ma kennebeud, e gwirionez. Ouspenn, eürus an nep a vez gwallgaset e gaou, rak parz en devo a rousantez an nafvou ... Kement a notroa Dous da c'hoarvezout ganin e zigomezin a galon vat ha pa vefe haskinerez drastus ha maro. Arabat, eta o vefes chalet ganin, oc'h ober da vichez hag oc'h ma c'has d'az haul d'al lec'h ma'z eo ret. Karet em bija, koulskoude, a-barz mont ganit, gorren em logell an tzaou priziuz em boa brokus, digant ma breur Distin, da ginnig an abarz santel m'en em zo onnañ Hor Salver da vaga ona mab den."

- Ast e vijen d'ho kas d'ho peniti war gain ma leon, penved emeur e gortez ac'hanon da ziarbenn preizerien divadez ha gwallon dilestrat tre-dre da Grothon da ober skraperez ha lazerez. Ma digrezit, mar plij, pa ranken ho kuitaat ken trumm hag ho lauskal da zistrei d'ho logell war droad. Hogen pe'z oc'h tuet da saubla da urz Gralon, en em gevit arc'hoaz, mar kirit, e-tal dor ma zi hag e kavoc'h eno eur gward pa zoou d'hoc'h embroug betek Gempoz, gent eur marc'h a dalvezo d'ho tougen."

- Da drugarekaat a ran, ma mab, hag e pedin Dous d'az tiwall e-kreiz ervarou ar brezel ! Met ne c'houfen asanti kaout eun leon d'am dougen, p'en deus roet an Aotrou, d'al leon paour a zo ac'hanon, diva-kor mat ha nerzus da gerc'hoat."

War-lerc'h ar c'homzou-se, e kimiadas ar pennekedour diouz ar manac'h hag, o kentra e varc'h, e skaras d'an doulenn war-zu Iz.

x

x x

Antronc, kerkent ha digoret an doziou war gêr, e teus unan eus ar gwardou a chome d'ha diwall da gavout ar pennkadour Gwionvarc'h. Kemenn a eure deñf e oa eur fuzed, gwisket paour gant eur sae kroc'han buc'h, hanter zispennet, o c'houlenn beza harzet ha kaset da varn, d'ar roue, evit oun torfed na oa ket kablus aneaf. Edo ar gward war-c'hed da gant urz da gas an den iskis e-ziwar-dro, padal e vac bemet gant ar zouez pa lovaras deñf ar mestr-brozal hen digas davetañ.

Klevet en don Gwionvarc'h gant Leuhemel, p'edo hemañ o vont dioutañ gant e vagad argaderien, kement a oa tremenet, an darc'hent, etreznf hag al lean penedour. Daoust da ze, e oa ken sebezet hag ar gward gant froudenn ar manac'h a zeus aneaf e-unan, d'en em lakaat d'eneñf koez, e dalc'h eur roue brudet da veza dihegar meurbed ouz ar re zisuj pe noazus. Hag, estlamm et rak e nerz-kalon, e komzas outañ seven, zoken gant alvez, o lovarout e roje deñf eur jao mat ha reiz d'e zougen betek Kemper. O trugarekaat, e respontas ar manac'h n'en devoa ket ezomm eus skoazell eul lean, pe oa barrek e zivesker, e drugarez Doue, d'ober an hent hep skuiza. "Panas asanti," aneaf, "e vofed d'oreatoc'h ouz ar servicher dister ha dizellid eget ouz ar Mestr E-unan e rankas mont war droad, a-dreuz eun engroez dirollet d'E gunuc'henni, betek lez-varn ar Juzevien hag hini ar gouarnour roman?"

Gwionvarc'h e hetas chañs-vañ ha distro prim da Ronan hag hen laoskas da vont, hep ere na chadenn, e-kreiz etre an daou ward war varc'h o devoa kofridi d'e embroug. Betek an dremmwal o heulias e sollou ha kement o seblante al lean kreski d'indan bannou an heol mintin, ma oa par d'eur ramz skodus, skinnou alaouzet an dro d'e benn, etre daou gorrik o varc'hakaat war loanedigou o tenna da c'hoariello. Ha pa steuzias ar gwel aneaf a-dreñf eun dorgenn, o lovaras ar pennkadour outañ e-unan, e ranke an den marzus-se beza, hep mar, e-berz Doue.

o

Eizvet pennad

Hemolc'h hadeg ar roue

D'an ampoent ma kerze Ronan, etre an daou varc'heger, da doullbac'h ar roue e Kemper, e oa set Gralon hag e goskor da hemolc'hi war-zu Plouvodiern, e-harz Menez ar C'houn, e-lec'h m'en em astenne an darn uhela eus Koad an Naved.

Sklêr e oa an amzer ha gouyen an avelig a zeus diwar ar mor. Tripial a rae ar mirc'hed hag, eus o fronnello digor-frank hag o tialana herr, e save en aer boull eun ezenn wenn ha skeñv. Kran meurbed e oa d'ar varc'hegerien, gwisket holl gant tonegou mezer pe lêr gwevn ha mantilli bezr, disheñvel etrezo dre o liviou flamm. Pep gour a zouge eur c'hleze hir hag eur c'hleñv ouz e c'houriz hag eur goaf troadet berr e-walc'h war e skoaz.

Harneziet dispar e oa ive ar jaoced, loaned eus an dibab aneo, gant kabestrou arc'hantet o gwestegnou ha diprou tonius, stelegou arem kizellet pe rikamanet outo.

E reñkadennou urziet mat ha kenedus-kenañ, e varc'hekas ar strolad hemolc'herien, araozañ ar wenaerien gant melladou ches gwallon kement ha bleizi hag, er c'hreiz aneaf, ar roue, kaeroc'h gwisket hag harneziet eget ar pinvidika eus e uhelidi. En dro deñf ec'h en em zalc'he ofisourien e lez : ar mêt pe c'houarnour e balaz, e velestour meur, e falc'huner, mestr e verchosiou, e gambrelan, e varner hag e varz. Na fazie en o zouez evit ma vije bet klok an niver eus e servicherien e reñk uhel, nemet balag al lez hag hemañ, evel ma tereñ ouz e stad, n'edo ket, an deiz-se, da heul ar priñs.

Mao ha seder o devoa doare an holl da veza gant ar soñj da laza ha da d'epout kalz loaned fero, eun diduell arverus hag a blije dec, o veza ma tenne d'ar brezel, eur c'hoari-all gwasoc'h koulskoude. Gwalloc'h o dije kavet, moarvat, beza kaset da Grothon da stoum ouz ar frizoned, hogen divizet en devoa ar roue a oa gouest Leuhemel d'o c'hanna gant gward-

dou Iz ha, rak-se, ne oa ket ret gelver kadourien-all d'e skoazella. Ha chifet eun nebeud, hep hen anzev evelato, e chafoule an uhelidi kenetrezo, ganto komzou fentus ha brabanserez, evel ma vez alies gant an dud kersaet na gredont ket diskouez o c'heuz da veza chomet gant o c'hoant.

Pa gavas ar wenaerien an tres eus gouezaj bras, hauc'hed, bualed ha kirvi, war a lavarent, e laouenass d'an hamole'herien hag e kolljont o hirnez da stourmadou klodusoc'h. Neuze e skiltras mouez an trompillou hag ar c'hernier-boud, a-unan gant harzadennou ar chas da ober eur safar bouzazus hag e teraouas an hu. An trouz, skignet a bep tu gant dason an hekleo o tregerni er stankennou, en em strewe meurdezus a-dreuz ar c'hoadeg, o lakaat da sponta ha da bennfolli an anevaled gouez a oa ennañ o veza. Hep dale a klevjod ar re-mañ o toulammat hag o vrevi dinden o zroid, an eur dec'hout, ar strouez hag ar c'heuneud yaouank. An diswel eus meur a hini a dremenass hag a stouziass, ken prim hag al luc'hed, e-touez ar gwez.

Rannet etre pemp pe c'houec'h strolladig, e skaras kerkant, d'an tuz, koskor ar roue, pep hini diouz e du hag oc'h heulia an tres dibabet gantañ. Gant strofss ar vare'hukadenn, e krenas hag e trouzas an douar, kement ha ma vije bet hejet gant eur gorventenn feulz. Hogen, pa voe re-stank ar gwez da virout outo d'en em zerc'hel a-gevret, oc'h en em zisrannas an hamole'herien muic'h-mui, da vont lerc'h-oc'h-lerc'h, darn gant eur wenedenn ha darn all gant eur riboul pe eun ode striz. Holl, avat, youc'hent a-bouez ponn, o respont d'ar chas a gase kalonek hag a rasoilhe hep ehan. Dianaoudek eus dearsou ar c'hoadeg, e rede pep hamole'her harvez e faltazi o-unan pe froudenn e jao, kollit ha diantket buan diouz e gavandidi.

A-greiz-holl oc'h en em gavas Gralon o-unanik gant deou wenez a boanie, par ma c'hellent, da hefcha ha da hisa o chas. Hag, e-keit m'her c'hiaske tud e lez, pell dioutañ a-bann neuze, e tiskoachas dirak ar roue, eus eun takad strouezek, eur mell bual hirvevek o vlejal kounnarret. Daou c'hoaf-bann, taolet gant ar wenaerien, e dizas en e dailher hag ar chas a sailhas warnañ, oc'h a zanta dizement. Met, gant eun taol korn, a vravas e wall-goin da unan aneo, oc'h e laze war an taol. Goude, o wifkal, oc'h en em heja, o tourtal hag o skei gant o droid, e wintas e enebourien diwar o dro hag e kemeras an tec'h, hep ma c'helljont e dizout a-nevez. Pinous e oa da baotred ar chas ha, mezek ha nac'het, a selljont ouz ar roue, o kredi e oa droug ennañ o veza me oant chomet berr gant o zaol. Gralon, avat, o maulas evit o ampartiz da embregger ar goaf-bann hag a hetas deo gwelloc'h berr pa gavjant tu, adarre, war eur gouezvil bennak.

D'an ampoent edo pell diouto an hamole'herien all, an darn vrasa dibreder o pleustri da dizout gouezaj, hag ar re a dle d'erc'hel tost d'ar roue efkrezet diwar e benn hag o klask gouzout petra a oa deuet da veza. Trouz an hu douget gant an hekleo, war zistara, evit gwir, a zaus bepred

betek ar priñs hag e zaou servicher a gendalc'he da glevout talabao ar c'hernier-boud, garmou ha galvadennou ar verc'hegerien ha chilpadennou krug o chas.

Tostoc'h deo e savas prim eun trouz-all dishafval hag, o ti-foupa diouz e fao, e tilemmas, war ar wenedenn eun houc'h gouez koz, ken bras korfet hag eun ouner bloaz, louet e reun hir ha gwall-skilfet e c'heol. Pa dremenass an aneval a-biou, edo ar wenaerien, diskennet diwar o mirc'hed, o klask eun tres navez gant o chas. Ken euzus ha nerzus e oa neuz an tad tourc'h-se, ma voe skodeget ha stravaget ar chas ha ma ne gredjont ket esilha warnañ, da ganta, evito da veza ken gwas ha ken krafv ha louparded. Na gollas ket ar wenaerien o fann, evelato, hag unan aneo, ken prim e daol hag e soñj, a vannas e c'hoaf ouz ar fero hag her gloazas grevus en e vorzad.

Ne zistro marse an houc'hed war o c'hiz d'en em zifenn hag e redont bepred war-saun dirazo, o skilfa pe o tiskora kement anebour a gavont war o hent.

Gwall-dizet e oa bet hemañ hag, an desped da ze, o taoularnas herrus, hep trei nag a zehou hag a gleiz, o roudenna an douar gant a wad. Ar gwel eus an houc'h o tec'hout ha c'houez ar gwod a golle puilh a roas, a-nevez, nerz-kalon d'ar chas hag a redjont war a lerc'h, ken kounnarret ha biskoaz. Ar roue hag e baotred han heulias ive war vare'h hag ar raddenn, skuizus ha drastus, a badas pell-bras, a-dreuz ar stankennou, ar c'hroc'hennou hag ar gouesa takadou eus ar c'hoadeg.

Eun hamole'her akuit hag eur marc'heger eus an dibab a oa Gralon, daoust d'ar bloaveziou hir an devoa bevet abaoe a yaouankiz. Gant evez e tiwalle da veza diskaret gant skourrou izel ar gwez ha barrek meurbed e oa da lakaat e jao da lemmat disi dreist kement stoc'h pe doull ha da virout outañ da asoupa.

E-keit-se e rasoilhe ar chas o klask taga an tec'her, met, pa veza unan bennak aneo re-dost d'a c'hourlafchenn, a tape eun taol skilf hag her c'hleved o yudal truzus pe her gwelud atlapet ha diskaret d'an douar, a-stok e gorf. Hogen anst e oa a kolle an houc'h a nerz da haul e wad ha setu ma tistroas d'e fao, oget hag ast d'an eurvar, goude beza stampet a-hed meur a leo.

Eno avat, e dailher a goueled an toull hag a vin er-mêz, e tal-c'has ponn, dispont, d'ar re a venne kaout an trec'h warnañ. Dillemet e oa ar roue hag e vevelien d'an douar hag ast ar re-mañ, war urz o mestr, unan a bep tu d'ar repu, da vrocha an houc'h gant o goafiou, a-dreuz an drez stank her souche. Gloazet don adarre gant di lamm an armou, e reas ul lamm war-raok, o toullgofa ar gwella ki hag o wallsoza unan-all.

Kalz karantoz a vage Gralon ouz e loened, muic'h, moarvat, eget

ouz an dud, ha, doaniet gant an distruj a rae an tourc'h e-touez e vignoned peverzroadek, ez eas a-benn deññ d'o difenn ha da lakaat diwez d'an drailh ma c'hellje. O kavout dirazañ ar roue, our gouzifiad baget moan ha kalet an e zaouarn, e skiant a loen a eure meiza d'ar gouezvil edo ar pegad o vont c'hoaz da wasaat evitañ. Kerkent, war bouez holl nerz e izili dic'hloaz, e vec'hias, digor bras e c'heol gantañ, d'en em daurel ouz e c'hourenor nevez. War-c'had eus ar stokedenn ha divrall war dreid, e torras Gralon e lamm d'an houc'h o sanko deññ e c'houzifiad, dre doull e c'houzoug, betek kreiz e skevent o voe frezet gant ar mestaol. Ne deas ket pelloc'h al loen hag, e-led war an dachenn, e tisonkas ar peurrest eus e wad, e-keit ha ma rode krenienn ar maro pann-da-benn e gorf.

Strafulhet gant ar riskl e oa bet ennañ o mestr, ac'h estlamme ar wenaerien, bamet gant e daol kaer hag e nerz-kalon ebezeus. O welout e oa lazet o freiz, e oa distroet warnañ ar chas, gant harzadennou a levenez, ha marlonk e pegjont ennañ d'e zispenn ha d'e zibri dislafgour. A daolieu fust goaf e rankjod o c'hanna didruaz a-benn o c'has diwar e dro hag e lokaat an istribilh ouz eur skourr, ar poz e voe diass da ober, rak pouner bras e oa korf an anaval. Pa voe digoret, e taolas eur gwanaer e gourailhou hag e vouzellou d'ar chas hag ar re-mañ, ker marnasoniet e oant, o lonkas rankles, o tiskouez e kavent gwall-zister o lod. Neuze, laouen o-zri, e stagas ar roue hag e vevlienn da vouldal an trae'h gant o c'hernier, hervez ar c'hiz.

Hogen diwezat e oa d'an ampoent ha, war-lerc'h o c'hrogad-seni, ne glevet nep trouz eus an hemolc'herien-all. Naon a oa deuet d'an tri gour ha ne oa ganto nep pourvez da zibri, nemet o freiz skourret ouz eur wazenn. Roste eur peziad ennañ na vije ket bet diess,met penaos hen ober pa n'o devoe ket peadra da enacui eur goc'had tan ?

Setu ma roas Gralon e venoz da zistrei war e giz, e-ser klask tud e lez hag e uhelidi. An houc'h, daouhantaret, e voe sammet war jnoed ar wenaerien hag e kerzjont da zistrei da lez ar c'hoadeg. Ken luziet, avat, ha kement a gildroennou a oa gant an nebaud gwenodennou dispis a gaved ennañ hag, ouspenn, ken don e oant neuze er c'hreiz ennañ, ma rankjont anez e oant kollet diwar o hent. Deuet e oa ive an oabl da c'halei ha da guzet an heol, o virout outo d'en em hefcha gant e skoazell, evel m'o dije grêt ma vije bet war wel. E-pad pell amzer, e kontrejont ar milandall-se, o tremen hag o tidremen, nousped gwec'h, dre al lec'hioù ma oant bet aet dreizo eur panned kent.

Edont o vont da fallgaloni, pa lavaras unan eus ar wenaerien e klave galv kernier-boud. Buan e fissaas an trouz ha, diouz o zu, e voudas ar roue hag e baotred da sach evez ar re o oa, moarvat, war glask aneo pa zianket evelto. Oc'h en em c'halver hag hefcha an doare-se, e kajas, an

eil gant egile, strolladig Gralon hag unan-all niverusoc'h, ennañ an darn vras eus ofisourien al lez, notrouned-all hag an nebaud mevelien a oa d'o heul. Sammet mat e oa ive mire'hed ar servichourien gent gouezaj a bep seurt, kirvi ha youc'hed dreist-holl.

Lacuenedigez an dud-se da veza adkavet ar roue yac'h ha salo, pa oant bet ofkrezet betek neuze diwar e benn, o klask gouzout petra e oa deuet da veza, a voe eur merk anat d'ar prifs her c'harant e gwirionez hag e talc'hent deññ. Leun a fouge, her saludjont gant estlammoù ha youc'hadennou skiltrus, o tiskouez deññ pegmant e oant plijet oc'h e welout e-nevez war-lerc'h eun hemolc'hadeg o devoe kavet gwall-denn hag arvarus. Ha pa glevjont an daou wenaer o tisplega penaos e tiskaras Gralon an tourc'h koz, ennañ, d'o soñj, ar marzusa ha gwasa loen eus ar c'hoadeg, e veuljont, gant gwir abeg, an hemolc'her akuit ha dispont an devoe kredet kaout peg outañ.

Ar roue o zrugerskaas karadek o kinnig deo gourc'hemennou seven avit ar preizou kaer o devoe tapet diouz o zu hag a ziskouezas e anacudegez-vat da Zoue da veza taurvezet mirout an holl dic'hloaz. O veza goulonnet kalou eus an hemolc'herien-all, ne voe den evit rei deññ disouz an aneo, rak, emeo, pa oa bet derouet an hu, ac'h en em zisrannjont diouto da vont, diouz o zu, war-lerc'h ar gouezaj a gavjont dirazo. Ha setu Gralon da rei urz da seni gant an trompilhou hag ar c'hernier-boud, spi ennañ o c'hlevjont hag e respontjont d'o zro. Hogen en anez e voe ha ne zeuas nep trouz betek enno eus pellderioù ar c'hoadeg divent.

Edo an heol oc'h izelaat bep eun tammig hag ar poullou-kalon o c'houlann eun tamm boued bannak d'o c'hannoza. "Moarvat", emeo ar roue, "e kavo hor c'hilead hent an distro. Ni, avat, e-barz distrei d'ar gër, a rank serri an naon du a zo peget annomp, pa n'hon eus debret grifasenn aboes ar mintin-mañ." Hag, o verzout edo keginer e lez da heul mevelien e uhelidi, e c'houre'hemennas deññ servicha d'an holl ar bevañs hag ar pourvez en devoa digaset, war gain e loen, da vasta ar re a oa bet pedet d'an hemolc'h.

- Aotrou roue," a lavaras an den, ken mezek deññ ha d'eul louarn bourdet gant eur yar, "kollet em eus, siouez ! ma marc'h,semm hag all. Diskonet diwarnañ, war lez ar c'hoad, edon o vont d'e hual ha d'e zisemma evit gellout, da c'houde, noza marenn daoc'h ha d'ho tud, pa c'hoarvezas gantañ sponta ha tec'hout diouz an, o klavout ar safar a rae ar c'hernier-boud, harzadennou ar chas ha garmou an hemolc'herien. Tremenet em eus an deiz oc'h e glask, hep gwelout liou ennañ, hag en em gollot on bet ma-unan e-kreiz ar gouelec'h-mañ ... Paneva d'an aotrouned vat-mañ an c'havas, mantret hag o keuzia d'al loen ha d'ar bevañs dianket, e vijen chomet da gantreal, pell diouzo'c'h ha divarrek da gavout ma hent en-dro...

Chalet on dreist gofvor, aotrou roue, gant an dizeur-se ho talc'h bremañ da zisvouedi, c'houi hag ho koskor, war-lerc'h eun devez ken drastes d'ar c'horf hag hemañ ... Brudet eo ho medalez divent e-kefver an dudigou dister avel-don ha fiziañs em eus e plijo ganoc'h ma digarezi evit an digouez kasaüs-se na c'hoarvezas ket dre ma fazi !

Distagallet e oa ar c'haginer hag helavar e deod, e tibunas e gomzou en eur par berr, hep rei amzer da C'hralon d'o zroc'ha. Gant bec'h ar glac'har hor gwaske, e tourenne e zoculagad hag e krene, loun e spont, dirak e vestr. Ar roue, krizet e dal, a selle outañ gant droug, dare da rei urz d'o vezata. Met, dirak e zoon hag e anken, e trec'has aneñ an droug war ar gasoni ha, kintus e vouez, e lavaras : "Keblus out da veza kollet hor bevañs hag e tollez bezza kastizet e-zoare. Arc'hoaz e tivizinn petra e vo grêt ac'hanout. Da c'hortoz, enaou rektal eur goc'had tan da boezet darn eus hor c'hig gouez, ma c'hellimp dibri eun tamm bannak a-raok kemezout an hent hir hor c'haso d'ar gêr !"

- Allas ! mestr mat ha karat," eme ar c'haginer, "an tonn ha kement a zo ret evit kaout tan a zo chomet war goin ma jao ha n'on ket gouest da saveni ho kourc'hemenn, daoust d'ar c'hoant bras am eus d'hen ober. Hogen argentaou e tremenis e-biou d'aul logell soul tost a-walc'h ac'hann, hag e kavie, en he c'hichen, eul lean o poszet rabez gouez evit e verenn. Moarvat ne nac'ho ket rei din eun etsoig bae pa eun tammig rogez da enaoui ma zan, pa ouezo e vo evit poeza koan deoc'h ha d'ho koskor."

- Ma'z eus eul lean oc'h ober e annez dre aneñ," eme ar roue, "ec'h asanto hep mar, ober an eluzen eus eur c'hlaouenn den, rak anaout a ren kalon vet servicherien Doue. Met piou 'ta eo an den-se, pa n'em eus koun da veza klavet biskoaz eno aneñ ?"

Even, aotrou ar Porzoed, unan eus an uhelidi a oa da haul Gralon, a lavaras nauze : "Roue, klavet em eus ober meneg, nevez 'zo, eus eun den santel, kaourintin e ano, brudet-bras e santelz hag e garantez ouz an holl. N'hen anavezan ket c'hoaz ha ne livirinn ket az eo heñ a zo o chom en darn-mañ eus ar c'hoadeg. Hervez tud' zo, koulskoude, e vefe diazezet e annez gantañ e tu pa du eus an tolead. Ma'z afomp betek al logell, hor befo tu da c'houzout piou a zo enni."

Mat e kavas Gralon komzou Even hag e voe divizet, dioustu, mont da glask penn eus al logell hag he faze'henn. Kerkent e savas an holl war varc'h, nemet ar c'hêz kaginer, kollet gantañ e lean, hag a rañkas kerc'hoat war droad e penn ar strollad, d'e heñcha a-touez ar gwaz.

E-keit ha ma padas ar panned hent, e c'houlennas ar roue ouz Even displega deñ kement en devoa klavet diwar-bann ar C'haourintin-se. Tuot e oa d'ar venec'h, aneñ, holl tud santel ha gouiziek ha gouest d'e skoazella da ober eus e rouantelez unan eus ar re genta, o skigna enni ar wir gredenn

hag o kentelie ar bobl war al labour-douar ha kalz micherieu-all.

- Roue Gralon," a eilgerias an uhelid, "kement hini en devez an eurvad da gaout darempred gant al lean kaourintin, pe d'e glevout o prezeg, a embann dre-holl n'eus den-all ken santel na ken medalezus hag heñ er bed-mañ. Savet e-bred keer bep mintin, ez a e holl amzer gantañ da bedi Doue, d'en em gastiza dre binijennou kalz, da studia al levriou eskri ha da gestal boued da rei, en eluzen, d'ar beorien. E gomzou helavar a diz ar c'hralonou hag a ro ken bras dudi hag d'urusted d'ar speredou, ma kred e selaouerien gwelout parzier ar Baradoz gourzigoz direzo. Dre e brezegennou birvidik, en deus lakaet eun niver bras a dud da drei gant ar gwir Doue ha da c'houlenn ar vadeziant. A-barz nemeur e vo gounezet gantañ d'ar feiz holl boblañs an tolead.

"Heñ eo, ouzpenn, gwir vadoberour ar glafvourien hag ar re nemmet a pep doare, pa ro deo, dre c'hlaouenn an Holl-C'hlaoudek, yec'hed ha parañs. Ne c'houzer an niver eus e vuzudou hag, a bep tu, e tised davatañ da gaout frealz ha disamm d'o feñnicu, ar re a vez o c'houz-zafv a gorf pe a spered.

"Ken santel eo, a levezter, ha ken plijet Doue gantañ, ma tis-kouez deñ e blijadur oc'h ober, daic'hmat, traoz subezus an e gofver. Evel-se en dije lakaet an Aotrou, er faunteun a zo e-kichen e logell, eur poskig arc'hantet evit m'en davo bamdez peadra d'en em vaga. Bewech ma troc'h eun drilhenn dioutañ, e taal ar peak an doue, e-loc'h ma teu adarre an e bez, dic'hloaz e c'houlid ha ken buhezek ha diagent.

"Eun deiz ec'h en em gavas da ober gweladenn deñ deou zen a zoujañs Doue aveltañ, ar venec'h Maklaw, a Bou Aleth, ha Fedarn, a Wenad, war a gredet. C'hoant gantañ d'o digemerout ervat ha da rei deo d'o fred gwelloc'h kefalenn eget o c'heustereun drouz pemdeziek, ez eas kaourintin d'ar faunteun da gerc'hat eun tamm eus e besk. Hogen leun-tenn e oa a si-liou eus ar c'haere hag eun drugar a voe deñ faza gantañ tinell vet ha aourus d'e vignoned.

"Setu aze, e berr-gomzou, skoueriou anet ha boemus eus mignoz Doue e-kefver E servicher santel, neketa ? Kement-se a zo c'hoant bras din d'e anaout ha, ma n'eo ket perc'henn al logell ar C'haourintin a gomzan deoc'h aneñ, ez ain a-barz pell d'e glask da gaout e vernoz di-gantañ."

- Evit gwir," eme C'hralon outañ e-unan, "mat e vefe ober anaoudegez gant eur seurt den, rak, ouzpenn ar c'huzulio hag an alioù talvoudus a rofe din, e c'hellfen kaout ezomm aneñ diwezatac'h ... Fall eo ar c'helou em eus bet eus Gourmaelon, eskop keiz-douar Ix, a zo klafvidik ha toc'hor ha na zalao pell ken moarvat, da veza galvet gant Doue ... Ha kaourintin, piou 'oar, a vo, marteze, kenta eskop Bro-Gerne a-bez

Navet pennad

Ar digemer a eure Kaourintin da C'hralon

E-harz tor ar manez, a gwasked an dero, edo al logell soul, en he c'hreiz eun daolig dopes gant eur mell leor digor warni. War al leur-zi douar e-tal an daolig, e oa daoulinet al lean, astennet e zivrec'h gantañ, evel re ar C'hrist ouz ar groaz. Yaouank e oa ha neuziat keer, a zremm flamm ha kufiv o para warni dianteged eur galon eun ha glan ha louenedigez eun ene divrall ha leun a beoc'h. E wiskomant distor, oc'h arouezia e fae war bompadou ar bed, a zouge gant kement a aozamant hag eun aotrou pinvidik e zilhad kran, o lokaat enet a oa a ouenn uhel. Hag e benn a sablante gronnet gant skleur eur c'helc'hig gwelevus, dispis ar vevann aneaf.

Ma ne save nep pedenn a lavar boaz mab-den eus e ziwuez difiv ha mut, a kane, en e greiz, hiboud flour yez e galon. Troet d'an nec'h ha bras digor, oc'h arveste e zaoulagad sklêr, gant estlamm ha dudi, ouz eur waledigez dreist-natur a gilhe e ene hag e gorf gant he c'hevriñ sebezus. Goursevut e spered d'an nefv, e tafve levaneg divent hag eürusted hep he far ar rouantelezh vuzrudus grataet gant Doue d'ar re eun a galon ha paour e zanvez, ha ne wela ne ne golve, en dro deañ, nep tra ne trouz eus an douar.

Pe zeuas tre al logell kaginer ar roue, ne fivvas na ne flachas al lean, bouzet bepred e skiant gant ar waledigez ken trellus ha dic'houvez kreñn e oa eun den dirazañ. Meur a wach o tleas hemañ komz a-barz ober deañ divorfilo ha distrei ennañ e-unan, kerseet meurbed d'ar meuz a voame e ene mezevellet hag e barr an eürusted.

Kenta komzou e lavaras a voe da c'halver bennoz Doue war an diaveziad ha da c'houlenn outañ petra edo o klask a gement e vije gouest eur manac'h paour da rsi. "Kalz anoudegez a dlefen deoc'h," eme an den, "ma rofec'h din eun nebaudig ludu-broud da enaoui an tan da boazat o fred d'ar roue Gralon, ma mestr, ha d'o goskor an em gavet amañ goude beza bet oc'h hemañ hi. Kollet em eus, da haul ma jao, spontet ha tec'het kuit, kement em boe digaset evit eoza eur pred a zoare hag e lokaat da boazat. Loened gouez o deus lazet ha,

gant o c'hig e c'hellfen Terri o naon, hogen dibourvez ez on a den da zaravi ar meuz ha setu m'ho pedan da seveni ma goulenn, ma'z eo en ho kalloud hen ober."

- War a welan, ma den mat," a respontas ar manac'h, "ez oc'h gwall-zifzet gant ar c'holl a gav d'ho mestr ez oc'h kablus aneaf ha war-gron eus ar c'hastiz a c'hedit digantañ. Alies e vez kalet ha didreuz ar vistri, rouaned pe sujidi, ouz o servicherien tamallet ganto, hep abeg, da veza grêt gacu outo. Gouzout' ouzon, avat, ne doc'h ket kiriek e tec'has ho jao gant e samm ha, rak-se, her c'havoc'h bremaik, dre c'hias Doue, tost d'em logell e-lec'h ma teuy, a-raok an noz, da glask gwerez diouz ar bleizi... A-hend-all, kemerit an eteo beo am eus kafunet el ludu war an oaled hag enaouit tan gantañ da farda o c'hoan d'ho mestr ha d'a dud.

"Diouz ma zu, ez an da heti donedigez vat d'ar roue ha d'en em lakaat, gant doujafs, en e c'hourc'hemenn. Heñ eo, er rouantelezh, dilauriad Doue d'hor gouarn ervat, d'hon difenn diouz an enebourien ha da lakaat an urz vat hag ar peoc'h da ren etre e sujidi."

Hag ez eas er-mêz, etramek ar roue a oa o paouez digouezout direk al logell, gant e goskor hag e servicherien. Eur stouadenn a sure dirazañ gant elvez hag e savas e zorn d'e venniga, en eur lavarout : "Plijet gant Doue, priñs galloudus, skuilha warnoc'h, ho tierned hag hoc'h uhelidi-all, E vennoz hag E gaera grasou, evit brassa mad ar feiz hag hini ar rouantelezh a zo fiziet ennoc'h ! Setu ar pezh a c'houlenn outañ, a-greiz kalon, al lean paour Kaourintin, ho servicher.

"E lochenn a zo digor d'ho tigemerout ha kement an deus, nebaud a dra evit gwir, a ginnig deoc'h gant karantez. Gouzout a ra amaoc'h war yun abaoe ar mintin-mañ hag ez eo tremen mall deoc'h rei magadurez d'ho korf d'e gennerza. Tan an deus da boazat ho preizou, hogen ar c'hig re fresk a vez kalet ha disaour. Setu m'ho kouvi da zibri kig pesk, eur meuz dibaet ar c'hoad-mañ, aez ha buan da boazat."

Gralon hag e dud a ziskennas diwar o mirec'hed hag a drugarakaas Kaourintin evit e hetou seven hag e zigemer karadek. Da c'houde e tross ar roue, gant daou pe dri eus e benntierned, da ziskuiza al logell, ravihan al lec'h enni d'an holl.

- N'em eus ket eun heskenn vare da rei deoc'h," eme neuze al lean, "met bres eo grae Doue hag ober a ray d'ho jao dianket distrei d'ho kavout da ziges deoc'h ar bara hag ar pourvez a zo gantañ war e gein."

Ha dioustu, war e gomz, a voe klevet eur marc'h o teoulmat hag o c'hriziñkal, laouen, hep mar, da veza adkavet loened anavezat ha kouenn gantañ. Gralon, souezet e oa an em gavet ar jao kollet aneaf e-unan, e-tal al logell, a sure eur sell ouz aotrou ar Porzod : "Even," aneaf a vouez izel, "tchet on da gredi ez eo gwir ar paz a zo bet lavaret deoc'h

diwar benn al lean-mañ. Ha n'eo ket heñ en dije grêt d'hon lean distrei d'hor c'havout ?"

E-keit-se, ez eas Kaourintin d'ar feunteun, embrouget gant ar c'hoginer, hag e tidammes dirazañ ar pesk a oa enni. Al loenig, taollet adarre en dour, en em gavas raktal en e bez, yac'h ha beo-buhezek, a-wel da zaoulegad sabatuet ar servicher. Hag al lean da lakaat deñ an drailhenn besk en e zorn, gant gourc'hemenn d'he foazat, buana ma c'hellje, evit koan ar roue ha tud e goskor.

Ne grade ket ar c'hoginer e ziskouarn hag e chome alvaonet da sel-lout ouz Kaourintin, o soñjal edo oc'h ober fent gantañ : "Arabat ober goap ac'hanon, tad mat !" emeñ, doaniet. "Gourdrouzet on bet gant ar roue pa glevas e oa ast ma jao diouzin. Brémaik e kounnaro gwasoc'h ma vezan dibosell a-walc'h da lakaat dirazañ an tammig pesk-mañ, re-neboud aneaf da leunia ma c'hildant toull. Na gendalc'hit ket da c'hodisa, m'ho ped !"

- Den a neboud a feiz !" a zistagas Kaourintin, o poueza war e gomzou. "Ha n'ouzout ket n'eus netra na c'hall Doue ober ? P'en deus, war ma fedenn, grêt d'az jao kollet diskoacha eus donder ar c'hoadeg, ne vo ket di-oesoc'h deñ lakaat an tamm pesk-mañ d'ober kement a foun ma vo gouest da walc'ha an holl. Kae 'ta dinac'h hag az pez fiziñe o Doue !"

Sabatuet ha divarc'het e spered, e chomas dilavar ar servicher, en amzivin etre lusk e ziskred hag e c'hoant da gredi. Met kement hen teogas hag hen dinac'has komzou diweza ar manac'h, ken neuzus o levezon, ma hastas neuze da senti. Lakaat a eure eur mell kaoter war an tan hag, er goueled anei, an drailhenn besk hag, e-ser pleustri gant e zifreou, e lavere outañ e-unan o oa eun dra iskis ober implij eus sul lestr ken bras da boezet eur meuz ken bitous. Hogen, tra varzus ha divoizus da skiant mab-den, dre ma poeze ar meuz, e c'houeze hag e kraske kement ma leunias ar gooter e berr-amzer.

Ne oa ket ar c'hoginer, boemet hag estlammet, evit kredi e zaoulegad, hag e tride gant ar fouge da veza grêt eur fritozenn ken lipous, ken rouzet a zoare ha ken plijus ar c'houez anei, ma oa, hep mar, ar gaera hini en devoe aozet biskoaz. Kerkent ha ma voe houmañ dare, e radas d'he c'has d'ar roue ha d'e uhelidi a c'hortoze o fred gant mall.

P'en em gavas ar meuz dirazo, e tiskouezjont o flijadur dre gomzou laouen ha, ken broust ha tra, e stagjont da zibri distambouc'h. Broudet gant an diouer a voued, ne oa den figus en o zouez ha, da genta, ne gemerjont ket amzer zoken da vlasa ervat ar pez a gasent d'o genou, ken kriz e oa an naon du o gwaske. Tavet e oant da gomz ha ne glevad ganto nemet trouz o javedou o chaokat afo ha dibaouez. Dre ma torrent o naon, avat, ac'h esae d'o foull-kalon hag e tafavent, gant dudi, an dinell seourus, ganti blaz c'houek ha blizin ar gwella dluzed.

Neuze, lamproc'h d'o zeot, e savas, a bep tu, mouloudiou ar bredourion. Morse kent, emeo, netra kerkoulz na ken skafv hag ar pred sasun-se, ne flouras kement o staon boezet, a-viskoaz, ouz kig komun ha pouner al loened gouez a dapent oc'h hamolc'hi. Hiniannou eus ar benntiermed, evelkent, a lavare outo o-unan, e vije plijet deo, muioc'h a-dra-sur eget an dour eienn a oa da eva, eun diad-all nerzusoc'h, evel eur podad gwin pa chouchenn. Met dizereat e vije bet ober eur seurt goulenñ ouz al lean paour hag e kendalc'hjont, da heul an holl, da fougeal gant an herberc'heñ brokus a vaste deo ar pred dispar n'edont war-c'hed aneaf.

A-barz ma c'hollas Kaourintin respont d'ar mouloudiou entanet, e welas ar c'hoginer o devoe bet Gralon ha tud e lez o gwalc'h eus ar chagenn. Hag, e-ser semma gantañ ar pez a chome en o dilerc'h e-barz ar gooter, enni c'hoaz peadra da rei koan vat d'ar servicherien : "Rous doujet," emeñ da C'hralon, "ken abafet ha saouzanet e oa ma fenn ha ken simudet ma zeot gant ar sabatur, brémaik pa zigasis deoc'h ho pred, ma ne voen ket, war an taol, evit kemenn deoc'h ar burzud emañ al lean santel-mañ o paouez ober avit hor mad. Gant eun drailhennig, keit ha ma biz-youe hepken, troc'het gantañ diouz ar peskig a zo en e feunteun, em eus darevet, deoc'h ha d'ho tud, ar meuz ilbouedus hoc'h eus debret gant kement a blijadur. Ha, pez a zo ken marzus-all, ar peskig, a-vec'h taollet a-nevez en dour, a neuve ken sader ha biskoaz, divoulc'h ha dic'hloaz e gorf !"

Bemet ha souezet mik, e savas an holl da c'harmi e oa ar manac'h eur profed bras ha ken galloudus ha re ar Juzevien gwechall, eur gwir eurvad deo her c'haout ganto en o zouez. Ha setu ma trec'hes neuze Gralon war ar safar o lavarout : "Penntiermed, ma gwizien feal, ha c'houi, flac'h, gwenaerien ha servicherien vat, eur burzud bras, e gwirionez, an deus grêt en hor c'hañver Kaourintin, al lean an em ouestlet da Zous er c'hoadeg didud-mañ. Re vo trugarekaet ha meulet bapred gant aneoudogez-vat ha re zalc'himp don, en hor c'hreiz, ar c'houn eus o vadober !"

Pa voe sioulast an trouz, a komzas ar manac'h : "Priañ illur," emeñ, "ha c'houi, tud a lez, ha servicherien, eur pec'hed bras a referen m'ho laoskfen e fezi ! Ne deo ket ar c'hôzig, an imprevanig a zo ac'hanon, a vije bet barrek, dre e bez e-unan, da seveni ar burzud ho laka da se-bezi.

"Hon Tad Holl-C'halloudok hepken eo her gras, hag Heñ, an Doue beo ha brokus a laoskas Jezuz, E Vab unik, d'en em abarzi avit hor silvidigez, eo a dleit meuli ha trugarekaet. Ne don bet, ma krouadur paour ha dizellez, nemet eur benveg etre E zaouarn ha ne veizan ket perak em eus bet digantañ ar c'hraas kaer da c'hallout ober, en E eno, an trouz marzus-

se hag a ra deoc'h estlammi. Hogen test ez oc'h bet eus E c'halloud hag E nerz ha deoc'h eo bremañ da ziskouez deañ ho karantez hag hoc'h anaoudegezh-vat !"

- Kaourintin, kile karadek," eme C'hralon, "o kinnig deoc'h hor meuloudiou, e tiskouezomp, da genta, hor c'harantez hag hon anaoudegezh-vat da Zoue ha, da c'houde an azacuez hon eus ouzoc'h, c'houi an den uvel ha ~~santer~~ a ziuzas da skigna E vadelez gant largetez.

Sante! " Ra glevo, eta, hor bennoz birvidik ha r'ho mire pell ganeomp, ar vro-mañ, da astenn E lezenn sakr e pep korn anei, dra ho puhez skouerius, hag evit ma kresko, muioc'h-mui, klod E ano teir gwech santel !"

- Holl d'an daoulin, eta," a c'hourc'hemennas Kaourintin, "da bedi gent gred ha karantez, d'E drugarekaat ha da c'houlenn E warez !"

Daoulin a eure, roue hag all, an dud-se kalet ha garo, kristenien peuz-divrazet an darn vrasa aneo, da gas, d'an Neñv, o fedennou kalonak hag o fiziañs anat ha divrall e Doue.

- 'Bremañ," eme C'hralon, "evit ma vo dalc'het koun eus an darvoud sebezus-mañ, ken talvoudus d'hon aneo ha d'hor c'horfou, o tlean diskouez ma grad-vat da Zoue, hor c'hourc'hemennas holl-c'halloudek.

" Kaourintin, hor madoberour santel," a gendalc'has ar prife,"merzet em eus, gent tristidigez, pegen niverus eo ar baganed em rouantelez ha pegen rouez al leaned hon eus d'o hañcha, w ar al lezenn wirion. C'hoant em eus, eta, e vefe savet ha kalennet, kenta ma vo gallet, danvez beleien ha prezegerien da vont, a-dreuz ar vro, da skigna komz Doue ha da ober eus ma sujidi, dic'houvez eus kentelioù kaer an Aviel, kristenien vat ha sentus ouz an Aotrou.

" Eur skoldi a rankomp da gacout, heñvel ouz ar re o deus hor c'hen-vroiz a Vreiz-Veur, eur skoldi e-lec'h ma kavo hon tud yaouank youlet d'an em cwestla da Zoue deskaduroz, gouiziegez ha furnez dindan eur mestr poellek ha barrek da rei deo kalennadurez war skiant ar Skritur Sakr hag hini traoù an douar-mañ.

" Duspenn eur vageroz kloor santel ha tud a iliz e vo hor skoldi rak eno e kavo mibien hon uhelidi kalennerien a-zaore, eveziek ha gredus, d'o stumma ervat da veza, war-lerc'h o zadou, ponnadureziou skouerius, feal d'o roue ha douget d'ar bobl vunut.

" E ploe Mediern, Kaourintin, em eus eur genkiz ec'hen, annezet a-zaore, hag a zerefe, d'am meno, da ober eur skoldi. Deoc'h ha c'hinnigen gent ma plijo ganeoc'h savani ma mennad. Bez' ez eus outi kalz douarou strujus a c'halloc'h tenna aneo peadra da vaga ha da wiska ho tiskibien ezomak, rak n'eo ket zot lavarout e vezoc'h digollet brokus gent an uhelidi a fizio unoc'h o bugale.

" An darn-mañ eus koadeg meur an Neved, hag a raer outi Koad Mener, a roin deoc'h ive e gwir bec'henniez, ma c'halloc'h lakaat diskara ar gwez a zo unni hag he difrasosta da rei labour d'hor c'houerien geiz ha da zeski deo penaos ober douar stil gouest da zougen trevajoù hag aostou founnus ha da sevel leoned mat.

"N'eus ket barrekoc'h eget ar venec'h war skiant ar gounid-douar, rak gwelet em eus petra o deus grêt er c'hañver-se e Breiz-Tramor. Hag eun drugar a vefe din, leon santel, ma kreske em rouantelez, a drugarez deoc'h, ar feiz hag an deskaduroz, ma kemerfe an douar etil lac'h ar c'hañver don ha ma zoufe ar gouerien amañ, bremañ tud rouzeudik ha diwezat, da veza eskuit da lakaat an douar da dalvezout evit o mad unan hag hini ar vro a-bez.

" Teurvezit, eta, m'ho ped, servicher mat an Aotrou, asanti d'am goulenn ha digemerout a galon vat ar prof a ginnigen deoc'h bremañ, da c'hortoz ober gwelloc'h diwezatoc'h ma gellan. Eval-se hag a-barz nemour, a c'hellin, gent ho skoazell, ober eus Bro-Gerne skouer ar rouanteleziou, eur rouantelez hag a vo an holl eñrus enni, kement ha ma c'heller beza war an douar da vihana, hag a vo meulet ha doujet hoc'h ano betek diwez an amzeriou."

- Roue galloudus," eme Kaourintin, "ma meno a oa beva sioul ha kuz, e-ser pedi er c'hañver-mañ, betek ma eur ziweza. Hogen, pa ro tro din ho prokusted da sevel er vro eur vageroz leoned hag eur greizenn a feiz hag a zeskadurez, e tlean senti ouzoc'h evit brassa klod Doue ha mad ho sujidi. Doue d'ho pennigo, eta, c'houi ha Kernevez !"

An holl a gavas talvoudus an divizoù hag ar roue a reas gourc'hemenn da verer e lez da sevel ha da ziga antronoz d'al leon our skrid da wiriekaat ar prof a roe dea.

Neuze e c'houlennas Gralon gwelout ar pesk burzudus hag a voe ambrouget kerkent, gent Kaourintin ha tud al lez, betek ar faoutenn. Alles ! maro o oa ar pesk; edo w ar-c'horre an douar, e gof troet d'an nec'h ha didamm e gorf. Unan eus mevelien ar roue, eul Leonid, anvet Sezni Eskad, a oa bet, hep gouzout da zen, o troc'ha eun tom dioutañ. War-lerc'h ar gouli a eure ennañ, o oa chomet divuhez al loenig an e zaouarn. Spontet-holl, an douar atlapet ar c'horf er faoutenn, o soñjal e teuje beo an-dro. En anar o voe hag ar mevel, leun a enkrez e klaskje al leon gouzout piou an devoa grêt an droug, e chomas hep anzar ar gwall-dool ouz nep den-all, gent eon da veza diskulhet.

Fuc'het a voe ar roue gent ar gacout grêt ouz Kaourintin hag a tragennas kalet a vouez da gemenn d'an drougobrouer dizanav e tlee an em ziskuilha e-unan rektel pe an dije gwasoc'h da zamanti pa zoujo da c'hou-

zout piou a oa kablus. Kerkent hag o kreñna aval eur bern deliou, ac'h en em deolas Sezni Eskad ouz troid ar roue, o c'houlenn truez ha trugaroz.

"N'eo ket ouzin", eme C'hralon, "oo dit en em arbedi hag ober seurt padenn, ouz al lean santel no lavaran ket. Diskouez dea ac'h eus keuz d'an droug a rajout, gant eon han talvezfe dit !"

E-keit-se en devoa tonnet Kourintin ar pesk maro eus ar feunteun. E-ser distaga eur badennig, e reos warnañ sin ar groaz hag al lean, distroet buhez ennañ hag en em gavet ken divoulc'h ha biskoaz, a lammes leouen e dour sklêr en eunn.

- Na c'hourdrouzit ket ho servicher, m'ho pad," a lavaras al lean d'ar roue, "n'eo ket dre fallagriez e lezas peskig an Aotrou; dre c'hoant d'her gwelout o tazerc'hi na oa ken." Hag heñ neuze da Sezni : "Kê dinac'h, ma mab, ha bez doujusoc'h hiviziken ouz danvez da nesa !"

Estlamm e voe en holl a-nevez gant an arvest marzus o paouez c'hoarvezout adarre ha ne ehanent ket da vauli Doue hag E lean galloudus.

Hogen dont e euro en noz ha, pa gimidas diouz Kourintin ar roue hag e dud, barr o c'hralon gant al levnez hag an enaoudegez-veit, o skigne ar c'hann-lear e sklêrijenn arc'hantet ha yan war ar c'hoadag milvloaziek. D'an drip e redas ar mirc'hed etramk Kemper e-keit ha ma kans barz Gralon, don ha ledan e vouez, ar varzoneg odo o paouez sevel en enoz d'e vestr ha da Gaourintin, profed meur an Hell-C'halloudeg.

Dekvat panned

E kerc'har kastell ar roue

Eiz doiz e oa abaoz ma oa klocet Ronan e kerc'har kastell Gralon, e Kemper. Kerkent hag en em gavet, gant e zaou ward, en tu all d'ar porrestell, e touas paotr ar vac'h, sun den kriaz hag hanter-ouez, d'her c'hes d'al lec'h ma tise beza kraouiet. Staget e voe, gant eur chadenn houarn, ouz eur rilhojenn a oa er voger, tost d'eun darzell striz toullat enni, war-hed tri pe bevar troatad a-uc'h da zoureier ar ster Oded. Eur c'houziadenn elestr ha gset sec'h a oa en eur c'horn da ober gwela d'ar bac'hiad. Hogen lein volzet an toull-bac'h a oa ken izel ma rankas Ronan stoui e benn ha chouka e gain evit cham ennañ en e sac. Leiz ha tafval-sac'h e oa al lec'h displijus-se. Dallet gant an defvalijenn e chomas pell deoulagad al lean hep marzout netra en dre doo. Ha pell a-raok m'en em voazjant ouz an noz a rane en douarenn euzuse, e klevas he doriou houarnet o wigourz war-lerc'h paotr ar vac'h ac'h en em denna kuit.

Kenta tra e eure Ronan a voe deouline da badi. E-pad pell o nijas e spered hag e gomzou war-zu Doue. Da c'houde, skuiz ha maenoniet gant an hent hir en devoa grêt e tougas d'e c'hanoù ar pichezad dour hag an tamm bara gros en devoa laosket gantañ ar paotr-bac'h.

Bep mintin, da c'houde, e teus hemañ gant eur podad dour hag eun dorzig vara. O lakaat a rao tost d'ar c'houziadenn, o tont hag o vont hep domat na kenavo. Eur wech bonnek, o klaskas al lean toullae kaoz gantañ. Hogen eun den abef ha poud e oa, bras ha pounner hag eun neuz diot ha didruet dea. Na zistage nep ger a-zoare, netra nemet mouskomzou meugot, ken displijus ha soroc'h eun toure'h koz.

Ronan e dremene an deiz o pedi ha, diouz an noz, e save meur a wech da c'helver warnañ bennoz ha skoazell an Aotrou. Alies e soñje an amaziñ vat en devoa e Koad an Nevad hag e keuzie da veza disrannet diouto p'o devoa ar muia ozomm da veza skoret ha kentelist war dshenn

anaoudogez ar foiz. Mersa, evat, ne leoskas eur c'hlemm da veza bet harzet a-anop pep gwiz ha lamet o frankiz digantañ. "N'ous nep droug," emeañ, "na dalvez d'eur vad bennak. Kent oz eo kalz ous ma amzer ganin da bleustri gant ma c'hristenian nevez ha bremañ oz eo din penn-da-bann, da veuli ha da drugerkaat ma Actrou."

Eun doiz e welas den Doue eur boc'hruzic war ribl an darzell a oa e moger ar c'harc'har a-uc'h d'ar stêr. Rei a eure deañ bruzun bara hag al lapous, dinoc'h ha defv dindan allazig ha flouradennou al lean, o debres laouen ha kalonek. Antronoz, pa zistroas, n'edo ket a-unan; kavet en devoe eur barz da zont gantañ. O-daou o prodjont diwar goust an den santel ha, p'o devoe bot o gwalc'h, o tiskennjont da gena war varlenn al lean diduet ha tizet e galon oc'h arvesti ouz al loannadigou dinoz ken dizaon en e ser....

Eun doiz po zaoz diwezatac'h e eant predoriot o klask danvez da ober eun noiz. Furbouchat ha skourmijal e zaant en dro d'an darzell, o tigas ganto, a-dreuz o bag, tammou man, kivni, reun ha plu. Etre ar vorrenn houren a oa a-kreiz an darzell hag eun tu da houmañ e kavjont lec'h d'an tiig a dlee gwas-kedi o zorrad. E-ser kas e badennou da Zoue, e chome Ronan alvaonet ha sebozot a-wechou dirak ijin hag ampartziz ar c'houblad lapoused da implijout an traouigou didalvez a zastument du-mañ, du-hont, an tu-all d'ar stêr. A-nebeudou o kemere al labour ar stumm a dlee da gaout hag, a-barz pell, e vije echu klok ha disi. Siouaz ! ar paotr-bac'h hez gwelas ha, gant e graban drouk, e freuzas an neizig hag e stlepas en douz an dismantrou aneañ.

Drouklaouen o voe Ronan hag entanat o vouez e c'hourdrouzas kalet ar bouz difvais : "Den digalon !" emeañ, "pe zroug o deus grêt dit an evnedigou-se, p'ac'h eus kemeret kas oute betek foaltra o neiz ? Hag ober kement se c'hoaz da laboused ar C'halvar, ar re-ze hag a zo, war e leverer, eus gouenn an evn a sec'has gant e vrusk, dre drouz ouz Hor Selver, ar gwad a zivere diouz o dal toullot gant ar gurunenn spezn, p'edo o tremen ouz ar grez ? Abaoe an doiz-se eo e chomjont merket gant gwad ar C'hrist, evel eun testeni padus eus E anaoudogez en o c'heñver.

"A-hend-all, petra a lavarfes, kristen dister, ma vefe dispennet ha disac'het da di gant tud krefvoc'h egedout ? Klemm hag en em chala, neketa, hag o millige e goueled da galon isk, hep mar, ne anavezaz ket lezenn ar pardon prezeget gant Doue ? N'eo ket hepken d'ar boc'hruziked e tleaz anaouez, met da holl grouadurien dinoz ha dizrouk an Actrou Doue, eun darn gaer eo ar re-ze eus an traou burzudus ha talvoudus a grouas Heñ evit mad hag ezomou mab-den. Soñj arvat em c'homzou hag az pe, hiviziken, meoc'h a zoujañs ouz oberou Doue hag e vi benniget gantañ."

Eur sell diskiant hag eur skrignadenn leun a fae a voe ar respont a eure an amparval e zen-se da Ronan. E-pad eur predadig amzer, e klevas hemañ ar voc'hruziked o krial hag o leñva gant glac'har d'o neiz distrujet. Eun ni-

jadenn a rejont da dreuzi ar stêr, hag, an tu-all dei, a tibabjont eul lec'h didrubuilhoc'h da sevel o zieg a-nevez. P'her c'huitajont, an devoe kerse al lean deo, ha, gant melkon, e truezas war fallantez mab-den.

x
x x

Faurliasa ne ziskenne ar gward ar voc'h nemet eur wech bemdez, diouz ar mintin, da zigse dour ha bara d'an hini o oa kraouist enni. Antronoz koulskoude, e teuas gant eur chadenn an eun dozn hag eur gaze-lied plouz dindan eur vrac'h. Tri den a oa d'e heul, eur bac'hind-all hervez doare, e-kreiz etre daou zen a vrezel. E berr-amzer e voe ledet ar plouz war an douar, tost da c'houziadenn Ronan hag erzet ar bac'hind nevez, gant ar chadenn, ouz unan eus rilhojennou ar voger. Hag, hep eur gomz, e tistroas neuze an tri war o c'hiz.

Boazet, pell a oa, ouz an deñvalijenn, e veizas Ronan e oa ive e gavanded nevez eun den a vrezel. Eun harnez kran ha tonius her gwiska, dispennet ha gwall-mozet, evat, ha darn eus e doneg emgann o goueze en istribilh en dro dea. Ne vije ket bet kavet kaeroc'h gour egetañ. Mantet bras, frammet start ha, daoust da ze, mistr ha gwevn e zargreiz, sked ha kened ar yaouankiz a bare war e zremm dispart ha nerzus. E sm-zalc'h a oa hini eun den e ouenn uhel, hini eur penn-brezelour kadern hag ekuñt da ren strolladou kadourien ar stourm. Ar stalenn wadigelllet a oa gantañ en dro d'e vrac'h dehou a lekae anat e oa glozet. Anat ive diouz an everfañs aneañ e tiwaske poan griz hag e oa skuiz maro.

Dilever, e c'hourvezas war e zornad plouz hag ec'h an em roas da voredi. Met ne oa ket parfet e gouz; hep eur mara e leoske eur glemmadenn hag, a-barz pell, e c'houlennas da avo. Al lean, aketus war e dro, a gase bewech unan eus ar podadou dour d'e c'heñvou. Gant evez ec'h arboelle an evach, o virout ouz ar c'hiañvour d'e lonk rankles en eur pennad. A-nebeudou e wasac da hemañ hag e teuas da alteri da heul an derzenn foll a oa peget aneañ. Ruz-tan e oa e bunn, ar c'houzenn a bizenne war e dal hag, oc'h an em zifreta dibacuez, e c'harme, berr war-nañ, komzou a valloz hag a varo. Gant kounnar ha kasoni e kunuc'he Doñ-wall, eur c'hadour eveltañ, hag en dije lazst dre an ebeg ma skrapas digantañ ar plac'h kenedus a gare ha Lauhemel, kiriek ma kollas ar vacuez-se ha ma oa heñ, bremañ, e karc'har ar rous.

Pell e padas ar geouad hag ar manac'h, mantret o klevout eun anzae skrijus a rae e gavandad, ne ehane da bedi evitañ, e-ser rei deañ da eva e-keit ha ma padas an dour er podou. Pa voe goullonderet ar re-mañ, e kreskas an droug a c'houzefive ar c'hadour yaouank. Sec'h-korn e oa set e deot hag e c'hourlafchenn gant an derzenn a zeve deañ e greiz. Hag hir meurbed hag enkenius e voe an noz da Ronan, ken kalet-all outañ e-unan, hogen ken truezek e-kefever ar re a ziwasko poan. Pa dizas skleur an deiz o c'houlouvi an toull a rae an darzell er vogor, ac'h aesaas d'ar gloaziad ha, sioulset deañ, e chomas kousket-mik. Neuze ive e touas ar gward da zigas bep a doz vaze ha bep a bodad dour d'an daou vac'hind. Bez' e oa gentañ, ouzpen, eun tamm lien kempenn da stalenno gouli ar c'hadour. Hag hof d'e zihuni gant eun hejadenn rust ha da bega an e vrac'h da lemel kuit al lienenn goz a oa an dro dei. Stag e oa, avat, ouz ar gouli gant ar gwad disec'het hag ar gorrvenn ha, pa sachas warni hep damant, e laoskas ar c'hadour eur skrijadenn. Kerkent, gant dorn e vrac'h die'hloaz, e tarc'haous gant ar gward ken gwas bleukad e-kreiz e vrusk, m'hen diskaras, war an taol, a c'houen e gain. "Ki milliget !" emeañ, "ma teuz c'hoaz d'am merzeria, e vzevin dit da grabanou ifern !"

Ar gward-bac'h a c'hrozmas eur valloz etre e zent hag, o waske war e grubuilh, en em dennas kuit, avel eur c'hi kannet. Chifet e voe Ronan gant buanegez an den yaouank mat, o veza na oa ket hemañ divorfil-kaez nag e-tailh da glevout eur gentel, e kavas gwelloc'h gortoz diwezstoc'h evit tamall deañ e vestaol. Gant nac'h da ober droug deañ, e welc'has, aveziek, ar gouli don hag euzus, o skerza dioutañ al lin gwadek gwella ma c'helle ha, neuze e lianas ar vrac'h a-nevez. "M'am bije bat," emeañ d'e gavandad, "ar gwir da vont da glask al louzeier a anavezan, e vijes paret buan. Siouez ! n'em eus emañ nep dram d'az louzaoui, netra nemet dour sklêr ha yen. Eur gwir vuzud a vo ma c'hollen mirout ouz da c'houlid da vinima gwasc'h. Hogen galloud Doue a zo bras; az peiz fiziafs emañ hag, hep mar, az pareo." Dinbafet e oa ar c'hadour ha, gant eur sell iskis ha feulz ouz ar manac'h a loras deañ : "Pieu out-te 'ta o komz avel ma rez ? Ha petra a dalvezo din ar pare pa n'em eus nemet ar mazo da c'hortoz a-barz ar rous ? Hag eur mero mous, ouzpen, pell diouz m'az ar stoum e-lac'h ma tere ouz pep gour dispart koll e vuzeh eun deiz !"

- Pieu on, ma mab ? Eul leon dister a Vro-Iwerzon, deust da Gerne da veza digavandenn e servich Doue ha kraouiet er vac'h-mañ, ne oar perak, dro urz ar rous Grlon. Met te, hag ac'h eus doare da veza unan eus a wizion, en abeg da be fazi out bet harzet ha klozet er vouge-mañ ?

- A ! manac'h out ? Ya, her gwelout a ran bremañ diouz stumm da wiskamant. Duz unan bennak all em bije anzavet ma zorfed gant loze'h ! Ha ober ouzit, avat, a vefe rei tro hapken d'eur prezeger randonez da chnokat komzou goull o klask sila, em eskre, keuz d'al laz am eus grêt. Ha ne vannan

na kentel, na gourdrouz na kaout kerse d'am drougobar ! Re a gasoni a zo em c'hreiz hag, a-hand-all, n'em eus grêt nemet talvezout d'eur gour dislen e drubardevez em c'hefever !"

- Va mab," eme Ronan, o poueza war e gomzou, "zanna a rez ma c'halon ouz da gavout ken cheurtet hag o vega bapred eun droukrafs hagus ha digristen. Ma ne ziwallez e vo kiriek ar vrazoni hag ar vuanegez az i da leski e tan grizias an Arouant. En em izela dirak Doue, pe ne gavi diwezstoc'h da goz da bras !"

- Ma ano a zo Kadwallan, da lavarout eo ar gwella en emgann," eme an den yaouank. "Ma gouenn a zo brudet dreist dre he norz-kezon hag he lealdad ha marse n'he daou grêt bratallerez ouz den. Loze'hus hag otus a oa ma hentadou hag ar gwad a verv ennon am doug d'an techou-se. "Ar ouenn a denn" evel ma leverer ha biken, ne vern pege skrijus a c'hellfe baza poaniciu ha jahin ar Bad-All, ne begin da ouela d'eur mero am eus roet gent gwir abag ! Re-vras eo ar grou a zo bet grêt ouzin !"

- Bugel reuzeudik ! ar gunner diaculek a astenn warnout he beli a ra dit diskianti ha diemgafsi Doue ! Ken t'êret out ha ken prederiat gant ar pegad strafuilhus a rae ac'hancout eun drouklazer, ma ne walez ket grevusted ha fallagriez da bec'hed ! ... Pedit a rin an Aotrou da lemel an eoz fall a zo anout ha da lakaat ar glac'har hag an izalegez da vleunia ez eskre. Neuze e vi diogel e-kreiz ar peoc'h adkavet ha dare da c'houzefive, hep fallaloni ha jarneal, an digouez hagus emañ war-c'had emañ."

E-pad eur pennad, a tavjont o-daou da gomz, Ronan o pedi a galon evit e gavandad, ha Kadwallan war vordo etre chom dilaver hag ar c'hoant her broude da gendec'hel gant an diviz.

- Leon," eme a-greiz holl ar gour yaouank, "hael ha madlezus out pa n'em milligez ket. Setu perak e ran ma menoz da zisklêria dit, ma venez ma selou da-vihana, evit ma c'helli, diouz ret, dougen testeni eus ma dezrevell, penaos a c'hoarvezas an darvoud e zo kiriek ma'z on emañ."

- Komz hep nac'h, ma mab," eme ar manac'h war e c'hez, "ha plijet gant an Hall-C'halloudag rei dit ar c'hras da gavout keuz gwirion d'ar pez a rajout a-enep E lezenn !"

- Eun nebeud deiziou 'zo," a lavaras Kadwallan, "a oon dibreder, eurus hag enoret, e-touez Kadourien Leuhemel e Iz, e-lac'h m'am bos ar garg a benstrollad. Eun endervez e teus kelou deomp d'en em noz da ar-gadi eur bagad preizerien deust da zraeta ledenez Krothon. Diouz an abar-dauz, az eomp an hent hag, ar gêr-se, e klevjomp a oa dilestret an abou-borien e tolead Kameld. Gedourien a voe kaset d'o spis, e-keit ha ma rae an arme eun harp da ziskuiza a-barz sailha war an anebourien.

"P'en devoa Leuhemel anaoudegez eus doareu ar re-mañ, en em

strewet dinoc'h a strolladou bihan da ober ar skrap dre ar vro, e kemennas din en em sila gant ma brezelourien, hep beza gwalet, etre ar breizerien hag an eod, da droc'ha outo an hent d'an Toullec'g, e-lec'h m'edo o listri hag o bagou. A-raok tarz an deiz em boa souvenet an urz ha kuzet ma zud el lec'hioù a zorse ar gwella ouz ar gefridi em boa da gas da benn.

"Kerkent ha goulou-deiz, e pegas kadourien Leuhemel gant ar stourm e-pad ma d'edidrouz, oc'h evesant hag o c'hortoz hon tro da lammet ar bec'h. Hervez a ouezis goude, e voe spontus an dreilh e-touez an divroidi hag e chomas eun niver bras aneo war an dachenn. Hogen poutred kalet e oa ar breizerien hag en em zifenn a rajont d'ar mud e-pad pellig amzer hep kila.

"E-keit-se a verve ar gwad em izili hag e oa dižet ma funn, rak ne zeue c'hoaz betek annon hep trouz eus an emgann. Ne oan ket evit padout pelloc'h en entromar, el lec'h kuz ma oan en em dennet. Setu ma tiskennis etremek ar stankenn, o soñjal na oa ket diwallet mat marteze hag e c'hellje hon enebourien tec'hout dreizi, sioul hag hep gouzout deomp, da zistrei d'ar mor. Dofwall, an eil penn-strollad, eur c'hila mat din, em boa laosket, hep enkrez, e penn ma factred, o veza m'em boa fiziafs ennañ ha ma ouien e oa eur brezelour akuit.

"Dre ma kerzen, e seblantas din, da genta, na oa den er vantrenn, met, prim goude, e welis e oan bet faziet. E-touez ar c'horz hag an elestr hir, e oa tud, hep mar, war ribl eur wazind dour, e-barz eur bradenn fraost. Dre guz, bepred, e tостаis outo war hed eur c'hont kammed bennak ha, neuze, e varzis edont o leunia podou pri ha seier kroc'hen gant dour eus ar rodeo.

"Peder maouez a oa eno, stouet a-ue'h d'ar waz, daou c'hour gento d'o gwarozi pe da evesant outo, o-daou harneziet hag armet e doure nordiz. An orsellad dour edont o kerc'hat a oa, sklêr hag anat an daz, evit pourvezia listri ha bagou ar breizerien. Hogen souezet-bras e oan o kavout merc'hed oc'h ober el labour-se, rak ne oa ket boazet dinastrien hon eoc'hou da gas gento o gwraze e-kerz o c'hantredannou arverus war vorioù ar c'hoznag.

"Ma n'eo ket ar-ra-mañ," emezan ouzin, "merc'hed skrapet gant hon anebourien digernez, ez int plac'hed eus o gouenn. Ha m'annet e vefent, eta, da ober o annez da viken an eul lec'h bennak eus hon toled ha da ouenna ennañ ?"

"Neuze eo e c'hoarvezas ar pezh a zo kiriek d'em gwalleur ha da hini Dofwall, me c'hila. Unen eus ar merc'hed a savas he c'hain ha, kerkent e voe trellet ma daoulagad ha treviliet ma funn ha ma c'halon. Eur plac'h kenedus e oa, dreist a ouezfen lavaret, mantet kær ha korfet disper, hag he dremm, ar goanta hini a welis morse hag o tenna da vleuf flour an agroaz, a skede dindan eur pennad bleo stank ha skañv, a liou gant ar gwirin no. D'am meno, n'eus bet biskoaz ha ne vo biken na prifsez na rouenez par he emzalc'h d'he hini, neuze ken dudius ha ken leun a veurded. Hag an aval vor, o starda outi he sae skañv, a roe tro da verzout furn he c'horf disi

ha yaouank.

"Ar merc'hed-all, d'o zro, a savas diwar o fuch, me n'eo gwelen ket. Ne welo ma daoulagad, souezet gant an ustlemm, nemet ar plac'h he bleo liou d'ar gwirin alourset. Dififv ha diflach, a-dreñv ar vodenn lenn ha strouz em boe kavet da guzet, oc'h arvesten outi gant ar sebetur he kilhet gant eun nerz hud, hep tourel evez ouz ar re-all a oa ganti. Hogen eur c'hoant ken droiz em boe dei, ma verzis trumm e oan kouezet e kerantoz ar plac'h hag e ranken he c'hoant kousto pe gousto, na verne din penaos, da wraeg pe da surc'h."

"Allas ! kristen sempl ha reusoudik," a glemmas Ronan, "an orged a oa ennout. Penaos n'oc'h ket anebet ouz eur c'hoantegez ken hudur ? C'hoantat da bried eur vaouez dibere'henn he dillemm a briedalez a zo reiz, met, siouez ! mennout ober eur serc'h anei, n'eus ket brasoc'h na mezusoc'h pec'hed !"

Hogen ne eure Kadwallen nep van ouz komzou glac'harat al lenn hag e kendalc'has da savaret, praderiet hepken gant an efvor eus an darvoud iskis a leunis c'hoaz e spered.

"Unen eus an daou c'hour", emeañ, "a roas eun urz an eur yez dianavez din hag, o senti outañ raktal, e savas ar merc'hed o orsellad dour da vont kuit. Ar plac'h malen he bleo, eur girin leun ganti war he skoaz, a gerze da ziweza war-lec'h ar merc'hed-all, unen eus an daou nordad war he seuliou. E genseurt, ar penn a-raok eus ar renkennad dougered dour, o hise da zifren da vale. O welout an hini a oa ma holl c'hoant o pallaat, ne ris ket daou soñj ha, ma c'hleze em dorn e soñhis, evel eun diskiant, da redek war he lorc'h."

"Eun d'ar pred-se, e tregernas ar stankenn gant strop an emgann o tostant. Yaoc'hadennou ha malloziou a save a-dreñv din, garmet gant kadourien drec'h Leuhemel hag ar breizerien o kila e-ser stourm outo bepred. Met trellet e oa ma spered hag, e-lec'h distrei e penn ma strollad da gemerout perz er pegad, oc'h hastis gant ma radadenn da dizout er goantenn. Trouz ar biladeg o tont betek enno a eure d'an daou ward nordad sellout war o c'hiz ha, ken prim ha tza, oc'h ma gwelout o vont war o zu, a ti-feurjont o laofennou d'en em zifenn ha gant ar menoz d'am gwalleuz. Ne voe ket hir ar stokad strezon hag al lostennar. Ken kounnarret hag eul leon, a tistagis gantañ eun toad ken feulz ma teuas bag ma c'hleze ar-mêz a-dreñv e gain. Goude e tiskaris ar ward-all, hogen gant muoc'hik e vee'h, rak gwalleuz brezelour e oa eget e gavandad.

"Kement-se o ris an eur par ken barr ma n'eo devoa ket ar merc'hed spouronet he stlapet gantañ daou o orsellad dour, bet amzer da skempe pell diouzin. A-dreuz korf e topis peg ar plac'h an dedenne kement hag, an eur gomz outi hegarret d'he dinoc'h ha d'he frealzi, he savmis

etre ma divrac'h da gas ganin, ken laouen ha fougeet din ha m'am bije kavet an talvoudus tefzor. D'an empaent e rede a-druuz ar bradenn, war-zu an aod, eun nebeud prouzerien bet gwallgaset e-kerz ar stourmad ha kollet o armoù gant darn aneo. Sammet evel ma oan, ne c'hellen ket soñjal mont d'o diarbenn hag o kenderc'hel war-zu ma c'henvroiz, setu m'o laoskis da dremen didrabas.

War laz ar bradenn, e kajis gant eur pennkadour estren a oa ive o tac'hout evel e dud. Daoust dea'f da veza mantret ha skuiz, e oa lemm e lagad he war evez. Hogen e-lac'h trei diwar ma hent, e taolas, sebezet ha skodeget-holl, eur sell glac'haret ouz ar vaouez a zougen etre ma divrac'h. "Branda !" emeaf, skrijus e c'harm hag o tisedok etremek annon, e gleze savet ar vann. Raktal ac'h astennis ar plac'h kenedus war an douar, fatet mik e oa hag he bloo koer hag hir e zispakas a-fulh war c'haot ar bradenn. Anez e voen gouest da zic'houhina a-brad a-walc'h, e vijen bet toullgofet gant an divroad. Hogen, p'edo o skei e daol, e kavas ma laofunn dirzañf da zistrei e hini hag, evitañ da veza mailh da embreges e arm, ne badas ket pell ar pagad. A-greiz m'edo en nebeuta soñj e tapas diganen eur boutad ken gwas en e galon, ma kouezas, en eur zislonka eur genaouad gwad, a-stok e gorf war an dachenn.

"Neuze, pa'z is da zastum an hini en devoa grêt ar c'hadour preizer Branda outi, n'ha c'havis ket war al leton. Edo o paouez beza skrapet gant Dofwall, ma c'hile, e-keit ha ma oan bet oc'h en em ganna. Her gwelout a raen o redek eus ar bradenn, ar vaouez a-druuz gantañ war e ziskoaz. Ken prim hag ar gwella jao o vont d'an tuz, e voen kerzent war e seuliou, ma c'halon barr hag heuged gant ar gasoni. "Dofwall, marc'hag disleal, trubard milliget !" e c'harmis dea'f, "daskor din ar plac'h ac'h aus laeret ha skrapet diganin a-enep pep gwir, pe da eskern, bremaik, a zamento !" Eun harz a eure p'am c'hlevas ha sellou kintus ha gwillon en e zecoulagad, e lavatar, yen e vouez : "Hounnez em eus kavet dibere'henn ha din hepken e vo, pa vennañ he c'haot da bried ! Hag ouzit, gacouid flôrius, e troc'hin da c'houlofchenn, en abeg d'az kunuc'hennou fañs !"

Ne voe ket hiroc'h an diviz hag heñ da stoui d'an douar, da lekast da c'hourvez ar vaouez yaouank, bepred hep anaoudegezh. Hep godal palloc'h, e ternaous neuze etre an drou gevazer ar c'hann didruet hag euzus ma kavas unan aneo e vero ennañ. Barrek meurbet e oa Dofwall war ar c'houri kleze ha ken trumm e sailhas warnon ma tarbas din riskla war ar c'hlozenn ha beza diskaret gantañ. Met, start adarre war ma divasker, e kavis tro buan a-walc'h da zarc'houi, war genn e benn, eur pouner a daol kleze a eure darvoudou gant e okarn hag a faoutas outañ e glapann. A-greiz ma tistagen ar mestool-se, e reas din ma enebour ar gouli euzus a zo em brec'h dehou hag am zoolas semplet d'an traoñ, war livenn ma c'heñ.

"Eur preded goude, pa zifotis, e poullde ar gwad dindan ha ne gavis, em c'hichen, nemet korf maza ma brateller milliget. Steuziet e oa

Branda hag an takad goet, bet pladet gant he c'horf, e chome anei hepken da ziskoaz e oa bet gourvezet eno. Ma sellou, leun a strofulh, he c'hlas-kes en enar a bep tu ha, gwan ha dinerz ma mouez, he galvis gant an hira-oz foll am boa dei.

"Ha distroet a oa, anei he-unan, devoe ar breizerien pe rediet e oa bet, gant ar re-mañ o tac'hout, da vont d'o heul d'ar mor ? Skrijus e oa ar glac'h ar hag ar c'herse am bea dei, met boud e voen da savel war ma diou c'har, daoust pegement bennak e poagnis d'hen obar. Ha pencos he zizout, pa ouien edo, a-benn neuze, bagou he listri nordiz war an hent d'an donvor ?

"Kavet e voen, er stad truezus m'edon anni, gant kodourien aus ma strollad ha doug ganto d'al lac'h m'edo Lauhemel, enkrezet diwar ma fenn hag hini Dofwall. Diskleria e ris dea'f, hep kuzat netra outañ, ar pez a oa o paouez c'hourvezout. Droug ruz ennañ ha doaniet kanañ o c'hou-zout m'edo mui Dofwall aus ar bed-mañ, e lavatar din, kintus he gao : "Dallezout a rez beza lakeet d'ar maza ! Hogen pa'z eo gwir ez out a ouenn uhel ha brudet ha doue mat da c'halon e vi kaset da gac'h ar kastell Kemper, evit ma ray ar rous ac'hout ar pez a blijjo gantañ."

"Manac'h, setu displeget dit, penn da benn, ha dre ar munud, an danevell spourous ha gwizion aus an darvoudou o deus grêt eur mun-trez ac'honan. Arabat dit kredi, avat, e savo keuz annon da zrouklaz Dofwall, ar c'hile disleal o skrapas ar plac'h a garan hag a zo kiriek m'am aus he c'hollit. Re zay e ene da loski d'an ifern ha re gavin-me tro da vont ac'henn da glesk dre ar bed, ar goantenn hep he far na c'hel-lin ket bava hepi ... A ! malloz, perak 'ta ranezenni hag huAvreal evel eun den trelatet e spored ? A-barz pell e vin barnet da verval ha, ma vouez c'hoaz amañ d'ar pred-se, leon, am c'hlevi n'eo ket o salmanni hirvoudus, met o youc'h a-bouez penn ma c'hann a vero. Eur meronad a vo hennez hag a drugemo dioutañ ar gasoni a vagon ouz an hini am zru-bardes hag ar garantez e zougin bepred da Vranda, ar valleganez kenedus a entenas ma c'halon !"

Tevel ~~pe~~ a eure Kadwallen, fôzet gant an darzenn ha trefust gant an envor aus ar vaouez kenedus. Ronan mantret o veiza pegen don e oa gwirizennet ar gwall youlou en e gevanduz yaouank, e gomzes outañ, gwañ ha truezek : "Ma mab", emean, "tano meurbet eo, war a welen, ar bluskenn gristen a zo o wiske da ene, pa'z eo gwir e komez evel eun den divadez hag e tinac'hez al lezenn a bardon hag a garantez embannet gant an Aotrou Krist. Oc'h en em izelnet dirzañf hag o tiskouez dea'f gwir glac'h ar d'az kwalleur, e pardono Doue dit da fallagriez. Ma chomez aheurtet ez pac'hed te hag a zo, war a leverez, en arvor aus da vuhez, a zay d'an islonk don na zistroi marse dioutañ. Duspenn an distal aus da vueregezh ha da lor-

c'hentaz a ranki goulenn, o tiskouez marc'hed d'ar c'hadaliez ez out kontammet ganti. Ankous ar vaouez-se a oez kilhet gant ar gwel anei ha soñj e tle mearvat, beza dimezet ha n'oc'h eus nep gwir warni.

"A-hand-all, ma rankez marvel, perak e tufe eus da c'henou, te hag a zo bet kristanet, eur c'han a valloz harvez giz ar baganed tonket da goll o buhez hag a deol o c'hasoni war o lazorien ? Kanennou kaeroc'h ha talvoudusoc'h he deus desket deomp an Iliz Santel hag o c'hano a ri gant feiz ha fiziads e medelez ha trugaruz hor Berner Mour.

"Hogen tochet an da gradi na varvi ket dioustu ha fiziads em eus ive a teui da brederia war da wallberou ha da furaat hiviziken hag e reni skoueriusoc'h buhez evel ma tere ouz eun uheliad kristen. Eur weledigez em eus bet, digaset din gant Doue, ha dreizi oc'h euzon ervat en devo ezomm Gralon, dizale, eus e wella kadourien. Har gwelout a ris, e penn e arme, o vent war-zu ar reter da argas an Normaned deuet da gerc'hia, evit he c'heme-rout, eur goeded divent hag a zo savot war ribl eun aven lodan. Te, a-c'hao-liad war eur marc'h-embenn kaer, ha, war da lezoc'h da strollad brezelaourien, a oa ive d'e heul. Mat, en an' Doue, ma mab, bez bepred war evez ouz gwidreou an Aerouant, rak ne ehano ket ouzit gant youl d'az koll. Pa vo deuet ma diou-gan da wir, ma ra dit keja gant ar vaouez a gomzout din anei, na ra nep fallantez d'he ferc'henna na, zoken, d'ha darempredi. Eun drougeur bras o vefe dit hag, oc'h ober gaoz ouz da briñs ha da genvroiz, a kollfas, ouspenn da vuhez, da vrud vat ha da enez."

O klevout al lean o tisplega deaf e rakweladenn iskis, e voe Kad-wallon e barr al levezaz hag e laoskas eur youc'hadenn a sklases Ronan betek mel e eskern : "Bennoz Dit, manac'h !" omaf trefuet holl, "distona a ruz ar goulid a zo em c'halon, spi a roez din da adgwelout Brenda hag he adkavout a rin, m'han tou, ha pa rankfen mont d'he c'haer'hat betek goueled an ifern !"

- Salvez Jezus !" a lavaras Ronan o pedi, "ho pet truez outañ ! Grit ma ankouso da viken ar plac'h touellus-se a voe lakaet gant an droukpered war e hent. Anez, siouaz ! o teuy da wir ar pep gweza eus ar weledigez a rajoc'h din."

x

x x

Daou pe dri devez diwezantoc'h, oc'h an em gavas sevenet darn eus diougen al lean. Gourc'hemenn a voe, a-barz Gralon, da zieubi Kadwallan hag ar pennstrollad youank, oc'h adkavout e frankiz, a gimindas diouz ar manac'h, ankeniet holl gant an drouziwez a walc o tastaet outañ.

o

Unnekvet pennad

Barnedigez ar roue

An deiz-se, p'en em gavas Ronan, etre dhou ward, e porz oc'hon Kastell Kemper, e voe trallet o zaoulagad gant sked haol splann an nevez-amzer o para laouen war an douar. Eval eul lapous noz, dallet gant neiz eur sklerijenn re faulz, e fivfe dibacouez e valvennoù an anez, o klask morzout ar pezh a oa dirazañ. A-nebeudou, koulskoude, oc'h on em voazas ouz skleur lintrus goulaouenn vour ar bod hag e wellas, azezet dinden eun dezvenn vras ha skourrak, ar roue Gralon ha tud e lez, holl gwisket kran gant dilhad a lies liou.

War e benn diskaball e touge ar rous, e stumm eur gurunenn, eur c'halc'h oour peuz-striz, eur groazig perlezennat outañ a-uc'h d'o dal. Eur vantell ruz-tan a c'haloe e gorf, o tapa izeloc'h eget e zaoulin. En e goanze edo war eur gador uheloc'h ha kizellet kaeroc'h eget re e dierned a oa a bep tu dea. E zaouarn war an dornell anezañ, e talc'he e gleze en e sae etre o ziou c'har. E neuz a oa groñs ha meurdeuz hag e zromm kalet ha yen.

En a gichenn, a-zehou dea, edo pennvarner ar rouantelezh, eun den a garg uhel hag en devoz kefridi da lakaet douja d'al lezennou ha da c'haer'hemennou e vestr pa ne venas ket homañ hen ober e-unan, ar pezh na c'hoarveze nemet dibact a wech. Ha setu ma tlee beza gravus marded ar goaz a oa da vaim pa douzevez ar priñs dant a-enep giz da bleustri ganti.

P'en em gavas dirak ar roue e eure Ronan dea eur stouadenn leun a elevez hag e chomes dilevar. Kintus e sell ha gaoz e vouez, e lavaras Gralon d'ar manac'h : "Piou out-te, gwisket evel ma'z eo tud Doue, hag oc'hanout, hep mar, eun den digernez p'az tamaller eus ar gweza drouge-berou ?

- Roue," eme ar bac'hiañ, "ma ane a zo Ronan. Eul lean on, gonet o Bro-Iwerzon, ha deuet da Goad an Naved da bedi Doue da da ober pinijenn.

"Deoust din da veza eur pec'her paour evel an darn vrasa eus bugale hon tad kenta, e c'hellan lavarout deoc'h n'em eus morso, hag a ouzfen, klasket noazout ouz ma nesa. Petra 'ta a lakaer war ma gwall ?

- Tamallet out," eme C'hralon, "da veza eur gourvil euzus. Da gefiver pep loar nevez, ac'h en em droez o bleiz fero, diouz an noz, da zroukober dre ar vro ha da skrapa bugale a lonkez da c'houde. Ma'z out eur seurt ganas, ovel ma klevan, m'hen talvezo dit hep truez !

- Roue," a lavaras Ronan distrofuilh-kaer, "Esoc'h eo drouk-komz eus eun den a sammer a draou fallakr na vez ket kablus aneo eget lakaet enat ha gwirion war e goust gwallou ha n'en devez ket grêt. Eur prias poaliek, habask ha leun a fumez ez out hervez ar vrud, hogen gwall-dechet az kavon da gradi re-brim hep gwir abeg ar gevier didalvez em sammer ganto. E pe lec'h 'ta emañ ma zamaller ? Hag non en defo d'en em ziskouez pe na gred ket dont war wel ? A-barz kavout tu, kouleskoude, d'en em zifenn ouz o damallou gwallon e rankan gouzout ar pezh a zo kiriek d'ar c'hlemm en deus grêt dit em anep." Sebezet e voe ar roue gant amzalc'h ha komzou dichek al leann.

"Reiz eo kement-se," emañ, kuñvoc'h e vouez, "hag e sevenin da c'houlenn rektal." Hag e c'houre-hamannas d'eur gward : Kê da gemenn d'ar vouez a gavi du-hont dindan balz an Tour Plat e tile dont dioustu da gemerout pezh er breud."

Nabaud goude e tistroe gant eur vouez gwisket gant dilhad kafv hag o ouela dourek. Neuze, hep re a souez, ac'h anavezos ar manac'h Keben, gwreg Gourkuñv, e amezeges a Goad an Naved. Lampre he zeot, hag hep an distera nec'h direk al lez, e saludez Gralon hag e diernad gant komzou pilpous ha lubonus. Kerkent, war c'houlenn ar roue, o troas war-zu Ronan hag e tarounas d'her samma gant ha zotadou gaouiat ha binimus.

"Prias galloudus", emei, "ha c'houi notrouned a ouenn uhel, setu Ronan an torfetour fallakr a zo kiriek d'am drougour ha d'am glac'har. War a lavar ez eo eul leann douet ar vro da bedi Doue ha da brezeg e lezenn, padal, e gwirionez, n'ez eus o nep lec'h ken gwas strobinieller hag heñ. N'eo ket prezeg komz an Aotrou a ra, hogen lakaet an dud da benfolli dre a ardou. Gourkuñv, ma fried, a zo bet touellet gantañ hag, e lec'h en em rei d'le labour da vaga e wreg hag e vugale, e koll e amzer oc'h e houlin hag o saloou e randonez didalvoud. Met kement-se n'eo netra e-skoaz e zrougoberou-all ken skrijus ha ken dinoulek. Ken lies gwech ha ma vez loar nevez, e tilez e fumm den da gemerout hini eur blaiz digar pe eun anevall digernez-all da gavout tu da breizata dre ar vro eur bugal dinnoz bennak e vez dispennet gantañ da dextri ar sec'hed hag an naon en devez a wad hag a gig tud."

Barr e oa kalon Keben gant ar gasoni hag ar gounnar. A-nabaudou e troe he zamallou e zasañ hag he buaneges o kreski dre ma komze a lakao he diweuz da conenna euzus. Evel diskiantet e oa hag e tiskordas da c'hami

skiltrus : "Roue, c'houi skor ha diwaller ar Reiz e Kerne, he pozit truez ouz eur vamm baour glac'harst, ha kastizit dizement, m'ho ped, ar strobinieller milliget a skrapas he bugal diganti ! Bec'h d'en den-bleiz debrer bugale ! O'ar maro ar gourvil fallakr ha diaoulek !"

Ken iskis e voe warno levezon klemmou ha kunuc'hennou ar wreg dirollet m'o devoz doare ar roue ha tud e lez da veza skeot ganto. Trefuet gant taotadou divifis ha brouezet, e c'houlennas Gralon ouz al leann petra en devoz da respont evit en em zidamall.

- Roue," eme Ronan, kuñv ha dievez ouz rassañ ar falledenn, "ma c'hefridi er bed-mañ a zo pedi ha n'eo ket en em rei da skiant fall-akr ar strobinieller. N'eus netra gwir e tamallou ar wreg-mañ, hag, a-barz he c'hredi, e tarofa ouzit he lakaat da rei dit testeni leal ha gwirion eus kement droug ha gwall a lake war ma ano. N'emañ ket ar c'hiz da ober a-hend-all, rak re-êz e vefe neuze d'eun tamaller displeal lakaat barn eun den dinnoz e gaou.

"Drouguez he deus ar vouez-mañ ouzin o veza m'am eus grêt eur c'hristen gredus eus he fried, e-keit ha ma chom-hi e tafvelijenn ar bageniez. Setu hepken ar pezh a zo kiriek d'ha c'hasoni em c'hefver."

O klevout ar manac'h o tinac'h ha c'houzou e kreskas muoc'h-mui an droug a oa e Keben. Hep gortoz petra a lavarje ar roue, e tiorllas gwasoc'h eget biskoz war an hini a enve he enebour touet. Hogen Gralon, hauget gant he riot dizereat, e eure dei tevel ha, goude beza kemeret all e bennvarner, a lavaras :

- Pa n'eus nep tu da c'houzout gant piou emañ ar gwir pe ar gaou, e c'houlennin skeozell Doue da ziluzin ar gudenn. Heñ E-unan eo az parno, Ronan, hag e ziskouez deomp difazi ha kablus out pe na dout. Ma daou gi porz bras, a zo o tievouedi abaoe daou zavez 'zo, a laeskin warnout bremaik. N'ez tispennont a vo enat ez out eun drougoberou ha ma n'az tagont ket e ouzuzin ez out dinnoz hag e c'halli adarre adkavout da frankiz."

Kerkent o c'houre-hamannas d'ar gwardou digeri dar ar c'hondi d'en daou gi-porz. E-keit ha ma santet ouz an urz kriz :

- Prias," eme ar manac'h d'ar roue, "hag eun ail Pañs Filet e vefes, pe zibebez, den dibodell a zo ac'hanout, eun doare ken gars ha diruz da varn eur reuzoudig a embannez ez eo dibac'h eus tamallou eur vouez dic'halloud da broui he zotadou gaouiat. Eun doare eo hennez o tereout hepken ouz gouezidi difeiz ha n'eo ket ouz eur roue kristen ha fur.

"Arabed dit klask touella Doue o c'houlenn outañ ober da labour, n'eo ket maval dindanout. Ma ne venn ket ma diwall diouz lanteged da gen, te hepken eo a vo kiriek d'am beza lakaet da c'houzañv eur maro spontus

hag e ranki respont eus da darfed diweztaoc'h. N'eo ket o veza ma'z on en em ouestlet d'É servicha e tile an Aotrou ober e burzud em c'heñver. Ma varven dre da wall, hep mar e ranki damanti ! ..."

D'an ampoent odo an daou gi-porz o tilammat eus o lag hag o tisedek da sailha war Ronan. Hemañ ken dispont ha tra, o gwela o tostaat outañ, mentek kaer ha nerzus, feulz ha ruz o daoulagad, diviñs ha digor frank o genou gant an diouer a voued. En eur par barr e vont dirazañ, dore d'eo wallaoz d'ar maro.

Hogen n-greiz-holl, p'edo Gralon hag e dierned war c'hed d'eo gwelout oc'h en em douler war ar manac'h, e savas hemañ e zorn da ober sin er groz a-ue'h d'al loaned fero ha, kerzent, e pladas ar re-mañ dirazañ d'an douar, da lipat o droid noz.

Dirak an darvoud dic'horteo, e kouezas ar sebetur war C'hralon hag an dud a lez, estlammet hell. Emedont c'hoaz dindan levezon tamallou diaoulek Keben hag e sailent a bep eil, skodeget ha dispourball o daoulagad, ouz an den marzus a ouie ken es-sill, defvaat anevaled kounnaret hag o lokaot da ober kammbre deñs. Neuze, alvaonet ha skoot gant ar burzud, o c'harmas ar roue o sevel diwar o gador :

"Evel Daniel gwec'hall e foz al loaned, emañ Doue, hep mar, gant ar manac'h-mañ, pa'z eo ken onet ar warez a zo deñs ! Ra vo dastumet ar c'hon en o lag ha laosket an den santel da vale !"

E-keit ha ma kloze ar gwardou al loaned er c'hondi, oc'h en em strinkas Keben, strafuilhet ha spouronet, ouz treid Gralon, an eur youc'hal e oa dre strobinnell en devoa kavet Ronan an tu d'en em zivall diouz skilfoe an daou gi-porz.

Hogen, dioustu war ho c'homzou, e savas Ronan e vouez da lavarout :
"Test oc'h bet, o roue hag sotrouned, eus ar burzud na oan ket dellezek aneñs, hag a zo bet plijet gant an Aotrou ober evit ma diarbenn diouz eur maro kriz. Unan all emañ o peouez ober pa zeu da rei din brumañ da c'houzout e pe lec'h eo kuzet, gant ma zambillerez, korf ha marc'hig maro da heul eur gwall gleñved deuet dei a-daol-trumm, ha n'eo ket lazet ha diwadet ganin, evel ma lavar ... Tremenvan ar bugel a voe d'ar vamm digalon eun digarez mat d'om samma e goue ha da c'houlenn e vijen kastizet gero an abeg d'an torfed skrijus a lakae war ma c'houst.

"Ha n'am c'hredid ket, it betek Koad an Neved hag e kavoc'h kelen ar plac'hig kôz klozet en eun arc'h dore, e ti ar wreg reuzoudik-mañ.

An estlamm hag an euz o greskas e kalonou ar priñs hag e uhalidi ha, trefuet mioc'h-mui, e krias ar roue : "War vare'h raktal, gwizien feal, ma'z simp da woulout, gant hon daoulagad hon-unan an dre ken iskis a zo deomp ar manac'h anoudegezh aneñs."

Kerzent e voe digaset deo o mire'hed a c'heñlijont dioustu, e-keit ha ma pigne Ronan ha Keben, houmañ mezek hag eur c'hozfad spont enni, war bep a inkane da vont d'eo heul.

: x

x x

E-pad pell e kerzas ar strolladig marc'hagerien a-dreuz eun tolead digompes hag hogee didud. Pa zigouezas, d'an diwez, er pal eus e droid, e kavas, en ti war beuliou, Gourkuñv hag e zacu vab beuzet en o daelou, gant ar c'heuz hag ar glac'har da veza kollet Lella vihan, lazet ha skrapet gant Ronan, hevez m'he devoa lavaret Keben deo.

P'eo stersas Gralon diwar-benn an arc'h dore, he diskouezjont deñs el lec'h teñvala eus ar goban.

"- Lamit ar golo diwarni," eme ar roue, "ma welimp petra 'zo enni !" Sentet e voe outañ war an taol hag e kavjed, er goueled anei, dindan eur bern dilhad fank, korf disliou ar verc'hig, sonnet gant ar maro.

"- Holl d'an daoulin !" eme Ronan neuze, "da bedi Doue ma taur-vezo gantañ deskori ar vuhez d'ar c'hrouadur-mañ, evel ma reas gwec'hall da vugel intañvez Naïm !"

Kement hini a oa eno, esmaët hag enkrezet, a heulias ar gour-c'hemenn o plega e zicu c'har d'an douar. Hag al lean, birvidik e vouez, a gendalc'has da gomz.

- Aotrou", emañ, "plijet ganec'h diskouez Ho madelez divent e-keñver ar re zinoz ha lakaat Ho kalloud meur da bara dirak an dud-mañ a zo c'hoaz, an darn vrasa aneo, hanter-zallet ha touallet gant gizio ha kredennou chomet a-zilerc'h ar baganiez. Grit ma savo eus a varo da veo ar plac'hig diantek astennet amañ divuhez ! Grit ar burzud-se, m'Ho ped, evit m'he devo diweztaoc'h, en Ho ser, an euzusted peurbadus goude ma vo bet gouestlet deoc'h dre an dour kennezrus a lakain da redek war he zal. He mamm, ive, trelatet he fenn ha zannet he c'halon gant ar glac'har d'he beza kollet, a sioulav d'he drougiez oc'h adkavout ar paz a ree levezet he ens, Ho kanneulo, hep mar, a-gevret gant Gourkuñv he zad, ar c'hristen divrall ha karadek, hag he breudeur yaouank, ken tomm outi. Eun abeg e vo c'hoaz Ho madober da rei tro d'an testou all da ambann Ho klod ha braeder Hoc'h ano teir gwec'h santel."

An anken hag an esmae a waske o c'herc'henn d'an arvesterien, saouzanet holl, gant ar gwel eus ar c'helan paour, ha neuz meurdezus ha kevrinus ar manac'h o pedi en e sav, e sellou leun e fiziañs hag e zaouarn juntet gantañ d'an nec'h. E-doug euz predadig berr e chomas divuhez ar c'horf, met gantañ d'an nec'h. E-doug euz predadig berr e chomas divuhez ar c'horf, met gantañ d'an nec'h. E-doug euz predadig berr e chomas divuhez ar c'horf, met gantañ d'an nec'h.

- N'eo ket an den distar ha didalvez a zo ac'hanon a dleit trugarekaat", eme al lean, "hogen an Aotrou hor mastr, an Doue nemetañ a c'hell ober burzudou ! Heñ hepken a zellez beza benniget ha trugarekaat !
- Servicher feal an Dreinded Sakr," eme C'hralon pa voe demaniet d'an trouz en dro dea, "en abeg d'ho santalez eo ez omp bet test d'an darvoudou marzus emamp o paouez gwelout ... Goulennit diganin kement ha ma plijo ganaoc'h c'hoantaat, hag her roin daoc'h a youl vat, mar bez em galloud. Kalz levenez a rafec'h din oc'h esanti d'am c'hinnig ... A-hend-all e vennan kastiza dihegar ar wreg fallakr ho tamallas e gaou." Hag o trei ouz e wardou :
- Partrid", emeañ gant buanegez, "liammit ar vaouez da veza kaset da Gemper ha taollet d'am c'hon-porz da zrailha."

Keben a grene evel eur bern deliou hag a voe dare sa simpla. Hogen ar manac'h, kufv hag hebask e gomz, a lavaras d'ar priñs : "P'am eus ar gwir da gaout diganin kement a c'hellez rei din, a c'houlennan ma laoski Keben didrabas hag en he frankiz. Ezomm o deus anei he fried hag he bugale, dreist-holl he merc'hig Lella, savet a varo da ven, a-drugarez Doue ... Lakait an drouguez hoc'h eus outi da deval p'en deus prezeget an Aotrou Krist al lezenn a bardon o vervel evidomp war ar groaz.
- Ra vo graet hervez da youl, Ronan", a zistagas Graion, "daoust ha ma tlefe ar vaouez drouk-se gouzañv evit he zorfed.
" Met te, manac'h, te ar santela den a daol troad en douar em rouantelez, n'eo ket gant koz kroc'hen eur Geben hepken e vi digollat eus an droug he deus graet dit ... Klavet em eus e rez bandedz, war yun, ouspenn ar rusta pinijennou a oufed da c'houzañv, eur valeadenn hir he skuizus e-bazz ar c'hoad-mañ. An dachenn douar-se, kelc'hiet he bevannet gant ar wenedenn a roufennas en dro dei da gamejou pendeziak, a vennan rei dit e gwir berc'h enniez, e testeni padus eus ar vri a zougant dit evit da santalez ha da furnez... Da zomani ha da vinit'hi a vo an dachenn-se ha den nemedout, ha pa vefe me ma-unan, pe eur warlerc'hied din, n'en devo nep beli na perz enni.
- Roue," eme al lean, "eur priñs hael ha brokus out; az trugarekaat a ran evit ar c'hinnig kaer a rez din, met mir ganit da zouar pa'z eo goues-

tlet ma buhez d'ar baourentez ha d'an dienez ... Mar plij ganit, koulskoude, ha daoust d'ar fae a ran war ar madou, ec'h asantan mirout ar gwir a vinit'hi war an takad-mañ eus Koad an Neved. Ennañ e kavo goudor ha repu diouz garvder da lezennou, e-keit ha ma chomint dizrouk em ser, ar wall-oberourien en arvar eus o buhez pe o frankiz ha tust d'en em zasprena eus o gwallou dre ar binijenn.

- Evelse bezet graet !" a zisklerias ar roue. Ppe frankiz az po da warezi ervat, evel ma kavi mat, pap den disuj ha fallakr disant diouzin pe zrougius ouz e nesa, hep ma c'hellfen-me ober nep tra d'o bac'he ha d'o barn."

Ha nauze, endra ma kimada ar roue dioutañ, a lavaras Ronan dea :

- Bennoz dit eur wech c'hoaz ha ra vi bepred diwallet gant Doue! Az pezh soñj atao eus ar marzou c'hoarvezet hirio ha bez hagaratoc'h hag hebaskoc'h hiviziken ouz an damallidi az po da varn. Na zoug nep barnedigez hep beza lakast ober eun enklask piz ha didu war ar gwallou m'o sammer ganto. Hag arabat dit klask touella Doue o c'houlenn outañ diskuilha anat an nep a zo kablus. Fuzoc'h e vo dit pedi ar Spered Glan d'az sklerijenna."

Daouzekvet pennad

Eskop an Naoned
o c'houlenn skoazall Galon

A-barz kenderc'hel gant hon danavall, e tileomp lloverout petra e oa c'hoarvezet abaoe m'emedo war ziskar an impalaerezh roman bet bezet ha drastet gant argadourien c'houez a bep gouenn diredet eus ar roter. Arvorig, hogos didud lec'hioù bres enni a oa bet aloubet eun darn enei gant Galon, evel m'hon eus gwalet uheloc'h. D'an ampoent, avat, en dachennad douar a dize toleadou Roazon hag an Naoned ha m'en em ziazegas enni da c'houde rouanteleziou Domnona ha Bro-Ereg, ne oa o veza nemet eur rouezadennig tud, en o zouez eun nebeud Breiziz tec'het, rak ar Saizon, diouz o bro c'henidik. Diwezatoch hepken, pa greskas an niver aneo gant kenvroiz all deuet war dec'h avalto eus Breiz-Veur, eo e savas ar Vreiziz-se an diou rouantelez m'hon eus graet meneg aneo.

Keodedou Gwened, Roazon hag an Naoned, gant ar c'hornadou-bro a zo stag outo, hag eun darn vras eus Galia, a anzave warno beli impalaer Konstantinopl avel impalaer roman. Neuze er bloaz 481, e tavaous Klovis da ren e Tournai (Bro-Flandrez) hag e 486 e vos zrec'h, e emgann Soissons, d'ar C'hallied feal d'ar Romaned. Pemp bloaz goude, e kemere kêr-Breiz ha, diwar neuze, ec'h astennas e c'halloud, bep eun tamm, war an tolead a voe anvet Neustria. Pa stagas ar roue frank da argadi keodedou ar stêr veur Liger, e oa en em gevredet ar re-mañ gant Roazon hag an Naoned ha gant ar vro m'en em astenn warni bremañ Normandia hag ar Maine. O veza ma vos boud d'o zrec'hi, e klaskas keout da gileed an toleadou hag ar c'hêrioù kevredet, ar pezh a c'hoarvezas er bloaz 496, p'en devoe Klovis digemeret ar vadiziant.

E-keit ha m'o leoske didrabas ar Franked, a wel d'an holl da vihana, e kave keodedou all al Liger estrenien all tuet da glask ober ar peilh enno ha d'o ferc'henna. Pellik a oa, evit o c'hont o-unan moarvat, pa, marteze evit hini Klovis, e veze strolladou Normaned o sevel gant an aven da skrappa ha da laze war an diou ribl enni. Dre al Liger e oant gouest da dizout kreiz Galia, hogen, evit beza diarvar da sevel ha da ziskenn gant ha doureier, e

tleent lakaat o c'hraban war borz ha keoded an Naoned, enno merdaidi barek d'o zrabasa ha d'o argadi pa ne vijent ket re niverus holl.

E-pad hir amzer he devoa graet ar stêr veur, o vont d'ar mor a-dreuz eur vro strujus ha kaer, pinvidigez porz ha kêr an Naoned. Neuze c'hoaz, ha daoust ma oa bet disteraet ar c'henwerz enno da heul an darvoudou skrijus c'hoarvezet e Galia, e oa bras bepred o brud hag hini Naonediz.

D'ar c'houlz-se e tibabe kêriz pep keoded o eskop hag hemañ, euspenn ar gefridi an devoa d'o c'helenn war ar feiz, a dlee pleustri d'o gouern ervat ha d'o gwarazi, korfou ha madou.

E-keuz unan eus bloaveziou diweza ar pempvet kantved, goude ma oa bet anvet ar beleg Cervinus da eskop gant Naonediz, eo e voe kelc'hiet o c'heoded a daol trumm gant eun engroez bras meurbet a Normaned, renet gant o fennvrezelour Chillon, goubet d'he c'hemezout da rei da annez d'e boblad. Eun den kalonek hag a benn e oa an eskop Cervinus ha, rektal, e tiferas da ober kement a oa ret evit diarbenn an argadourien divedez. Lakaat a eura harnezia kement gour a oa gouest da zougan an armou ha, gant komzou nerzus o entenas da stoum betek ar mor. Hag e harzas ouz an argadennou kenta o terri arsailhou spontus an enabourien. Dre ma veze freuzet ar mogerioù-difenn, e ras o adsevel hag o dere'hel a ratre vat.

Siouz ! emedo ar seziz war gêr abaoe meur a zizunvez hag ar bevañs enni a vihanae bamede o veza m'he devoa roet repu da holl verc'hed ha bugale an tolead.

Peg a oa an dienez hag, a-barz nemeur, e vije an neonegez o ren a-touez an dud keiz, klozet er geoded reuzeudik hep beza bet tro da gas d'o heul pourvez a-walc'h da badout enni pell amzer. A-hand-all, Roazoniz hag a oa bet diredet da skoazella Naonediz a oa bet kannaet gant an Normaned, kalz niverusoc'h eget, er stourmad a oa bet strizo.

Er stad arvarus-se eo ec'h en em gave kristenien an den santel Cervinus, tonket holl da vervel gant an naon pe da goll o buhez dre zaouarn gouezidi didruoz, pa roas Doue d'o eskop ar menoz a vo meneg pelloc'h enañ er pennad-mañ eus hon istor.

x

x

x

War-dro diwez eun abardaez eus an dibenn hañv, e welas ar gedour, savet war c'haridell uhela brasa tour kastell Kemper da evezia ouz ar vro,

eur marc'heger war e loen o tostaat ouz mogerioù kêr. Diouz o doare e c'helled merzout e oa skuz kenaf an den hag e vare'h. Stouet e oa ar gour, evel hanter gousket, a-uc'h da vous e jao hag hemañ, izel e benn ha ken kamm hag aul loen korbezenn, e boannie da gerzout war an hent digompes.

Ne vos ket ar gward evit arvesti outo pell-bras, rak an deiz e def-valaas buan pa ziskennas an heol war an dremmwal, oc'h entana iskis ar c'hoabr hag o rei da zoureier kemmesket ar stêrioù Dded ha Teheir liv euzus ar gwad. "Diougan a varo, adarre, hep mar !" e c'hrozmoles ar gedour outaf e-unan, ken sabetuet e oa gant ar c'huz-heol gwadek a gemere evit sinadou e gafv.

E-keit-se e oa en em gavet ar marc'heger dirak ar porz-gwint hag, o kas d'e c'henou eur c'horn-bual, e laoskas taiz boudadenn skiltr. Stouet dreist spled e c'haridell, e c'houlennas ar gward outaf piou e oa ha petre a glaske.

- Ma 'zo eun den e vrazel e gopr an eskop santel Cervinus, aotrou keoded veur ha bro an Naoned, eur priñs illur aneaf e-touez uhela pennaou ar bed ha re iliz ar gwir Doue ! Emaon o paouez ober oustenn tri-ugent leo da zigas, eus e berz, d'ar roue Gralon, ho mestr galloudus, kemennadurez eus eur c'helou grevus meurbet. Lakait eta, m'ho ped, rei dor zigor din, ma roin d'ar roue, hep gouziza hiroc'h, al lizer e zo ganin evitaf !"

Kerkent ha m'en devoe anaoudegez eus donedigez ar marc'heger naonedat, e lakas ar penntiern a c'hourc'hemenne ar c'hastell diskenn deaf ar pont-gwint ha sevel ar porrastell. A-vec'h digouezet er porz, e lammas an diaviziad diwar e jao da saludi, gant elevez, ar pennstrollad han digemere.

Eun den e barr an ond e oa ar marc'heger, mentet mat ha nerzus ha neuziat kaer. Tokarnet e oa e benn ha gwisket a-hand-all gant eur jakon dirskafv hag eul lavreg lar. Eun heuzou lar ivez a c'holoe e zaou gof-kar hag ouz e arc'henou e oa stag eur re gentrou.

Eun doare seven ha kalet war eun dro en devoe, met ar c'houzenn, o staga e vleoe ouz e dal hag an uzian peg ouz e zremm hag o louedi e varo her c'hosae kalz.

Faez gant eun hir a gerzadenn hag an sonenn o tivere dioutaf, a krene ar jao war e beder c'har, dare da gouzde d'an douar gant ar bec'h en devoe graet.

Endra ma kase eur mevel al loen da groue ar marc'heger, e laveras ar marc'heger d'ar penntiern deuet d'e ziambroug, e karje komz rektal ouz ar roue Gralon e-unan, rak mannout bras a rae e raje deaf eur gefridi bouezus na c'helle gortoz pelloc'h.

- Ar roue ha tud al lez, "ema ar pennstrollad, "e zo brumaf er chapel o lavaret o fedennou noz gant beleg ar c'hastell. Gortozit eun nebeudig ha, moarvat, e vezoc'h digemaret gant Gralon a-barz nemeur. Hogen, ac'hann di, ez eo ret deoc'h dibri hag eva, rak dare ez oc'h, war a welan, gant an naon hag ar sec'hed."

A galon vat oc'h asantas an diaviziad mont ouz taol rak dinerzet e

oa gant an diouer a voued hag a zied. E walc'h a gemeres a bep tra hag adkavet e oa gantaf e nezz pa zeujod d'e c'halver davet Gralon.

En eur sal vras emedo ar roue gant e guzulierien voaz a bep tu deaf. Oc'h en em gavout dirak ar priñs hag e uhelidi, e stous d'an douar hag e laveras, doujus ha skilr e vouez : "Roue galloudus ha c'houi, ac'trouned a ouenn uhel, teurvezit ma digarezi da zont d'ho prederia d'eun eur ken amzere ! Eun dizour spouronus a zo o plays war an Naoned hag eun darn vras eus Arvorig, ha setu perak ez on dauet d'ho pete gant gourc'hemenn da zigas deoc'h al lizer-mañ a skrivas hon tad Cervinus, eskop an Naoned." Hag e lakas eur skrid siollet, savet e latin, etre daouarn an hini a oa e penn rouantelez Kerne.

Ne oa ket barrek Gralon war yez ar C'halianed na kennebeut, moarvat, d'en em geita a zoare gant ar skrituriou. Setu ma pedas ar chapelan da lenn ar skrid a vouez uhel evit m'o dije an holl anaoudegez eus er pez a zouge. Hag andra ma torre an den a iliz ar siell a gloza al lizer, e laveras, hegarat, d'ar marc'heger : "A be lae'h ez out-ta, ma den, pa gomzez hor yez kerkoùz ha ni. ? Me gave din na ouis Naonediz nemet al latin !"

- Aotrou roue, "eme ar c'hannad, "an enor em eus da veza breizad eyeldoc'h. Eun deiz, meur a vloaz a zo abaoe, e tilestris war an douar bras gant eun neboud eus hor c'hanvroiz. Hon dienez a dizas kalon eskop an Naoned a vos madoleuzus a-walc'h en hor c'hefvez evit hor gopra e-touez kerreiz ha kadourien a gendad.

- Bras eo ar fiziñs an deus ennout, eta, pa'z out bet dibabet gantaf evit ar gefridi emout oc'h ober ?

- Aotrou, kredi a ran em eus ar gwir da ziskleria em eus diskouezet meur a wach ez on douget deaf korf hag ana."

Savet e oa ar beleg diwar e gador da lenn an diell d'ar roue ha setu, pann-da-bann, ar c'homzou a oa warneñ :

- E keoded an Naoned, da zaiz gouel Mikael eus ar paver c'hant c'houzekevret bloavez ha paver-ugent goude donedigez ar C'hrist, Hor Salver.

"Cervinus, servicher uvel ha dizallid an Dreinded Santel ha, dre He gras, eskop ha tad speredel Naonediz, d'e vreur e feiz Jezuz-Krist, Gralon-Meur, roue Kerne, ar priñs hael, galloudus hag holl-vrudet, gant e salud hag e wella bennoz.

"Ma breur keret,

"Arak kemenn deoc'h ar gwallour a c'hourdrouz diskara kêr an Naoned ha distruja ar bobl a ra he annez anni hag an dro dai, e vennañ hoc'h erbedi ouz an Aotrou, c'houi hag ho sujidi, hag Er pedi da skuilha

warroc'h E vennoz santel hag E gaeza grasou.

" Gant ar vrasa rann-galon eo e skrivan al lizer-mañ, da rei deoc'h da c'houzout e pe zoare reuzeudik emañ war nes da goueza anni kristenien an Naoned hag o c'hêr. Abaoe meur a vloavez eo diskennet an Normaned war c'hlonn gleiz ar stêr liger hag an enezennou a zo en he c'hreiz, rak-asun koulz lavarout d'hor c'heoded. Preizerez o deus graet e-pad pell, en tu all d'an aven, hep kredi dont da zrasta hon telead, rak e-tailh e camp d'en em zifenn outo. Siouaz, hep bloaz e kresk an niver aneo ha bremañ, gant eun engrez skraporien all renet gant ar pennkadour Chillon, o deus kavet an tu da zouara war hor ribl ha da galc'hia hor c'heoded.

" Abaoe eun nebeud deiziou 'zo ez eo boaz ar bevañs ganeomp hag e welen an dienez o tostaat pa ne c'hellomp ket kaout pourvez aus ar mîz, na dre zouar na dre vor, o veza ma'z eo kreñvoc'h an Normaned eget hor brezelourien, da c'hortoz ken hor bo ar skonzell a c'hortozomp a-barz hon emezien drugarezus, e vefe ret kas kuit ac'henn ar merc'hed hag ar vugale, pa'z o ganto eur galz aus ar boued hon aus ezomm aneaf da dalout betek m'hor bo bet an dizober aus hon alouberien griz.

" Hogen panaos hen ober pa'z omp gronnet didruez a bep tu gant eur c'helic'h difaout a glezeier hag a c'hoasfiou dir ? Hag ouzpenn daout hag e c'hellan fizicout war eur skor talvoudus a-barz keodedou Roazon ha Gwaned o deus grataet dont d'hon dieubi hag a zo oc'h en em aoza d'hen ober ? Eur strollad Roazoniz, diredet d'hor galv, en deus klasket, en aner, dont betek hor c'hêr gant karradou bitailh ha biou war droad. Siouaz ! kennet e voe gant an Normaned ha bremañ em aus son na gredfe ket pennoù ar geoded-se hag hor c'hevredidi all lakeat o brezelourien en arvar da veza flastret pa'z int daout a-benn da c'houzout pegen drastus eo gwall armoù an estrenien.

" Moarvat, prifs heul, e kavoc'h amzere ha gwall hardiz al lizer-mañ a skrivan deoc'h, ma ha n'am aus ket an enor da veza anavezet ganeoc'h. Ar menoz d'han ober, avat, n'eo ket diwanet annon aneaf e-unan, met sillet eo bet em sperec dre c'hraz santel trede person an Dreinded Sekr em aus pedet hep ehan d'am sklerijanna war ar gwella tu da zibrada ma fobl kristen diouz ar walenn spontus a zo koezet warni. Hag abaoe ez on kennezet gant ar spi e taoloc'h eur sêll a druez war geoded reuzeudik an Naoned hag o taoc'h, drugarezus, d'he dieubi, c'houi Gralon, roue kadm, heul ha didre'hus Bro-Gerne. Ma vonnit seveni ma goulenn, e lekyoc'h eno holl-vrudet ar re zigalon da geout fiziañs a-nevez ha d'en em voda dinden ho panniad klodus da argas heskierien bugale ar gwir Doue. Rak ouzpenn eun ober a drugarez a ray ho kleze nerzus o tont da zibaegna Naonediz, pa vo, hep mar, goude ma vo aot an trac'h gantañ, eun harz efedus da voutout ouz ar breizerien divodez da zis-trei a-nevez da daga hor c'heodedou hag an darnou all aus hon Arvorig ha da glask diskara anno relijion ar C'hrist, prizioc'h deoc'h ha din eget mabou hon daoulagad.

" Ra glavo ho kalon, eta, aotrou illur, ma fedann ankeniet ! Eur galv eo a-barz Doue, an hini a oar ervat rei digoll ha garedon da nep piou bennak a vez truezek ha karantacus ouz e nesa en drougeur.

" Ma ne dourvezfec'h ket asanti d'am goulenn, (Doue d'am miro diouz eun havelep kalonad !) bezit drugarezus, mar plij, da rei din ho respont raktal... Douger al lizer-mañ, ma c'hannad an ho kaver, hen digasfe din hep goueza, pa'z eo gwir e oar e vin war-c'hed aneaf.

" A-hand-all, ma taufac'h, dre c'hraz Doue, d'hor skoazella e penn ho kadourien, na vo ket ret hor c'hemenn din. Mirit neuze ganeoc'h ma c'hannad feal a vo talvoudus deoc'h d'hor c'h heñcha, a-dreuz ar vro ha da rei deoc'h da c'houzout e pe lac'h a kavoc'h hor c'hevredidi dare da vont d'hor c'h heul ha d'en em lakeat an ho kourc'hemenn.

" Gant ar spi ne chomoc'h ket bouzar ouzin hag e wellin, a-barz pell, ho strolladou niverus ha dispont o trac'hi an Normaned, e kasan deoc'h, ma breur keret, gant ma gwella anaoudegezh-vot ha, ma banno karradaka an eno an Tri Ferson, an Tad, ar Mab hag ar Sperec, a zo bet a-holl-viskoz hag a reno da viken en Neñvou ha war an douar.

Ho servichez laun a elavez, Carvinus, eskop an Naoned."

Pa davas ar chapelan da lenn, ne gomzas den er sal e-pad eur preded. Gwasket o c'halon, e c'hortoze tud al lez a komzja ar roue : nikun aneo n'en dije kredet disklerin e soñj arzozañ ha Gralon, skeet gant ar gwall-gelou amedo o paouez klavout, a braderie dilovar ha tañval e dal. A-barz nemeur, koulskoude : "Aotrouned, ma c'huzulierien poellek ha fur," emañ, "klavet hoc'h aus, evelon, ano aus ar reuzeudigez ez eo koezet anni Naonediz hag o eskop Carvinus. Hor galver a ra an den santel d'o lemel aus o stad truezus hag ar galv-se, a gradan, eo hini Doue E-unan. Rak-se, d'am meno, ne c'hellomp ket leuskel drasta didruez hor braudour a feiz hep o skoazella evel ma c'houlennont, anez beza dic'hraz e-kaver lezenn ar C'hrist a ra deomp goure'hemenn da skora hon nesa pe vez ar gwallour. Ouspenn, lakeat hon nerz hag hor preder da argas ha da zistruja an estrenien divodez-se a vo, evel ma lavar an eskop Carvinus, an em zifenn hon-unan ha mirout ouz ar beganiz da ziskara, a Bro-Arvorig hag e meur a vro all, relijion Hor Salver, hor frankiz hon-unan hag hini hon emezien gristen.

" Hag ali ez oc'h ganin, daout pegen poanuis ha tenn e vo hon trevell en eun telead dianavez deomp, da gerzout d'an Naoned da flastre en astud a laka he annezidi e ken bras arvar ?"

A-du e voe a-unvouez an holl gant ar roue hag emañ d'o zruga-rekaet ha da veuli o emroustet hag o nerz-kalon divrall. "A-benn tri devez, d'an diwezata," emañ c'hoaz, "e rankomp beza dare da vont en hent.

Kasit raktal, eta, kannaded war varc'h da gemenn ma urz d'hor pennkadourien. Ra ziredint emañ kerkent ha ma c'hellint, gant o zud, harnezat 'bvit ar brezel, o c'hezak hag o c'hirri leun a vevafs." Hag en-dre ma'z ae gouarnour ar c'has-tell da seveni e c'houre'hemenn, e kendalc'he Gralon da gomz, hireaz en e vouez : " Arack ma oa en em gavet lizer ankenius an eskop Carvinus emañ," emañ, "em boa groat ma menoz d'ober eur weladenn d'eun den leun a spered Doue em eus klevet komz eneañ gant ar vrasa doujafs ha karantez hag o garfen anavezout timat, o veza ma vez talvoudus bepred d'eun den eus ar bed ewaldon kaout darempred gant eur sent. Hag eur sant eo, e gwirionez, al leon Gwenole, abad manac'hti Landevenneg, ma kreden ar viud a red diwar e benn. Hogen ret eo din ampelle an deiz dudius m'am be tro da zivizout gantañ, pe ro Doue din eur gefridi c'hrevus da gas da benn hep gortoz pelloc'h.

Tri zekvet pennad

Emgann an Naoned

Tri deiz goude e kemere Gralon hag e arme penn an hent d'an Naoned. Kaer e oa an amzer, aval ma vez peurvuia e Breiz war-dre goul Mikael. Eur vorenn dano a c'holoe stanken ar ster Oded hag a steuzie a-nebeudou dre ma uhelne an heol klouar an oabl.

E penn ar gwardou a-rask, eur stroll marc'hegerien anao, emede Kadwallan war gein eur marc'h-brezel disper e bilpase dihabask. En e gichen, d'e vlenia war an hent dianavez, ac'h en em zalc'he war e jao diskuiz neuze, ar c'hannad naonedat a zigoss lizer Carvinus da C'hralon. Hemañ, Laodir e ano, selocue, tavedek ha gant azaouez, betouilh laouen ar pennstrollad yaouank o tezevelli deaf ar pegadou en devoa bet ouz an Normaned fallekr. Dre eo e oa da Kadwallan gant ar spi a darze an e gerc'henn ac'h adkavje Brenda, ar fulenn a blac'h a douelle dalc'hmat e galon hag e spered.

War o lerc'h e teue an arme, reffket gant urz ar strolladou niverus anoi. A bep eil bagadou kadourien war droad, skouedet hag harneziet skafv, o tougen armou a lies doare ha ment, aval kleszier, bouc'hili, goafio ha batarzou houarn ha gwarego, ha kouchou marc'hegerien a ouenn uhal a-c'haolied war vire'hed eus an dibab.

E-kreiz an engroez-se e varc'heke Gralon, harneziet ha gwisket kaer, e armou lintrus o skedi dindan bannou an heol, hag e jao herrus o tripal dindanañ. A bep tu d'ar zous emede e dierned, stipet kren deo her-vez o reff hag o finvidigez, en o zouez ar pennkadour-meur Leuhemel, ka-biten Ker-Iz hag unan eus ar walle brezelourien a oa d'an ompont.

Da c'houde e weled ar c'hirri, leuniet darn anao a varc hag a vevafs all ha darn e armou hag a venviñ brezel. Ha pelloc'h, o lostanne, ar gwardou a-drefv a ziwalle gant evez, ouz pep mastaal ha teol-gwidre, argerzedenn arme Bro-Gerne.

Di frisa o reas houmañ war-zu ar gevred a-dreuz eur vro goodet ha digompez, leun a waziedou dour e kammigelle ar bantrennou glas ha geotek.

Bep eur mare e save an hent a heulie war dorgennou peuzuhel golost a lann hag a vrug ha diwarno e wele oc'h en em astenn dirazi eun tolead ac'hon o kemerout liou flamm ha tomm an sour taolet war zeliou ar gwez gant ar regeost o ren hag an diskar-amzer o tostaat. Deare vat a oa gant an amzer ha pep kadour, mall gantañ d'en em gavout er pal, a oa laouen gant ar soñj eus an taoliou-kaer e oa mannet da ober hag ar preiziou talvoudus a gavje tro da samma gantañ war-lerc'h an emgann Hag, en o zouez, e save diouz tro ar gannarion o moueziou da embann ar c'huziou graet ganto hag o c'henvroiz ouz ar Saozon hag an Normannd villiget. Aoz vat, eta, a oa e pep gour hag e-gavret e kerzent gardis etremek al lec'h m'o gortoze ar stourm.

Pa voe en em gavet an heol e-barr an heol, e rajont eun horz da zibri. Na voe ket hir an diskuiz ha goude, kerkont, e kendalc'hjont da vale. A-benn ar mare da goania e voent e Bannaleg, goude beza treuzet eur c'hornad bro strujus e-walc'h ha peuz-poblet, annañ e meur a lec'h gounidou douar etil. E-touez annezidi ar plou-se e oa stank ar Vretoned hag eun digemer laouen e rajont da gadourien Gralon.

Antronoz a skoas an arme war-zu ar reter, o vont bepred gant an hent en em astenne dirazi, traef ha krec'h, betek ar goeded he devoa da zieubi. An deiz-se, ive a dremenas evel en darc'hent ha, diouz an noz, treizet ganti ar ster Elle dre eur roudour hag ar Skorf dre ar pont e zoug ha ano, e kampas e Henbont.

An deiz war-lerc'h, e tivizes Gralon ez aje an darn vrasa eus e varc'hegerien ar penn-erack, hep gortoz ar rest eus e dud, goustidikoc'h eget da gearzout. En o fenn en devoa lakaet Leuhemel a gase, evel kennad, da Batern askop Gwened. Ar punnkadour hag e vrezelourien war varc'h, douget d'an drip, a zigouzas abret dirak perzier ar gêr-se.

Leuhemel a c'houlennas gwelout an askop hag a zisklêrias deañ e teue d'e gavout a-barz Gralon, roue Kerne, war an hent gant e walle kadourien da skoazella Naonediz. C'hoant en devoa e vestr, emañ, da c'houzout pe zifroù a oa bet gant tad spered Gwenediz da skoazis an den santel Corvinus da vounta kuit eus an eskopti ar skraperien hor gwasko. Gant levenez hag o trugarekaat an Aotrou, e respontas an askop e lakeo savet kement den a youl-vat en devoa kavet an tolead evit ober ganto eur bagad brezelourien da gas da stourm ouz an Normannd. Duspenn an dud-se, Arvorigiz aneo, e c'hreatae Karadog, priñs eur meuriad breiziz dinnezet ar vro, rei e holl gadourien da greski an niver aneo. Daoust da se, a lavare c'hoaz Patern, e oa bihan o fiziañs e teuje an trec'h gant e gadourien o veza ma oa nebauc'h aneo eget eus ar Ronzoniz a glaskas digule'hie kêr an Naoned hag a voe trec'het gant an enebourien. "A-drugarez Doue," emañ, "na vo ket ar re-mañ evit talout hiroc'h bremañ p'en deus tourvezet Gralon, ar roue trec'h e pep lec'h, teurel eur sell a drez euz ma breur Corvinus hag e gristonien geiz. En e c'hourc'h-emenn a lakaimp hon tud, Karadog ha me, da vont d'ar peged a ziebou an Naoned

hag a faozo da vat, mar plij gant an Aotrou, ar baganed digar.

- Grit boda neuze raktal," eme Leuhemel, "ho tud ha re Karadog, rak meirout a ra a lec'hfemp ac'hann arc'hoaz da goulz tarz an deiz !"

Dioustu e kases an askop Patern kemenn a bep tu da c'helver ar re a oa en em ouestlet da skore Naonediz hag, a-barz m'en em gaves Gralon e Gwened a-dreuz eur vro baour ha fraost, e cant en em zastumet enni. Deut e oa Patern ha Karadog da ziambroug ar roue hag e rajont deañ eun digemer doujus ha karadeg.

Tramenet an noz ganto o kêr pe dost d'he mogerioù, rak ne oa ket eus ar re vrasa d'an empoent, e waljed arme Gralon, tud Patern ha re Karadog, ar re-mañ fouget dae da veza kavet kenvroiz a c'hollent komz ganto, o kuitaat Gwened, mannet da dizout ar Roc'h Bernez an deiz-se. Antronoz ne gavjont nep pont hag e tramenjont war c'henn gleiz ar stêr Willun dre eur roudour anavezet gant Laodir, servicher ha kennad an askop Corvinus, hag e keizjont da Saveneg. Eno, hervez Laodir, a tilent an em gavout gant ar strollad Roazoniz en em aczet a-nevez da stourm, daoust d'ar gwall stokadenn o devoa bet. Hag, e gwirionez, emedo ar gevradidise o pouez errount pe gavjont ganto al lec'h-se.

Kuzul a voe neuze gant Gralon hag an holl bennkadourien vras ha bihan diwar-benn ar gwella doare da argodi an Normannd e-keit ma ne vijont ket war evez eus ar re a sailhje warno. Divizet e voe e kemerje en arme eun devez diskuiz, endra ma'z aje Kadwallan, gant eun nebeud marc'hegerien dibabet gantañ, da spia gronnerien ar goeded vras.

Hefchet gant Laodir e-kreiz an noz tafval, e kuitas ar re-mañ ar c'hamp da ziskenn etremek kember al Liger hag ar stêr Erder. Er c'hour-nog da homañ, war he glann zehou, emedo, evel m'emañ hirio an deiz, eun darn vihan pe vèzkêr eus an Naoned, anavezet dindan an ano e Sant Similan a oa hini he faezon hag he gwarezour. Goude beza marc'hoknet a-pod pell e tapas Kadwallan hag a dud lein eun dorgenn a c'halled gwelout karter Sant Similien diwarni pe veze sklêr an amzer. Oa c'hortoz ar mintin, hag o veza ma oa gwall-defval evi arvesti ervat ouz ar vro, e rajont holl eur c'houk, war-bouez Kadwallan deuet gant an dezenn a fuilhe emañ an efvor eus Brenda.

Harneziet skañv, e c'hourgleav gantañ hepken, ac'h en em silas war droad, a-dreuz ar maeziou, etremek an takad ma kave deañ e oa lec'hiet ar m'èzkêr a glasko. Pa voe boazet e zoulagad lemm ouz tafvalijenn an draonienn, e chomas da glask toulla mantell an noz ha divinout patra e guze. En aner e voe rak, moarvat, emedo pell diouz an Normannd. Dalc'hor a eure da gentren, o tiwall da ober trouz hag ez ae war-raok. Neuze e klevas e fronnellou c'houez kreffv keuneud glas o tavi hag, eus a-drañv eur vodenneg haleg, e spuzmantas en noz ar c'hourc'hodou-tan enacuet napell diouz ar

mêzkâr gant ar c'hedourien norman eno oc'h evesaat. E skourin a lakaas ouz an douar hag ec'h heñvelas deñf klavout ouspenn hiboud ar stêr, moueziou kalet o rei urziou en eur yez estren na oa ket al latin.

Emedo Kadwallan gant ar menoz d'en em rîpa tostoc'h d'en tantadou, pa zercouas an deiz da c'houlouoi. Neuze e soñjas na vije ket fur kas da benn eur seurt mennad rak, ma vije gwelet gant an enebourien, hep mar, e teujent da c'houzout e oa arvar evita hag e rajent o diarbennou d'en em zifenn. Arabat eta, e vije ar baganed war ziskred, anez ober gasu ouz an arseilh di-c'hortoz emedo Gralon o tarevi outo.

War-hed eun nebeud kammejou diouz ar pennstrollad e oa, e-tal eur vodennad stank a strouez hag a zrêz, eur feunteun puilh an dour e rede diouti d'eur bradenn. Eur wenodenn, darempredet kalz diouz ar gwel anei, a zeuz d'ar feunteun, ar pezh a reas tro da Gadwallan da gredi e veze hauliet alies gant an Normaned o tont davit dour. Hag heñ da guzat e-touez ar strouez, e-ser gedal e tостаje unan bannak ouz an eienen.

Nebeud goude e verzas en emc'houlou, o tant gant ar wenodenn, teir macuez o tougen bep a bad pri war o fenn. E galen a sailhas ennañ, boamet ha trefuet holl, pa anavezaz ar vrasa aneo, Branda an hini a gare, ken kenodus bepred hag eun douez, o vale e-kreiz etre an diou all. Garmet en dije ar breizad yaouank e levanez divent, ha dilammet e vije da samma gantañ ar goantenn gevrinus, peneved e redje he diou gavandadez da glask skoazellet doi. Hag e chomas motet en e doull, e-keit ha ma leunie ar marc'hed o fodou ha ma tis-troent war o c'hiz, di-c'houzvez da veza bet spiet gant eun anebour toust d'o gouenn.

Gant kerse e pellase Kadwallan diouz ar feunteun, rak deuz e oa ar mare da zistrei d'an dorgenn da severi e gefridi. Eno e kavaz e baotred oc'h arvesti ouz ar stankenn e-rak ma vije kuzat gant ar vulo'henn a save alies ouz ar stêr.

a-zehou da homañ ha dalc'het bepred gant Naonediz, e weled mêz-kâr Sant Similian, gronnet war ar riñl gant ijincou-brezel ha tinellou an Normaned reñket o furn eun hanter-loar. Ar pont-koad savet etre ar goaded hag he mêz-kâr ne oa mui aneañ, diskaret hep mar gant ar breizierien.

A bep tu d'al lec'h ma oa bet en em astennet e oa c'hoaz daou dour prunn en o seo, kadourien enno d'o difenn. An hini en em gave war ar riñl all d'ar stêr a oa tost tre da borz kêr an Naoned. War lez an dour, etre ar stêr Erder hag eun aridennad tessennou o oa lec'hiet ar goaded hag, a-dreñv he mogerioù, war dor an ugelennou se, e spurmantod taitennou diniver an enebourien hag o zontadou noz o tivogadi.

- War varc'h !" a c'hoaz-hemennas Kadwallan. "A-walc'h e c'houzemp bremañ da rei disoouzan da C'hralon aus deourou an takad." Hag e lammjent war o mire'hed da zistrei da gamp ar roue. A-hed an hent, prederiet gant e wall youl da vrenda ha tefval e dal, e voa Kadwallan hogos dilavar.

War-dro hanter an endervoz emedo ar spierien a-novaz e Savonag e-lec'h m'o gortoze Gralon. Digemerout a reas dioustu Kadwallan ha Laodir hag e c'halvas pennou an arme da zerc'hal kuzul gantañ. An daou spier a reas disoouzan d'ar priñs ha d'ar bennkadourien aus kement e devoa gwelet. Hogen na voa ket ano gant ar pennstrollad aus Branda an Normaned hag a-walc'h e kavaz ober meneg hepken aus teir macuez gwelet gantañ o lounia o fodou e-tal ar feunteun. Kement-se a lakaz anet e oa mennet an alou-bourien da ober o dinnez ar vro, p'o devoa digaset o gwirgez d'o haul. Hag ar c'halou grevus-se e greskas ar gevredidi o c'hoant d'o argas kuit, rak arvarus bras e vije deo o c'haout da nemeziñ.

Satu emañ ar pezh a zivizas Gralon hag e guzulierien : an darn vrasa aus an arme a dreuzje ar stêr Erder dre eur roudou anavezot gant Laodir hag a yoje da guzat a-dreñv an torgennou ar reter da gêr, da c'hortoz ken a vije deuz ar mare da argadi. E-keit-se e tiskennje Leu-hemal ha Kadwallan gant an darn all war-zu mêz-kâr Sant Similian da c'hadal, war bouez nabut dioutañ, ar gourc'hemenn da sailha war an enebourien en em gave en tu-se d'ar stêr. An diñsa tra, avat, a oa rei da c'houzout da Naonediz, dre guz d'en Normaned, e oa digouezet Gralon da lakaat sevel ar sesiz diwar gêr ha pedavare paga gant an emgann a-unan gant tud an eskop Carvinus. Mernout a reas, evelkent, e sailhe an holl, a-gevred, ha war eun-dro, evit flastra an arme anebour da vet an aun teul kear.

Neuze ec'h en em ginnigas Laodir da ober ar gefridi : diskenn a raje ar stêr hag, en noaz-piteran, ez aje en eur neufi, ha douget gant red an dour, betek porz ar goaded. Tantadou bras a lakañ enaoui war vogerioù ~~ar goaded~~ ar goaded da gemenn e vije deuz pred ar stourm.

Eval-se, diou novez diwezstoc'h, e voa savonet, penn-da-benn, kement a oa bet divizet. War o fouezig, e oa nasnet an daou rann-arme ouz ar pal lakaat da bep hini aneo ha, war-bouez eul leo bale bannak diouto e chomjent da ziskuze eun devez leun, e-ser en em noze evit an emgann a dleed kregi gantañ pa vije hanteret an noz war-larc'h.

Pa zeuas ar c'houz-se, emedo an holl dindan an arme, dare da sailha kerkent ha ma waljent flammou an tantadou o sevel a-oc'h da vogerioù an Naoned. E-keit-se, ive, an devoa kaset Leu-hemal eur c'houc'h brezelourien da zismantza bagou an enebourien evit mireut ouz ar rou-mañ da dac'houc'h pa zirellfe warno ar bec'h. Hervez ar paz en devoa lavaret Laodir e oa bet sachet ar bagou war diñzennoù ar stêr Ligor ha na oa den ouz o diwall pa ouie ar breizierien na c'helle ket Naonediz o skrepa diganto. Arvarusoc'h e vije bet deo o c'haout ar stêr Erder, rak eno tost da vogerioù ar goaded, ne vije ket bet diouz bras da gêr o zana en eur stlepel outo, gant o birou, pellennou stoup entanet bet soubet en eoul

Pa savas, en noz tefval, flamm ruiz an tantadou, e c'helvas ar c'hedourien norman o c'henvroiz kousket da sellout ouz an arvest iskis o sebez. Eoun d'an ampoent e klevjont trouz pounner eur varc'hekadenn hag, a-barz m'o devoe amzer d'en em arma, emedo warno Gralon hag e gadourien war varc'h. Spontus e voe an drailh e-touez ar breizerien tapet diouz eun tu gant arme ar roue ha diouz an tu all gant brezelourien ar geoded diskennet diwar o mogerio da gemerout perz er stourmad. War an dachenn sklerijennet gant an tantadou, e waled ken sklêr ha ma vije bet an heol o para. Hag a-dreuz en-groez an enebourien e rede dibaouez an arsaillerien o strawa ar maro en-dro deo. Koulskoude, eur baged Normaned, o mestr Chillon en o fenn, a glaskas enebi hag a stourmas kalonek d'en em zifenn hag a eure kalz droug zoken d'ar re o argade.

Nauze e c'hoarvezas eun dra ken sebezus ma kouezas an alvaon war ar stourmezien ha ma ehanjont d'en em ganna. Eus iliz Sant Similian a oa en tu all d'ar stêr Erder hag hini ar sent Donasian ha Rogasian lec'hiet pellik a-walc'h diouz kêr, e-kreiz ar mêziou, e oa savet e barr an oabl daou vagad tud gwisket e gwenn, bep a c'houlapouenn war alum ganto, o vont e-kreiz eur sklêrijenn eus ar skedusa, da geja a-uc'h ar stêr-se ha d'en em zastum en un engroez diniver. E-pad eur predad e kanjont ken dūdus ma sabatujont an holl ha ma paeuzas kement trouz e maez ar stourm. Da c'houde ec'h en em rannjont hag e tistroas pep hini, sioul meurbet, d'al lec'h ma oa deuet. Kannerzet gant ar weledigez estlammus e sailhas a-nevez ar gevredidi war an Normaned gwalgaset. Anet e oa deo emedo Doue a-du ganto hag e kannjont, hep mæz, ar baganed fallakr.

E-keit ha ma anebe Chillon hag e baotred outo, e skare kuit, diouz ar biladeg, o gwragez spourcnet holl hag o tougen o bugale etre o divrec'h pe oc'h o sacha d'o heul. Pailloc'h, avat, ne c'halljont mont, dre ziouer a skafiou hag a vagou hag e chomjont eno, stravaget hag o wea o daouarn d'an nec'h da c'houlenn skoazell Thor, o doue.

Kenderc'hel a eure c'hoaz an emgann eun nabeud e-kreiz skrijadennou ha klemmou ar re c'hlozet, daoust ha ma ouie Chillon e oa enez dea enebi hiroc'h. Skoet gant ar weledigez varzus, en devoe kollet kalon hag e lavare outañ e-unan ne dalveze mui herzel ouz ar gadourien gristen p'en devoe o Doue, galloudsoc'h moarvat eget e hini, roet deo eur merk ken splann e vijent trec'h. Nauze eo e paras e zaulagad war C'heralon na anaveza ket, met a gemeras kerkent evit er pannaadour meur ken meurdezus e oa o neuz hag, en eur etlepel dioutañ e armoù, e kuitas ar veskadeg da vont davetañ. Dirazañ e plegas e c'hlin hag e lavaras e latin fall e c'houlenne kodiana ha beza badezet. Meur a hini a ententas e gomzou hag o disklerias d'ar roue a roas urz da gregi e Chillon. O welout ec'h en em enzeve trec'het o mestr, a teolus an Normaned all o armoù d'an douar, e-keit ha ma c'houc'hemenne Gralon la-kaet diwez d'al lazadeg. Ha setu penaos ec'h echuas an emgann war c'hilann

gleiz ar stêr Erder.

En tu all dei, e-keit ha ma padas an darvoudou hon eus klasket teplenni, ne oa ket bet Leuhemel ha Kadwallan diegus da hada ar maro hag ar freuz e-touez ar breizerien. E penn o marc'hegourien o devoe sailhet d'an tuz ha diskaret kement gour a gavjont dirazo. Buan e voe flastret an estrenien, war bouez eun nabeudig aneo a gavas an tu da duc'hout, Kadwallan hag o floc'h war o lerc'h, e-keit ha ma lakas Leuhemel tana en iji-nou brezel savet dirak mæzkêr Sant Similian.

N'emedo ket Kadwallan kement e chal da laza an duc'herien ha da adkavout Brenda, ha setu ma lakas muoc'h a broder da glask houmañ eget da redek war-lerc'h ar re all. Goude beza furchet er c'hamp diamantrêt ha tre-war-dro dea, e tiskoshas ar vaouez e-kreiz strouez ha drêz ar founteun, roget ha dilhad, krabifaset he dremm ha fulhet ha rouestlet tuezus ha fennad bleo kaer. Skoelfet e oa ha daoulagad gant ar spont, ha, pa vonnas Kadwallan ha briata, e laoskas eur gradenn ankeniet hag a kemeras an tec'h. Hogen ne deas ket pall ha pa voe tapet a-nevez gant he skreper, e lavaras hemañ d'e floc'h : "Salaou, Meriadeg, din-me eo ar plac'h-mañ dre ar gwir a re din warni lozenn ar brezel. Den nemeton, eta, n'ho fer-c'henna ha, gant eun e klaskfe unan all bannak he lomal diganin, ez i d'ho c'huzat d'am c'hêr, ar C'hastell-Du, da c'hortoz ken e tistoin d'ho c'hovout. Bez doujus hag eveziek an he c'hafver ha diwall e tec'hfe diouzit, pe e lakafes da vuhez an arvar. Pa ne c'hellan ket dilazel Gralon dioustu, ha eo a rank mont ganti. Laka ar plac'h war gain da jao ha kemer ma hini. Setu eur yalc'had aour evit ober an hent ha, bremañ, karz ganti hep goueza pailloc'h na koll da amzer. Ma vez zet e stagi ar vaouez war zibr ha marc'h !"

Rektal e santas ar floc'h ouz e vestr ha, goude beza graet da Vrunda sevel war he loen ha liammet hemañ ouz e hini gant lerc'enn ar c'habestr, e stagas gant penn an hent etremek Kerne.

E Sant Similian, war ribl ar stêr, e kavas Kadwallan ar pannaadour Leuhemel ha Laodir, treuzet gantañ an doue d'o c'herc'hat, o sammas en e vag. Kemenn a eure deo o devoe gourc'hemenn a-barz Gralon d'en em gavout gantañ hag ar pennvrezelourien all en iliz-veur aloc'h m'o gortoze an eskop Cervinus da gas eur bedenn a drugarez da Zoue ha da gana an "Te Doum". P'en em gavjont anni, e oa goulaouet skedus an iliz, an he c'hreiz ar roue hag e uhelidi ha pennou bras e gevredidi. E goueled al lec'h santel, chadennet o daouarn hag eveziet gant gwardou Gralon, e oa bodet pennvrezelourien an Normaned en dro da Chillon; andre ma pede Cervinus daoulinet dirak an aoter vras, e gabell eskop war o bann, e gemoll en e zorn hag e veleien a bep tu dea.

Birvidik e voe ar pedennou ha meurdezus ar c'henn a dregornas dindan bolz an iliz. Fouget deo ha barr e c'halonou gant al lerc'h da

veza bet trec'h hag o anaoudegezh-vañ e-kefver Doue an armoù, e veule Nao-nediz hag o dieuberien an Aotrou galloudek en devoa o skoret ken mat, andra ma roe deo an eskop e vennoz.

Pa voe diwez d'al lid, e c'houlennas Chillon kaout notre de gomz ouz Cervinus. Ha kaset dirazañ e lavaras : "Beleg meur ha priñs uhel kristenien an Noaned, ni hag a gredet skrapa da gêr digant a zo bet faezet dre ar burzud a eure da Zoue da warezi ha da ziwall da gooded diouzomp ! Barrekoc'h eo bet e skor ez kefver eget hini Thor, am boa pedet, koulskoude, d'hor c'henniferza, me ha ma zud. Heñ eo ar c'hrañva, eta, ha rak-se, ma vennit ma selaou, lakaat da redok war ma zel an dour ma vez globiet gantañ ar re a c'hoanta dont da veza kristen. Grataat a ran, diwar vremañ, beza dizrouk e-kefver ma nesa ha beva gantañ e paoc'h !"

- Sevenet e vo da c'hoant," eme an eskop, "hogen a-raok e tleaz doski lezenn an Doue-se a fell dit anzav da vestr. Me eo a roy dit ar gelen-nadurez-se ma-unan."

- Bannoñ deoc'h, den santel," a gendalc'has Chillon, "ha pa'z eo gwir ac'h asantit ma digemerout e-touez ho kristenien, ha pedan hag e pedan ar roue a zo emañ geneomp, da lakaat klask din Brenda, ma gwreg, a oa chomet en tu all d'ar stêr hag a vefen laouen o welout o tigemourout ar vediziant a-gevred ganin."

Ar c'homz-se, distaget a vouez uhel, a voe klevet gant an holl. Ne voe ket nemeur o teurel evez outo, met Kadwallan, diwidre bepred, a c'har-mas, taeret ha brouezet, da Chillon : "Norman, komet ha trec'het out bet, rak-se ar vacuez n'eo mui dit-te ! Me an hini eo a zo perc'henn dit ha n'he fiaoui biken ken !"

Skodeget a voe an holl ha, war c'houlenn Cervinus, e c'hourc'hemennas Gralon d'e bennstrollad daskoni o bried da Chillon. Kadwallan a nac'has senti ouz an urz hag a lavaras dichek d'ar roue n'en devoa nep pezh d'he lemel digantañ a-onep ar c'hiz a roe da bab kadour ar gwir a berc'hunniez war gement preiz a roe ar bruzel diwar goust eun enebour.

Ar vuanegezh a eure da C'hralon taeri hag, o sevel diwar e gador, e krias kounnaret : "Kadwallan, den disleal e-kefver da briñs, e pe lec'h emañ ar fealded a dleaz din, ma hag am eus bet ar vadolez d'az sevel en eur reñk uhel ha laosket da vuhez genit pe zallezjout beza lakaet d'ar mare goude drouklez Donwall, da gile ! Ar goulenn am eus graet ouzit a eo dre zoujañs e-kefver an eskop santel Kerminus ha dre drouz ouz eun danvez kristen nevez en am lakaet dindan e vali hag en e c'hourc'hemenn. Rak-se, pa'z out, hervez hor boaziou, gwir berc'henn d'ar vacuez skrapet, lavar din pe zigoll a vennez kaout evit he leuskel da vont en he frankiz."

- N'emañ ket da warza pa fail din he mirout din-me ma-unan !" a c'har-mas Kadwallan gant droug.

- Ma diemgeañs a roz, preñv binimus a zo ac'henout !" eme C'hralon, garo e vouez. "A-barz pell e weli petra a gousto dit ober fae war da roue ! ... Gwardou, pegit ennañ hag erc'h-heñ raktal !"

A-raok ma voe amzer da seveni urz ar roue, e oa dilemmet Kadwallan, e glaze noaz gantan en e zorn, betek an nar-dal. Evel eun tourc'h gouez tizet gant flemm eur bir, en devoa gwintet dicoutañ kement gour a oa war e hent. Ken trumm e oa sailhet e-dreuz an engroez ha ken sobatuet ha sobatet e oa an holl, ma ne glaskas den, war an trol, mirout outañ da dremen.

War al leurgêr, dirak an iliz-veur, emedo mire'hed an diarnod diwallet gant eur mavel. Diframma e eure ar pennstrollad reñjenn unan aneo digantañ hag, o lammat war gain al loen, o kemaras an tec'h d'en deoulenn ruz. Eoun d'an empoent e tirada, eus porched an iliz, Gralon hag e gadourien, ar re-mañ mantret ha gwall-skoueriet gant disantidigez ha diemgeañs Kadwallan e-kefver o friñs. "Kerneviz," eme ar roue, glo-zet e galon, "test oc'h bet eus viloni ho trubarderez ar gour die'hrad-se am eus karat hag enoret betek-heñ ! Satu ar c'haredon hag an anaoudegezh am eus digantañ, war-lerc'h ar madoberou ez eo dleaz din. Ken bras fallentaz na chomo ket digastiz, rak eur skouer fall e vefe d'am sujidi. Kent a zo e c'hourc'hemennan ma vo tapet, kerkent ho ma vo gallet, ha digaset din da veza barnet didruger. Ma venn enebi hag en em zifenn, re vo diskaret didruez, evel eul loen fero !"

Dioustu e lammes eun ugent gward bennak war o javed hag int d'ar red war-lerc'h Kadwallan, stauziet a-benn neuze e-zirek o deoulaged.

x

x x

Tri devez goude, emedo ar pennstrollad tost da Goed an Neved, war an hent e gaso d'e gastell lec'hiet ar C'hap-Kaval, war eur bag douer uhel peuz-kalc'hiet gant ar mor.

War evez bepred ouz ar gadourien kaset, hervez ma krede, gant Gralon war e lerc'h, en devoa karzet hep ehan, war bouez eun nebeudig arveziou da rei amzer deññ ha d'e verc'h da ziskuiza. Dalc'hmec e soñje a Brenda hag ec'h en em c'houlenna, gant ankrez, hag hen e oa digouezet hep droug en e gastell. Praderiet e oa ive gant an diarbannou an dije da ober avit en em c'hoarn hag en em zifenn diouz ar roue. Kement-se, emañ outañ e-unan, na vije ket droust e c'hilloud p'emedo e annez an

eul lec'h ken diuas-all da gemerout.

A-greiz ma ruilhe edarre ar soñjoù-se dre a spered, oc'h hefalvas daaf klevout trouz eur varc'hekadenn a-dreñv o gain hag hef da drei e benn da sallout ouz ar re han heuilhe. Oc'h anavezout gwardou ar roue, e lusk kenta hen alias da redek daveto ha d'o diskare a daolieu kleze, met o welout an niver aneo, e rankas anezv na vije kut gouest d'o zruc'hi hall war eun dro hag e klaskas pellast dioute o lakaat e varc'h d'an tuz horra. Kentret betek ar gwad, e tec'has homañ gant kement a diz hag eur morskoul o spluja war eur pesk, hogen skuiz bras e oa al loen ha, bep eun tamm, e kelle tachenn gant mirc'had ar gwardou, deoust d'an taolieu dizement a roe daaf e vestr.

- Amañ eo ret neu pe vouzi !" a youc'has Kadwallan, p'en em gavas daou varc'heger, unan a bep tu daaf, dispak o armou ganto hag o kemenn daaf o devoa kefridi, a-berz ar roue, d'e herzel. Gant daou daol kleze, ken prim ha diou luc'hedenn, o diskaras d'an douar dirak o c'hevandidi heget gant seurt mestaolieu. "Harao war an trubard !" a c'hamzont en eur vouez, en eur c'horrekaat koulskoude dboulamb o jaoad, "harao war an disleñ ! Bec'h daaf ken na vo lazet !" Ha, ken trumm ha tra, e klevas ar pennstrollad ar birou o c'houibanat a bep tu d'e ziskouarn. Plega a eure e benn, met eur saez, bannet a-dost, a drezas e skoaz hag a chomas en e gorf e-kichen e galon. Ha, paneve e kavas peg e moue e loen e vije kouezet diwarnañ, ken gwas e oa bet ar gloaz ha kement ar gwad a rede eus ar gouli.

O verzout e oa skoat d'ar maro ha dinez da zalc'her ar rafjenn en e zaouarn, e laoskas Kadwallan o varc'h da vont evel ma plije gantañ. Homañ, hefehet moarvat gant e skiant-natur hag o c'houzout, hep mar, a oa gwall-nozet o vestr ha na oa ken nemet klask gwarez ha repu daaf, a sailhas hep termel, war-zu ar c'head. Oc'h e welout o kuitaat an hent, e kerzas ar gwardou da zispann e roudou, bepred o tenna war Kadwallan gant o gwaragou.

Neuze, eus ar vodenn ma oa en em dennet enni da evasant ouz ar redadann spouronus, e tiskoachas a-daol trumm, dirak ar gwardou, goude ma voe set an tec'her e-biou daaf, eun den bras ha treut o tenna d'eun diougner eus an amzer goz, hir mourobed e vleo hag e vazo ha gwisket gant kroc'hiou loened.

- War ho kiz !" emañ, rust e vouez, d'ar varc'hegerien. "War ho kiz ha buan, rak emañ n'oc'h eus nep gwir da louskel gwad da redek ha pa vije, zoken, dre urz Gralon e-unan !"

- War-rook bepred ha diwall da skasoù pe e vi flastret geneomp !" a vlefjas mestr ar gwardou o toulammat, e penn e dud, war ar wenojenn striz.

Eul lamm a eure, dispont, gour ar c'head ouz penn ar marc'h ha, peg ar c'habestr, hen redias da chom a-sev, hag, aval-sa, da stoc'ha ar wenedenn ouz ar re all war e lerc'h. E glaze savet ar vann, e krias ar gour armet, kounnaret hall : "Picu out-te, hailhon a zo oc'h'anout, pa gradez klask mirout e kasfemp da benn ar gefridi hon eus bet digant ar roue, hor mestr ha da hini ?

Loosk ma loen da vont, pe e faoutin da benn ouzit !"

Peg ar c'habestr bepred, a respontas, dinac'h, an den iskia :
- Na sko ket, marc'heger, rak ouspenn melloz Doue, e kouezfe warnout hini Gralon ! Al lec'h-mañ a zo bet roet d'ar penedour dizellid ma' z on, din-me Ronan a Iwerzon, gant da roue e-unan. Eul lec'h sakr eo, eur minic'hi da rei bod, gwarez ha digemer d'ar re reuzudik, betek d'an dorfetourien ha d'ar re zisent ouz lezennou ar prias. Den, hep ma notre, na c'hell lakaat e dreid ennañ, na gwardou Gralon, nag haf e-unan zoken. Distroit, eta, war ho kiz, pe keuz ho pefe war-lerc'h ha ma laoskit da vont war-dro an hini hoc'h eus glozet p'en deus azomm oc'h'anon hep mar."

Ar gwardou, goudroc'het gant narz marzus komzou al loen hag ar santelez a bare war e zremm, a sujus daaf, goude beza kuzuliket strezo. Klevet o devoa aneo eus Ronan hag eus ar minic'hi bet roet daaf gant Gralon hag eun abag mat a oa dao d'en em denna kuit.

Larkoc'h er c'head a oa kouezet Kadwallan war an douar, diwar goin e jac. Emedo bepred en e skoaz ar saez hir he zrezas, anezi eur skilhenn ivin lemm ha kalet. Ken drouklivet hag eun den maro e oa ar pennstrollad hag ar gwad a rede eus o c'houli e boullade dindennañ.

- Bugel koez !" a drezas al loen oc'h anavezout ar pennstrollad, "e pe stad reuzudik az kavon-me emañ ? Ret eo lemel diouzit, rak-tal, ar saez a zo sanket ennout, deoust pegen skrijus e vo an droug a c'houzañvi, anez e chomfes da ziwada betek ar berad diweza."

Eur wezienn vras, o tarza en greiz, a laugna o c'henou d'an tec'her hag a redas pann-da-benn e algez war e vrusk. Gant bec'h o tistagas eun nabaud komzou : "Ne dalvez ket kemerout preder ganin," emañ, "tud Gralon em c'hilask da beurleza."

- O c'haset em eus kuit, ma mab ! Bez dinac'h diwar-benn da vuhez : nep torfed no vo graet er minic'hi-mañ, na c'hell na roue na den all lakaat troad en douar ennañ hep ma notre."

- Ne varn ket din pa'z an da vezvel," a valbousas Kadwallan en eun huennad. "Torret eo ennon neudennou ar vuhez."

Ar c'houzenn a zivere diouz e dal, hag eur c'hleourann wadok a zeue dalc'hmat da c'holoi e ziwsez.

- Ma mab," eme Ronan, o welout e wasas d'ar glozied, "a-barz nemeur e vi dirak lez-vern an Aotrou. En em soz arvat da vont di pa 'z out eur pac'her bras, evel ma oar an hall. Anavezout a ran an droug a rajout betek an deiz ma voes klozet e toullbac'h Kemper a lec'h ma oan kerc'huet ma-unan. ... Anzav brunañ euzin kement tre c'hevoue a rajout abaoe ha, gant keuz, goulenn ouz Doue an disemm eus da hall well-oberou

hag e roin dit an absolvenn."

E-pad eur predad barr, ec'h adkavas Kadwallan eun nebeudig nerz : "Lean", emañ, "ar poz az pos diouganet din a zo deuet da wir. Deuet mat o oan da C'hrañon en-dro ha ma c'hary a bennstrollad am bou digentañ adarre pa zivizas mont da skoazella-Korvinus, eskop an Naoned, gronnet en e gêr gant eun arme niverus a Normaned. Flastra a rejomp al livastred se ha, pa voe echu en emgann, e skræpis Brende, unan eus ar merc'hed a oa d'o heul, an hini a goren hag am eus komzet deoc'h anei a toullbac'h ar roue. Priod eo da Chillon, pennkadour an Normaned, a zo o paouez goulenñ ar vadiziant hag en deus pedet Gralon ma vije daskoret deafl e wreg. Nac'h a ris hen ober ha setu perak emañ war ma zremenven, o tiwaska poaniou garo ..."

- Ma mab karet, " a lavaras Ronan, "eur c'hoariell ez out bet etre daouarn Aerouant an orged hudur hag hini ar vrazoni hag an disentidigez. Ha glac'haret eo da ene gant ar c'herse da veza diamegafset Doue o terri E lezenn santel ? Diskouez da geuz a wir galon hag en devo Hor Salver truez ouzit !"

Start e oa d'ar pennkadour kavout e anal ha barroc'h-berre warnañ, e lavaras koulskoude :

- Burzuduset gour a zo ac'hanout, lean ! Bremaik, ha me d'en douer, e oa ma c'halon leun-barr a gasoni ouz kement hini en deus enebet ouzin da gas ma gwall-youlou da benn ! Bremañ e silez enni eur mor a beoc'h gant da gomzou frealzus hag e nij diouzin an drouguez fallakr. Kouz am eus d'em droug-oberou, Ronan, ha dreizout e pedan Doue da lemel E valloz diwarnon ! ..."

Pegat e oa ar roc'honell an e c'houllafachenn hag, andro ma leoske e huanad diweza, e ros deafl penedour Koad an Neved an absolvenn.

- Doue d'az tigemere en E Varadoz, " eme al lean, "pa n'eo ket mennet gantañ e varvjes e fallagriez da bec'hed !"

E-heiz an darvenn dosta, e toullas eur bez da gorf Kadwallan ha bem-dez, da c'houde, ne fazias ket da zont da bedi warnañ.

o

Pevarzekvet pennañ

An abad Ewenole

Eun nebeud bloaveziou e-raok ma tilastras Gralon hag e Vreiziz e Kerne, e oa deuet da zouara, war aod hanter-noz Arvorig, an eul lec'h anvet Brec'hag abaoe, eur pemp pe c'houec'h bag o tougenñ ar penn-tiern Fragan, e diegez hag e sarvicherien.

Fragan, eun den kaer ha dispont hag unan eus kadezma brezalourien Breiz Tramor, a oa kenderz da Gadwin, eur brenin eus ar vro-se. Anavezet ha meulet dre holl, en aog d'e gurieu ha d'e daoliou kaer a-enep d'ar Zaozon alouber, e rankas Fragan kila dirazo eun deiz, gant an dornadig kadourien a oa gantañ. Tapet etre an enebourien hag ar mor, e voe ret dezhañ ha d'e wizienn, kuit da veza flastret, dont da glask repu en tu-mañ d'ar mor a zisrann Enez Vreiz diouz an douar bras.

Oivent e oa keuz an dec'hidi da veza bet kennet ha rediet da zivros, goude eur stoum hir ha kalet, ar pezh o mezekae betek gouled o c'harc'henn, daoust dao da veza bet trec'het nemet dre ar niver eus o enebourien. E deon e galon, koulskoude, e vira ar penn-tiern brudet ar spi da gavout, e Bro Arvorig, eun tolead didrouz ha didud e-lec'h ma raja e ziazez hiviziken gant e wreg, e vugale, hag an dud feal han heuilhe. Salo e oa eun darn vras eus e binvidigeziou, ha, gant ar skoazell a rojent deafl, ec'h adsavje e-nevez eun notecuniez par d'an hini emedo o paouez koll.

Er gevred d'al lec'h m'o devoa graet o diskenn war eur ribl diannavaz deo, e kerkas an dec'hidi a-dreuz eur c'hornad douer strujus, douret gant ar Ster Goued hag ennañ takadou koadet ha tachonnoù druz ha geotek. Er c'horn bro-se hag e voe galvet Ploufragan e-barz pell, eus ano ar penn-tiern, eo e rajont o diaze. Euan e lakajont buhez arno, o tiferosta douer da gaut ed d'en em vago, o sevel marc'hed ha biou hag o vesa bagadou deved a groske bep bloaz an niver arno. Bep eun tamm e kreske ive an niver eus tud Fragan, rak genal a ras bugale deo, ha c'houec'h e oa beva dindan

gwarez eun aotrou ken brokus ha ken madeleuz hag heñ.

Gwenn, e wreg, a oa eur veouez a zoujafs Doue ha leun a berziou mat. He holl breder e oa karout he fried hag he bugale hag ober eus ar re-mañ kristenien wirion ha gredus. Pevr bugel aus ar c'haera he devoa, tri mab hag eur varc'h. Ar vibien a anved Jakud, Gwezeneg ha Gwinwaloc, deuet da veza Gwenole, hag ar varc'h Chreibia pe Glervia.

War a gred skrivagnerien 'zo e oa Jakud, Gwezeneg ha Gwenole brou-dour gevell o veza ma'z eo bet lesanvet o mamm Gwenn Teir Bronn, pa lavar daer e roas Doue dei eun deirvet bronn d'o maga war eun dro. Hogen fozia a zeont pa'z eo gwir e voe genet an daou henc e Enoz Vreiz, padal e teuas Gwenole er bed nemet goude m'o devoa kuitaat e gerent o bro c'hendik.

Dre ma teue korf hag oad da Jakud ha da Wezeneg, eur c'halvedigez santel o sache war-zu Doue hag ez eijont, gant ar venec'h, da ren eur vuhez a bedenn hag a binijenn. Diweztaoc'h ez eas ar vrud eus o buhez skouerius, o vortuziou kaer hag ar burzudou estlammus a rajont hag a teujont da veza lakaet e-touez ar vrasa sent o deus bet morse ar Vretoned.

Gwenn a vage en he c'halon ar c'haent birvidik e vija ive dibabet Gwenole gant an Aotrou d'E zervicha e stad sakr ar velegiez, e-touez al leoned. Fragan, avat, a oa mennet d'ober aneaf aur c'hadour barruk war skiant an amou hag eun uhelied eveltaf da gemerout penn e bloe war e lerc'h. Met, daoust da bedennou e bried ha da re e vab yvouanka, youlet da heulia ar skouer a roe deaf e zaou vreur, e chomas divrall menned an tad, eur c'hristen mat aneaf koulskoude. "A-walc'h", aneaf, "e oa beza roet da vab da Zous" hag e falveze delec'her gantañ an trede da virout e ano hag e lignez evit ma ken-dalc'hje e c'hlad da gnot bepred eur mastr eus e vad. Aheurtet kronn en e zofj, e nac'he ouz e vab e aotre da zevoni a venoz santel.

Doue, avat, en devoa taolet eur zell war ar c'hrouadur hag, eun deiz, p'emedo Fragan, war varc'h, o zedek e zrouzour, e savas eun arne ken gwas ma voe spouronet holl ar gour dispart o oa aneaf. Kement e skede al luc'had d'al-lus a vrizelle an oabl tafval-zac'h, ha ken trouzas e oa an talmadou gurun o krozal enkreuz, ma pennfolles ar jao ha ma tiskaras e vestr d'an douer. A bep tu deaf e wela Fragan dorvennoù kantvloaziek o koueza a-stok o zrou-jenn, pilet gant ten ar foeltr o faoute etru meur a damm, azalek an nec'h betek an traoñ. Hag e tarbas d'ar marc'heger beza flastret gant unan aneo o tont mell-divell d'an traoñ war-bouez nebaud dioutañ.

Ken stravaget e oa gant norz dinoulek ar barrad dirollet, ma teuas koun deaf eus Doue, o kredi e falveze d'ar Aotrou e gastiza o veza ma vire ouz e vab d'ar em oustla deaf. Glec'harret gant ar c'hauz d'e bec'hed, e c'hammas a-bouez-penn e-kreiz an trouz mentrus a roe an arne dichadennet :

- Doue meur, ma brehin ha ma aotrou gwirion, roit din, m'ho ped, ar c'hras d'ar em denna salo ac'hann, hag e rin al le da roi deoc'h ma mab Gwenole da viken ma'z eo kement-se ho youl !"

Kerkent e tavas al luc'had hag ar gurun, o tiskouez anet deaf e oa bet salouet e bedenn, hag e lavaras, anaoudek ha leun a feiz :

- Trugarezus oc'h bet em c'hefver, Aotrou, hag arc'hoaz e tal-c'hin d'am ger !"

E varc'h, ankounet e spont gantañ, a zistroas davetañ, hag e kerzjont d'ar gêr hep gouzeza pelloc'h. D'e bried, oc'h e c'hortoz hag eñkrezet gant ar zofj e oa c'hoarvezet droug gantañ, e tisplegas e oa bet gwarezot dre al le en devoa graot o c'hratant asanti da c'halvedigez e vab Gwenole. Ha Gwenn, barr he c'halon gant al levonez, a gemennas d'ha bugel, ken laouen hag hi oc'h he c'hlevout, e roe deaf e dad an aotre a c'hortoze en aner betek neuze.

Antronoz e kases Fragan e vab da Enez Lavred e zo e ober ar stêr Dreo hag han laoskas ano, e skol an den santel Budog a rone war eur strollad leoned bodet gantañ al luc'h digenevez se. Daoust d'e oad tenez ec'h en em reas buan Gwenole ouz e vuhez nevez, birvidik e galon antant gant gras Doue. E ene naonk a garantez an Aotrou a veze eun eurvad dispart deaf ar skoueriu e zantidigez hag a furnez hag ar galennadurez a vuhezgevez vat a gava e kavandenn ar venec'h.

Kufv hag hegarat e oa ar c'hrennard ha Budog hag e leoned en em stages outañ. Gwelloc'h maget e veze ageto ha, pa zavent, e-kreiz an noz hag abred diouz ar mintin, han laoskent da gousket ditrobas ken a zihene aneaf e-unan. Hogen c'hoantik e oa da heulia penn-da-benn ar reolann galet e diec an dud a binijenn-se euja dei, hag ec'h aspede an tad abad d'e aotre da blege d'al lezenn a oa hini an holl an enez ...

- Diweztaoc'h, ma mab, a lavare Budog, "pa vi deuet da c'hour ha kreff a-walc'h da c'houzavv hor pinijennou hep klañvel."

Endra ma kreske o gorf, e tigore ive, muioc'h-mui, e spered kenteliet bemdez gant o vistril gouiziek ha santel. E berr amzer e tastumas deskadurez talvoudus ken war greskoù ha kovrinou ar raliijon gristan ha war ar skritur zakr, ken war skiant ar bed hag en anaoudegez eus mab-den.

Tremen a eure ar bloavezioù ha Gwenole, deuet da zen, a c'hallas tafvo an dudi hag al levonez a roe deaf ar stad a venec'h. Bepred war evez ouz ar c'hoantagezioù direiz a glaske an Arouant c'houzez unnañ, izal e galon ha trugarezus ouz an hell, e save bemdez a-nebeudou e derezioù ar zantelez. A-barz pell e voe beleget gant Budog hag e teuas da veza unan eus e wella skoazellerien e penn menec'h Enez Lavred.

Bud Sant Padraig, abostal meur Iwerzon, en em skignet a-dreuz kristenizatioù ar broioù keltiek, a oa deuet betek aneaf hag e reas e venoz da vont davetañ. An tan karantezus enoquet en e greiz gant kentelioù keer an Aviel a zouge da brezeg komz Doue d'ar baganed ha d'an dud difeiz. Ar preder-se ne guitao ket e spered hag emedo war-nes komz eus e vanned d'an

tad abad p'an devoe, eun nozvez, eun hufvro e-kreiz e gousk.

Sant Padraig e-unan en em ziskouezas deñ, e-kreiz eur sklerijenn ken skedus hag hini an heol. Kaer meurbad e oa gwisket gant eur mintr hag eur ventell alsouret, eur gammell a oa en e zorn dehou hag, evel eur sichenn arc'hant, en em astenne eur goabrenn wenn dindan e dreid. Eur mousc'hoarz hagarat ha leun a vadelez a bare war e zremm o lintre gant ar ploc'h leouen e leunie.

- Gwenole," emeañ, "davedout e teuan, evel eur c'hannad, da gemenn dit, a-barz Doue, ez eus dre amañ, muioc'h e'hoaz eget e Bro-Iwerzon, tud reuzeidik ha pagened da vlenia war hent ar wirionez hag ar wir feiz. Dibab, e-touez da vredeur e Doue, ar re zellezeka d'az heulia ha kê ganto da gornog Arvorig, betek genou eur stêr oc'h en em deural en eul lann-voe. Eno a kevoc'h eul lec'h doreat da ober diazez an hed gwenn nevez a vo ac'hannoc'h, hag, a-barz nemeur, e wali, tu mastr ar ruskenn-se, gwenn niverus all o tont da labourat onni, dindan da vali, evit brasa klod Hor Zilver Jezuz. Sent, ota, ouz ma gourc'hemenn ha ra vo warnout ha da genvredeur banno Doue, an Aotrou tair gwech santel !"

Evel gourzavet a spexed d'an Neñv e oa Gwenole pa steuzias ar waldigez varzus. Antronoz e komzas anei d'an abad Budog, e dad, a anavezaz e oa kement-se eur merk anat eus youl Doue ez ajo e leun karat dioutañ da skignañ ar wir lezenn d'eun talead all.

- Ra vo benniget Hor C'hrouez," emeañ, "d'az peza dilennet da zavenni E c'hoant, rak ta eo ar gouesta hag ar barreka eus ma mensec'h da doulla an ero-se ha d'ha c'has da benn !"

Neuze hor zakras abad hag hor pedas da zibab ar re eus e vredeur a dloa mont d'ha heul.

Neboud goude emedont an hent hag o ergerzedenn hir hag a badas meur a zevez o c'hasas betek aber ar stêr Aon, a-wel d'eun enezennig anvet Thoppogin, a zave, pouz-tost d'an aod, he fonn roc'hallek eus douarier eul lann-voe kresket gant re ar stêr a rade daveto. Ar gwel eus ar begadig douar-se a zigasas da zofj da dud Doue an Enez Lavred emedont o pouez dilouskul, an enez-se ken tost d'o c'hallon, m'o devoa bevet onni blaoveziou sioul hag edrus, er bedenn hag er binijenn. Hag e rajont o menoz da anezi e Thoppogin a anvjont, da c'houde, Tibidi, da lavarout eo Ti ar Bedenn. Hag o zrizek, Gwenole hag e zaouzek kavandad, dibabat gantañ hervez skouer Jezuz, o komarout deouzek abostol, e touerjont war an enezennig didud.

Siouaz ! tann-kennañ e oa bava al lec'h fmoest ha digenvez-se, trest ha mainek e zouar ha nep gwezenn na louzaouenn annañ nemet kelon-mor ha bodannou lann-gibin. Nep gweskadenn kenneboud ouz an aveliou foulz a zeve bep goafv eus ar mor hag a sklase o izili betek mel o eskorn. E-pad pell a klask-jont tourist an douar greteilh hep kavout tu da lakaat da sevel, e-lac'h ar

vagadurez a c'hortoz, netra nemet traou didalvoud ha louzeier fall. Gant hebaskted, koulskoude, ha gant fiziafe a teuja d'o skoazella, e kendalc'hent da badi ha da labourat. Da dori o naon griz, e tastement meskl ha brannig hag e tapent a-wechou eun nabeudig pesked. Hogen n'o devoze marse a-walc'h eus ar vagadurez distar-se hag a tisvoudont mantrus war o bern kerrug divuhez. En tu all d'an aber, evelato, e walent glasvez ha gwez kaer glas dour o deliou. Hag e soñjant a vije eur c'hraz doo bava war an douar strujus-se e-lac'h cham da zizerin gant an dionez war rukan o enezenn.

E-pad tri blonz koulskoude a voent feul dai deuet d'an dianez ha d'ar zempladurez a zreste o yec'hed hag o c'horfou ha d'o narz-kalon dare da vont diouto. Hogen eun deiz, gwelenn an naonegez o wasset a voe troc'h doo o tiskouez anat da Wenole na c'halle cham pelloc'h ano gant e dud, anez mervel. Neuze ez eus ganto war c'hilann gloiz ar stêr, eun takad douar strujus ha gweskadet diouz an aveliou yen ha broutec'h an hafvezioù re-damm. Eur gwir varadeg an douar an devoa kavet an abad yaouank da zizeza e legall ha re e leoned. Dioustu a savjont ar re-mañ gant skourrou gwez eus ar c'head tosta, an douar palaret, hadet ha labourat a-zevri a roas doo, a-barz pell, peadra d'en em vage doreat, hep baer war gren ouz an amez-da-zont. O anoudegez-vev a voe bras a-kefver Doue a drugarokajont evit E vadelez ha buan oc'h enkouajont, en o c'hus-tud adkavet, ar mared reuzeidik tremenet ganto o anez Tibidi.

War eur gomezenn eun neboud war zinaou hag o tiskenn d'an aod, e oa bodet legelloù ar venec'h an dro da hini an abad e evel a-uec'h deo war eun duchennig. Ha tostik emedo o iliz gnat gant ar prena a sozas o deouarn akuit ha barrek war bep micher. Sioul hag oberiant o tale'hent da badi, da labourat ha d'en em gastize ar binijenn dindan legad oveziek Gwenole.

Timet a voe ano aneañ hag eus e ziskibien dro ar vre pa voe anavezet o zantelez, o guoizigez war bep tra hag o doare bava skouerius ha didamall. Ar vrud eus furnez ha madelez Gwenole, droist-holl, en em skignas pell diouz a lann hag, a bep tu, o tisede davetañ goured yaouank da c'houlenn an euvred da veza digemeret o-touez o vugale. Bemdez, etc, o kreske an niver eus ar re-mañ ha kement a voe anao a-barz pell, ma roas o legelloù eur gër nevez war an takad douar-se didud kant. Hag al lec'h e bedenn a voe anvet Landevenneg, eus unan eus an doo ano a zouge a grouer, hervez giz abded an iliz Keltisk, da lavarout eo Douveneg.

Duspenn an hall berziou kour en devoa Gwenole, a zantelez hag e anoudegez eus traou an Neñv hag an douar, en devoa c'hoaz, war a ganter, ar galloud da rei ar yec'hed d'ar re glañv ha nemmet. Eun deiz, hervez d'ern, a voe enkrezet a-daol trumm diwar-bann a c'hoaz Klervia, d'an em-pont gant Gwenn, ha mamm, o tremen eus pradeg e Lezenn, bremañ e parrez

Flougin, en eur mener a oa d'he zud. Raktal a hastas da vont di hag a klevas e oa bet gloazet a c'hoar a-greiz d'hoanl eur bagad gwayed gouez diskennet e porz ar maner. Unan eus al leoned a oa sailhet outi ha lamet diouz ha fenn unan eus ha douglagad. Kalz droug a c'houzañve Klervin hag euzus e oa da w-lout gant ha dremm displeberet hag ar gwad a redek eus ar gouli. Hap chom da dertal, e tapas peg Gwenolet al lapous kriiz ha, gant eun taol koftoll, e faoutas dea e vrusk. Er poull-kaon emada c'hoaz al lagad lonket hag an abad o dennas kuit da lakaat en e lec'h, an toull goull o oa e penn e c'hoar.

- Klervin, emañ, "ped Doue hag az paz fiziañs en E c'hrañs !"

Hag en eur bedi e-unan, eo'h euz sin ar gnoz war al lagad nammet a voe pare war an taol. Hag, hap sulou hirac'h komzoù e ancoadegaz-vat hag a drugaroz e c'hoar hag a vamm, a lavaras deo ne oa hef nemet eur banveg etre douarn an Aotrou da zevoni ar burzoudou a c'hoantao ober. Hag, hap gouezza palloc'h, e tistroas da Landevenneg.

x

x x

Mouez ar bobl o veuli Gwenolet a oa deuet betek diskouarn Gralon, evel m'hon eus diskleriet en eur pennad all uheloc'h. E dro-vrazel da zicubi kêr an Naoned a voe kiriek hapken ma empellas ar waledenn a hete ober dea. A-viskoaz e oa bet ar roue parc'henn da galz madou, hogen deuet e oa pinvidik mor, war-lorc'h emgann an Naoned, gant ar preizioù graet gantañ diwar goust an Normaned. Bezet da veza brekus ouz e gileed hag ouz ar re a venne keout o mignoniez diganto, e savas ennañ an dezo da vosta gant largentez, eun darn vras eus e binvidigez d'an abad santel.

Eun deiz, e pignas war e vrazc'h hag e penn uhelidi e geskoz, e kemeras an hent da Landevenneg, o tigas d'he heul eur zamm pounner a eour, ar-c'hant ha listri priziuz a bep ment hag a bep stumm. Douget gant eur c'hoant binvidik da blijout da Wenolet, e lammes diwar e jao a-kreiz tachenn al leon ha, doujus meurbed ha gant olivez, e taoulinas direk ar zant.

- Pe zonezon a vo deuet dit ar gwella ?" a c'houlennas-heñ. "Divent eo ma madou, ma galloud ha ma rouantelez; diniver eo ma irc'hior leon a eour hag a arc'hant, ma gwiskamafchoù kaer bet kinniget din pe c'houezet ganin. Nep den ne lakay e zorn war ar peaz a roin dit na ne gemmo netra er peaz a zivinin ober ez kefever. Mestr e vi war ma froufou evel ma vijent diskennet eus en nefv."

- Ma, em ar zant, "n'am eus ken c'hoant namet da draoù skedus an

nefv. Gwelout a rez an gwisket gant krec'hin geored kalet ha rust hag ez eo tra-walc'h din er boueg dister a zebren. Te avat, paour kêz reuzadik, c'hoantik da eour an nesa, e lufrez e-touez ar zeiz, ar perloz hag ar vein priziuz, en-dra ma leuniezh da gorf gant meuzioù disper. Gant druzoni lipous e lardez da gig a vo deuet mat d'ar profved. Ha pa vez an trompilhou, an taboulinoù hag an telennou o seni flour e-barz da balez ec'hon, ha gouest out da lavaret e pa lec'h emañ bromañ ar rouaned a veze gwechall o vragel en o c'hastell uhel ? Lavar din e polec'h emañ bromañ ar pinvidig hag ar c'hlaskez bara ? An douz ma voent ganet warnañ o drao a bouez warno hefal hag o zag gant an hevalep dant kalet ha kriiz. Rak kement a lugezn dindan an heul o dremen evel ar skeud.

"Neboud az pe dindan da vali pegon bras bannak e vo da rouantelez, ma voez diak da c'hounit rouantelez ar C'hrist. E-keit ha m'heer gellez, ez pedan da ziwall n'az pefo da lod enni. Rak daoust d'an eour skler ha d'ar vein priziuz da lintra warnout, ma n'out ket fromet gant dienez da vreur, e tiskenni d'an defvelijenn, paour ha disterik, war-lorc'h devezioù barr da vuhez.

"Ma klaskez bernia, hap ehan, pinvidigeziou dit, e c'houezez da-unan an tan az tevo e islonk du an ifern ! Ma, roue, ne venna netra eus da vadou p'an em gavan pinvidikoc'h agadout em dienez. Gra vad ganto d'ar re ezomek, peorien, intafvezed hag emzivoded, evit ma talvezo kement-se dit e-benn ar pred a dosta ouzit bemoz en-dra ma tremen an devezioù az peus c'hoaz da veza !"

Ne voe ket feuket brazoni Gralon gant komzoù garo ha dichek an abad halaver ha groñs a wala evit ar wech kenta. Gouzout a ouie a pe zoara striz e venne gouestlidi Doue e vije hauliet E lezenn. Dizemant hag hep lubani, e lavarent d'an heul, priñsed uhel ha sujidi dister, ar wirionez o dovas kefridi da skign dre ar bed.

Evalta e chommes ebazet hag evel skeot gant bommoù flammas hag hegas Gwenolet. Diverc'het e oa bet ganto ha, trefuet, ne ouias da ganta, petra da respont. Mat pa gavas ar zavar a-nevez :

- Den santel, emañ, azaouez gant e vouz, "fad a rez war ar profou a vefe gwir lavenez din leuskel ganit. Na grad kat, avat, em eus graet dit ar c'hinnig-se evit prena da vignoniezh hag az staga ouzin. Uheloc'h e oa ma manoz, daoust pegon talvoudus bannak a vefe din keout eur c'hile ken fur ha santel ha ma'z out-to ... Koulskoude, o vage dismegeañ ouz ar binvidigez, e tinac'hez an tu da zibonia ar reuzeudien o rei deo aluzen ha skoazell ... N'eo ket evit da vad da-unan nag hini da leoned, pa vennit bave er strisa paourentez, eo a ginnigen dit ma zefzourioù. Hogen, sefj en hini a c'hallfez ober ganto d'an dud keiz e zeu

bemdez d'al lec'h-mañ da stenn o dorn !

- Brien Kerne, " a silgerias Gwenoled, " gouest a-walc'h out da-unan da ranna da acour e-touez ar re a zo en ezomm. Kerz a bep tu, a-dreuz da rouantelez, hag e weli piou a zo dellezek eus da aluzennoù pa'z eo ken niverus enni ar re a zo o tierout boued ha dilhad. Hor paourentez ne vir ket ouzomp da skora ar baorien hervez hor galloud. Ma'z eo dister ar vagadurez a roomp d'oc c'horfou, e kavont amañ boued securus d'oc enocu, pa'z eo an hini a zo ar vuhez paourbadus. Gra 'ta, gent da acour ha da arc'hant, an implij e lavaren dit hag, e-keit-se, e pedimp evidout ma plijo gent Doue da sklerijenna ervad, evit mad da zujidi ha da rouantelez !"

- Kerseet on, " eme C'hralon, " na fell ket dit asanti d'am c'hinnig, pa'z eo anat din na gavin kerkoulz gour ha te da zeveni ma c'hoant. Hogen p'emaout amañ war ma douarou, e falvez ganin rei dit, e gwir berc'henniez, an dachennad a zo dindan da lann ha dindan ar gounidou az peus lakaet da dalvezout."

- Douar a-walc'h hon devo bet holl, " a droc'has berr an abad, " pa vimp unnañ dindan pemp troatad pri ! Didud ha diberc'henn e oa an dachenn-mañ p'am eus ho c'havet ha ne gredan ket beza graet gaou ouz den oc'h ober ma diazez warnañ gent ma menec'h. M'az peus c'hoant, avalato, da ^{an anv n'az} ~~an anv n'az~~ peus nep gwir warnañ e c'hallez hen ober, kuit d'ar re a zeuy war ma lerc'h da voza trabaset gent nep piou bannak."

Raktal e lakeas ar roue sovel eur skrid da zougen testeni e roe da viken da Wenoled ha d'an abaded a zouje d'oc c'houde, ar glad ma oa savet warnañ al lann hag an douarou-all piacuet gent ar venec'h. Ha neuze, marnoniet gent e varc'hekadenn betek Landevenneg, oc'h asantas gent e lez, mont ouz taol da zibri ar pred skañv en devoa Gwenoled lakaet aoza ovito. Dister, avat, e voe an dinell, pesked poezet en dour hag irvin kriiz, ar paz na oa ket nemeur diouz doars ar bontiered, pedal e lavare ar priñs n'en devoa bet morse kerkoulz pred hag hennez.

A-barz kimiadi hag e-ser e drugarekaat : " ^{an abaded} ~~an abaded~~ Servicher Doue, " eme C'hralon da Wenoled, " bras eo ho sentelez, ho furnez hag an ho peus eus gwall-dechoù mab-den. Eur gentel gaer am eus bet diganeoc'h o tiskouez din pegen distag eo ho kalon diouz madou en douar hag hoc'h eus ma lakaet da veiza n'eus nep pinvidigez par d'ar baourentez a ges da eunsted rouantelez Doue. Ha merzout spis a ran ar roudenn am bo da heulia hiviziken ...

"Hogen, ouz da quiteat, te abostol gredus an Aotrou Krist, e vefen mantret bras ma tinac'hfez couzin ar vignoniez on deut da glask ganit ha skoazell da guzulier poellek p'am bo ezomm anezo. Lavar din, m'az ped, e selacui ouz ma goulenn !"

Mao ha karadek e oa dremm an abad, eur vadelez hep par o para warni, hag heñ da respont gent hegarated :

- Me, roue, a zo kilo da gement hini a youl vat hag saun ha galon. Ma c'hoarvez ganit kasout ezomm ac'hanc d'ez alia, deus hep nec'h betek annon hag e klaskin da heñcha diouz ma gwella, hervez lazann Doue hag ar furnez kriston. Kerz e peoc'h, ets, ha bez feal bepred d'an Aotrou Krist, roue ar rouaned, a skuilho warnout E vennoz andra ma talc'hi stert da gelennadurez E Aviel !"

Konnezet e oa Gralon dacust da velkoni her zamma hag, o sovel war gain o loen, o kemeres hent an distro da Gemper gent e uhelidi hag an tefzorieu a eure Gralon fê warno.

P e m z e k v e t p e n n a d

G o u e l a n T r e c ' h

Ne oa ket gwell-uhel an heol pa zeus gadour an tour a zifenna doriou ar straed kreiz, e Iz, da gemenn d'ar pennkadour Leuhemel an devoa marzet, er palldar, our strollad marc'hegerien o nesaat ouz kêr. "Ar roue hag e goskor moarvat !" eme ar mestr brezelour hag e roas urz d'e gadourien d'en em sterna ha d'en em arma kerkent evit an digemer kran a oa dleet d'ar priñs.

A-barz ma c'houlennas ar roue dor zigor, edo ar perzier o wigourat war o marc'hou hag an hent pavezet, goured armet a bep tu dea, oc'h en em astenn oc'hon, ledan hag eeun dirazañ. Hag andra ma tostae ar pennkadour da saludi e aotrou, e youc'he a dud donedigez vat da C'hralon, en eur heja o c'hlezeier er vann da ziskouez dea o levenez d'e welout.

- Hervez doare, Leuhemel, emañ pep tra en urz," a lavaras ar roue. "Ha prientet ez peus kement a zo ret evit ar gouel a vo arc'hoaz da drugar-kaat Doue evit hon trec'h en Naoned ha da enori ar re gadarna eus ma brezelourien en emgann têr-se a chomo garant da viken e koun kement gour a gemeras perz ennañ.

- An difreou gourc'hemennet ganeoc'h am eus lakaet ober, aotrou," eme Leuhemel. " An holl, e Kerne, a car e vo dalc'het ar gouel-se arc'hoaz, hag o fedet em eus da zont dea. An tad Distin an Baelog a gano an ofern-bred gant ar c'haera lidou hag ar brass tournament a vo bet gwelet biskoaz a ramp en dachenn-c'hoari groumm roman a zo e kreiz kêr. War he mogerieu dereziet e kavo nouspet mil arvestour lec'h da azeza. He gouestlou talvoudus a vo da c'hounit gant ar gevezourien ez ay ganto an trec'h, ken war droad ken war varc'h.

- Gwell a ze," eme C'hralon, "ha laouen on o c'houzout az peus graet hervez ma gourc'hemenn. Dispar e vo ar gouel-se a lakay levenez em sujudi hag a embanno uhel klod Doue a gennerezas hon divrac'h da ganna en Normaned divadez... Ha bremañ, deus ganeomp, Leuhemel ker, ar c'haloneka eus ma fennkadourien, ma' z ain da bokat d'am marc'h karet, ar briñsez Ahez, ha, da c'houde, da c'houlenn kelou eus yec'hed hon eskop santel, Gourmaelon.

- Hon eskop, war a glevan," eme ar pennvrezelour, "a zo toc'hor bras ha war-nes da finveza, siouz !

- Doue d'her miro deomp pell amzer c'hoaz !" a huanadas ar roue. "Hogen ma rank tremen a-barz nemeur, ra ne vo ket arc'hoaz da vihana, rak levenez hor gouel a drofe buan da gadv. Keuz am bo d'an tad doujet ha d'ar c'hile mat-se pa guitay ar bed-mañ, ha picu 'ta lakaat en e lec'h ?"

Neuze ez ajont etremek kreiz ar geoded, Leuhemel war varc'h en tu dehou d'ar priñs, hag ar goskor d'o heul. A bep tu d'ar straed e oa kinklet ha fichet an tier gant skourrou glas, barro lore ouz re iziz a ouenn ha bodou bezo ouz re ar Vretoned, bihanoc'h kalz an niver anezo. War al leurgêriou, e kaved berniou kauneudsavet uhel evit an tantadou a vije enaouet da lakaat disoc'h d'ar gouel. Kaezaet e oa bet ive mogerieu noaz ar c'hoari-lec'h roman gant skourrou bezo stank hag hir en istribilh outo ha, war lein aneo, e stlake en avel banniel ar roue.

Er straedou, avat, stank an dud enno avel boaz, e oa dibaot ar youc'hadennou a zigemer mad, ar pezh a eure da C'hralon lavarout outañ e-unan na oa ket deuet mat da annezidi kêr. "Arabat ive," amezañ, "ankou-aat int bet lakaet da suje din hag o deus miret, hep mar, kasoni couzin, e-giz ma c'hoarvez bewech gant ar re drac'het ouz an drac'hourien."

Dirak ti an uhelied Cornelius, kamennet d'e berzhenn donedigez Gralon gant eur marc'heger kaset dea gant Leuhemel, e lakaas pep hini troad en douar. Cornelius ha Patricia, unan a bep tu d'ar briñsez Ahez, o merc'h vihan, a zeuas ganti da ziambroug he zad hag e diarned. D-zri e stoujont, gant azaouez dirazhañ hag Ahez, eur verc'hig vistr ha koant, bleo melen sour dei hag he dilhad kaer o lufra gant ar bragerizou skedus a zouge, a zillamas d'e vriata. Da c'houde, avel a-enep d'he grad, e saludas kevandidi Gralon, ginat he dremm ha teñval he sell.

E-keit-se a ras he zud-koz eun digemer seven d'o mab-kaer ha d'e wiziou veur hag o fede da zont tra d'o falez e-lec'h m'o gortoze ar pred a oa bet anzet evito.

Gralon en devoa choupet Ahezig war eur vrac'h hag, oc'h ha flou-rika, o c'haloe ha dremm hag he bleo gant e bokou tenaza. Fromet hall e oa hag e tride gant an curvad da starda war a gerc'henn ar bugel a lakaas barr e galon gant al laouenedigez hag an eürusted. He sevel a eure d'an nec'h, etre e zivrac'h, da ziskouez d'e diarned ha, gant ar vras fouge, e c'harmas deo : "Kilad vat, ma gwizien kadarn, satu ar plac'hig a vo rouenez war ma lerc'h ! Ho ker e c'houlennan diganeoc'h da veza ken feal dei ha ma'z oc'h din !" Eus genou pep hini e tarzas war eun dro youc'hadennou ken feulz ma tregernas ar palez war e ziazas. A-gavred e voe an holl glezeier ez vann andra ma tous pep kador fealdad da viken d'ar briñsezig kenodus ha d'he zad, ar roue galloudus hag illur.

Diouz stumm arrebureur ar Romaned e oa re sal ar pred : taoliou izel, en o c'hichen gourvezennou hir ken izel all. E-lac'h gourvez, ec'h azegas Gralon war an hini a oa miret evitañ hag e kemeras e vere'h en e gichen. E dud, kennebeut, ne blija ket deo an am astenn war ar gwelloc-proda-se, hag a euro eveltañ, e-keit ha m'en em lada, a-hed o c'horf, war o re, Cornelius, Patricia, hag eun nebeud koadediz eus o anaoudegez kouviat ganto d'ar fest.

Meuziou dibaot ha frondus, dianavez da Vreiziz, a vou digaset war an taoliou dirak pep preder. Baz' e oa eno, war eun dro, traou ken iskis ha ken blizidik ma voe souezet ganto kiled Gralon, boazet o staoñ ouz magedurez fatisc'h ha yac'husoc'h war o mano. Nop gour, koulskoude, ne ziskouezas beza subezet gant seurt lipouzerz vlizidik a vlase, gant dudi, ar genbroderion izat. Ma ne oa ket broust ar roue hag e dierned war ar boued babig-se a gasent d'o genou hep mall, ec'h an em dapent war ar gwin dispar a event a hanafou stank, hep dizereadegz evelato. Hogen pa zeuas dirazo peziadou bevin ha kig moc'h, bat rostet ouz ar ber, a laeskjont bep a huanadenn a blijadur hag e stagjont da voueta, digor o c'halon. Meur a hini, avat, a gouzias d'ar chou-chenn yac'h ha krefiv a event a bodadou bras er gêr, e-ser launia o foull-kalon gant melladou tammou eus an hourc'hed ouz ha kizvi e hemolc'hent en o c'hoadeir.

Dibaot e oa ar brederien o c'houzout met keltieg ha latin. Ar re aneo a ouie tamm pe damm eus an diou yez a droe d'ar re all, gwellic ma c'hel-lent, al lavar a veizent, an divizou a glaska darn toulla kenetrezo. Yen a-walc'h o voe an divizou, avat, rak anat e oa d'an dierned na vage ket outo ar gêriz pilpouz-se nemeur a geneilliez.

Louhemel, bepred war evez, a selacue ar c'homzou karantezus a lavare ar roue d'e vere'h ha kement ger a zistage houmañ dea. An tad, desket gentañ eun nebeud peziou latin, a glaska rei da entent d'ar plac'hig, dre eur c'hemesk eus an daou lavar, pegement ha c'hare. Hag Ahezic a respente oc'h e bedi da gomz outi eur yez seven ha n'eo ket hini Breiziz, an estrenien ouz-se ken gero o lavar. Ast o oa tañval e zremm hag e krizes e dal da heul an droug a roas d'e galon ar broud dic'hortoz emedo ar brifsezic o paouez sanko enni. Ha rust e vouez, e tistagas greñs : "Na zo ket fê war da dad na da genvroiz! Eus eur ouenn ken uhel ha ken brudet hag hini da vamm ez int ha Breizadez out evelto pa'z eo gwir ez eus gwad breizet ennout hag ez out galvet da veza rouanez warne diweztaoc'h. Pieu 'ta an deus desket dit hon dismagefsi ha miret ouzit da zuki ma yez, p'am boa zoet kefridi da Zistin an Saolog d'hen ober ?"

Evel luc'hed enno e pare e zaoulagad kalat war e dud kaer simudet hag enkrezet. Nep komz ne zeuas eus o genou, endra ma komenne deo e lamje diganto e vugel e-barz pell da zont d'e gastell, rak ne c'houzenvje ket palloc'h e vije graet enei eun ebourez d'he zad ha d'e sujidi a wad breizet.

War zo e voe lakaet diwez d'ar fest ha Gralon en em dunnes kuit gant e uhelidi. Ha Louhemel, evel meur a diern all, a soñje outañ e-unan :

- Diougan fall a zo deomp ar brifsez ! Evel m'he desaver en ti-mañ, e vo enei eur golladenn hag eun danvez-rouanez da sacha war he bro, dizeur, dizur ha malloz Doue, hon Actrou !"

Daoust ha ma klaske ar roue kuzat war a vuanegz, a weled e oa trefust bapred. Tud e geskor, eveltañ, a bignas war varc'h hag, en eur strollad, ez ajont d'an eskopti. Distin an Saolog, d'an ampoent er chapel, e zifreas da dostast pa voe goulennet war urz ar roue a lavaras dea a c'hoantes gouzout penaos emedo ar bed gant an tad eskop hag ober eur weladenn dea, ma aotrou e yac'had kement-se.

- Bemdez, aotrou, "e vezomp war c'hed eus maro hon tad karat Gourmaelon o c'hortoz, gant eun hebaskted santal, ma plijo gent Doue o zieubi eus e boaniou skrijus. Abaoe ar mintin-mañ, avat, eo siculaet hag amenet d'an droug hen heakine abaoe bloaveziou hir. Met pegsit e pada ar wellaonn-se, hini ar maro moarvat, ac'hann d'ar gaouad a zou hag a vo, hep mar, e hini diweza ? Ne c'houzavf mui er pred-mañ, e holl skiant-vat a zo gentañ ha laouen e vefe ma plijfe geneoc'h ober dea eur weladenn."

En eur gamprig distar ha tañval, astennet war eur c'hoic'hed tano ha kalat, e kevas ar prifs hag a dud ar c'hlañvour disliv ha ken digig ma ne chome nemet ar zalegenn aneañ. Eul lean a bede, war e zaoulin, e-tal ar gwela paour, ha, bep eur mare, a c'hlebia, gant eul lienenn bet soubet en dour, diweuz an eskop koz disac'het gent an derzenn.

Gralon hag e dierned a zaoulinas d'an douar dirak Gourmaelon hag ar roue a lavaras d'ar c'hlañvour :

- Tad maurbed santal, a-viskoaz on bet aketus da zont alies betek ennoc'h da ziskouez deoc'h an doujefs a vagan en ho kefver ha da selou ar c'huzulicou fur a roec'h din evit brasa mad ma rouantelez. Hoc'h alioù santal a zo bet talvoudus bapred ha kalz anaoudegez a deus daoc'h. Ma digarez a c'houlenn'hozoc'h evit ma leziregez d'ho kwaladenni abaoe eur predad hir, c'houi hag a eo eun dlead din dont da frouzi ha da gennerza e-doug ho klevet kriz. Hogen ar preder an eus bet gant melestradurez ar vro hag ar skoazell a c'houlennas digenin ho prour Cervinus, da ganna an Normaned a c'hronne an Naoned, e gêr, e harzas ouzin da seveni ma dlead. He pozit, eta, ar vadelez da ankouat al leziregez-se a lake morc'hed da savell annon. Ha, p'ho kwelan ken sump ha, marteze, war-nes d'hor c'hou-tant evit gwelloc'h buhez eget hini ar bed-mañ, ho peden da rei ho pennoz a dad din ha d'ar goured kadarn a zo amañ ganin, rak int-i, ivez, o deus stourmet gent nerc-kalon da orgas an dud divedez e-zivaz dro an Naoned !"

- Brenin illur, ha, dre c'hraes an Actrou, gwella kevazour Aviel ar C'hrist, hor Salver, a zistagas an eskop, berr warnañ ha gwan kenet e vouez, "abegou pouezus o deus da zalc'het pell diouzinn daoust d'an dezo ar poa d'an darempredi evel kent. Ne oas ket gouest d'ober a-hand-all pa

'z eo gwir, e tle pep den pleustri, a-raok pep tra all, gant kudennou ha dileadou e stad.

"Bez dienkrez, eta, diwar-benn ar pec'had a laziregez oc'h en em sermez gantañ ha ma loesk d'en em laouenanat eus ar weladenn a deurvezez ober din gant da govendidi heol, da skoazellerien da zicubi eskopti an Naoned eus enebourien didrez hor feiz kristen.

"Klevet em aus ano eus ho kuriou brudet hag o re, ar c'huric'haer-see a flestrjoc'h droizo penn an Aezouant a venne diskere bugale Corvinus pe ober anez eo sklavet d'indenañ. Ra vezoc'h maulet ha trugarekaet an ano an Tri Forson eus an Orainded Sakr!"

TiAvet e oa hag eur govad paz a droc'has deafl a gomzou. Mat pa voa cecnet deafl adarre : "Gralon, ma mab," emeañ, "n'em eus mui pell da veza, eun nebeud eurvezicou monvat, pe eun devez pe zaou d'an hira. Az pezh soñj da bedi evidon pa vin set d'ar bed all hag ar Spered Glan da roy dit sklerijenn da zibab ervat an eskop a lakai sakra war ma lerc'h ! Meur a lean hag a volag santel er vro-mañ a zo dallezek eus ma c'harg ha fiziañs em eus e tilenni ar gwella aneo. ... Kaourintin, al lean kelennet, a vefe, d'am mono, ar barreka en abeg d'e vuhez ken skouerius, d'e ouiziegez, d'al levezon don an deus war ar sperejou ha d'e anaoudegez vras eus pobl da rouantelezh.

"Gouzout 'ouez eo Iz eur gêr digristen, gwasoc'h zoken ma lavarfen mat. En anar, siouaz ! em eus prezeget komz Doue enni ha n'oa ket bet selaouet. Amañ e ren an tech d'ar pec'hajou meur e kalon pep den ha n'em eus nep spi e taufant da wellaat. Az pezh diskred da geodediz da gêr-benn a zeuy Doue da gastiza spontus eun deiz ... Hag az pezh soñj, a-raok ma vo re ziwezet, da denna, a-dre daouarn da dud kaer, da verc'hig Ahez, ar bugel dinoc'h, a zo eun war var da veza re-voumounet ha breinet he c'halon ...

"Eun euzvad, evelkent, eo bet din gouzout e lakaez kana eun ofezenn arc'hoaz evit trugarekaet hon Actrou eus an troc'h a roas dit en Naoned hag evit ma kevo trugarez direzañ enso da gadourien kouezet er stourm. Hogen bez eveziek na c'hoarvezo, e-doug an ebatou a vo war-lerc'h, moarvat, netra a gement a zispilje da Zeus. D'az Kerneviz eo da rei skouer vat da baganed ar gêr-mañ.

"Ha bremañ, p'am eus diskloriet ar pezh em boa da lavarout dit, kê, ta ha da dud, gant ma bennoz ha ma c'harantez a dad ... Kenavo deoc'h holl er baradoz ! ..."

Aet d'an survar, e troas Gourmaelon e benn war an tamm prenn a dalveze deafl da benn-wela. Digor bras e zoulagad, e selle hegarat ouz e wela-dennerien, e-ser pedi a galon evito. Ar re-mañ, en eur gimidi dicoutañ a le-keas o daoulin d'an douar a-nevez ha Gralon, glac'haret, a bokas d'e dal en-dra ma kuitae e dud ar gambr.

Da Zistin hag a oa oc'h e c'hodal er-mêz : "Hon tad Gourmaelon, evel

m'hoc'h eus lavaret," emeañ, "a vo mero a-barz pell, siouaz deomp ! ha bras e vo ma c'houz deafl. Youl Doue da vo grêt pa n'omp ket evit mirout ouz eur saurt koll ! Hogen, pa rankan pleustri gant kelennedurez ar briñsez Ahez, ma merc'h doust pegen nebeud dereat eo din beza prederiet bremañ gant eur saurt kudenn e ti ar sant a zo war e dramenven, ho pedan da anzav ouzin didroidall hag han hoc'h eus grêt hervez ar gefridi em boa roud deoc'h.

- Actrou," eme Zistin, "goulennet ho poa kentelio ar briñsez en hor yez, war wirioneziou hor relijion santel. Eur plac'hig spoudek eo ha leun a skiant-vat ha buan e tuskas ar pep rota eus ar pezh a dle eur bugel kristen gouzout. Abaoe eur pradad 'zo, koulskoude, da lavarout eo abaoe ma'z eo bet pellast ha magerez vrezizet diouti, ne venn mui komz en hon lavar ha, dalc'hmat, e kaver digareziou d'am c'has diwar he zro."

- Ha gant he zud-koz, hep mar, eo e vez ijinet an digareziou-se ? Hag int-i ivez, emichaf, a roas an digouvi d'ar vegerer em boa dibebet evit ma merc'h ?

- Ho mamm-gaer eo e zo kiriek da gemant tra, rak gwidrañs oc'h eo eget he fried. Pell' zo em bija roet an deare deoc'h da c'houzout pe-nevet ez oc'h chomet eur mazed hep dont d'ar gêr-mañ !"

Brouezet a oa Gralon hag a savas ar gwad d'e benn : "Mall bras," emeañ, "eo din lakaet urz er stad ma talc'haz enni ar briñsez ! Diboañ an bet oc'h he fizout em zud-koz e zo pilpouzad aneo, enebourien d'hor galloud ha kristenien glouer !

- Kristonien glouer, actrou ?" a silgorias al lean, "kalz gwasoc'h hep mar. Paganed rik hag azoulerien fals-doueou ar Romaned a vefe kalz gwiroc'h ! ... Komzet em eus eus ar gudenn gant an abad Gwanel a zo bet gwall-skoueriet o klevout hoc'h eus bet ar sempladurez da leuskal ho merc'h gant ho tud-koz. "Dioustu," emeañ, "e tleit he zenna diganto."

- Grêt a vo evel ma lavar," a droc'has ar roue, "pa'z eo ive ma mennad ! Hag e pe lec'h, m'ho ped, hoc'h eus gwalet Gwanel ?

- Amañ eo en em gavet hirio da weladenni hon tad Gourmaelon na anavezet ket ha d'en em lakaet en e c'houc'hennañ pa'z eo heñ hon eskop. Doaniet eo bet oc'h e gavout ken toc'hor he, goude beza bet savar gantañ, en deus pedet evitañ, pell amzar, e-tal e wela. A-raok ma tigovezjoc'h en eskopti, o c'houzout ar vrud fall he deus Iz, an deus mannet bele dre gêr evit ober eun unklask war vuhezeged tud ar geoded. Ma plijfe deoc'h en em gavout gantañ, her c'hemennfen deafl kerent ha ma vo distroet emañ war e giz.

- Bennoz deoc'h," a lavaras Gralon, "gant euzvad her gwelfen a-nevez !"

x

x x

Antronoz e oa leun tenn an iliz-veur gant eun engroez uhelidi ha kadourien diredet da glavout an oferenno-bred a oa da veza konet evit truga-rekaat Doue eus an trec'h o devoa bet Kerneviz war alouborien an Naoned. Er pann uhela emeda Gralon ha tud e lez gant ar vegenn eus penna-dureziou ar geoded a oa bet pedet d'al lid. En o c'haera emeda an holl, gwiskot dispar ha mantellet gant mezer ruspin pe varelllet eus an dibab. Penn-da-benn an aberz santel e voent en o sac, nemet pa veze da zaoulina d'ar prodadou rot, rak, d'an ampoent, na veze ket anavezet ar c'hadoriou an ilizou.

An tad Distin an Saalog eo a oferenno e-kreiz eun niver mat a loaned bodet a bep tu d'an aoter vras. Ar c'han hag ar pedonno a save ledan ha gorrrek dindan ar volz uhel o tesson gant ar moueziou nerzus. Hag an engroez, deol ha doujus, a veske o gan hag a bedonno gant re ar vaneoc'h. War-lerc'h an Avial e tregernas mouez an oferenno da brezeg d'an ilized :

- Roue, uhelidi ha kadourien a vro-Gerne, "en em vodet oc'h el lac'h santel mañ, da ziskouez hoc'h anaoudegez-vañ de Zoue an armeou a roas deoc'h ar gounid war an divroidi ouez ha digernez a bleuistre da zrasta ho pzeudour gristen o Bre an Naoned. Hap karne, hael ha dispont, hoc'h eus klevet galv ankeniet an eskop Cezvius o c'houlenn skoazell ha roet hoc'h eus skor da gristenien rouzeudik an argoll. Evel ar Samaritan mat hoc'h eus grañt aze eun ober a drugarez ha Doue, en E vadelez, en deus roet deoc'h an trec'h. Ra vazoc'h mulet evit ho feiz hag hoc'h emroüsted da veza stourmet gant komant a nerz-kalon ha da veza skuilhet ho kwad evit brasa klod Stenin an Nefv hag an Douar !

"Allas ! meur a hini eus ho kenvezelourien o deus kollet o buhez o miz ar stourm. Hogen set int da welloc'h bud eget hon hini hag a tleit en em laouenast eus o mare talvoudus. Douc'h da ze, pedit evito, rak meur a hini a c'hell beza chomet e die an Actrou hag a zo c'hoaz, ar Purgator, o pourbeza o feziou a-barz tizout an eürusted a bado da viken.

"Hogen ma'z eo eun dlead pega en armeou da skora bugale Doue en ar-var, ez eo ive eur pec'hed marvel o dic'houina da skoi, hep abeg, war ho nesa dinoaz, kristen pe bagen. Ha, sibouz ! evit eun digarez toull bennak, kalz ac'hanoc'h, kristenien war o meno koulekoada, a vez dare bepred da lakaat ar gwad da redek. An nep na bardon ket d'e nesa ar gaoz a vez bet grañt outan, ne va ket digemeret e rouantelez Doue. Holl e c'houzit en deus goure'hemennet da vab-den : "Na lazi ket !" hag en deus lavaret ar C'hrist, Hor Salver : "An nep a ray implij eus ar c'hleze a varvo dre ar c'hleze !"

Ret eo deoc'h, eta, en em zizober eus ar boaz fallekr hoc'h eus, da gafez pep gouel, da c'hoari gant an armeou war zigarez en em zidui. En arvar ho lakeont, rak ar mestaolieu, ouspenn gloeza ha lemel ar vuhez a-wecho, a lez ive an ano ! En em ziwallit, eta, eus an tech digristen-se p'hoc'h eus meur a ziduall all d'ho taverret.

Eun dra ouspenn, al lantegez, ha, dreist-holl, al lantegez war an eva, a zo eus pec'hed mezus hag a lake ar ru a zo tust gantañ e reñk al loaned mut. Eur walenn oa en ho touz pa re deoc'h elios kail ho skiant vat ha, gwasoc'h c'hoaz, ho parz e dallidou ho Salver mero evidoc'h ouz ar groaz. Bezit war evez, m'hoc'h asped, ouz gwidrou an Arouant a vez dalc'hamat oc'h ho tougen d'an died milliget a c'houez an ten ar gwad hag er youlou fall hag ar c'hoantegedou direiz ar galon ! ..."

Hep damant ha lantegez a vuzutelle ar pzegeger helevar gwall-siou o gerviz. Ar re-mañ, mezek ha kauziet, e selzoue, fromet o eskre, ha Distin, goude boza taolennet dirazo o zechou hag o sumpleduroz, hag o aliet da ren gwelloc'h buhez hiviziken, a c'halvas warno banno an Drain-dod Sakr. D'ar gorreou, a kouezas an holl d'an daoulin hag holl ive, war bouez nebaud, pa voe ar prod, e kemarjont pezz er gomunien dindan spesou ar bara hag ar gwîn.

Pa zisoc'has al lid santel, e kuiteas an engroez ti Doue ha Gralon, diwar zerez uhela ar porched, a roas urz d'e defzorier da stlepel d'ar geiz ha d'en astud en em zstumet war al leurgêr, an arc'hodig peziou eour hag arc'hant en devoa digaset gantañ. Endra ma koueze ha ma ruilhe ar peziou a zornedou a-touez ar beorien sabstust gant largetoz ar roue, a c'harme an dudigou gant levezon ha fouge : "Buhez hir da C'hralon, hon actrou !" "Mil mouloudi d'ar priñs brokus ! En anduitilh ! En anduitilh !"

Hag eun touzmac'h spontus a savas, pep hini o klask tapa ar pezz lugernus a goueza tost deat. Rouestl a voe, taolieu douarn ha taolieu troid, krebiafadennou ha dentadou, friou gwadek ha panna blefset. Hag, evel ma c'hoarveze bepred, ar re zistar ha dinarz o devoe an tu dindan, pedal ez eas aluzennou ar roue gant ar re grefva hag ar re c'hanas. Peuz goullonderet e oa an arc'hig, pa welas ar roue en devoa faziet o lekkaat banna ken diboaell ar binvidigez-se o vije bet ret renna peurgvetal etra an ezommoien hag a oa bet an darn vrasa anei gant an niver bihana hapken. Neuze o roas boda, gwall ziwezat avat, an dud nammet, ar merc'hed koz, an intafvezed hag ar vugaligou gwon, da renna etroza ar pourrest eus an tafzor. Hogen bihan e voe lod pep hini e skoaz ar pezz a oa bet skrapet gant ar re all e-kreiz o brud ...

x

x

x x

Diouz an endervez e torcavas an tournamant ar c'hoari-lec'h roman. War-lerc'h prezegenn Distin an Baelog en devoa sefjet Gralon dinac'h ar pegadou garo-se a zihuede kement e Vreiziz. Met, war ali Louhemel, daoust d'e vorc'hed da zizenti ouz al leon, ne aure mann rak, hervez e bennkadour, o dije e vrezelourien re vras kersenn ma rankjent ober kafv d'an diduallou e oant ken ron ganta.

Evel eur grugell verien, e c'holoas an arvestourien, ken Breiziz, ken Iziz, deroziou mageriou uhel ar c'halc'hva. Kerkent ha m'en devoa Gralon hag e goskor kemoret o lec'h war eun doare pondalez stummet er vogerioz, e teuas, war al leurenn, ar gevezourien dilennet da gemerout perz er pegadou. E-kreiz ar safar, ar youc'h, an hop, ar garmou hag ar stlakadeg daouarn, e kerzjont war an dachenn a reñkadennou urziet mat, darn war droad, ha darn war varc'h, ha sternet disi evit an emgann. Da c'houde, e sonas an trompilhou hag ec'h an em dennjont eus al lis da c'hoñtoz o zro da ziskouez o empartz. An drideien o devoa kefridi da varn ar pegadou, ganta bep a c'hoaf tougn, a chomas hepken war o lerc'h.

Tennet e voe plouz barr da c'houzout piou, troadaien pe varc'hegerien, a begja da ganta. Tonket e oa da re ar rummad kenta derozi ha daou gleziator war droad, bep a skoued ouz o broc'h kleiz, en em gavas war an dachenn. "Grit al le !" eme eun trideg, "da stourm hep kasoni ha gent lealded, hep skoazell nep bre hud na skor an Aerouant !" Hag o daou, war eun dro, e tistagjont a vouez uhel : "Heñ toui a ran ! Ra'z ay an trac'h gant ar gwella ac'hanomp ha mez d'an nep a vefe disleal."

Eun taal trompilh a dregernas da gemenn e oa daoust pred ar pegad. An eil ouz egile ac'h an em daoljont gant herder, o c'hiezoier a luc'ha dindan an heol hag o strinka tan oc'h an em stoka. Trellus e oa d'an daoulagad al leonennou dir o trei hag o tistroi dizehan er vann, o tiskenn hag o sevel adarre, o vont a-benn pe a-dreuz hag a-hed da herzel an taoliou a zerc'haoue pep stourmer gant e gevezour. Dibaouez e tessone an amou e-touez ar c'hriou a save a bep tu da hisa ha da gernerza ar stourmerien. Ha, pe veze doare gant unan aneo da vont da gant an trac'h, e tirolle ar sellerien a heta deñt ar gounid da c'harmi o levanez a bouez penn, e-keit ha ma tave ar re all.

Daou vaill war ar c'hoari kleze e oa an daou stourmer ha ne ouied ket c'hoaz pehini a vije trac'h pe zeuas unan aneo a-benn da vrevi ar skoued a dalveze d'e enebour d'en em warezi diouz an taoliou. Raktal, evit mirout e troje ar pegad da laz, ken krugat e oa an daou emganner an eil ouz egile, e tilemmas an drideien, gant o gonfiou, da lakaat diouz d'ar stokad. An hini a

zispennas skoued e gangourenez a voe diskleriet trac'h hag a gasas gentaf ar gouesti en devoa gounezet ; eur gouzglefv dirennet, eun dornell alecuret outaf.

An arvest a gendalc'has gant pegadou all gwas pe wasoc'h ha, meur a wach, e redas ar gwad. Hogen, bep tro ma veze glozet unan bennak, e sailhe an drideien etre ar c'houreneurien da embann ane an trac'hour ha da roi deñt eur prof a-berz ar roue.

Daoust pegad didust o oa an arvestourien gant taoliou kear ar gadourien war droad, e c'hortozent gant mall dondigez ar varc'hegerien war al lis. A-barz nemeur e kreskas an trouz hag an toumasc'h, pe weljed daou gadour ysbouank, konedus o emzalc'h hag harneziet dispar, bep a jao brezel eus ar c'haera. Ar c'honta a oa Jarnitin, meb Haznin, mac'htiern ar Poc'her, eur c'henderv bihan da C'hralon, hag an eil Hazninskoud, meb da Nuz Ab Kadnou, eun uhelid pinvidik a dolad Skaer. Daou c'houren e oant, brudet dre holl dre o c'huriou e emgann an Naoned ha daoust mat d'o c'hanvroiz.

Unan e pep penn d'an dachenn, e kemerjont o ziz d'an em argadi, goude beza grêt al le da stourm evel gwir gilead ma oant hag hervez reallenn ar c'houreneurien leal. D'an daoulamm e sailhas ar mirc'hed hag inti, soun war o diprou, a droe pep hini e c'hoaf da dizout e enabad. Kalet meurbed e voe ar stokadenn hag e torras Jarnitin fust e c'hoaf ouz skoud e arsilhar, padal e risklas beg dir arm homañ war an hini a zalc'he e gavanded re izel dirak e zremm, oc'h e dizout ken don en e bunn ma voe treuzet e lagad kleiz hag o glopenn. Ha, lazet war an taal, e kouezas Jarnitin d'an douer a-c'houen e gain.

Pred sul luc'hedenn hepken a padas ar gwall zarvoud. Mmtrret ha strafuilhet, o krie an heol gant an euz hag ar glac'har, e-keit ha ma skoe ar roue war boull e galon o keuzia d'ar fazi en devoa grêt oc'h notree ar pegadou, daoust da gomzou nerzus Distin an Baelog.

Dilemmet e oa Louhemel war al lis ha Gralon hag e goskor a zispennas war o lerc'h. Ar gwad a boullade dindan korf ar marc'heger maro hag Hazninskoud, abafet da heul an taal mantrus, a cuele gant anken d'an hini diskaret. "Allus ! Gwa me !" eme ar pann-kadour, "divuhez eo ar gouron Jarnitin ! Ha ! ma vije bet amañ ar panedour Ronan, ar sant-se a rons din ar pare, an dije kavet tu, hep mar, d'e zozorc'hi dre ar gal-loud merzus en deus bet digant Doue !"

- Unan all a zo c'hoaz, ken santal ha ken galloudus ha Ronan," e lavaras Gralon. An abad Gwenole, ma n'eo ket kuitast ar gñr-mañ gentaf a-bunn vramañ, e zo barrek, gant skoazell Doue, d'ober ar burzud a hetemp ! E-tal gwale hon eskop Gourmaelon e tile beza o pedi !"

Ar pennkadour a c'houlennas a varc'h ha, d'an daoulamm gentaf, o lakast tan da strinka diouz ar paveziou, e redas d'an eskopti. Ne voe

ket hir gant e dro, o tigas gantañ an abad santel. Oc'h en em deural d'an daoulin dirazañ, ar roue hez pedas da zaskori ar vuhez d'an hini maro. Met Gwenole, antanet holl hag e zaoalagad o tevi gant eur vuanegez santel, a savas dichek hag hegas e vouez : "Priañs lore'hus ha diboell !" emeañ, "ha kreñdi a rez eo Doue da veval hag e c'hallez gouez'hemann Deaf kement frou-denn a dremen oz pouedenn-benn, war zigarez oc'h en em embannez difenner E wirioù ha skorer ar feiz ? Kollat out gant ar vrazoni hag ar meuleudiou a glevet a bep tu gant da lubannerien a uhelidi ! Ha penaos e toulfe an Aotrou eur sell a drugarez warnout pa ne deurevezet ket selaou ar re o deus kefridi da gomz en E ano ! Ha klevet oc'h eus prezagonn an tad Distin ar mintin-mañ pe ankouezet eo bet genit abaoe e aliou fur ? Ne zullezet ket e c'houlennfen digantañ ar burzud a c'hortozet eus ma ferz, ma an distera hag an diweza eus E servicherien ! Koulskoude, ma vennez grataat din na lakaet oza mui c'hoarioù ken kreñdi ha ken arvorus da zismegafei Mestr ar vuhez hag ar maro, Hen aspedin da selaou ouzin ma plijo gantañ e save ar c'helan gwadek-mañ eus a varo da veo !"

Gralon a savas e zorn hag a douas na vije mui hiviziken en e rouantelezh nep c'hoari drastus d'ar c'horfoù na risklus d'an aneoù, e-keit ha ma vije ar mestr e Bro-Gerne. Ha Gwenole, o tastaat ouz korf Jarnitin, a ostennas d'an nec'h e zaoar da bedi. Eur feiz virvidik a bare war e zramm gant eur skleur hevel ouz liou al loar. Nebeud goude, oc'h ober ein ar groud a-ue'h d'ar c'holan yen : "Plijet geneoc'h," emeañ, "Tad, Mab ha Spered, lakaat Ho kalloud da skedi o tazore'hi d'ar vuhez ar c'horf difiñ-mañ ! Hor grit, m'Ho ped, evit ma tigoze d'ar sklerijenn an daoulin-dail ha ma vint test eus Ho madelezh vuzudus ha divent !" Hag e lavaras c'hoaz : "Sav, den yaouank, da veuli da Grouez ha da zougen testiñ ez eo, e gwirionez, Hor Mestr hag Hon Aotrou !"

War e gomz e savas Jarnitin bec-buhezek hag an holl, saouzanet gant ar sabatur, a veule Doue hag an abad santel. Gralon a glaskas trugarekaat Gwenole, met al leen en em dennas kuit en eur levezout : "Az pezh soñj, roue, eus da bromesa !"

Echu a oa goul an trec'h, rak den ne gredas redek dre gêr da glask plijadurioù direiz hag e chomas goullou an tavarnioù en deiz-se.

C'houezekvet pennad

Kaourintin, kenta eskop Bro-Gerne

"Antronz goul trec'h an Naoned hon eus gwelet lida e ker-Iz, emedo Gralon etre daou venoz, distrei da Gemper, e-lac'h m'her galve prederiou e garg a roue, pe chom er gended da c'hortoz maro an eskop Gourmaelon a oa war-nas leuskel e huanad diweza. Tremenet en devoa an noz en e balez e-unan, e Iz, hep kousket nemeur gant ar soñj eus e verc'h emedo he zud-koz o stumma diouz o doare ha gant ar gentel galet a roas Gwenole deaf dirak e sujidi. Dutañ e-unan ec'h anzave e oa reiz teñsadenn an abad hag en devoa dellezet ar gourdrourz garo a loske e vrazoni a brifs.

Morc'hed a save ennañ d'an dievezted a eure deaf leuskel Ahez gant e dud-kaer a raje anei, eun dre anat e oa bremañ, eur brifsez digristen ha distag, a galon hag a spered, diouz gouenn ha sevenadurez Breiziz. Hep ampella hiroc'h e oa ret, eta, lakaat harz d'al levezon kemeret warni gant Cornelius ha Patricia hag, evit-se, he zenna diganto. Hogen, ha c'has gantañ da Gemper da vev en e gastell digenvez, e-touez tud a vrezel, ne vije ket eur gavandenn blijus na dereat d'ar verc'hig. Gwalloc'h e vije, d'e veno, e teuje da chom e kêr-Iz, ar pezh a roje tro deaf da zigemerout e grouadur en e balez, hep tabut nag enebiez e-berz he zud-koz. Ha ne vije ket diez seveni seurt mennad, pa n'en devoa mui nep abeg d'en em zerc'hel e Kemper e penn e gadourien, o veza ma rene ar peoc'h ar vro ha ma ne grede ken ar skraperien estren tastaat ouz he aochou. Ya ! ha pa vije eun eskop nevez war-lerc'h Gourmaelon, a roje deaf ar c'hastell a save e dourioù uhel etre ar steroù Dded ha Teheir hag e raje eus Iz kêrbenn Bro-Gerne.....

Emedo ar roue da vat gant ar prederioù-se pa zeuas Leuhemel da gemenn deaf e oa maro an eskop. Eul leon eus an eskopti a oa o paouez dont da zigas ar c'helou. "Doue d'e bardono !" eme C'halon trefuet.

"Eur c'hille mat e oa din ! Eomp d'ober eur weladenn d'e gorf santel ha da bedi evit e ene ma'z ay war eun d'al levezon peurbadus !"

Raktal e voent war varc'h ha kosker ar roue o ambrougas betek an eskopti.

Er sal vras emedo ar varvskañ, warni ar c'horf maro gwisket gant e zilh a brife an Iliz hag e gammel a bastor en e gichen. Digleñk, noaz ha yen e oa mogerioù al lec'h, bodet ennañ, e-tal ar c'hellan, leoned o sal-menni pedennou hir a darze diouto o hirvoud hag o dispriz da vuhez ar bed-mañ hag o hirez da hini an nefvou.

A-gevred e kiljont da leuskal Gralon ha tud e lez da dostaat ouz ar varvskañ ha da zeulina didrouz dirozi. Ken mantret hag ar venec'h e oa ar re-mañ gant ar c'holl eus o zad speradel hag e pedjont a galon evitañ, endra ma tourenne daoulagad o aotrou, doaniet bras gant maro ar c'hilla hag ar c'huzulier a gare.

A-benn eur predad, e c'halvas Gralon an tad Distin an Bolog dave-tañ da c'houlenn pe da vare e vije douaret an eskop. Hemañ a respontas e vije diouz grad ar roue e-unan a lavaras neuze a karje lakaat beradi Gourmaelon tri deiz diwezatac'h evit m'o dije amzer, heñ da gas ar c'helou a-dreuz a rouantelez a-bez, hag ar re a vennje dont d'an douaridigez d'en em gavout e Iz e pred hag e mare. Mat e kavas Distin mennad Gralon a roas urz kerkent da Leuhemel da lakaat embann ar c'hañv e pep lec'h ha kemenn an deiz hag an eur ma vije douaret an eskop santel.

x

x x

An deiz-se, avel boaz, emedo pep hini gant e gefridi e Lezkobed. Ar gelennerien a roe kentelioù da skolidi sketus ha darn eus ar venec'h a bede Doue, e-keit ha ma ploustr eun darn all gant labourioù an ti hag an atant. Tachennou ec'hon a oa bet digoadet ha difraostet hag an douar atil, nevez aret ha dare da zigemerout an hare, en em astenne leden stre al leandi hag ar c'hoad meur. A bep tu e oa sioul pep tra, koulz lavarout, na glevad, bep eur mare, nemet kan eun evn bennak o klask e voued ha begeliadennou deñvad o peuri a peurvanou pell ha digenvez.

Tri marc'heger a gerze war ar wenodenn a gese d'al leandi hag unan anec, Gralon an hini e oa, a lavaras d'an daou all, e chapalan Tudal hag e bennkadour Leuhemel : "Pall 'zo n'on ket bet distroet d'al lec'h-mañ a rois, e prof, d'ar penadour Kaourintin. Ne anavezan ket ar c'hoarnad, kent c'hoaz eur goullec'h anec, ha bremañ re-bar d'ar wella atant a zo dindan heol Doue, e Bro-Gerne. Biskoaz n'em bije kredet e oa bet grêt emañ eul labour ken marzus panavet her gwelan gant ma daoulagad !"

- Ha distar tra, eme Dudal, "eo al labour-se kaset da benn gant menec'h

kalonek Kaourintin, e-skoaz an hini a bled bremañ gantañ. Sefjit en niver bras o ziskibien a vez kenteliet ha kelennet bep bloaz an e skoldi hag a zeu da veza beleien ha prazegerien al lezonn santel d'ho pobl !"

- Ha ret eo menegi ouzpenn, a lavaras Leuhemel d'e dro, "mbien yaouank ho tiarned hag hoc'h uhelidi a gav emañ kelennadurez ha gouiziegez war draoù an nefv hag an douar hag a re anec goured dallozek d'ho serviche, er peoc'h hag er brezel, ha da gemerout luc'h o zadou, eun deiz bennak, e penn ho kwizien !

En em gavet e oant dirak eur porrestel digor hag ez ajont tre a leurenn frank al leandi. Eur manec'h o c'hlevas hag a ziradas daveto d'o fedi da lakaat troad an douar, hag, e-keit ha ma tiskennet diwar o lônad, ez ees da gemenn d'an tad leon e oa, er porz, tri marc'heger ouz e c'hor-toz. Da c'houde e tistroas, andra ma kuitas Kaourintin e sal studi, da gas ar marc'had da vousta d'ar c'hraou.

Ar pennleac'h anavezout Gralon, a stous dirozañ hag a hetas deñv ha d'e zao gavandad donedigez vat an e di. "Roue heol ha madeleuz, emañ, "abaec ma fizjoc'h ennon an ti hag an douarou talvoudus-mañ a ro-joc'h da dud Doue evit E vrasa Klod, n'em eus ket bet an anor d'ho kwelout war ar glad e dean d'ho prokusted. Eun eurvad divent eo din e teurvezit dont d'am beta, me al leon paour, izelek ha dizellid. P'ho po debret hag evet ouz hon taol d'an em gennerra war-lezoc'h ho marc'hadenn skuzius, e vo bras ma levezet o tiskouez deoc'h ar gwellaennou o deus digaset emañ ma breudeur er C'hrist, dre o dalc'husted, o foaniou hag o nerz-kalon."

- Tad meurbad santel, a zistagas Gralon, tefval e zramm, "daoust d'ar blijadur hor befe oc'h arvesti, gant estlamm, ouz ho labourioù marzus hag ho savadurioù nevez, na c'hellimp ket dalea pa'z eus c'hoarvezet eun darvoud grevus hag hon laka mantret ho trubuilhet. Diwezatac'h, pa vimp dieñkresoc'h, e kavimp dudi o weladenni kement a blijjo ganeoc'h diskouez deomp."

- Ha petra, aotrou, m'ho pad, a c'houlennas Kaourintin, "ma n'eo ket bezet ouzin gouzout kement-se, petra ho laka chalet hag a zo oc'h ho proude da zistroi war ho kiz a-vec'h digouezet ?"

- Eur c'helou glac'harus a zigasomp deoc'h, leon mat, a ziskla-rias ar roue : "Gourmaelon, eskop santel Iz, a zo maro Jious ! Douaret e vo a-benn tri deiz ac'hann ha spi hon eus e fello deoc'h dont da ambroug e gorf betek an iliz hag ar vezed."

- Ra vo e ene gant Doue, hon Aotrou ! eme ar pennleac'h o sevel e zaoulagad d'an nec'h. Hep mar e vin e Iz d'an deiz tonket evit a zouara ... Evelloc'h ez on enkeniet gant an diseur kalet a lam digansomp eur sant ken leun a vadelaz hag a furnez. Hogen youl Doue bezet grêt pa'z eo pla-nedenn pep hini ac'hannomp tremen d'eur vuhez all pa vo deuet e aur ! Pedomp evitañ, mar kirit, m'en devo trugarez dirak e Varnar !"

E vouez a savas, dilorc'h ha gant feiz, da erbedi ouz Mastr ar mazo hag er vuhez, evel en eur c'himiad hiraezus, ene an hini a gouzient desañ. Ha Gralon, neuze :

- Eur c'holl bras eo deomp," emeañ, "mazo hon eskop karet Gourmaelon. Ha piou, bremañ a gemero e lec'h ? ... Ya ! piou nemadoc'h, Knourintin, pa n'eus den all ken dallezek ha c'houi da veza lakaet e penn kristenien ma rouantelezh ha ken barrek d'eo ran ha d'eo heñcha etremek ar Baradoz ? Goude beza galvet davedon skilbrjenn ar Spered Glan, em-eus ho tibabat evit ar stad uhel ha pounner-se hag e teuan da c'houlenn ouzoc'h asanti d'an dilunn a ra an Aotrou dre ma mouez."

Eur predad e chomas divarc'het ha skodeget Knourintin.

- Biskoaz," emeañ, "n'em bije kredet ho pijs soñjet ennon, p'evig douar ma'z on-ne, evit eur garg ken grevus hag uhel, pa'z eus kenant a velleien all kalz barrekoc'h egedon dre o santelezh, o gouiziegezh war ar Skritur Sakr hag o ansoudegezh eus an eneo ! Ho trugarekaat a ran evit eun enor ken dibaot, met ho pedi a ran d'am lauskel gant ma leand ha ma skolidi, da veva emañ gant doujañs hag e peoc'h Doue ... Unan all a gavoc'h, hep mar, gouestoc'h egedon da samma ar gefridi a vennit fiziout ennon ha, gant skoazell an Dreinded a bedin a wir galon evit se, e tiskochoc'h ar beleg a zeroe ar gwella war ar gador a eskop."

- C'houi eo ma den," a droc'has ar roue, "hag e nep lec'h na gevin koulz ha c'houi ! Bezit madelezus a-walc'h, eta, da senti ouzin oc'h asanti d'am mannad !"

- Salokras, aotrou !" a lavaras al lean. "N'on ket evit rei deoc'h eur respont dioustu. Ezomm am eus da bedi, da brederia ha da gnout ali ma zad kofesour a ze oc'h ober pinijenn pell ac'hann. Pa vo bet beziet hon tad Gourmaelon, ez in betek ennañ hag, a-benn eur pemzek deiz bennak, e ouezoc'h, ye pa nann, hag heñ e tlein asanti d'ho koulenn."

O verzout e oa bouc da gaut eur respont vat raktal, ez eas Gralon hag a zaou heulier da brede ouz taol ha, p'edo o kuitant al leandi e tigavas da Knourintin e bromesa da soñj.

- N'ankouait ket," emeañ, "e rankan gouzout ho menoz a-benn an termen tonket ! Hag o zri e kimadjeont diouz al lean kelenner.

x

x

x

Dilorc'h ha meurdezus war-eun-dro e voe douaridigez Gourmaelon. Leun-tenn e oa an iliz gant eun engroez ma c'helled niveri, diredet a bep tu, ar rous gant e lez, uhelidi all a bep tolead, hiniennou all eus ar gooded ha tud vunut e-laiz. Kalz deust a-bell o devoz graet eun hont hir ha roudu ar skuizder a bare warno. E-kreiz al lec'h santal, war eur bank-kafv, emedo korf an eskop, e-barz eul laouer vaen, hervez ar c'hiz. Evel-se eo e veze miret relegou ar ze vreo a venned darc'hel da gehelia.

An abad Gwendole a lavaras an oferenn ouz an noter vras, eur bagad goured gouestlet da Zeus a bep tu dei, pennleand ha menec'h penedourien digenvez. O c'hano e oa ledan ha don hag a sile er c'hoec'hannou, war-eun-dro, eun nac'h strafuilhus rak tonkadur kavrinus mab-den hag eur spi kennerzus e reizded trugarezus Doue. E-doug al lid e pede gradus an ilizad hag, e-touez an astud, e oule hiniennou d'ar madobourour tremenet o skoras e pep doare, hervez e c'halloud, e-karz an amzer ma voe ganto.

D'an diwez a voe douget ar c'horf d'an douar hag an engroez an em zisrannas da vont pep hini diouz e du. Ha Knourintin, enkrezet bepred gant ar goulenn en devoz graet Gralon outañ, a zistroas d'e leandi da reizza ennañ pep tra a-barz ma'z aje da glask ar c'huzul en devoz ezomm. E lozkebed, e tibabas da vest, e-keit ha ma vije gant e droad, an hini eus e venec'h en devoz ar muir fiziñs ennañ. Hannez ive, ma vije galvet d'eur garg all, a renje al leandi hiviziken. Neuze, sioulaet ha didrefu ha dare da bleaga da youl an Aotrou, e roas d'e ziskibl, evel eun tad spe-redele e vont da guitaat an douar, e fura ha karantezus alioù evit ma ken-dalc'hje gant an ero en devoz toullat eno evit mad ar feiz ha klod Doue.

Antronoz emedo Knourintin a-bred war sae o tiskenn war-zu ar c'hreisteiz d'e leandi karet. Pa voe war-nes da goll ar gwel ennañ, e sellas outañ gant ar vrasa karantez, evel ma vije bet ar wech diweza her gwela, hag e savas e zorn d'e vanniga ha da gimidi dioutañ.

A gammejou hir ha dilu e karza dindan an heol mintin skilr ha splann a lakas da alaouri delioù melenat ar c'hoedsier glep c'hoaz gant ar gliz. Kaerder ar maeziou peuz-didud a sile estlemm ennañ hag, hep ehan, e voule Doue evit E oberou burzudus. E-sor ober hent, e talc'ha da bedi, leun e spered eus galloud ar C'hrouer a dennas an douar ha bedou an eabl eus netra.

War-dro kreiz an deiz, e tigouezas ouz tor Sann Nin, eur menezig sezr a save e lein war lez ar stêr Aon. Eno ac'h eure eun diskiuz da zibri eur grouenn vras ha da eua eur benne dour hag e termouas da gurzout a nevez. A-hed ar stêr ez eas hag e treuzas evel-se an toleadou a zeuas, diwezoc'h, da veza parrezioù Sant Koullid, Lotai, Goezeg ha Sant Toz. Ha diouz an noz, diwezat anei, rak rouez meurbed e oa an henchoù ar vro dor-gennek-se, ac'h en em gava e-tal dor logellig banal ar penedour Prinsel hen digemeraz gant fouge ha laouenedigez.

War-lerc'h ar goan zister a gemerjont a-gevred, e tieplegas Kaourintin d'ar penadour pe abeg hen digase betek ennañ. "Aon am eus," emeañ, "na vefen ket dallezek eus fizizha ar roue da gemerout lec'h hon eskop santel Gourmaelon e penn kristenien Bro-Gerne. Ma galvedigez, d'am meno, a oa chom, e-doug ma buhez, da bleustri e Lezkobed gant ma menec'h ha ma skolidi a garan kement. N'en em gavan ket barruk da bleidi ervat gant an travall drestus hag ar gefridi bounner-se am laka war gren da fazia enni. Perak on-me bet galvet dei, pa anavez Gralon tud gouestoc'h egedon, evel an tad Distin ar Brelag pe an abad Gwenola, da skouer ? Hemañ avat, savet gantañ lenn nevez ha brudet Landevenneg, ne asantfe biken d'eur seurt tra ...

Ma lusk kenta am dougas da lavarout nann d'ar roue, met ken birvidik e oa e c'hoant ma c'houlennis outañ pemzek doiz d'ober ma soñj, ovit kaout tu da gnot kuzul diganeoc'h. M'ho ped, eta, da brederia a-zovri ha da roi din hoc'h ali da c'houde."

Primeal a selhoue Kaourintin gant evez, hep klask troc'ha deañ e gomzou, eur mousc'hoarz diant hag hegarat war e ziwauz. Eun den koz-douar e oa, torret e gein gant e oad vras hag set kabac'h e izili gant ar remm hag an urlou. E vuhez hir en devoa tremenet en e logell diwasked diouz an holl aveliou, e-kreiz an dienez vrasa, o pedi dalc'hmat hag o kastize o gorf er c'hria piniennou. Dre e veza bepred daoust da bep tra, ken dreo ma oa bet arvet "Ar Sant laouen" gant annezidi stankenn ar stêr Aon, e amezaien.

- Skuiz oc'h, ma mab," emeañ d'ar pennleat, "hag eun nebeud eurveziou kousked a ray vad d'ho korf ha d'ho spered. Eomp da c'houvez, eta, hag ac'hann d'arc'hoez, rak peurliesha e choman dihun a-hed an noz, am bo amzer da soñjal er gudenn a zo oc'h ho tieza. Pa vazoc'h war sac ha lavarat hoc'h oferenn ganeoc'h, e livirin deoc'h ar menoz a bedin Doue da roi d'an denig keez diouizisk a zo ac'hanon."

Antronoz, mintin mat, e savjont o-daou diwar an dornad raden sac'h a dalvezas deo da wela. Dioustu, war o daoulin, e veuljont Doue, evel ma raent bennez d'an hevellep koulz ha Kaourintin a brientas kement a oa ret evit e oferenn. Aet e oa Primeal ne ouie da be lec'h ha, daoust ma ne oa den d'e respont, ar pez a gavo iskis hon lennerien moarvat, e kinnigas an aberz santel. Kement-se am eus kavet en eur skrid koz hag a lavar e welas Kaourintin, pa voa echu gantañ e oferenn, ar penadour koz o tistroi d'e logell gant eur podad dour a oa bet o kerc'hat d'eur faunteun a oa pell bras ac'hane. Santet en tu all d'e neuz, e rae bac'h ar c'hoziad hag e c'houeze e dal e-ser poonia da sevel gant ar gres'henn. En arbenn deañ ez eas Kaourintin d'e zisamme ha, gant truez outañ, e sankas e vaz en douar o pedi Doue da lakaat eno da darza eun sienn dour sklêr. Kerkent ac'h en em reas ar burzud, rak eur stivevell grev a strinkas etre daou vaen, en eur hiboudi laouen war an dinac'h a gase d'ar stankenn. Ken plijet e voe Primeal gant an d'arvoud m'en em daolas

d'an douar da veuli Doue ha da drugarekaat Kaourintin. "Met," emeañ, "penaos e c'houezin bremañ ma Baradoz, pa n'em bo mui d'an em skuiza evit mont davit dour ?"

- Bezit dieñkraz," a lavaras ar pennleat, "ho Paradoz hoc'h eus gounezet pell 'zo dre ho pedennoù talvoudus hag ho piniennou kalat. Hagan, tad karet, mell a zo warnon da c'houzout hoc'h ali diwar-benn ar gudenn am laka ken chalet. Pe respont 'ta a dlean roi da C'hralon ?

- Ma mab ker," eme Primeal, "pell 'zo ne gouskis ket ken c'houek hag e-doug an noz-mañ. Nijet e oa diouz ma izili morzat ar remm hag an urlou a zo boaz d'am dalc'hez dihun. A-greiz-holl, ken skedus o daou hag an heol banniget, e paros dirazon Santez Anna ha Sant Mikael : "Lavar da Gaourintin," emezo," eo heñ an den merket gant Doue ovit beza eskop Kerneviz ! Bras eo e furnez ha brasoc'h e c'hoez e santalez, hag, endra ma vo eno blenier an eneo, a vleunio ar feiz e eskopti Kerne !" Ha goude, ho kwelis, en eun iliz kaer maurbed, gouzevet dirak eun arc'haskop o roi deoc'h an olaou ankr ..."

Skoat gant ar brasa souez e chomas Kaourintin ha dic'halloud da gomz e-pad eur predad. Stazfulhet e oa gant ar soñj e ranke asanti da c'houez-hemenn an Aotrou ha dilouskel ar pez en devoa graet, betek neuze, e eurvad hag e levenez. Ha, didrouz, e kouzie d'e venec'h, d'e skolidi ha d'al leandi sioul a selle ouz ar mor diwar dor ar menez.

Digresket e drefu, e lavaras hapken d'ar penadour :

- Ra vo graet hervez youl santal Doue pa'z on dilennet gantañ ! Bremañ ez an da giniadi diouzoec'h da gas ar c'helou da C'hralon."

- Chomit emañ da dremen eun nebeud deveziou ganin," e silgerias Primeal. "Talvoudus a vo din ho kevandann hag, e-doug an diskuiz a rooc'h am ser, ho pe tro d'an em noza, dre ar bedenn, a sell eus menned Doue an ho kaefer."

Evel-se e voe divizet hag a tremenas Kaourintin meur a zevaz gant Primeal, o daou bepred predariat gant braster Doue, kevrinou ar feiz kristen ha finveziou diweza mab-don. Bep eur maza ez sent da sveli o funn war c'hlan dudiuz ar stêr Aon pe dindan ar gwez bras a zisheoliz an taled hag e veulent dibaouez kaerderiou ar Groundelez.

Eun deiz e kinnigas ar pennleat diouz ar penadour hag e kemeras penn an hent da vont da Iz. E-pad pell e kerzas ha diouz an abardouz, aet d'an eurvar o vale, ac'h azozas da ziskuiza, war laz Koad an Neved. Trouz a gleves a-droev e gein hag e tistroes e benn da sellout. Eun den, o tost-tant prim, a c'halve en amc'houlou :

- O ! tad mat, pebez eurvad eo ma hini p'ho kwalan distroet da vadomp ! An holl emañ a deus kerse deoc'h hag a hirvoud gant an dienez deoc'h !"

- Piou a gleskit, ma den mat ?" e c'houlennas Kaourintin, sebezet.
"Ne don ket, moarvat, an hini a gredit !"

- Ma digarez a c'houlennan p'am aus faziet !" eme ar gour."Ho kemeret em boa evit an den santel Ronan a zo dianket diouzomp. Abaoe, siouez ! n'on ket evit ehana da lefa deñ deiz ha noz.

- Dianket Ronan ? Ha da be lec'h e vefe ast, heñ ken stag e galon ouz annezidi ar c'hond-mañ ?

- Allas ! n'ouzon mann diwar e bann abaoe ma'z eo ast kuit tost da viz' zo. Ha setu ankeniet tud ar c'hoad o klask gouzout petra eo deuet o zad da veza, ha ma, e wella kille, gwasoc'h eget ar re all hap mar.

"Ma ano 'zo Gourkuñv hag, ezalek an deiz m'en em gavas Ronan en hor c'hoznad, e voen gounezet gantañ d'ar feiz kristen. Ar vadiziant a roas din ha d'am bugale, ha kalz re all, distaget gantañ diouz o fals-doueoù, a zouas ive da anavezout Doue, hor gwir Dad. Hogen eur vnouez drok em aus, anvet Keben, hag hi eo a voe kiriek d'hon dizeur. Barr gant ar fallgriez a c'houez omni an Aerouant, hep paouez he deus heskinet hon tad Ronan e pep doare. Betek e damall a eure da veza lazat hor merc'hig mazo gant ar c'hleñved hag a adkavas ar vuhez dre an dazorc'hidigez vuzudus dleet da bedennou hor penedour santel. En abeg d'ar burzud-se ha d'he eon rak kounnar ar roue en devoa gourdrouzet he c'hostiza ma kendalc'hje da hega ar penedour, e kuzas pell amzer he c'hasoni. Hogen, navaz 'zo, eur gaouad fallentez diaoulek he dougas da zispenn brud vat ar sant o troukprezeg e oa eun den a vuhez fall hag eun avoultar pilpous ... Ha Ronan, heugot gant falleni ma fried ha dic'helloud da c'houzefav hiroc'h he zootadou binimus, a zo ast diouzomp n'ouzon ket da be lec'h."

"P'am aus ho kwelet, e tridas ma c'halon o kredi e oa distroet Ronan davedomp. Bemdez her gedan en enez hag e kellan ar fiziañs d'her gwelout morse ken.

"Hogen, tad mat, p' hon aus kollet hor sklerijenn ha p' hon aus naon aus komz Doue, marteze e plijfe ganeoc'h chom en hon touez d'hor blenja war hent ar wirionez ?"

- Allas ! Gourkuñv, eme Kaourintin, tener e vouez, "d'eur gefridi all on galvet ha ne c'hellan ket senti ouzoc'h, daoust pegen bras a vefe ma c'hoant d'han ober. Met bezit dienkreiz rak, a-barz nemeur, em bo ar galloud da roi deoc'h ha d'ho kenveoiz eur baleg d'ho frealzi ha d'ho kalenn. A-hend-all eur vouez a lavar din e tistroy Ronan amañ, beo pe varo. Ma vez e buhez, e vo gwel a ze deoc'h ha ma vez mazo, e relegou santel a skuilho o bennoz e bro an Neved hag he gwarezo diouz pep droug."

Distanet e voe da c'hlec'h ar c'hozdour hag heñ da lavarout :

- Ra zeuy ho komzou da wir, tad mat; fiziañs am aus ennoc'h hag enno! Met setu deuet an noz hag hir eo c'hoaz, hep mar, an hent hoc'h aus d'ober. Ma vennit diskuiza ha kousket ac'hann d'arc'hoaz, e kavoc'h bod e logell Ronan

pa n'on ket evit ho tigemeroù em zi soul dre an abeg d'an drougriez a vag ma fried ouz tud Doue. Ma rit ho menoz da dremen an noz e logell ar penedour, marteze oc'h oferennoù arc'hoaz hag e c'hellimp, eun nebeud kristenien ha me, an em gennereza eus gwad ha korf ar C'hrist, hon Desprener."

Heulia a eure Kaourintin ar c'hozdour betek logell Ronan e-lec'h ma kouskas, betek tarz an deiz war c'houvezenn baour ar penedour. Antronoz e lavaras e oferenñ dirak eun nebeudig kouezien deuet, evel Gourkuñv, da gomunia, hag heñ odarre, da gendalc'her gant e hent.

A-bred e tigouezas e palez Gralon hag e displegas d'ar roue petra a oa en em gavet gantañ penn-de-henn, e waldann d'ar penedour Prismael, hufvre burzudus heñ hag an asant en devoa roet da c'hozdour hemenn Doue her galve da eskop e rouantez Kerne. Bras e voe laouenedigez ar priñs o klouet an doare : "Trugarokaat a ran an Aotrou," emañ, "p'En deus touzvezet salaou ma fedenn ! Klod ha meulodi deñ ha ma anoudegez deoc'h, Kaourintin, kenta eskop Kerne, rak Gourmaelon, an den santel, ne oa e gwirionez nemet hini Iz !"

Goude e voe ono ganto eus lidou ha lec'h ar sakradurez ha Gralon da lavarout :

- E Tours, e Bro-C'hall, e vennan a vo roet deoc'h an oleo. Setu amañ lizerou, sinet ha siellet ganin, da roi d'an arc'heskop, da c'houlenn ma plijo gantañ ho sakra eskop hag e bedi da c'houlenn warnoc'h bennoz santel Doue. Kerfant ha ma vezoc'h dars ez eoc'h an hent gant ar velenien hag al lenned a gemeroù d'hoc'h embroug. Setu amañ arc'hant da brasa mire'hed, dilhed ha kement a zo ret.

- Ha ret eo mont betek Tours ?" eme an danvez-eskop. "Ha ne soñjit ket e vo eun digarez d'ar C'hallaoued, diwezatoc'h, da lavarout e vo iliz Bro-Serne dindan beli hini Tours pa anavezit notrouniez hac'h arc'heskop ? Ha ma'z afen da gavout panniliz an Naoned pa hini gwened a zo c'hoaz tostoc'h deomp ?"

- Nann," a respontas ar roue, "eun arc'heskop eo hoc'h urzio pa 'z eo gouz'hemenn Doue, hervez hufvre Prismael. Da Dours, ets, e rankit mont !"

- E Breiz Tremor hag e Iwerzonn ez eus arc'heskibien eus hor gouern hag eus hor yez, roue. Padreig, abostal meur an enez-mañ, ma n'eo ket kelt dre ar gwad, a zo eun Iwerzonnad penn-kil-ha-troad dre ar galon hag ar speud. Hag eun enez bras e vefe din beza askobet dre e zorn. E-lec'h kuzout da greiz Bro-C'hall, keit-se diouzomp, e vefe gwel din ober an treiz d'an tu all d'ar mor."

- Ne vern, a gradan," a droc'has Gralon, "gant pe arc'heskop, latin pe galt, e vezoc'h lakaet e renk priñsed an iliz. Deol on da Sant Martin bet kadour gwechall ha deuet, dre c'hvas Doue, da veza arc'heskop Tours. Gant an hini a zalc'h e lec'h ar gêr-se, a fell din e vezoc'h urziat."

Das e voe da Gaourintin plaga ha, goude beza kiminet diouz ar roue da zistroi da leandi Lezkobed evit an difrsoù an devoa d'ober a-sack e ergerzadenn da Doure.

x

x x

Ne heuilhimp ket an danvez-eskop hag e embrougerien betel kêrbenn Bro-Dourania, rak n'eo ket meneget er skridoù a zo en hor c'herz an digemer a govjont eno a-bez an arc'heskop. Tro a zo da grudi e voe eur gwall droiad o hini hag hegarat ar prelad uhel en o c'hefver. Galon, moarvat, ken pinvidik ha ken brokus, ne fazias ket da ginnig profou largentez d'an hini a gendalc'he gant labour Sant Martin er rann-se eus Bro-C'hall hag, hep mar, e voe graet lidoù ar sekreted gant eun ton dibaat ha leun e splander.

Ha p'en em gavas adarre Kaourintin hag e strolled dileuridi e Kerne, e c'hallomp kredi e voe bras fouge an holl gant o eskop nevez hag e voe trugarekaet an Aotrou a vouez uhel da veza galvet da dad kristenien er rouantelezh an dallezeka leon e oa enni.

o

Seitekvet pennad

Ar varc'h a-ennep an tad

Kenta tra e eure Galon e voe lakaat Kaourintin da barc'hann war gêr gloz Kemper e-lec'h m'emedo e balez o zeus neuze da veza hini an eskop. E-keit-se ec'h en em denne ar roue e Iz lakaat da gêrbenn ar rouantelezh.

E Kemper ne oa nemet eun iliz diester ha re vihan hiviziken evit annezidi er goaded nevez o kreski hag oc'h en em astenn tamm ha tamm. Prederiet gant ar soñj da gaout eur penniliz dallezek eus an eno-se, e kleskas an eskop skozell ar gouizieka leon war skiant ar savadurioù hag, e-keit ha ma save hemañ ar rektres eus al labour a oa d'ober, ez eas da lann Wenole, brudet dre Arvorig a-bez ha kresket anni souezus an niver eus ar goured yaouank a venne en em ouestla da Zoue. Kentelist an devoa e-unan, en e skoldi Lezkobed, eun nebeud danvez baleian a lakaio o penn ar parrezioù en devoa ar menoz da sevel en toleadou pagana. Hogen re nebeud e oa anao evit diges e berr amzer holl baganed ar vro d'ar feiz wirion. Dirazañ e kave oc'h en em astenne eun adag ken ec'hon hag ar mor, dare ha mat da veza madet, hag ez oa bihan e galon o walout pagan skort e oa e gouch eosterien.

Komz a eure d'an abad eus e brediri, rak doaniet oa hemañ, avel-tañ, gant ar stad truezus m'emedo enni, e-kefver an abostolerez kristen, ar c'hornadou brasa eus ar rouantelezh. E vennad a oa ober eus eur c'halz eus e venec'h, baleian a gasje e pep lec'h da brozeg an Aviel d'an dud dizek aneañ ha da vev eun o zouez. Landevenneg a zeuje, eta, da veza eur vagered prezegerien santel pe eur gwir gloardi da noza baleian dasket war an holl skienchoù, droist-holl war an hini a gas d'ar silvidigez. Hag e c'hrestes Gwenole da Gaourintin o taolje war an eskopti eur rouedad leoned santel gouest da ziswrienna dioutañ al louzeier fall ha d'e droi en sul liorz kenedus fichet gant bleunioù kaer ar feiz kristen.

Eur c'heal dudiuz da glevout e voe d'an eskop ha dic'halet e tistroas da Kemper da bleidi gant an traoù all e oa war e spored. Nebeud goude,

dre ma vezent kavet gouest gant an abad, e Kerze diouz ar gêr, e-unanoc
peurliesad, kerdourien ar pœc'h karantezus e dlle aloubi rouantelezh an drouk-
spored, hag ha gounit d'an Aotrou Krist. Evel-se ec'h en em strewas dre
Gerne, Leon, Bro-Wened ha pelloc'h c'hoaz, e kantadou ha kantadou a lec'hio
ma rene enno an tech hudur d'ar fals-douaou, al leoned a hadas enno komz Doue
hag a zoug hirio an deiz, ano cuspad aneo. Evit Kerne hepken, az omp diarvar
eus lergontez Landeveneg an he c'heñver pe gavomp meneg, ar skridoù koz hag
en anioù lec'hioù, eus an dud santal a skignas enni an anaoudegez eus an
Aviel hag eus ar gwella doareoù da lakaat an douar da dalvezout. A-had an
amzer e voe eun engroez aneo, darn ankounet bremañ da viken pe anaouezet hep-
ken dindan anioù latin pe c'hallek bet roet deo gant an iliz roman a-kerz
ar c'houezekvet kantved, darn sill avat, a drugarez Doue, beo an savor aneo
dre ar buhezioù skrivet war o leze'h hag ar pardonioù a lider en enor deo.
An anaoudegez-veat a dlemp da gaout ouz ar sent peuz-dianavez-se a ziaze-
zes ar feiz an hon eskopti em doug da envel emañ meur a hini evel Palas,
Tudal, Idonet, Te, Sula, Riwall, Gweog, Ritien, Rotien, Gwegan, Harzog, Mael,
Helog, Marwel, Ritog, Trovan, Gwargwenn, h.a.

Disammet diouz ar pezh her chala ar muia, ec'h en em roas Kaourintin
evel eur meañer aketus, da reiza arvat kement a oa d'ober evit mad an deved
fiziet ennañ. Sevel a eure reolennou fur ha talvoudus, ken d'ar veleien o-
unan, ken d'ar gristanien, hag e prezege Doue d'ar bobl, bewech ma kave tro.
Hag e-ser pleustri gant al labour-se, e veze alies, gwisket e-giz ar paouza
leañ, o tarbari mein ha pri d'ar vansonerien a save e benniliz.

Hag an eskop, leun a spi an amzer da zont, a dride e galon o welout
e kerze gantañ kement tra war an tu mat hag e oa, hep mar, gwazozet e oberou
gant an Aotrou.

x

x x

En e balez, e Iz, e oa en em dennet Galon hag eno e veze gant tud
a lez niverus, e wella skourerien pe aloubas korn mervent Arvorig. Ac'hano
e plede da c'houarn a rouantelezh ha bemdez e rede kannaded dre holl da zou-
gen a urzioù pe da zigas deañ ar c'hemennoù a c'hortoze ar yarled hag an
diarned a c'houc'hemennoù, en e ano, war e vadou. Brasa preder e uhelidi a
veze kavout bemdez eun diduall nevez d'ar roue, enost evelto da renkout beva
an eur geoded mageriet uhel ha pell diouz ar c'hoajou don ha glas a geuzient
deo. Setu ma veze gantañ hemole'hadeg alies, ar pezh a roe tro da aveli ar pen-
nou ha da vont d'an tuz bras gant ar marc'hed brezel diskuiz ha leun a fê.

Hogen, distarret e oa ar priñs o vont bemdez muic'h-mui war
an oad ha gant ar roue a bege ennañ da zigas deañ da goun na oa ken eur
gour yaouank.

A-nebeudou e roueas e hemole'hadennoù hag ec'h en em ouestlas
seul welloc'h da gelennadurez e varc'h. Tennat an devoe Ahez digant he
zud koz hag he digemeret en e balez. E vrasa c'hoant a oa ober anei eur
gristepoz doujus ouz lezenn Doue hag eur Vreizadeg penn-kil-ha-troad.

Ankeniet e oa ar brifsezig o kuitaet palez Cornelius ha Patricia,
e-lec'h ma veze graet he holl sentur outi. Morse, da c'houde, ne voe gouest
da garout he zad kement ha m'en devoe karat he zоста kerent a du he mamm.
Int-i o devoe pledet gant he bloavezioù teneza hag, ec'h ober an neuz d'
he sevel al lezenn gristen, a sile kivioul en he spared eun anebiez kuz
ouz relijion ar venec'h hanter-douzet o fenn ha gwisket ken paour ha di-
zore gant krec'hin loened. Hag ar plac'hig a gefverie, dre eul lusk nes
da veiza e ene eur bugel, ar c'henn a gave etre stummoù kardek ar vuhez
a renet e palez ha zud koz hag ar reolennou striz a heuliod o hini he
zad.

Klasket en devoe Galon da gavandadez da Ahez marc'hedigoù en
ond deñ a oa bugala viban da uhelidi e goskor. Eur intafvez a ouenn vrei-
zet, maouez leun a vadelez hag akuit war-dro ar yaouankizou bihan, en
devoe kavet da avesaat ar brifsezig hag he c'hensileñ. Gouzout a ouie en
tu d'o didui ha, da ganta, ec'h en em blijas Ahez gant he buhez nevez.

Aotreat e oa bet gant he zad da welout Cornelius ha Patricia
hep eur mare ha, da gefver an deizioù-se, e veze barr gant al louene-
digez. Eun digemar eus an dudius a gave ganto, moumounet e veze hag e
road deñ kement ha ma plije ganti. Marc'hed kilead he zud koz a zeue ganti
da c'hoari, ar pezh a ra deñ ankounet he mignonezed boaz ha ken dishevel
diouto dre o sevenadurez hag o zenn-spored kristen.

Neuze, pe veze ret distrei d'ar gêr, an devoe palez he zad doue
deñ da veza tafval, yen ha goullio. Gant an hirrez da di he zud koz ha d'ar
plijadurioù a veze ennañ, e save kasoni enni ouz he c'havandadez yaouank
mantret gant he dismagañs hag he hegadennoù outo. Ne grade ket, evelato,
anzav he c'harsa ouz he zad, daoust ha ma klaske gouzout, p'he gwela mouzet
hag eoz fall enni, ar pezh a oa kiriek d'he drougiez iskia. Hogen, andra ma
kreske ar brifsezig, e wasas deñ hag ec'h en em zistage muic'h-mui diouz
Galon ha diouz ar re a oa an tosta d'e galon, ar pezh a skuilha ennañ
tristidigez ha poan-spored.

Eun dra c'hoaz a vante ar roue ha buhez fall koedez Iz, an
hini 'oa. Ar skourioù hudur ha fallekr e roent hep an distera maz, o
c'hreizder ouz o nosa, o laezonsioù, o brazoni hag o diheganted a roe
deañ fallageloni. War e c'houlenn an devoe kresket Kaourintin an niver

eus an dud e iliz er gêr-benn. En aner e komzas prozegerien entanet hag he-
lavar ouz ar bobl disablant ha faeüs a ras skouarn vouzar ouz o c'hlevout.
Muic'h-mui ec'h en em skigne ar vrasadurez e kêr, betek tizout zoken darn
eus ar Vrestoned a oa deuet anni da chom, mare'hadourien ha pinvidien didrac'h
d'o gwell-dechou ha touallet gant ar plijadureziou difennet. Eun alfonn a
bec'hed hag a oriad en em sile didrouz, re bar d'eur c'hontamm soutil ha kuz
e encoü dincz ha glan betek neuze. Hag ar stad a bagañez ma tiskenne anni
en dud-se eus e ouenn a c'hilac'hare ar roue dreist ma c'houfed lavarout.

Savet en devos reolennou fur da lakaat harz d'an dizurz ha grest
serri ar foustiou hag al lec'hioù a vuhezgezh fall. Met kement-se ne veue
da Iziz koz ha nevez pa gavet bepred an tu da walc'ha, dic'houzvez deaß,
o gwell-youlou dirollet. E pell-bro e oa anavezot dizurziou Iz, ha pa zeus
uhelidi ostren ha kiload deaß a Vreiz Tremor d'e anludi, ar pezh a c'hoarveze
lies gwech, e veze mezekest Gralon pa rment meneg, dre zigouez, eus brud di-
zous sujidi e gêr-benn.

Pa veze re zoaniet gant ar pezh a rede diwar-benn ar re-mañ, ez se
da glask frealz digant Kaourintin pe Wenole. O darempredi a ras aketus hag
ec'h adkave en o c'hichen nerz-kalon hag habaskted da c'houzav e zizeur.
An daou sant hen alie da bedi ha da virout e fiziañs e Doue a ouezje, war
bouez gouzout gortoz hep klemm, dizella ar re aheurtet er pec'hed hag o dou-
gen da ren gwelloc'h buhez. Ha diouz o zu, o pedent hep ehan evit trec'h ar
feiz en o zouez.

x

x x

Eur zeiz pe eiz vloaz a dremenas en doare-se ha hep gwellaenn ne
zeuas da herzel fallegrioz an dud diboeil. Falloc'h-falla zoken e oant aet
ha den, pell a oa, ne lakae mui troad en iliz. Kosket kalz e oa Gralon hag,
en e benn gwenn-kann, e kosae a-nebeudou nerz o youl didrac'hus hag e spered
lemm. Enkrezet hall e veze pa soñje en amzer da zont, gant ar gour yaouank
a gemerje e lec'h e penn ar rouantelezh, goude beza santet Ahez a gemerout
da bried. Met ha plijout a raje dei an hini a zibabje da vab-kaer ha da zan-
vez-roue ?

Darempred ar boated yaouank a oa diouz grad ar brifsez abaoe ma
ne oa mui eur bugel tener. Dalc'hmat e veze unan bennak oc'h ober dei al lez,
an darn vras eus he zostennerien, hag ar re ar gwella deust doi, kenfartet
vak ha pinvidik eus ar geoded. O orbidou blizidik, o lubanerez touellus hag

o c'homzou likaouñs a hillige he brezoni, o c'houeza enni c'hoantou dreiz
hag hinez d'an droug. Bibien an uhelidi vroizat, dreist hall re an dier-
ned a veze pell diouz Iz, a gava gwell-wardok, kleuk, divarrek d'ober
geizou ha pounner en o frezoz. Na veze ano ganto, ouzpunn, namet eus tao-
liou-kaer, hamalc'h, gouran ha brezol, pa c'hartoza, eus o ferez, klufene-
rez ha mibiliez gadal.

Eun daiz, e kredas Gralon beza diskoachet er gour yaouank a zereä
da bried d'e varc'h ha da vestronia e rouantelezh pa ne vije ken eus ar bod
mañ. E ano a oa Nuz ha mab e oa da Harnin, mac'htiern er Poc'har, ha breur
da Jarnitin, an dazorc'had deuet an-dro d'ar vuhez dre vuzuz an abad Gwe-
nole, Pinvidik bras hag e ouenn uhel e oa Harnin hag anavezot evit beza
our c'hadour kadarn hag eun den poellik hag a guzul-mat. Bewach m'an dove-
ze ezomm ar roue eus e skoazell, a veze dare Harnin bepred da ziredek,
gant e vibien, da c'halv e notrou.

An deiz ma teuas da Iz da weladenni ar roue, emede Nuz oc'h a
embroug. Eur souezenn blijus a voe o donedigez d'ar priñs hag e tiskouezas
deo e euzved d'o gwelout. Eun digamer kron ha kardek a euz deo ha mour
a zavez o dalc'has gantañ en e balz.

Nuz, eur paotr kenedus, mentet ha korfet kaer, tost da bemp vloaz
waxnugent deaß, an devos tro da ginnig e c'houre'hemennou da Ahez. Halavar
ha seven e oa hag o gened a voemas ar brifsez. Ken bamet ha trefust a oa
he c'halon ma veze dalc'hmat o klask kavendenn Nuz, ar pezh a leouenne Gra-
lon o soñjal e oa kouezet e varc'h e karantez an den yaouank. Harnin, diouz
e du, ne chomas ket dizablant ouz an testenioù tener a roe deaß ar bonnherez
pempet vloaz. Ha setu ma peges anni, an eun taal barr, ar froudenn da anvez
ouz he zad e karje kaout Nuz da bried. Hag e kuzulig, dre gomzou damguz
hag oueziek, e roas Gralon da c'houzout da Harnin ne zisplije ket mab he-
mañ d'e varc'h ha, ma toujent d'en em garout, e gwirionez, n'eo ket heñ
a virje auto d'en em unani.

Hogen eur gour fur e oa Nuz, ha, bep eun tamm, o oa deust da ver-
zout e oa e geredig eur plac'h skeañ hag hep elevez. N'eo ket eur varc'ho-
denn a c'hoantez da wreg, met eur vaeuz o kaout hall berziou mat ho gened
an hini a oa. Dispar e oa koantiz he dremm a-dra-sur, eur goantiz hag a
gilhe an uheliad yaouank. Met, "Ha ken kaer eo he c'halon hag he eneb ?"
a c'houlenne heñ outañ e-unan. "Ha n'eo ket sec'h ha goull kalon gevrinus
ar plac'h-se a gavan tuet d'ar plijadureziou didalvez ha da re vras karan-
tez en he c'hefver ?"

Hag heñ d'he atersi doujus gant ar epi en devos he barnet e gnos:
- Prifsez yaluz, " emañ, "petra ho sach wir-zu annou pa vez bepred
ho sellou birvidik o para warren hag ho timeuz ruz-kerez o vouse'hoarzin
din ken tener ?"

- Eur gour hetus ez oc'h din, Nuz karet," emei trefuet hag o tridal. "Nep hini all n'eo par deoc'h dre ar gened, an neiz hag ar sevanded. Ennoc'h e soñjan noz ha deiz hag e c'hallvan dibabuez ar mare ma plijo geneoc'h ma goulenn digant ma zad."

- Brasat enor a vefe din beza pried deoc'h ha mab-kaer d'ar roue, prifsez Ahez ! Hogen, ma veizan mat ho soñjou, ez eo ar pez a anvit ma c'hened, ma neiz ha ma sevanded, a blij deoc'h ennon hepken. Ar gened hag an neiz a ye kuit gant an oad hag ar sevanded, pa vez moredet pe goazet e kalon gwreg pe ozac'h ar garantez a die d'e bried, a zeu da veza divlaz d'an nep a loosko ennañ al liamm sakz-se. Ha n'eo ket stumm ha neuz ma c'horf, hep mui ken, ho toug d'am c'harout hep pleustri da anout perziou mat ma ene ? Gant pe zooungad e selloc'h ouzin ha pe emzalc'h a vo hoc'h hini em c'hefver pa vir me sammet ha displeberet gant ar gozni ?"

"Na soñjomp ket," a lavaras Ahez, "er pez a c'hell c'hoarvezout diwezatac'h ! Greomp hor mad eus hon amzer-vremañ, eus hor yaouankiz hag hor mall da dafva an eürusted. Bezomp dibreder ha looskomp an traoù da gas; da c'houde e vo gwalet ! ..."

- Da c'houde, pa vo re ziwezat da gant keuz ?" a droc'has Nuz, tri-vliet. Daou zen, er stad a briedelez, o deus an dlead striz da veza feal an eil d'egile ha n'o deus nep gwir, ne vern petra a zeu da roufenna dour sklêr o c'hengarantez, da zistroy diouz e bried ha d'an em rei da unan all. Setu lezenn hor gwir Doue hag he zorri a vefe eur pec'hed hudur ha grevus !"

Ar plac'h divez a c'hoarzas gompas :

- Setu, da vihana," emei, "ar pez a lavar al leaned diarc'hen hag hanter douzet a vez ken niverus o ranezenni deomp belbiachou hep penn na lost. Pa vin-me rounez, o lakain da deval hag o argasin pell diouzin, ar baorien truilhek a zo aneo ! Gwechall, ar geoded-mañ, a heulie pep hini e youl pe e froudenn hag a zeule an doueou a blije gantañ, re ar binvidigez, ar beva mat ha plijidureziou ar c'horf, hep beza chalet gant lefou pe c'hourc'hemennou grofs an astud-se a ziréas da heul Gralon d'ar vro-mañ. Ha pezak ne adkavfemp ket ar vuhez dudius a renet e Iz a-raok donedigez Breiziz ma zad e Kerne ?"

- Prifsez !" a c'harmas Nuz, "janneal a rit hag a-walc'h am eus klevet ! Biken n'en em unono ar c'hristen ez on-me gant ar baganez hag ar c'hadalez ez oc'h c'houi !"

Hag, o kuitant Ahez, ez eas da gemann d'e dad pe ziviz e on bet ganto. "Ma mab," eme Harnin, "ne chomimp ket eur pradad hirc'h ar palez-mañ ! Endra ma lakai sternia hor jasad, a tiskuilhin da C'hralon fallagriez a verc'h, dnoust d'an azrouez doujus a dlead deññ ha d'an displijadur an devo ouz ma c'hlevout !"

Da genta a voe feuket brazoni ar roue gant an tamall mezus evit enor

Ahez ha, fuc'het, e tirollas da gounc'henni Harnin hag e vab. Habask hag hep riotal, e selhouas ar mac'htiern ar c'homzou kelat ha flemmus. E zigarez a c'houlennas da veza poaniet e aotrou a oa bet a-viskoaz ma-deleuzas outañ, met, o veza ma oa ken grevus an abeg a lakas harz d'e vennad e-kefver an daou yaouank, e ranke a ziskleria didroidell. Yan a voe ar c'himid ha Gralon, pa voe oet Harnin a-ziréañ, en em doolas da ouela dourek, anet deññ emedo ar wirionez gant Nuz, ar gour glan ha diwidre.

Nabeud goude, gwasket gant an anken hag an dristidigez, e klas-kas ali Gwenole war ar gwella doare da lakaat poell ha furnez e spered a verc'h ha d'ober anei eur gristanez derant, o skerza diouti ho youlou fall hag he c'hoantegeziou dizonest. Divizout a eure an abad gant ar briñsez ha ken gwall-skoueriet e voe an den santel ganti ma voe frêz deññ e oa brein-put he c'halon ha gounezet a-buz gant tech ar pec'hed vil. Kalz preder a gemeras d'ha c'hentelin ha da sila enni an dezo d'eur vuhezgez yac'h hag ar c'haez da veza dismagnaset Doue. Gant fant ha gomperez e tisprizas e gelennadurez hag ar sant a voe boud da denna diganti an distern komz vat. "Aseoc'h eo brava eur wezenn gamm," emañ, "egat he sauna !" Ha pa'z eo gwir emañ an aerouant e-barz da galon ha na vennez ket sauna, e kavi Unan Bannak hag ez pravo ! Dont a ray ban dit pred ar c'hastiz, penn aheurtet, hag e redo da zaelou da c'hortoz gwasec'h !"

x

x x

Pemzek deiz diwezatac'h emedo ar vosenn oc'h ober ha reuz e Iz. Eul lestr o tont eus Bro ar Vourc'h eo he digasas gantañ. E berr amzer ac'h en em skignas ar c'hloafed spogus e kêr hag oustenn kant den a varve enni bemdez. Ar spont a bagas e Iziz hag eun engroez aneo, pa voe ar walonn an he gwasa, en em doolas ouz doriou kêr da glask toc'hout diouz ar mare. Hogen, gant oen ac'h en em strawje an droug dre Vro-Gerne a-baz, a roas Gralon urz da Leuhemel da vourout ouz nep hini da zig'ria ha, didruet, e voa sevenet ar gourc'hemenn. Ar binvidien a ginnige arc'hant d'ar ponnkadour oc'h e aspad d'o leuskel da vont kuit, met Leuhemel, feal d'e aotrou, a nac'ha grofs o selaou.

Evel kelien skerzet gant eun nozvez skoarn, a varve bemdez truilhadou tud mondianed ha peorien. Gwasec'h, marteze, e skoe an Ankou e-touez

ar re-mañ, dinerzet gant an disvoued pa zeus dienez a vevañs. Ar vezeien na c'hellent nemet nebeud a dra war-dro ar glefavourien pa ne oa nep drammm efedus da herzel ouz neiz dall an droug spouronus. Darn anao, gant ar spont da glañvel c-unan, a guze en o ziar hag a ranked o zenna ac'hano dre heg e-benn kaout o skoazell. Kement den a veze taget gant ar vosenn na bade nemet eun nebeud kurvezioù, e gorf a goefve euzus hag a kelle ar vuhez e-kreiz ar poaniou skrijusa.

Distin an Baelog hag e velleien a c'halve ar bobl da bedi evit ma ma teurvezje gant Doue pellaat ar walenn diouz ar geoded reuzaudik ha bepred e veze leun an ilizou. Met an Aotrou a rae skouarn vouzar ouz ar gêrind di-zoue ha diannaoudek. Gralon, e-kreiz an dizeur mantrous, na galle ket e fizieñs er C'hrist hag E Vamm santel ha, noz-deiz, ec'h erbede outo e sujidi drastet hag o rouessat bep eur. Neuze, o klavout ar pez a oa c'hoarvezet a tirdes da Iz Gwanole hag ar re ouizieka eus e lennad war ar vezegiez. Dizeon rak ar maro ha, dalc'hmet, ar bedenn an o c'halon pe war o diweuz e-ser en em roi dizehan d'o labour trugarezus, a c'halljont, gant skor Doue, mestrionia ha trec'hi spagusted ar c'hleñved. Da genta ec'h amenas d'an droug hag, a-nebeudou, e paouezas da vat. A-barz ma tavas kreñn, avat, e varvas c'honz meur a hini hag, e-touez ar re-ze emedo Cornelius ha Patricia, tud koz Ahez. War o zremenvon e kavjont Gwanole d'o c'hennarza hag e varvjont e peoc'h Doue ha gant ar brase glac'har d'o buhez tremenet.

Eur c'heuz divent he devoa ar brifseiz d'an droug gozind a eure eur golladenn anei hag a oustas dourek deo. Koulskoude na badas nemeur he c'haouad glac'har pa adkavas, war-lerc'h ar walenn diroll a oa o paouez gant he distruj an darn eus e azeulerien bet arboellet gant ar maro. En em deurel a eure ganto e-nevez er vuhez direiz ma oant boazet outi, evel o c'hengedediz all ken trellet o sperec ha biskeoz gant ar mall a oa warno da ankouat ar sizunvezioù spouronus o devoa bavet e kavandenn an Ankou ha d'en em dapa war ar plijadurezioù dizonest o devoa diouezet e-keit-se. Nijet e oa diouto an deuliez c'houezet anno gant ar venec'h e-keit ha m'amedont an arvar da varvel. Ouspenn an anien digristan o douge adarre d'o fec'hajou kent, eur c'hoant rakklez da zrollerec ar gwall-dachou o zeale ar fall-griez, evel ma c'hoarvez alies, siouaz! gant meur a bobl diannaoudek ouz Doue, war-lerc'h ar brezelioù hag ar gwell-zarvoudou all.

Alles ! ar c'halonadou en devoa bet Gralon da c'houzefv na oant ket schu. E breder a lakeas da zistrei e verec'h diouz levezon he lezad klufaned ha lubanerien he sache ganto d'an droug. Hir ha taer e voe ar stoum hag an atahin a bep tu hag an tad, d'an diwez, eo a diens kodiana.

Alliet hag hiset gant he c'hileed, e lavaras d'ar roue, da gefver he c'houezekvet deiz ha bloaz :

- Azalak hirio, ma zad, a kollit warnon ho kwir a ward hag, hervez hon lezennou koz, ez on mestr d'am danvez. Lakait em c'heuz, m'ho pad, ar

madou ez on perc'henn deo hag a zeu din e-barz ma mamm ha ma zad-koz. Pinvidik on hag hiviziken e fell din beva evel ma plijo ganin, hep beza rediet da glevout ho rondonerec ha da blaga da c'hourc'hamennou diskiant ho lennad varodus ha mez o gwelout. Warc'hoaz ez in da chom da di Cornelius ha Patricia, ma zad-koz, ar re-ze hag em c'hara kement hag a roas din eur yaouankiz ken eürus a-raok m'am zennjoc'h diganto da hirvoudi ha da boteret an ho pelez. Aet on skuiz en ho ser ho pell' zo e c'hortozen da c'houlaoui on deiz benniget-mañ a zigas din ar frankiz d'en em gaite hervez ma c'hoant !"

Darbet e voe da C'halon kaout eur falleunn ha ken bihan ez eas e galon ma kredas marvel war an taol. Panas o c'helle ar varc'h-se buza ken kriz ha ken dic'hrad outañ, war-lerc'h ar garantoz divuzul hag an danderidigez diester en devoa diskouezet en he c'hefver ? He espedi a eure da zileuskel he menoz, met on enor a voe rak ar brifseiz, sheurtet ha di-dreuz, a nac'has e salaou hag en em dennes en he c'hambri da vouzat.

Al lezenn a oa ganti ha ne dalveze ket d'he zad enebi maic'h. Hag antronoz ez eas d'ober he annez e palez he zad-koz hag ar yaouankizou diroll he darempredo a zirdas war he zro d'he c'hulufani. Ha, diwar neuze, e kreskas an orged e Iz, da heul ar skouer hudur a ros Ahez, hep on rak he zad. E berr amzer, ar fall-griez a veze graet kent dre guz en em ziskouezas a-wel d'an hall, hep doujafs ouz ar vugale taget ive gant kleñved ar vrainadurez-se. Soul vui ec'h anavezad buhez diroll ar brifseiz, soul vui ec'h en em lade ar vrud anei e pep lec'h betek ar pella rouanteleziou zoken. Uhelidi yaouank ha pinvidik a bep bro a zirdas d'he falez gant ar c'hoant da dafva ganti an dizurzioù ma oa en em ouestlet deo.

Bewach, gwa deo ! e kevant digemer vat he plijadur e-leiz, betek an deiz ma ne glevad ken ano anao ha ma kozent da viken e-douez ar re van. War a lavare Iziz kenetrezo, e kuzulig, n'en deveze ket pell da vea an hini a veze bet dibabet da garedig gant merc'h ar roue. Diouz an noz, dre eun trespas distro, ez ae d'an emgev hetet gant an oriadez, eur maskl seiz du tano gantef war a zremm. Antronoz vintin, d'ar pred ma plije gant ar serc'h diaoulak, e vouge ar maskl hud ha c'henlodad ar pec'hed. Hag ar c'helen, sommet didrouz gant droug servicher tavedek, a dalveze da lardez poked ha l'ned all ar mor den ...

E-keit-se, dic'houvezus eus fallekre torfejou e verec'h, he mantret hag aet digalon gant he disentidigez hag he zech d'an dic'hlanded, a rane Gralon en e balez eur vuhez ken tenn hag hini eur penadour en e logall. Noz-deiz o pede hag e traste e gorf gant ar c'halets kostizou evit ma tis-troje ouz Doue, Ahez, e vugel, hag Iziz, e sujidi. Dinerzet gant ar glac'har hag on dristidigez, na oa ken anezañ nemet eur c'hozind war an disker, divenn, dinerz ha dic'halloud. Bep an amzer a teus an abad Gwanole, e guzulier, d'e gannorza ha d'e freslizi.

Eun deiz, koulskoude, o vaza klevat ano eus ar pri euzus m'en em ruilhe ennañ ar brifsoz, e tisklerias d'ar rous, hep diskuilh deaf ar c'he-lou gant non da flastra gwesoc'h o galon, e oa ken heuget Doue gant hudur-naz annezidi ar geoded ma ne badje ken d'he distruja.

- Bovech ma teuan d'ar gêr-mañ," emeañ, "he c'hevan o vont war falla, daoust d'ar prezegennou entanet a ran d'he fobl ! Eur wech c'hoaz o komziñ outi, met ar wech diweza e vo he gwaz a ze dei he d'az merc'h ma ne sellocout ket mouez an Aotrou ha ma ne reont ket pinienn gant keuz d'o fec'hed ! Neuze, diseblont hag eheurtot en droug, e tiskenna Iz e strad ar mor o leuskel hepken war he lerc'h ar vrud eus he fallagriez villiget !"

Ha Gralon, o klevout setrañs den Doue, da stoui e benn, an daelou o redek gant roufennou e zremm ha kollat gantañ da vat ar spi o vire c'hoaz e trugarez an Nefvou.

o

T r i o u e c ' h v e t p e n n a d

A r P r i f s R u z

Eus an tour-tan a oa e-tal ar vrasa eus dorioù porz Iz, e spur-mantas ar gedour eun dra dañval er pellder war ar mor. An deiz a oa o terza ha bannou an heol, o sevel e-nebeudou en oabl, a daels, war ec'honder an doursier, eun arliou alaouret ha sked-diskad. Endra ma splannaes ar sklêrijenn, ec'h anatae ive d'ar gour e oa eul lestr en dremmvel o tostaat a-benn d'an douar.

A-barz pell e sklêrias ar goulou-deiz e oueliou ruz-flamm c'houezet ha bolzet kaer gant eun avelig flour o tont eus ar c'hornog. Tamm ha tamm e vrasas al lestr, meurdeuz hag uhel war an douar, e deir gwezn hir meurbed, doare ganto da vennout tizout an nefv.

Merdeidi ar bourz a zispakas arouezioù a bep liou, a stagjont ouz hag ar wern uhela, da c'houlenn, hep mar, ma vije digoret deo dor vras ar skluz. N'emedo ket pell ar goulou hag evel-se, ne vije ket diñs d'al lestr dont tre er porz. Dioustu e savas ar gedour eur banniel ouz beg e douribell da gemenn deañ a oa bet gwelet, hag e tiskennas da c'helver unan bennak da gas kelou eus donedigez al lestr d'ar rous.

- Lavar deañ," emeañ, "n'em eus gwelet biskoaz nep hini all par da hemañ ! Ken sebezus eo, dre e vent hag e gaarder, ma tle beza d'eun den pinvidik-mor pe d'eur priñs galloudus !"

Redek a eure ar c'hemenner d'ar palez d'ober ar gefridi. Gralon, boazet da veza bemdez a-bred war-sao a oa klañv an deiz-se ha chomet en e wela, war ali goumadoq, e vezeg.

- Arabat e savfec'h, aotrou," eme al louzaouer gouiziek, "da zigori dor ar skluz d'al lestr-se, rak ho maro e tapfec'h !"

Abaoe ma oa distroet da Iz, e veze bepred ouz e c'houzoug, gant ar roue, an alc'houez aour da dalveze da rei dor zigori d'al listri e zarem-prede ar porz. Eun arouez a c'halloud hag a astrouniez e oa hag ar rous hepken a rae implij aneañ ken lies gwech ha ma veze tro.

- Ne vo ket lavarot," eme C'hralon, "em bo nac'het rei digemer,

hep eun abeg pouezus, d'eul lestr bannak estren pe gernevat. Ha, pa n'on ket evit han ober ma-unan, e kemeri ma alc'houez, Gourmadog, hag ez i gantaf d' ar porz. A-raok digori dor ar skluz, e savi war al lestr hag e ri eun enklask da c'houzout hag heñ n'eus ennañ nep klafavour, rak an am eus e tigasfe hennez deomp eun droug spegus bennak, evel ar vosenn villiget a hadas ken gwas ar maro er gêr-mañ. Ma kavoz yac'h an holl, o laoski da zilestra, met, a-hend-all, e ri deo distroi d'an donvor war o c'hiz. Kemer eur gucennad kadourien ha merdeidi ganit evit ober deo senti diouz ret. Bremañ kê di rektal ha digas din ma alc'houez en-dro !"

Eur vagig a gasas Gourmadog hag e gavandidi betek al lestr, dioual a-benn neuze hag a-sav direk ar skluz, war hed c'houec'h kant troatad diouti. Kerkent ha pignet ar mezeg war ar bouz, e teuas ar c'habiten davetañ hag e roas Gourmadog anaoudegez deaf eus gourc'hemennou ar roue.

- A drugarez d'hon doueou ha d'ar priñs Aomikar, ma mestr ha perc'henn al lestr-mañ, a zo kerkoulz louzaouer ha ne vern pe wella mezeg eus ar bed, ez eo yac'h-peak an holl er bouz-mañ," a lavaras an divroad a yez ar Romaned a ouie, moarvat, dre e hir-zarempredou gant porziou-mor ar re-mañ. Hag e kendalc'has : "Da c'hortoz ma teuy ar priñs d'ho saludi, ho pedan da deural eur sell war ma morerien ha da ziskenn ganin, goude-ze, e kombodou al lestr da achui hoc'h enklask."

Eur voudadenn dregernus a laoskas gant eur gregenn bigorn kement ha pennou tri den hag eur mell bouchad gourad, dilamet a bep tu, an em vodas an dro dea. Gourmadog, eveziek, a sellas aketus ouz pep hini hag a roas deo tanna o zeot eus o genou.

- Mat ez a er bed ganto diouz o doare," emeañ, hag e tiskennas, da heul ar c'habiten, e diabarz al lestr. Ne badas ket e wladenn, rak an holl a oa en nec'h war ar pont, war-bouez o aotrou hag e goskor ha n'o devoas ket c'hoaz kuitañ o c'hombod.

Mezeg Gralon en dije kavet dizereat goulenn outañ dor zigor hag hez gedas, gant ar c'habiten, e-tal ar warn vras, ma plijje gantañ dont d'o c'havout. Yaouank ha ouesk e oa an diaeziad ha dilu e savas betek anno gant eun diri goad, eun nebaud killead deaf war e lerc'h. Holl e oant tud kaer ha gwisket kran ha tonius, mat an hini a anved er priñs, dilhad ruz ha skedus en dro dea, a lufre en o zouez kement hag al loar en he c'hann a-kruiz eun oabld stered.

Seven mœurbed e voe ouz kannad ar roue hag e komzas outañ, hegarat kenaf, e yez Kerneviz.

- M'ho ped," emeañ, "da lavaret da C'hralon, ho roue illur ha galoudus, ez on chifet bras o c'houzout n'eo ket yac'h hag em eus spi ec'h adkavo buan ar yac'hed pa'z eo gwir emañ etre deouan eur mezeg ken barrek ha c'houi war skiant an dramou. Kerkent ha m'am aotrou da vont d'e veto, ez in d'e wladenni gant ar vrasa laouenadigez. Da c'hortoz an auzvad-se, kinnigat

deaf ma hetou a baraafs, ma azaouez ha ma doujañs !"

- Enoret bras e vo hep mar, aotrou," a lavaras Gourmadog, "ha kredi a ran ho kwelo gant levanez. Plijet geneoc'h rei din da c'houzout hoc'h ano hag ho reañ, ma c'hellin ma-unan o diskleria d'am mestr karat."

- Piau on ?" a zistegas loarc'hus ar gour mantellet ruz.

"Kemennit da C'hralon ez on anvet Aomikar hag ez on unan eus uhela priñsed eur rouantelez ha n'he deus ha far e nep lac'h ! Hounnez ao ar Vro-Diemen, an tir hep herzo, a zo zonet gant eur brein holl galoudus a anvomp an Dilorber, o veza ma oar dizalla deoulagad z sujidi ha rei deo kement anaoudegez a zo ret evit tizout ar paz a c'hoanta o c'hralon pe o youl. Scutin ao ar ouiziege-se etre o holl wizion a denn o mad anei evit piasoua ar paz a c'halver an aürusted."

- Marzus eo," eme C'houmadog, "ho pefe d'ho ran eur roue saurt da hennez, gant kement a berziou kaer !"

- Ya ! pep hini dreizan," a ailgerias an uheliad, "a gav, hervez e soñj hag ar pleg ma vez douget dea e anien hag e-pad e vuhez war an douar, pinvidigez, karantez, didu ha kement a ro dudi da galon mab-den. Kenneulet eo gant e holl sujidi a zo ran gant e lezennou ken ñs da haulie ...

"Ma hag an aotroued-mañ a zo ouz ma ambroug, hon eus bet digentañ eun darn vras eus e c'helloud hag e skiant divent. An arc'hant a zo gansomp na da morse da hesk hag hez strewa o zomp dibredet da skigna brud an hini a servichomp ... Anaoudegez hon eus oustenn war bep tra. Gouzout e ouzomp lekaat da deval ar gwas berradou amzer, gelver ha pal-lat an taranou, parae pep gouli ha pep klefved ha komz ha skriva, ne vern kerkoulz ha piau, an holl yezou a voe biskoaz hag ar re a zo bepred war an douar."

- Estlammat on gant ho kouiziegezh," eme gant doujañs ar mezeg,

"hag ho kredi a ran pa'z eo gwir e komzit ma lavar evel ma vijec'h bet ginidik ac'hann pe eus Enez Vreiz. Met pe zizaouzan rei d'am aotrou pe falvezo gantañ anavezout pe abeg hoc'h eus da zont betek ar gêr-mañ ?"

- Hor plijadur hag hon dudi a zo ergerzout dre ar bed ha gwelout broiou ha toleadou nevez. Ar vrud eus furnez ha haeld Gralon hag eus kenod ha koantiz dispar e vevc'h, ar brifasaz Ahez, o deus hor sachet betek amañ gant ar menoz d'o gweladenni ha da ginnig dae profou a briz e-berz hor brein meur a garfe skoulma ganto darempredou hegarat."

- Ho drugarekaat a ran, c'houi hag hoc'h aotrou ken-brokus, an ano ar roue hag ar brifasaz. Hogen, pa'm eus graet ma c'hefridi en ho kefver ha pa'z eo rez live ar mor gant hini an douar a zo er porz, ma laoskit da vont da zigori deoc'h dor vras ar skluz.

"Penaos ober, avat, evit tremen dre an odo p'hoc'h eus diskennet ho koueliou ? Ret e vo lekaat da oual a-nevez pe glask bagou ha roañverien da stleja ho lestr ar porz !"

Eur c'hoarz skiltr ha fentus a darzas war ziweuz tud ar bourz hag ar gour ruz e vantell a zistagas laouen : "Na vezit ket chalet ganeomp ! Ar gouliou hon eus ne dalvezont nemet da ficha ha da glefko hor gwerniou. Hep o skoazell pe hini ho roafverian e tizimp ar porz, ês ha didrabas !"

Neuz e kimiadas ar mezeg diouz an uheliad dilhad flamm hag e goskor ha, diskennet en e vag, e redas da zialc'houezia dor ar skluz. Ha, war an taol, o kemeras al lestr kuvrinus e diz hag, o tremen didrouz dre an ode striz, ec'h en em gavas ar porz, hep poan na droug, dirak daoulagad sebazet Gourmadog. Eul lec'h dereat a gavas a-hed eur c'hê mein banerez hag eno e voe staget ouz bonnioù postek sanket don en dour.

E-skoaz al lestr burzudus, mentek ha gwerniet uhel mурbed, a oa al listri all, eno ouz an eor, nemet krogannou bitous ha dister. En o mask e oa par d'eur mell skoul e-kreiz eun toullad golvaned, ar pezh a voe ken bras sebetur da Iziz ma sachas eun angroez anao da arvesti outañ.

x

x x

E-keit-se emedo Gourmadog o tibuna da C'hralon kement en devoa gwellet ha klevet e-doug e droiad betek al lestr estren. Eun dezrevell spis hag estlammus a eura aneaf hag o tanevellas ger evit ger komzou kuvrinus ar gour mantellet ruz a anved Aomilkar. Eveziek e salaouas ar roue hag andra ma komzo ar mezeg, a tafaleas e dal hag e soñje, dilavar. Ha, pa zisoc'has al louzaouez gant danevell an neventi iskis, e talc'has eur pennad war e deot :

- Kile mat, emeaf, gwell braderiet, "ar c'helou e gemennez din n'eus ket gantaf deare mat ha n'am laouena ket nemeur. Ha n'eo ket strobinnallerian 'zo e bourz al lestr-se a gerz e-unan hep skor nep avel ha nep roadv ?

" Ha piou eo an Dilorber-se ken galloudus ha ken gouiziek, war o mano hag e leveront kaout da vrenin en eur rouantelezh hep he far, en eur vro ne anvent na lec'hiont ket e nep takad eus ar bed ?

" Ha petra ar pezh strafuilhus-se o gra barrek da lakeat ar gurun hag an avaliou da blege d'o youl pe d'o frouden ? Hag o anaoudegez hep harz war gemant skiant dianavez da vab-don ?

" A be anien eo ar re-ze pa n'eus nemet Doue hag an Droukspered o c'houzout ar pezh en em fougeont da c'houzout o-unan ?

" Ha ne vefe ket eun diougen e zizeur nevez evit Iz hag he fobl reuzidik buget er pec'hed vil, donedigez ar priefs Aomilkar-se hag e gillead, deare

gant da veza hudourien ha n'eo ket kristenien ?

" P'o devez bec'h ha poan bugale Doue oc'h herzel ouz ijin ha gwidraou an Aerouant, penaos o talo outañ ar grouadurien geiz o deus nac'het o Aotrou ?

" Hor bezomp fiziafs o Doue, koulskoude, ha gortozomp oberou hag emzalc'h an divroidi-se hon leka ken chifet, hep abeg marteza. Ha, ma vez rot, e c'halvin d'hor c'huzulis an abad santal Gwenole a vez gantañ, dalc'hmat, sklerijenn ha furnez difazi ar Spered Santel !"

Pa voe en em dennet Gourmadog kuit, e c'houlennas ar roue Kadou Dremm Ruz, ar penn eus kerreiz ar geodad hag e roas urz deat da lakeat spis tud al lestr marzus a oa o paouez digouezout er porz.

- Diouz rot, emeaf, "e klaskoc'h d'arvoud ganto, dreist-hall gant ar priefs Aomilkar a fell din gouzout petra eo a gwirionez ha petra eo deuet da glask er gêr-mañ. Bazit eveziant ha dalc'hit war ho teot p'ho pe tra da gant diviz gantañ. Gwell eo beza tavodek eget flao. E-doug hoc'h enklask, dauit da flatra din, bep eur mare, ar pezh ho po desket diwar-benn an den-se hag an divroidi all a zo d'e heul."

War-lerc'h ar penn-kerreiz ec'h en em gavas unan eus tud al lez da gemenn da C'hralon e oa deuet eur c'hannad d'ar palez da ginnig deat, e-berz ar priefs uhel ha doujet Aomilkar, dorn dehou ar brenin Dilorber, e vestr dreist-galloudus, a hetou a yac'hed mat ha da c'houzout pegoulz e c'hellje kaout an enor disper da veza digemeret gantañ.

- Livrit deat, eme ar roue, "ez on dalc'het bramañ gant ar c'hleaved ha n'ouzon ket pe da vare her gwelin. Pedit-heñ da drugarekaat ar priefs-se evit e hetou karadek ha da lavarout d'e vestr e zin deat kouviadenn pe vin e-tailh d'e zigemerout !"

Hir e kavas aotrou koz Bro-Gerne e amzer betek serr-noz. Difs e oa e benn gant ar pezh a ouie diavezidi al lestr hud he padet en devoa an Dreinded Sakr da bolleat diouz e gêr-benn ar walenn ankenius diougenat gant Gwenole nebeud o oa.

Diouz an abardez, diwezet anei, e klavas, dre c'henou Kadou, penaos o devoa, ar priefs Aomilkar hag e gillead, tremenet an deiz.

- Ar mintin-mañ, emeaf, "ganto hep a varc'h a briz bras horn-ziet eus ar c'haura, e tremenont dre hell strajou kêr, o stlapp krebnadou eour hag arc'hant d'ar bobl dirallist hag o youc'hal gant levanez. N'eo ket hepken an dud vunut a sailhe da zantem ar peziou a gouezo hep ehan war an douez, avel eur barrad glao dibouez, hogan ar vare'hadourien binvidik ha betek hiniennou eus hoc'h uhelidi. A-dra-sur ar re grefva ez eo ganto er pep brass rak, hep an distera mez, a tic'houinant o armou da skoi gant ar re a venne difenn o c'hutuliadenn. Ar gwad e redas ha meur a hini gwall-c'hlozet a voe."

- Pennaos, " a c'harmas Gralon, brouezet ha gwall skoueriet, "penaos n'hoc'h eus ket miret, em ano, ouz aun dizurz ken euzus ha graet gourc'hemenn d'an divroidi da ehana gant o andutilh ?"

- Alles ! aotrou, " a hirvoude Kadou, "ne oan ket evit hen ober pa oa diskiantet ma gwardou e-unan hag en em daolet d'an douar da skrapa, daoust d'an difenn a ris outo, darn eus an acur a ruilha dirzo ! Nauze eo e pegis e rafjenn joo ar priñs divroad hag e c'houre'hemennis deñf lakaat diwez d'an dispoc'h en eur virout gantañ e largeteziou ken drastus da zom. Hogen, Kle- vet e voe ma c'homzou gant an estud trevariet-se a hope kunt : "Bebet Aomil- kar, ar priñs hael ha brokus ! Meuloudi deñf !" hag a c'harmas neuze gant kounnar : "D'ar maro Kadou ha Gralon ! D'ar maro an trubard, enebour ar bobl !"

"Disent ouz ma urz, setu Aomilkar o tiframma al loran diouz ma daou- arn hag o pellaat d'an drip gant e gavandidi. Dioustu ez is da glask skoazell digant ar pennkadour Leuhemel a roas din eur pannastrallad hag e vrezelourien da doullbac'ha ma gwardou ha da zieranna an engroz a daolieu fust goaf. E-ser tac'hout e taole k'briz o malloziou warno : "Sklavourien Gralon !" emeo, "bleizi digernez ! lorgnez vil !" Darn zoken, entanet o gwad gant ar c'harze d'an acur na valent mui o koueza, a glevis o c'harmi : "Lakaomp ar Priñs Ruz da roue ! D'an traon ar Gralon-se, ar c'hriagner traid sent !" Hogen ne voen ket gouest d'o zizout e-touez an tousmac'h hag ez eas an hall diwar wel.

" Abaoe em eus gouezet o deus kavet ar Priñs Ruz hag e goskor dige- mer e palez ar brifsez, ho marc'h, hag emaint ano, bremañ, o vragal hag o tremen amzer vat. Ha n'em eus ket kredet ober nstra a-enep deo hep kaput an aotre digansoc'h.

"Teurvezit eta, m'ho ped, rei din gourc'hemenn war ar pez e dleas da ober !"

Mantret e oa Gralon dreist-gaofvor ha fallaglonet gant ar c'helou grevus. War e zremm desleberet gant an anken e lenne Kadou ar vrasa ha dou- niusa glac'har.

- Evel ar C'hrist Jezuz e liorz an Olived, ez on gwasket ha mac'het ma ene gant eur pouez iekis ken drastus ma laka ar gwad da skorna annon ! Moarvat, avel ma tiouganas din Gwenole, emañ eur ar c'hastiz o tastaat hag e vo ar Priñs Ruz-se hag e dud darbarerien ar gwall-zarvoud ! Ma n'eo ket hennez an Arouant e-unan, ez eo, hep arver, e vaval bras ... Gant e sour milliget, e sil ez c'heloukontammet muioc'h-mui a vreinadurez flêrius ! Ha bremañ, siouaz ! heugusat kalonad d'an tad k'z a zo ac'hanon, emañ, war a livirit, ar c'hon ifern-se o frifigal hag o vourra e ti ma c'holladenn a vere'h, gouastlet ken gwas hag int-i pe dost da fallagriez ar pec'hed ! ... Kas ma c'hadourien d'o hezzel na dalvezfa, moarvat, da netra ouz krouadurien seurt d'ar re-ze a zouj kentoc'h kreaz Hor Salver eget hini dornellou hor c'hlezeier ... En enkadenn druezus ma'z on enni, n'eus nemet pedennou birvidik

ha nerzus Gwenole a zeufa a-benn d'o zrac'hi ... Her gelver a rin d'am skora hag ec'h hasto da zont da skigna ar strafuilh en o zouez.

"Ac'henn di, avat, Kadou, servicher leal, bezit aketus da deurel evez ouz kement a ray hag a lavaro an divroidi divfisa e zo ouz hon tru- builha ... It ha ra vo Doue, hon Aotrou, ganec'h !"

x

x

x

Ar c'hrana ha karadeka digemer a c'helled ober biskoaz a c'hor- toze ar Priñs Ruz e palez Ahez. Emedo c'hoaz o kousket en he gwele oli- fant hag acur, war lerc'h eun novez sabad evel boaz, pa'z eas he c'henta plac'h-a-gambr d'he dihani o c'houzout e vije fouget dei o klevout e c'hoantae eur priñs yaouank ha kenedus, a bell bro, ober eur wladenn garadek dei hag en em lakaat en he gourc'hemenn. Aoz vat enni, daoust d'he skuizder, e paras ar blijadur en he daoulagad touellus ha don.

"Hast afo," emei, "ma gwiska ha ma ficha disi, ma welo ar priñs estren- se ez on-me ar gaera hag hetusa maouez a deol troad en douar er bed-mañ a-bez !" Rektal e teracuas ar plac'h-a-gambr d'he gwiska, d'he farda ha d'he c'hifkila; endra ma tigase dei mitizien all dilhad eus ar skedusa hag ar priziusa, antred ha diennou flour evit ar c'hroc'hen ha dourennou fron- dus evit ar bleo.

E-keit-se e oa bet pedet ar Priñs Ruz hag e hauliad uhelidi da azeza er sal e-lec'h ma teuas d'o c'havout ar goured eus lez ar brifsez a oa neuze war sae. Teot flour, lampr ha distagallet Aomilkar a zirou- fennas taliou damrec'het hag hogos tefval kileed Ahez, nec'het gant do- nedigez kevezerien all a c'hellje o distroada e-kefver o c'hoantenn garet. Met ne badas ket ar yennenn hag, a-barz pell, e renas ar c'hoarz hag al laouenedigez e-touez ar re oazus ha gourvernek.

A-greiz m'emedo an holl da vat gant o marvailhou, ec'h en em gavas ar brifsez er sal, miste ha acoun he c'horf hag uhel he fenn, eur wir impalaerez anei gant he gwiskamant hefvel ouz eun szenn skafv hag o lintra skedus gant ar perlez hag ar bragerizou acour. Hogen kaerder danvez he dilhad seiz, he mein brizius hag he braoigou all ne oant netra a-skoaz kened he dremm disi, he diweuz par d'eur vleuenn roz o tigori, d'he diou chot livet flour, d'he bleo melan ken lufus ha bannou an heol ha d'he daoulagad glas liou d'ar mor, ken kuñv a-wechou ha ken kriz ha didruz pa blije ganti. Ha daoulagad flour eo a oa ganti d'an ampaent, kuñv hag otus o sellou war eun dro hag anno damskeud lemm ha divzall eur youl didrec'hus.

Pa berjont, avat, war re ar Priñs Ruz, aet d'an daoulin direzi, e voent teoget en eur par berr hag e kolljont o bividigez dindan nerz estlamms sell hud an divroad. Met ken prim e serras he malvennou da guzat he zrefu, ma ne veztas nep hini, nemet ar Priñs Ruz e-unan, e oa bet hemañ trac'h d' an dieveztes e oa boazet da ziskouez da nep piou bennak a venne gounit he c'harantez.

E-kreiz ar strolladig a rae en dro dei plac'hed he lez, o vleunia en o c'hoantiz gadal, e oa Ahez ar steredenn a lintre ar splanna. Meuleudiou estlamms a glevas o sevel a bep tu hag hi, o vont da Aomilker, a astennas deañ he dornig da boket hag her pedas d'en em lakaat an e sac.

- Merc'h Gralon, " emeañ, "holl vrudet dre da gened, te eo rouanez marc'hed ar bed holl ! E nep lec'h n'eus nep plac'h ken kaer ha te, e pep kozn eus an douar ec'h anavezet da ano hag e vauler mistred da gorf gwevn ha sked da zaoulagad flour he liou flamm da vougenn livrin ! Biskoaz em huft-vreou n'az kwelis ken skedus ha m'az kavan hirio dirazon ha sede ma vennigan en doueou da veza roet tro din da arvesti ouz eur grouadurez ken disi ha te, eur grouadurez hag he deus holl berziou gwella re da c'henar !"

Bras ha meurdeuz e oa an divroad, yaouank ha neuziet kaer, du e vleu hag e vazo ha tefval e zaoulagad kuñv ha mao, anno koulskoude mabou entanet hag a dreuze betek ene nep piou bennak a barant warnañ. An dilhad a zouge, mantell hag all, a oa ruz-tan penn-da-benn ha graet gant ar priziusa danvez a c'helled da gavout. Ouz e zorn kleiz a weled eur bizou acour melen fichet gant an trellusa diament. Dreist da bep gour all e oa hep mar, dre e emzalc'h, e gaerder hag ar veli a darze dioutañ.

- Diouz da zoere, ac'rou, " eme Ahez boemet, "az out, hep arvar, eun den illur ha galloudus ez pro. Teurvez, m'az ped, ma c'hentelis war da ano, ar renk a zalc'hez ar rouantelez ma'z out anei ha pe abeg en deus da zouget da zilestra ar penn pella eus kornog ar bed."

- Ma ano, priñsez ar priñsez, " a eilgerias ar gour yaouank, gant eur mousc'hoarz tener, "ma ano a zo Aomilker he lezanvet on bet ar Priñs Ruz, o veza ma tougan bepred dilhad eus al liou-se. E lez ma roue holl-c'helloudek, ar brenin Dilorber, ez on an uhela dre ar veli em eus gouezet enni ha ma gouiziegezh war gement a zo bet hag a vo. Divant eo ma finvidigez a vadou an douar ha, koulskoude, ez eo dister dre e-skouz ar pezh a c'hellan dre en anaoudegezh em eus eus skianchou ar bed hag em gra dieheñval-krenn diouz an holl uhelidi all a zo bet tostast ouzit betek-hen."

- Hag, cuspann, az out c'hoaz, " eme Ahez gant sebez, "ar c'hoara hag en heala priñs a weles biskoaz ma daoulagad ! Eun eurvad hag eun dudi eo din ec'h eus kavet ar porz-mañ war da hent da eoria da lestr, ar pezh a zo tro din da veza anoret ganit ! Az pezh ar vadalez, m'az ped, da gomz din eus da vro hag eus Dilorber, da vrenin."

- Ma bro, " a lavaras ar Priñs Ruz, " a zo eur rouantelez kevrinus

a gaver pell an tu all d'ar bed-mañ hag e-lec'h m'am eus spi d'az kas ganin eun deiz bennak. An treiz ac'hann di a bed hervez ma vez tonket da bep hini, hogen leun a blijadureziou e vez bepred. Eun treiz eo hennez hag a walc'h holl c'hoantegeziou mab-den."

Merc'h Gralon a ruzias hag a laoskas eur c'hoarzig skiltr.

- Hag ec'h asantfuz, " a c'houlennas, "rei bod din war da lestr da vont keit-se en tu all d'ar mor ? Pebez levanez a rafez din !"

- Din eo e vefe kement-se ar brass eurvad ha plijadur, rouanez ar c'hoanta koantenned ! Er vrasa eürusted a vefan ouz da embroug betek tir an Dilorber . Lavaret em eus dit eo hemañ ma friñs, eur mestr ha n'an deus e bar e nep lec'h hag a rafe dit an digemer a zellezezh kaout. An ano a zomp outañ a gaver iskis ha souezus marteze; huñ, koulskoude, eo an hini a zere outañ ar gwella. Eur gwir dilorber eo hor roue, an hini nemetañ a oar dizella ar sperejou touellet gant fals-kulennadurez an astud rouzeu-dik-se, truilhek ha diarc'hen, a brezeg dre amañ ar beoventez, an dienez hag an euz ouz kement a c'hoanta eur c'horf yac'h hag eur sperezh dieub."

- Eur roue meur eo da hini ha bras meurbed e furrez ! " a estlammas Ahez. "E lazenn a zo reiz hag es da heulia pa lavar d'e wizen : "Grit hervez ho youl ha diouz ma plijo ganeoc'h ! " Ma zad, an diskient a zo aneañ, a zo dindan levezon hegu al leaned laouek a drubuilh ma broiz gant o sorodennou hirvoudus. O c'haset em eus diwar ma zro hag harluet diouz ma zi arouez kasaüs o Doue peget ouz eur goaz evel eur sklavour trubard ha laer lakaat da c'houzavv eur maro muzus. En o lec'h em eus savet amañ eun oter d'an douez kardek ha kuñv a garan hag a anoren dreist pep doue all."

Hag e tiskouezas d'ar Priñs Ruz skeudenn Gwener kizellet ez mar-mor gwann-kann. "Dispar eo da zelwenn, rouanez ma c'holon, " a nuanadas Aomilker, "hogen n'eo netra p'he c'hefverier ouz da gonad hud em laka saouzanet ! " O sailou en em gloska ha re deogus an divroad a drivillio muoc'h-mui kalon bezel ar bennherz gadal.

E-keit ha ma tivizo ar Priñs Ruz gant Ahez, flestroned ha kiload houmañ a rae anaoudegezh gant poutred fero ar Priñs ... Komzou bras ha soven a voe ganto da genta hag an holl ar palez a ijinas c'hoarziou d'en em zidui ha da dramen plijus o amzer. Darn a bagas an difeou ha darn all en em deales d'ar c'hoarzi goezbell hag an aour a ruilhas war an taoliou. Drant a oa mignoned Ahez rak, bep tro koulz lavarout, ez as ar gounid ganto hag a kreske dalc'hmat ar peziou melen an o yill'hier. Hep beza chifet gant ar c'hellou a raent, e tiskoueze tud Aomilker o flijadur hag o laouenedigez d'en em gavout a kavandenn ar vagon eus yaouankizou Iz. Hag e save, a bep tu, c'hoarzi, skrign ha divizou na vijant bet gouzavvet morse e palez Gralon.

Da c'houde, war urz ar briñsez, e taous sigotarion da ziskouez o zaolico ouesk ha souill ha, diwazotoc'h, sonerien gant o zelwenn, o c'hro-

eziou, o fifou hag o fleitou, da zistaga bommou senerez flour ha likaouüs. Hag e pegas ar c'hoant dafsal en dud vak-se broudet gant mouez gadal ar benvigi seni.

Neuze e tereouas eur bal diaoulek hag a badas tro betek ar mintin. Bepred e tafsas ar Priñs Ruz gant Ahez, mazedallet gant ar bommou tener a zistaga dei a pleg he skouarn, hag ar brifseuz, kouezet da vat e karantez he dafseuz, a rae allazig d'e vleo gant he dorn mibin.

Pa vee diwez d'an abadenn, e lavaras doi :

- Ar gwel ac'hanout hepken en dous ma staget ouzit da viken, bloun-venn drollus ma c'halon ! Ha dont a ri ganin da vro vuzrudus ar Brunin Di-lorber, ma mestr brskus a dride ivez ouz da wolout ?"

- Hannez eo ma bresa c'hoant, o ! ma gwir garedig !" emei. "Gortoz, avelkent, m'en em voezin ouz ar soñj-se ha ma vo bet lidet gouel ma zriouec'h-
vet deiz-ha-bloaz a-benn tri deiz ac'hann. Na fazi ket da zont doañ pe e rann-
fez ma c'halon gant ar gwaso glac'har !"

- Bez dinac'h war gement-se, sklerijenn ma buhez," emeafi oc'h he briaña. "Ne gavfen ket ma c'heuz da brena ma tigouezfe gonin beze dalc'het
pell diouzit an deiz-se. Hogen saurt dizeur ne c'hoarvezo ket hag em bo an
eurvad da ginnig dit eur prof hag a roy testeni ez on dit korf hag ena !"

Naontekvat pennad

L'ñvadenn Iz

Diwezat e oa p'en em gavas Gwenole e palez Gralon.

- Travell a roan deoc'h, den santel," eme ar Roue, "gant ar gâr-
mañ disant ouz lezenn Doue hag aloubet a-bez gant ar falla techou. Hag,
allas ! ma merc'h an hini eo, her gouzout 'ouzoc'h, a zo er penn-kenta eus
an diroll ha, dre ar gwell-skouez a ro, o sacha an holl d'he haul e islonk
er fallagriez !"

Hag e tisplegas d'al lean an darvoudou a oa o paouez c'hoarvezout
e Iz.

- Arc'hoaz," a gendalc'has-heñ, "war em eus klevet gant Kadou Dromm
Ruz, penn-kerreiz ar gooded, e vo gouel ha fest gant Ahez da gavfer he zri-
ouec'hvet deiz-ha-bloaz, aun digarez all da Iziz da ziskenn dounoc'h-douna
el lagenn fiBrius m'en em blijont enni. Eun divroad, ar Priñs Ruz, oc'h
ober dei al lez, hag eur strollad dizoue a zo gantef a vo en enor, an deiz
eo, e palez ma merc'h divad n'o deus ket kuitast abaoe ma'z int bet digeme-
ret ennañ. Derc'hent deoc'h e tarbas d'en diavéziad pinvidik-se lakaat ar
reveulzi e Iz o stlepe aour a vezadou da gâriz diredet e vil vern da you-
c'hal en enor dea. Ha ne vefe ket fur din rei gourc'hemenn d'o herzel,heñ
hag e dud, ha d'o harlua pell ac'hann evit mirout an urz vat ha berza outo
da wallskouerie ar bobl a-gavret gant ma landourc'henn a verc'h ? Me c'ha-
lennit, eta, den santel, evel m'her grit ken mat bep tro m'am boz ezomm
eus sklerijenn ho kuzulicou !"

- Roue," eme Gwenole, "bot em boa anaoudegezh eus ar pezh a laka
strafuilh annout, erack ma teuas da gannad d'am bete. Eun hufvra en deus
diskuliet din an darvoudou e venegaz hag a zo ouz da brederia gant gwir
abeg. Da nerz da-unan ne deo netra e-skouez galloud an Drouk-Spered ha fur
out bet oc'h en em virout da herzel ar Priñs Ruz hag e gilead. Ma n'eo ket
heñ an Aerouant e-unan, ez eo, hep mar, e gannad dauet, gant c'otre Doue
skuizet gant fallagriez Iziz ha da verc'h, da beurgoll da gâr-benn.Lavaret
em boa dit eo barr ar muzul pell'zo ha setu deuet an eur da ober kañv da

geoded ar pec'hed, rak an Aotrou ne ampello ken pred ar c'hastiz !"

- Gwa dei ha din-me ! sant karet," a levas Galon, diskaret, "gwa dei dreist-holl pa'z eo dare donn Doue d'he skoi ! Hag endra m'he goueledo er mor, e kouezo enoou he annezidi e islonk an ifern ! O ! ma kerfe an Aotrou gouzeza c'hoaz eun nebeud a-barz distaga mestaol E vuanegez, e taufe Iz, marteze, da gouzia d'he fallentez ha da ober pinijenn gant glac'har d'he dis-megafis ! Gwanole, m'hoc'h asped da erbedi ma c'hêr reuzeudik ouz trugarez hor C'hrouter !"

- Allos ! kile ker," eme an abad, "lias gwech am eus pedet evit distro Iz d'ar wir lozenn ha Doue, dre druz ouzit, e daurvezas ma salnou. En aner en deus gortozet an distro-se hag hinio eo tremenet amez er drugarez. Arc'hoaz, koulskoude, e komzin ouz ar gêriad aheurtet en he disantidigez ha, ma chom bouzar, evel boaz, e seveno an Aotrou E setafis."

- Plijet gant ar C'hris, Hor Salver," a lavaras Galon, e barr an anken, "e klevo ar c'halonou dir-se ho mouez hagaret ha santel !"

x

x x

Antronoz, dinden heol dislivet hag avel but miz meurz, e oa bodet, war ar franke eus leurgêriou Iz, eun engroez diniver a dud, doare ganto da c'hortoz eun dra dibaot bennak. Kinklet e oa doriou ha prenestrou an tier gant bodou lann alaouret ha skourrou glas pin, lore ha beuz ... Deoust d'ar yonienn, e oa d'ant ha dreo an holl ha bommo fentus a glevet ganto a bep tu. An taotou a fistilhe hep ehan oc'h ober eur voudinell don ha dispis. C'hoarzedennou a darze ha ma e oa an dremmo, o tiskouez, evel-se, al laou-enedigez a oa er c'halonou. Hervez an dilhad a zougent, e oa an darn vrasa eus ar re en em zastumet eno, tud a don hag a zanvez. Re all, o tiskenn gant ar straed, a glaska bep a lec'h war al lez enei, oc'h hega er stumm-se ar renkennadou kenta en em gavet araso. Ha taotadou ha riot da savel, gant kunnuc'hennou, jorneou ha malloziou eus an ouzuse.

Dre fent e c'hamas unan bennak e wela marc'hakadenn ar brifeaz o tont eus ar penn pella d'ar straed. Ha kerkent, genouek he kredik oc'h eure al leurgêriad eul lamm war a-raok, o vunta, faulz ha dihegar, ar re nesa d'ar ribl a voe taolet war ar paveziou. Toumacc'h a voe neuze hag, e-doug eur predad, az eas taoliou stank en-dro.

Kerkent ha didrouzet d'ar rioterien, e hopes eur peotr yaouank :

- Ac'hanta ! Ahez ! kolladenn Galon, petra e zo peg enout oc'h hon louskel da chugudi keit-all ?"

- Sell ouz an heol, abaf ma'z out," a c'hamas unan all, "n'eo ket doust c'hoaz eur he marc'hakadenn a-dreuz hor c'hêr !"

- Deust an eur pe get," a skiltres eur vouez plac'h, "e ranki gortoz, emparval, ken he devo grest noilh a-walc'h d'ar Priñs Ruz !"

Yoc'hadennou a dregornas : "Ar Priñs Ruz ! Ar Priñs Ruz ! Buhez hir d'ar Priñs Ruz, danvez-pried Ahez ! Ra vo roue warnomp ar priñs brokus-se, mignon ar blijadur !"

A-barz pell e kanas an holl, dre al leurgêr a-baz, meulaudi en divroad dianavez, hag hini Ahez, ar flêriadenn re anavezet. Hag e pilpasent evel diskiented, oc'h embann a-bouez penn gwall vuhezegez an oriaedez. Ha skriñ ha gosparez da gendrec'hel ha da greski muioc'h-mui : "Diwall, Priñs Ruz; koulz ha te, pe dost, he deus doganet, ha te e ray ive !"

A-greiz holl, evel eun talm gurun, e tarzas eur vouez kreñv, ledan ha fromus a-oc'h d'ar morad pennaou a leunie an dachenn. Frêz e tassone e plegou an holl ziskourmou, o lakaat an engroez da drei he doulegad souezet war-zu al lec'h he c'hleved o tont. War unan eus bonnioù mein banerez al leurgêr hag e dalveze ive da varc'hallac'h, eur gour bras ha treut, an e seo, a doole d'ar seiz evel bommo iskis a voe selouet, da ganta gant sicular. Touz e garr diskabell, bloe hir e gilpenn o fuilha war e gain hag e ziousoz, ha gwisket gant eur sas groc'hen annor, eul lean eo a gemze :

- Tud Iz," emeaf, "lezenn ar gwir Doue a zo bet prezaget deoc'h gant tud evel don, an em c'uestlet Deaf. Entenet ha sklerijannet gant ar Spe-red Glen, int-i o deus ponniet d'ho kentelia warni, rak nep picu bennak n'ho heulio ket pe a glasko he zorri, n'en devo ket parz e rouentelaz an nañvou. Ha santet hoc'h eus-c'houi ouz ar reolenne-se, abaoe m'hoc'h eus ennoudegez enei ? Nann, siouaz ! hag aheurtet a boaziou he kredennou koz tafvalijenn ar baganiez, e rit bepred gwasa ma c'hellit da zispriout ar c'henteliou santel a zo e Aviel Jezuz, mañ an Doue bea, en em aberzet ha maro war ar groez evit ho silvidigez hag hini ar bed holl.

"Hor Mestr hag hon Tad eo Doue ha petra o ra eur mestr hag eun tad, nemet kestiza ha frae, pa vez disant e sarvicheerien ouz ar c'hente hag e vugale ouz an eil ? Bouzar oc'h chomet ouz Doue, ho Tad hag ho Mestr, ha, yen sklas ha suc'h ho kalon, hoc'h eus dalc'het d'he zismogafsi ha da veve ar pec'hed hep diskouez Deaf nepred an distra keuz. Da bobl Israel e pardonas he falloni, bep tro ma save karse enni d'he fec'hed; met c'houi, tud Iz, n'hoc'h eus bet morsa marc'hed d'ho puhez direal he sutu deust evedoc'h ar pred da zamanti ha da c'houzefiv pouez pounner E vuanegez ma ne vannit ket, diwar hinio, dileuskel ho kwall-oberou ha garmi Deaf ho klac'har d'Har beza enwazet !"

An alveon a oa kouezet war ar selnouerien a nijas kuit e barr amez hag int-i da c'hrozmatel gant kez :

- Petra a c'hoari gant an istrogell-mañ, "e tont da ren-doni deomp an traou didalvez hon eus klevet nouspat gwec'haendeo ?"

! Kê d'az logell blouz da zibuna pateriou ha da brezeg da vleizi ar c'hoajou, klasker-boued diarc'henn !" e hope re all.

- Tav gant da gôziou goullô, boused ar groug !" a grias meur a hini. Ken dispont ha tra, a laoskas Swenole o barrad drougiez da dremen ha, pa voa sicutet deo : "Komzou Doue," emañ, "n'int ket kaoziou goullô, c'houi hez goar ervat !

" Petra en deus lavaret an Aotrou da vab-don evit dallezout ar vuhez a bado da viken ? Seiz gwall a zo hag en em viri diouto, anez mont da leski, a-hed ar beurbedelez, e tan grizins an ifern. Hag ar re-ze a zo ar vrazoni, ar bizoni, an orged, al lonteged, ar c'hoanteged direiz, ar vuanegezh hag an diegi. Hag, alles ! petra a weler o vleunie en ho touez nemet ar seiz pec'hed hudur-se, ar seiz pec'hed meur a gas d'an islonk ?

" Piou ac'hanoc'h n'eo ket berr e galon a vrazoni ha dare da ziskara ha da vrasa komant hini a zo koulz pe walloc'h egetañ dre ar binvidigezh, ar ouiziegezh pe ar golloud ?

" Piou ac'hanoc'h n'eo ket staget ouz ar madou, evel an tousog ouz e vern douar, endra ma varv, gant an naon, ar paour en e gichen ?

" E pe lec'h, en ho touez, emañ an hini na ra ket eun doue eus e gof, o rei deñ, dreist gofvor, ar c'houeka diedou a laka al lonteg par d'ar gwasa lfn mut, hag ar saourusa kefalennou d'e larda divez, e-keit ha ma vez ar re ezommek o sellout outañ, en dienez, hep gollout knout an tañva eus ar bruzun a gouez diwar e daol ?

" Piou ac'hanoc'h, acur, danvez ha pinvidigezh deñ muoc'h eget ma tara, ha ne sell ket gant gwarizi ha c'hoanteged ouz an nep en deus brasoc'h madou egetañ ? Piou c'hoaz n'eo ket oezus ouz an nep en deus beli warnañ hag eur gwir da c'hoaz-hemenn deñ ?

" Pet ac'hanoc'h a zo disann a vuanegezh hag a gasoni ha kufv hag haol a-walc'h da ankouant an anvaz hag an droug bet graet deo ? A-viskoaz, kenetrezoec'h, nemet hag, komzou brouezus ha kann, ha morse, eur ger a bardon hag a drugarez !

" Tud re vak ez oc'h hag oc'h implijit hoc'h amzer didalvoud da ren gwall-vuhez ha da ober an droug, e-keit ha ma rit d'ho servicherien ha d'ho sklavourien labouret ha kia e-laz korf da zastum deoc'h an arc'hant a forenint ez falla plijadureziou !

" Debust ha ma n'eo ket, e penn an disantidigeziou d'ho Krouer, an orged unan eus ar re a argas ar muin ? De haol ar pec'hed-se, pec'hed vil ar c'hig, ez oc'h en em seotret korf hag ene ha kouezet ar flêriusa breinadurez !"

Mour a wech e oa bet klasket ober da Wenole tevel, met a vommo di-weze a zichadennas eur gounnar ruz e-touez an engroez. Eur rasailh spontus a savas a bep tu deñ hag e kredas e vije mainetat gant ar re d'ara. Hogen, habask

ha diseblant ouz ar c'hanoc'hennou, e kendalc'has gant neuz :

- Skeot em eus, hep mar, war an takad gwiridik, pa ne c'hell nep hini ac'hanoc'h dinac'h ma zomallou ! Holl ez oc'h kablus hag ho prasa eurved a zo ruihal e fank ar pec'hed, e hini ar pec'hed vil droist-holl, hep doujañs, zoken, da nemma ho pugaligoù.

"Distroit eta ouz Doue, rak pred bras eo ma ne vennit ket e vefe distrujet ar gêr-mañ. Diskouezet Deñ ho keuz hag ho klac'har, bevit hivi-ziken evel gwir kristenien hag ho pa E bardon digantañ. Ho pezit koun eus Mari-Madalen, unan eus ar brasa oriaodoz a zo bet biskozi, a gavas truge-rez Doue, pa ouelas gant morc'hed d'ho fad'ched ha pa c'hrezaas ren buhez santel a-doug ar paour eus he amzer.

"Klevet hoc'h eus eno eus Jonas, an diougmaer bet kaset gant an Aotrou da brezeg ar binijenn da gêr Niniv, ken disant ha ma'z eo bremañ hoc'h hini ouz E c'hoaz-hemennou. Jonas, gant eun rek Niniviz, a dac'has war al lestr a gerza d'ar Spagn ha, da c'houde, etlapet ez mor gant ar verdeidi, e voe lonket gant eur mall peak hag hen dalc'has en e gorf e-pad teir novez ha tri devez. Dislonket neuza war an not gant al lfn euzus, ne varc'hatas ket palloc'h da gas e gefridi da benn, oc'h embann da dud Niniv e vije disantret o c'hâr ma n'en em drojent ket ouz Doue ha ma ne rajent ket pinijenn. "C'hoaz tri devez," a lavare heñ, "ha kêr Niniv a vo distrujet !"

" Eval eur Jonas nevez, keodediz Iz, ez oa bet dilennet gant an Holl-C'halloudag da gemenn deoc'h n'oc'h eus ive nemet eur predadig berr da zilveskal ho faziou, da c'harmi Deñ ho klac'har d'Her beza poaniet ha da gemma ho puhezeged diruel. Anez ho kaso holl da get hag ar gêr ma'z oc'h ken lorc'hus ganti a vo skubet diwar c'horre an douar !"

Iziz a ziskordas da c'hoazzin ha da c'hoapeat hag e pugjont adarre gant o zalabno. "Ha penaos, war da veng, chaoker kof'chou born," e c'houlen-nas gant font unan bennak, "e c'hoarvezo an dismantr ?"

- Sellout gant evez ar paz a levrin ha ehanit da c'hadisa !" eme vouez Swenole o trec'hi war an tousmoc'h. "Koañvi a ray ar mor hag a lemna dreist bevonn e noz, o frouza koment tra, o pila ho tier, oc'h ho peuzi gweitibunan hag o lifva Iz dreist an uhala eus ho fraleziou hag he zourioù !"

- Ma teu ar mor, e vo pesked !" a skringent diskrodek.

- Ha c'houi," e silgerie an abad, "a dalvezo deo da voued founnus ! E-keit ha ma tispennit ho korfoù kuilh ha maget mat, e kouezo hoc'h eno e poull-tro an Aerouant, kalz dounoc'h eget ar mor !

" A-rack ma vo re zivezat, breudeur dihañchet, klevit, m'hoc'h aspad, mouez Doue o komz dre ma genou ! Eval Sodom ha Gomor, an diou gêr hudur meneget al levrion skir ha pulluc'het gant tap an Nefv, e finvezo Iz ive, met houmañ, avat, dindan an tarziou mor, hep ma chomo nep roud enei ! Pinijenn, pinijenn, eta, tud rouzeudik, goude beza, hep maz, treet kein d'ho

techoù fall !"

An engroez foukat a fuc'he, a yude ken gwas hag eur bagad kon direiz skourjezet gant eur mestr hemalc'hor d'o c'helenn ha d'o doñvaat. Mat, dis-pouren bepred, e talmas adarre alieu flemmus al lean :

- Dileoskit ar pec'hed ha grit pinienn gallet pe, a-rack tri devez, e vezoc'h milliget gant Doue, evel m'en deus milliget ar fallek ar arvit ar Priñs Ruz hag an Ahez-se, mestrez an Droukspered, a zo o sachu ganti ar gêr-mañ da goll !"

Gwall nozet e vije bet an abad, panevet e skiltres, d'an empoent, eur rummad trompilhioù o tiskenn gant ar strada. "Ar briñsez hag Aomilkar !" e gries an holl o vent mell-divell ha bunt-divunt war-zu ar varc'hekadenn a oa o tostaat, e-keit ha m'en em sale kuit Gwanole da gavout ar roue.

E-kreiz ar strokadennou drouez hag ar youc'hadennou laouen e karze Ahez, ar Priñs Ruz a-zhou dei, gant eun embrougadenn niverus a yaouankizou orbibus. Ar gwiskamafichou kaer hag ar bragerizou euz ha perlez a dralle daou-lagad an arvestourien estlamm gant ar gwel aus ar mirc'had skañv ha friñgus, harneziet ha dipret eus ar gwella, a zouge tud an ergerzadenn.

War benn merc'h Gralon a steredanne eur gurunenn voin brizius hag eur vantell hir liou d'en arc'h a ruze al lest anei war an douar diwar dailhar ha falafrez wenn. Aomilkar en he c'hichen, bepred gwisket a ruz, a skeda e zilhud muioc'h eget m'o dije graet re ar pinvidika impalaer. O-daou, mao ha drant, e vouc'hoarzent d'ar bohl hag e raent dei justrougou hagaxat, o vezout sklêr emedo a-du ganto a-enep Gralon ha Gwanole. Hag, er penn a-rack, e c'houeze ar sonerien o c'houeka toniou en o benñji aem.

A-barz Ahez hag ar priñs a-ball bzo, ec'h embannas eur marc'heger e vije digor holl davernioù kêr hag e rejent da Iziz, evit netra, kement ha ma karje ganto eua ha dibri eus ar gwella gwiniou hag ar saourusa mouziou. Dafset e vije, ouspenn, e-doug an deiz hag an noz ha sonerien e vije roet d'ar re o goulennje evit ren ar c'hozelloù. Digemoret e voe ar c'helou gant eur fouge nevez ha garmou a veuloudi hag e redas ar grugelled kêriz war-lerc'h ar varc'hekadenn o paouez mont e-biou. Ha, pell goude m'he devoe kuitat al leurgêr, e tassona c'hoaz anni an hekleo eus douzini he c'hricou : "Buhez hir da Ahez ha d'he c'haredig ! Eurvad ha levezad deo e-daou ! R'o gwalignp ti-mat e penn Iz !"

x

x x

Dihet a garf ha klavf a spered o an Gralon o c'hortoz distro e gile Gwanole. Ar prederioù tefval ha spontus, dalc'hmot oc'h e heskina, o devoe graet aneaf eur c'hoziad dinarz ha divenn. Digiget holl e oa, distroñket e zramm ha gwann-kann e bennad bled gwechall liou d'ar c'histin. Hag, evel re eur c'hantvleziad, e krene e zourarn hep ehan.

- Roue," eme an abad o tigouezout, "an tonkad kriz o god am eus kamennet d'az Iziz aheurtet, ma chomont bouzar ouz komz Doue. O dibab o deus graet oc'h ma c'hunuc'henni hag o c'haourdrouz ma laza. Gwa deo ha d'o c'hêr villiget a vo a-barz pell e strad ar mor !"

"N'ouzon ket eun pe da vare e c'hoarvezo ar roue, marteze hanoz pe arc'hoaz, pe c'hoaz, d'en diwezata, antroz ar c'hoaz. Gouzout 'ouzon, avat, e vo e-kreiz an noz goude m'en devo kamet ar c'hilhag evit ar wech kenta. Bez, eta, war evez ha, kerkent ha m'az pe klavet mouez skiltz roue ar yezad, lamm war da vare'h ha tec'h ! Ne vo ket pell an tarziou war-lerc'h seuliou da lôn !"

- Gwanole, den santel," a leñvas ar roue, "n'am loosk ket war da lerc'h ! Az pez truez ouzin hag, ive, ouz ma merc'h, ar groundurez paour ha kablus a vrez din ma c'helon ! Ma c'harantez a dad em dalc'h tomm outi bepred, daoust d'he drouk-anien ha d'he siou mantrus !"

- Gra kañv d'az kêr ha kañv d'az merc'h ! Perok e vefe houmañ disamm a gastiz p'he deus, dre he skouer diaoullek, pladet da bourgontammi ar geoded fall-vrudet ? Er mor don, tremenet ganti ar pred da gavout desk, e lonko dour evel eur pesk !

"Te, bez dieñkrez diwar da benn : ma a eñzo diarvar an eur hag ar pred ma tlein dirdek d'az skora ha d'az savetei. Ar jao an devoe digaset din da gannad am dougo d'am lann hag e tistroin gentaf kerkent ha ma vo ret."

Hag o sevel o zorn, e zons Gwanole e vennoz d'ar roue hag e kimmadas dioutañ.

x

x x

Ebata ha bragal o devoe graet Iziz a-had an deiz ha, diouz an abardaez, e oa trouz ha kann gant al lonkerien, an tavernioù ha war ar strêjoù, da vihana gant ar re aneo a c'helle o divosker o dougan. Darn, evet ganto dreist goñvor, a oa ruilhet d'an douar gant o c'hafed hag a roc'he evel mac'h hag o dije bet ouspenn o gwalc'h.

En tavarriou hag en tier a vuhez fall e skede ar gouleier hag e tregere sonerez ha kanaouennoù louz hag e save diouto boudinell mouezioù ar re a gemere enno o flijadur. Dindan al loar gann o sklêrijenna an noz gouyen, e oa koubladoù o vont eus eun ti fall-darempredet d'unan all, ar gour e vrac'h gantañ o starda gouzoug ar plac'h hag houmañ he hini ganti en dro da zargreiz he c'hile.

Goulou a bare e kement ti kaer hag e kement pelez hag hini Ahez, lec'hiet war an uhel hag aes da welout a-bell, e sklêrie dreist pep hini. Eno emedo ar gouel en e gaera hag ar gouvidi, war-lec'h eur goan eus ar c'houeka a fistilhe kenetrezo, dreo o savar, e-ser gortoz ma roje urz ar brifsez da zigori ar bal. Ahez hag Aomilkar, en em dennet en eur c'horn, a oa kuzulig ganto hag ar Priifs Ruz a lavare d'e vignez :

- Muia karet ma c'halon, ma c'haredig yoliz, tostaat a ra ar pred ma'z aimp hon daou ac'hann d'ar vro vuzudus a gomzis dit anei. Ha mennet out atao da zont genin da ranna an eürusted hep he far a vo du-ze hon hini ?

- Te a oar, emei, "ez out ma holl garantez hag ez on dit korf hag ene ! D'al lec'h ma'z i ez in ha netra ne vo gouest d'am disranna diouzit !"

He briata a eure hag oc'h he dere'hal ouz e gerc'henn :

- Brasat eurvad !" emeaf dei e pleg he skouarn, "dare eo ma lestr da sevel an eor ha da vont d'an donvor. Hogen sarret eo dor ar skluz hag e fazi din d'he digori an alc'houez acur a zoug da dad, an iatribilh ouz e c'houzoug, gant eur chedennig. Kê raktal da balez Gralon da gerc'hat an alc'houez-se hon diubo da viken !"

- Eun dra diass e vo hennez da gaout, kile karet, rak n'eo ket dre gaer e fizio ma zad e alc'houez ennon."

- Dre gaer pe dre hag e rank beza deomp, koulskoude !" a lavaras ar Priifs Ruz. "Taal dififiv da sell ouz ma hini hag, eus ma daoulagad, e tremeno ez re an nerz teogi a zo enno hag a lakay youl enebi ar roue da goueza !"

E zaoulagad, o tevi evel eur broud dir ruziet en tan, a dreuzas Ahez betek goueled he ene hag hi, neuze, da c'houez'hemenn d'ar sonerien pega gant ar c'hoari. Kerkent e vos leun ar sal gant melodi an talennoù hag ar c'hrouzicou hag, evel ar c'houbladoù all, e tereouas ar brifsez da goralli gant he Aomilkar.

P'emadod en nebeuta soñj, ez eas diwar wel da wiska eur vantell zu ha da c'holoji he fenn gant eur ouel teñval. Dre eun trespas dianav e tiskennas war ar straad hag he c'hammejou mibin he c'hassas betek palez he zad. D'ar gedour a oa e-tal an nor e roas da c'houzout piou e oa hag e vos laosket da vont tra. Dicustu e pignas d'an nec'h hag e tigoras didrouz dor kembr ar roue.

Gralon, fêzet gant ar skuizder hag an anken, gwisket penn, kil ha troad, a oa moredet war e wale. Eun hufvire poanius a heskine e apered ha, dre e gousk dibarfet, e tispac'he hag e klemme :

- Ahez, ma Ahezic kêz, ma holl vad war an douar-mañ," a gaine-hef, "ha gwir e c'hellfe beza afez ive da goll da heul an dervoud spouronus a zo

ez

war-nas c'hoarvezout ? O ! Doue madeleuzus, mirit-hi diouz ar maro, diouz ar mor a zirolo hag a veuzo ar gêr-mañ ! Ho pezit truz outi hag ouz ar c'hozied peour a zo ac'hann !"

Dorn ar brifsez o furchal an e grubuilh a eure deaf divorfala hag hef, skodeget ha spontet, da c'hami dei, oc'h he anevzout :

- Fetra ! glaskez, mez-he-gwelout, marc'h digalon, plac'h or-gedus ha brein ? Harz ! neer binimus ! Ne day ket an alc'houez-se ganit !

- Eo, hennez am bo, koziad," a c'houibanas-hi etre he dent, "pe da ler a

Hag e hejas, dirak dremm skoalfet he zad, eur c'hlefvig skafv he devoa tennet eus he brennid. Eval diou c'hlaouenn ruz e lintre he daoulagad hag hud o sell diviñs, o para war re he zad, a eure da C'hrolon semplo, divenn ha diyoul. Hag Ahez a zigoras an ilhedenn a grape ar chedennig hag a lemas ganti kuit an lac'houez a c'hoantae.

War ar straad e kejas gant eur gour yaouank o klask e chafis hag a vennas pega en he c'hazel d'he c'has gantañ. He c'hlefv a skedas neuze dindan bannou al loar hag e koezas ar gour a-c'houen e gain, tuezet e vrusk gant al laonenn didruet.

En em gavet en he falez, a roas an alc'houez acur d'ar Priifs Ruz hag hemañ, goude beza he zrugarekast :

- Bleunvenn flour ha frondus," emeaf, "ma gortoz-me eur predadig e-keit ha ma vin oc'h boza ar pez a zo ret evit hon treiz da vro an eürusted. Bremaik, pe vo dare pep tra o taun d'az kerc'hat hag e livirimp kenavo da viken da iz, e-lec'h ma ren koz leoned da dad !"

Hag heñ kuit, hep gouzout da zen all, endro ma kendalc'he hep ehan ar sonerez da strowa he melodi hag ar c'houbladoù dirollet da zañsal o c'horollou gadal. A neboudou, avat, hep m'o devoa merzet an defseñon all, e oa kozzet kileud Aomilkar ha ne chome er sal nemet Ahez hag he c'heneiled boez, ar paz a souezas ar re-mañ. Ar brifsez, o c'houzout o c'houzout o devoa heuliet o mestri, ne ziskoueze hep saboz ha ne levere ger.

Eur c'hanfart, koulskoude, diñzet gant ar wrez a oa er sal, a zigoras eur pranestr da avoli e bunn.

- O !" emeaf d'ar re a oa an tosta denañ, "n'emeaf mui lestr ar Priifs Ruz er porz ! Setu-hef, dindan ouel, o kerzout d'an donvor."

An holl a zillamas da sellout ouz ar mor sioul ha sen a lugerne dinden skleur al loar gann. Al lestr burzudus a oa o pellaet war-zu an drommel teñvalaet gant eur mell koabrenn zu o sevel an oabl sklêr. Eur skrijadenn drouezus a darzas : O ! an trubard milliget !" ha, fetet he diskaret gant pouez he c'halonad, e koezas Ahez d'an douar etre troid he c'houvidi.

x

Gralon, o tiseouzana, a gredas en devoa bet eur gwall-hufvra, mat, pa gasas e zorn d'e gerc'henn, e voe anat deaf a oa dianket e alc'houez aour. D'an ampoent e kanas ar c'hilhog hag e klevas an trouz a rae eur marc'h o tostaat d'an daoulamm war baveziou ar stroad. Neuze e teuas koun deaf eus diougan Gwenole ha, trubuilhet holl, e sailhas eus e wela.

Diwar dreuzou dor ar gambr, emedo an abad oc'h e c'helver : "Gralon ! Gralon !" a lavare, "buan war da varc'h ha kuit hep goueza muioc'h ! Digor eo dor ar skluz ha lifvet e vo kêr !" Ken buan ha ma c'helle o zieu c'har dinerzet e zougen, e radas ar roue koz d'ar marchosi ha, gant skoazell Gwenole, a pignas war e jao brezel a vire harneziet ha dipret abaoe m'emedo war gren eus ar gwall-zarvoud a oa da c'hoarvezout. Hag ez eas an daou d'an tuz, etremek dor bolla ar gooded, diouz tu ar reter.

E-keit-se e oa en em ledet, dra an neñv a-bez, ar goabrenn zu a stanke an dremmwel. Tefval sac'h e oa an amzer, an aval a yude hag, e-kreiz al luc'hed stank ha dallus a roge an oabl, e streke efkrezus ar gurun. A-daol trumm e tisac'has ar grizilh hag ar gloa hag avelicu spontus reverzi miz meur, o lakaat ar mor da goañvi hag oc'h e vunte diharz ouz an douar, a eure aneaf eur menez divent war vale. Dek gwach uheloc'h eget ar stankell vras o devoa savet tud Iz da herzel outañ, e tiskarns houmañ gant e douradenn genta, o launia ar porz en eur par bezz hag o veuzi an darn izela eus kêr. Hep skoilh all direzi, e tizas an eil touradenn mogerieu ar paleziou kaera, lec'hiet war an uhel koulskoude. Dalc'hmat oc'h uhelae en dour o sevel, gant tiz, en holl dier paeuzet enne kerkont dudi ar plijadureziou. Hag an dud, pignet war o zoennou, a selle, stravaget, ouz an dismantr meur. Darn a zeus efvor dao eus prezegenn Gwenole hag, o wea o daouarn d'an nac'h, a c'houlenne, a vouez uhel, trugarez an Aotrou. Dirazo, er gouerieu a rae ar straejou leun-tonn e ruilhe an tarziou korfaou maro, e-ser diskara an tier distera a goueza o mogerieu en dour gant eun trouz ankenius.

D'an tuz war o mirc'hed, an dour betek hanter o feder c'har, e skere Gralon ha Gwenole da dec'houit diouz an argoll. Keer o devoa difrea, e c'hou-neze warno ar mor ha, daoust da bromesa al lean, e viheneo fizisfe ar roue d'an em zirouestle diouz an arvor. Hep ehan, evalata, e pede Doue da lakaat diwez d'ar reuz drastus ha da espèrn an darn eus e gêr na oa ket bet c'hoaz aloubet gant ar mor.

Emedo, war-lerc'h Gwenole, o tremen dra eur stroad war zinaou a rede têr ha bras an dour enni, pa glevas eur vouez glac'harat oc'h e c'helver :
- Tad ! Tad !" emei, "ho pezit truez ouz ho marc'h ! Ma c'hemerit, me ho ped, war dailher ho marc'h !" Douz sked al loar, toullet ganti ar c'hou-moul, oc'h anavezas Gralon e varc'h. Betek he dargreiz emedo en dour ha, gant eon da voza stlepet gant ar gasenn, e talc'he peg en eur bonn maen sanket war ribl ar stroad. Hanter noaz e oa, he blec keer a-fuilh war he dremm hag

he diskoaz dizolo hag he dent a strake gant an anoued he devoa.

Trefust holl ha truezek, e garantez a dad o trec'hi war e gasoni, oc'h astennas Gralon e zorn da Ahez, hag e roas skor dei da bignat, a-dreñv e gain, war al lean. E vantell a doalas dei da waskodi he c'hozf glebet ha rivot hag e kentras e varc'h da skara a-nevez. Pellaet e oa an abad, di-c'houzvez eus ar pezh e oa chomet Gralon d'ober ha bec'h en devoa ar roue o vent d'e houll. Koulskoude har gwelas o kuitaat kêr dre unan eus he doriou bet laosket digor. Gant bec'h e tizas marc'h ar roue an nor-se rak bepred e kresko sae ar dour.

Er-mêz eus er gooded, gronnet a bep tu gant ar mor, e kavas Gralon an abad ouz e c'hedal. "Picu a zo ganit war dailher da lân ?" a atarsas hemañ. Hep respont, a troas ar roue penn e varc'h etremek an douar hag ar peverzroadeg, hep boza hiset, a glaskas en em ziframa diouz ar mor o virvi.

- Gralon ! Gralon !" a hopas Gwenole, oc'h anavezout Ahez, "taol an dinoul-se ar mor pe o chomimp ganti a-barz !" Hogen bouzar he mut e oa ar c'hoziad hag e kentze gwasoc'h-gwasa e jao war-zu an douar distrob eus an tonnou. Met en aner e oa rak, seul vui e kerze e varc'h, seul vui ive e lede ar mor e dachenn, o c'hourdrouz lonka tud ha lâned.

- Eur wech c'hoaz, roue !" a c'harmas al lean, "taol, en an' Doue, mestrez an Aerouant diouzit pe ez eo graet ganeomp !"

- Az pezh truez outi !" a gellas an tad kêz. "Ma marc'h eo ha n'on ket gouest d'ha bouzi !"

Tostaet e oa ar eant ha, gant eun taol eus e gammel, o tiskarns en tarziou ar bec'herez villiget. En eur goueza e laoskas eur skrijodenn euzus hag eur c'hoariz ifern a skiltres a-uc'h d'an dour, o sklase an daou zeb betek mel o eskern. Ha, raktal, e harzas ar mor da gerzout ha da c'holoi pelloc'h an dour.

Aesnet d'ar mirc'hed, e sailhont, nebeud amzer goude, war c'hou-nidou atil, gwerc'h eus ar strabouilh meur a c'houledeo kêr-Iz. Fromet ha dilever e troas Gwenole penn e jao war-zu Landevenneg hag hini Gralon hen haulias sentus. Ken fêz ha ken gleb e eant hag an daou varc'hoger gant o striv kalat ouz an tonnou hag ez eant war-raok a-zoug kammed. Ken bras e oa mentridigez ar roue, ma chome simudet ha saouzenet gant pouez an dizeur hen skea didrugar. Izal e benn hag ast dioutañ pep eflenn narz-kalon, e ouele dourak, hep goulenn war be du har c'hase e gavandad.

Tavet e oa ar barrad amzer ha digoc'henn e oa an oabl, skorzet dioutañ ar c'hoabrennou tefval ha puret al loar a-nevez. Diouz ar reter emedo an deiz o tarza ha broud an aval vintin e rae d'an daou c'hour ha d'o mirc'hed, gleb bepred, krene gant an anoued.

En em gavout a rajont war lein Manoz C'houm hag, andre me strinke an heol e vannou kenta a-dreñv o c'heñ, e wela Gralon ha Gwenole dirazo, er vantrenn, ar mor mac'hom en devoa lonket Iz. Eus al lec'h m'emedo kent

ar geoded lorc'hus, e save c'hoaz, a-uc'h d'an dour, eun douribell beget lemm, ar pez e chome hepken eus palez Ahez. Hogen birvilh e oa atao gant ar mor hag eun tarz diweza her goloas da vikan.

Diskordet e oa ar roue da sklankat ha, frailhet e galen, ac'h hirvoude klammus. Kinnig a eure simpla dindan samm e c'hlae'har. Harzet e voe da goueza gant an abad, esmaat e-unan gant ar walenn dinatur a skoe ken digar ar prifs rouzeudi.

- D'an daoulin. Gralon," emeñ, "da drugarekast Doue d'her beza saveteet, rak, hep E warez santel, e vijomp bet heuzet ive hep mar !"
- Bremañ, p'ea eus kollet ma merc'h ha ma c'hêr-benn," a vilgerias ar roue, an alvaon warnañ bepred, "e vije kerkoulz pe walloe'ha din beza chomet da vouzi e-kreiz dismantrou Iz. O kastiza ma merc'h ha ma c'hêr-benn, en deus mennet Doue ma c'hastiza ive an abag d'ar vuonegez ha d'al lorc'h e vagen ennon. Diskaret en deus ma golloud ha setu ma'z on, hep ti nag oz ha paouroc'h eget ar paouza eus ma sujidi."

- Na vez ket chalet gant an diouer a lajeiz hag a voued," a lavaras Gwenole. "Em lann e kavi digemer hagarat hag ar frealz kristen ac'h eus ezomm da c'houzañv gant habasketed ha da beureber da dreiz ar bed-mañ a-boriz en em gavout e porz an Nefvou.

" Savonet eo barnedigez Doue ha rouantelez Kerne, war-lorc'h distruj Iz, an hesked euzus-se hag he breina gant he gervenn flêrius, a vleunio kae-roc'h eget biskoaz ar feiz hag e lezenn ar C'hrist. Trugareka an Aotrou, eta, ha, hep grozmel na kerse anez, pleg da benn ha digemer E setafs !"

- Allas ! leon santel, n'eo ket warnon hepken e truezan. Petra e teuy da veza ennon ma merc'h ha ma sujidi tremenet eus e vao da vao, sammet a dorfejou hag a bec'hejou hudur, hep beza bet amzer da c'houlenn pardon hon Dasprener ?"

- Bras eo gras Doue ha divent E drugeroz !" a lavaras Gwenole, "ha netra n'hor aotre da gredi eo bet deonet holl bec'heziou ar gêr villiget. Eun euflennig glae'har gwirion a vez a-walc'h da salvi ar fellekro ha da roi tu deñf da gavout an eürusted paourbadus."

O-daou e taoulinjont neuze hag, e-pad pell, o savas o fedonno birvidik war-zu an Hini a ran an douar hag ar mor. Ha da c'houds, a-nevez war varc'h, e taoljont eur sell diweza ouz bez ar geoded lifvet hag e kerzjont adarre davet lann an abad.

Ugentvet pennad

Gorenat e oa da vikan, e spored Gralon, an efvor strafuilhus eus lifvedenn Ker-Iz. An euz a vroude dibaousz ha marse kan, e-pad ar pourrest eus e vuhez, ne c'hallas boza seder, ken gwasket e oa bet gant tool ar gwall-zarvoud.

Kollet gantañ e skiant-vot, e-pad meur a zizunvez, e kantroa dra lann an abad Gwenole, skornet e deot ha displeberet e zromm. A-wachou, koulskoude, leñv ha kairvan gantañ, e chome motet al legell leon en devoa da annez. Nac'h dibri hag eoa a rae hag emedo e vont gant an disvoued, ken digig e eskern hag eur relegenn.

A-nebeudou, evelato, dindan levezon Gwenole, e skefvaas e zispi hag a rec'h ken deannus. Kenta tra a eure p'ea devoa adkavet e skiant, a voe lakeat savet, war duchenn Run Mengol, eun iliz en oner da Vann Doue, d'he zrugarekast d'her beza skoret en drouziwez hag euit ma vije dalc'het koun, a-hed ar c'hantvejou, eus ar gentel spourous roet d'ar badiz gant an Aotrou pa zistrujas Iz. Kouezet hag adsavet meur a wach abao, e weler c'hoaz, hirio an doiz, iliz kour Intron Varia Rumengol darempredet bep bloaz, da gaeñver ar pardon, gant Brutoned niverus chomet foal da feiz o zoudou.

Evitañ da ran, e Landevanneg, buhez kalat ar venec'h, an devoa mirut Gralon e vali a roue war Vro-Gerne evel diingant. Hogen darn eus ar velli-se e fizias a Kaourintin, an askop o chom e Kemper ha, ken a ze, a-sec'h deñf eget d'ar roue ploustri gant merorez ha kudonno an toled. Bep eur mare ac'h en em walent euit brasa mad ar rouantelez, neuze sioul o vevs ha peure'hounezet a-bez d'ar ruzijon kristen gant strivou Kaourintin ha Gwenole ha re ar veleien ha leoned savet, gant ar c'hente, e Lezkobed ha, gant an eil, e Landevanneg. Dre e guzuliou fur ha poellek hag e oberiantiz hep par, e kenlebouras ive an abad da zinzaza ar peoc'h, ar gengarentez hag an eürusted e-touez en dud a boble ar c'horned dour porc'hannet gant Gralon hag a zeues, da c'houds, da voza unan eus gwella darnou Arvorig a yeas da framme rouantelez Breiz-Vihan.

Ar geora mouloudi a voe graet biskoaz gant an tri den meur a gavomp e Buhez Sant Wenole, savet e gwerzennou latin gant Gourdistin, unan eus war-lerc'hidi kenta abad Landevenneg : "Na splann," a lavar ar barz istorour, "e skede leinou Kerne gant ar skod eus a deir sklerijenn, pa oa dalc'het ar reñk kenta er vre gant an tri gour meur, Gralon, Kaourintin ha Gwanole !

Evit e lod en devoa Gralon an holl veli ha galleud war e dachunn ha, gant furnez, e plede da ren ar mzeiou ha riblou er mor.

Kaourintin, eus an derez uhel m'edo ennañ hag eus ar splannder m'hez gronna gwad sakr ar C'hrist, a dorre sec'had ar bobl o rei dei evaj priziuz er feiz; en abeg d'e spered prederiet bepred gant traoù an Nefvou, e tellezas beza sellat evel ar brasa eus ar re a arvestas biskoaz ouz kevrin an Doueelezh; rak, en em c'uestlet don hag a-zavri d'ar studi santel-se ha da vuhez kalet al leoned penedour, e veza ret deñf klavout klammou an ilizou evit en em denna eus an digenvez, sketus hag oberiant, e plede neuze gant e ezommu; d'ar bobl e tigase peoc'h divrall hag e tistroe, goude, d'ar vuhez ma veze en em ziframmet diouti.

Evit Gwanole, an illura aneo, e oberiantiz varzus ha brud dispar e vertuziou a lakae anatoe'h-anata er parz gwirion en devoa da veza galvet tad ar venec'h."

Hogen, er pemp kent tregontvet bloavezh goude ginivelezh Hor Salver, e varve Gralon, e peoc'h an Aotrou, etre divrec'h Gwanole, e gile santel. Beziat e voe e Landevenneg, met, pell da c'houde, pa darzse Reveulzi 1789, e tismantres an dispac'herien ar bez hag iliz ar venec'h, savet tost deñf, kement-se dre gasoni ouz an ano a roue hag ar feiz kristen a villigent. Hep an distera azaouez, dinac'h-kaez e vijent krignet gant ar c'hon, e laoskjont relegou an den meur da strana du-mañ ha du-hont, hag e strinkjont d'ar pedez avel al ludu e oa kouezet eus e eskern.

Er bloaz 932, e-kreiz gouelvan e leoned, e oa tro an nbad da guiteat an douar evit aarusted an Nefvou, ar vro genedus-se a c'hoantae tizout gant kement a vall abaoe ma oa en em roet da Zoue.

Trumm a-walc'h da c'houde, war a greder, rak n'eo ket anat ar bloaz ma tremenas, ez eus Kaourintin davet Gralon ha Gwanole, da dafva ganto al le-venez peurbodus a vir an Aotrou Krist d'ar re o devez ha dallozet. Hag hirio an deiz, en derez uhel er Baradoz, e talc'h ive ar rank kenta en e eskopti pa'z eo heñ ar paeron aneñ, leun e gloc bepred ha karet draist gant gourvu-gale ar Gerneviz koz a vleinas war hent ar silvidigez.

Kouzin ha goude c'houare a eure an holl e Kerne d'an tri gour soue-zus a anvent Tadou ar Vro; da C'hralon, ar roue dispont o diframmas diouz krabanou ar Saizon hag a gavus deo eur vro nevez da berc'henna, gant Gwanole, an abad helevaz, leun e elevez hag antanet gant ar youl da astenn bepred har-zou rouantelezh Doue; ha Kaourintin, an tad madelezes, truezek ouz pep rouzeu-digez hag eur gwir biled lugernus aneñ, anaouet gant dozn an Aotrou da skle-

rijenna o zreiz d'E vugale er bed-mañ.

An tri maro-se, hep kloza marevez disozidigez Breiziz tramor e Kornog Arvorig ha prezegerez an Avial en tolead-se, e diefe lakaat di-wez d'an danevell a re danvez al leor-mañ. Na vefe ket houmañ, koulekoude, na klok na resis ma ne gavfod ket anni distro Ronan da Goad an Neved, war-lerc'h e varo. Ma na c'hell ket ar penedour beza kafferist gant an tri sklerijenn a veneg Gourdistin, e voe, hep mar, ar fulenn a untannes ar c'hralonou hag an eneo gant flamm ar wirionez er c'hornad-se eus ar Por-zoed ma eure ennañ e ennez. Diannaoudek e vefemp e-kefver unan eus hor brasa sent a gaver bremañ c'hoaz e zoudou er barrez a zoug e ano e Kerne, ma tavfemp war ar burzudou a c'hoarvezas kerent ha ma voe laosket gantañ e huanad diweza.

Setu perak e kendalc'himp gant hon istor ezalek ar mare ma tec'has diouz e beniti betek m'en am gavas e gorf adarre al lec'h m'en devoa, er penn kenta eus hon danevell, renet eur vuhez a binijann ha prezegat komz Doue d'ar geiz.

x

x

x

Gwelaet hon eus uhaloc'h ar viloniou hegas a eure Keben da noa-zout ouz Ronan ha penaos o pardenas al leon santel ha fallagriez d'ar vaouez divez. Daoust da ze ne davas ket he c'hasoni outañ hag, hiset gant an droukspored, e ploustras he zaot hudur d'e saotra o skigna gwall-vrud aneñ. Gant ar menoz da zistaga he fried diouz ar penedour ha da enoui e warizi outañ, e lavezas an doa gnat Ronan, ar skouer e c'hlanded-se, ar pec'had vil ganti. Na voe ket ar sant evit gouzav an tontad binibus hag e laoskas e beniti karet evit mont da glask eul lec'h sioulloc'h da vevs.

E gammedou har c'hasas, goude eun hir a valandenn, da gornod Hillion a ze bremañ e eskopti Sant Grieg. Eno, en aul lec'h hag a zoug e ano abaoe, e kavas eur c'houer madelezes da rei deñf bod ha boued. E skora a eure ive da sevel en tibidi ma tremenas ennañ al leon e holl amzer o pedi, o yuni hag oc'h ober pinijenn. Ar penedour o vadezas eur mabig nevez-ganet d'ar c'houer hag hemañ, en em staget evel eur gwir vreur ouz an den santel, o zalc'has deñf bepred padra da zibri. Ha Ronan, eta, a vave d'uzus he sa-der, e-tal ti-soul ar gonidog mat, e gile nevez.

Eun deiz, e-raok tarz ar sklerijenn, e kavas ar c'houer al leon astennet war eun tamm plouz an e logell, yon sklas e gorf ha reudet gant ar maro. Glac'haret bras e oa da veza kallet an hini a gare ha doaniet, droist-holl ouspenn gant ar soñj e toujed da gerc'hat e golan da gas da enoxi d'eul lec'h dallozek da zigemerout eur seurt tafnoz. E gwirionez, ken anavezet e oa santalez Ronan ma ouie, hep mar, na laoskjed ket gantañ ar relagunn brizius. Ha setu ma tiwasas eur manez iskis ha santel an e spered hag heñ da droc'ha ha da semma kuit unan eus divrec'h ar penedour tremenet.

Distroet d'e wale gant brec'h ar sant, e tihunas a-daol trumm hag o skrijal gant eun droug eus ar c'hriasa. Eur vrec'h deñf e-unan, disrannet dioutañ dre an hevelap takad m'en devoa trec'het hini Ronan a gavas en e gichen.

Spontet gant a griadennou, e sailhas tud an ti eus o gwaleou da zont war e dro, e-keit ha ma tisede ive devetañ an amezaien dosta, enkrezet gant e glemmou strañuilhus. Bepred o tiwaske ponn, oc'h anzavas oute ar pez en devoa graet. Hag eur c'hoziad, neuze, d' alia da vont betek logell Ronan gant brec'h ar sant hag e hini distag.

- Brec'h al leon," emeñ, "e lakañ gant da hini, e-kichen ar c'horf, dindan al lifseer a vo taolet warnañ. Moarvat ez ay an ezal oc'h eus laeret d'en em staga ouz skoaz al leon santel ha marteze, dre d'uez ouzit, e ray hemañ an hevelap burzud ez kufver."

Holl ez ajont d'al logell hag e voe graet hervez kuzul an den koz. Hag int-i da badi a greiz kalon ha da c'houlenn ouz an hini maro ma vije trugarezus a-walc'h da zinamma ar c'houer burrhoallek. Dioustu ez ens brec'h ar penedour da spega ouz al lec'h ma oa bet disrannet, hep ma chomas nep roud eus an trec'h. Endra ma pede an dud an dro d'ar c'helan, e teuas ar c'housked d'ar c'hauer kablus ha setu ma c'hoarvezas ar burzud a c'hortozed. Anañ e-unan e oa setu an ezal divuhez, ken yac'h ha biskoaz, d'en em staga ouz al lec'h m'omado kent.

Estlammet e oa an testou hag ar vrud eus an darvoud marzus a nijas raktal ar vro. A bep tu a tisedas d'al logell baour bagadou niverus a dud da gehelia ar sant, ganto uhelidi vrasa an talend, prederiet o klask gouzout e pe lec'h e vije douezet e gorf. Evit mirout o savje tabut diwar-benn ar gudenn-se, e lavaras deo eur c'hoziad e lakañ e-barz eur c'harr stlejet gant dou ejan e vije laosket da vont divleñ gant o hent. E-lec'h ma chomjunt harzet e vije anat e c'hoantao Ronan beza bezist ano.

Selaouet e voe hag an uhelidi a begas ar c'horf d'e semma ar c'harr. En aner eo e rajont bac'h; set e oa ar c'helan ken pouner hag eun dolzennad ploum. Met eur yaril a Vro-Gerne, kallet gantañ eur vrec'h ar brezel, a dostaas d'e dro ha, ken es ha tra, hen dibzadas diwar an douar hag hen dougas d'ar c'harr, o tiskouez, aval-se, darn eus ar poz e venne ar sant. Neuze, sebezet mik, oc'h adkavas ar yaril e vrec'h kallet.

D'en ampoant-se eo e kerzas an ajanned gant o c'harr, eun en-groez souezus a dud war o lerc'h, hag, e-pad pall, e tale'hjont da vale. P'en em gavjont e Toull-Balan, tost da Goad an Naved, e-lec'h m'en devoa Ronan dazorc'het m'erc'h Keben, e rajont eun harr hag e tinea'hjont mont pelloc'h. Kerker oc'h oure ar yaril dinammet donezon d'ar sant eus an dachennad douar an em astenna oc'hano betek al lec'h m'en devoa bet ar penedour e dibidi gwec'hall, hag ez eas adarre an douar l'ñ-korn war-raok. War ribl eur poull-kanna omado Keben oc'h ober kouez da wener, hep doujañs ouz gwad an Aotrou Krist, rak, an holl her goar :

Pa raer kouez da wener
E gwad Her Salver.

O veiza e oa degouezet ar vro kozh an hini a gumera evit ha gwas enebour, e tilemmas ar felladenn gant ha galvaz hag, o skoi, e torras, gant eun taol anei, eur c'horn da unan eus an douar aneval. Na chomas ket digastiz he fac'hed, rak, kerker, oc'h en em faoutas an douar hag e voe lonket Keben gantañ, e-kreiz ar flammou hir e save dioutañ. En takad-se, anvet Bez Keben, e c'heller gwelout hirio eur groaz ven na dileer ket saludi. War lein ar menez e kouezas ar c'horn torret d'an douar hag, abaoe, eo galvet al lec'h-se Plas ar C'horn. Ac'hano e ken-dalc'hes ar c'haleou betek tibidi koz Ronan hag ano e voe lakaet ar c'horf da veza enoret gant ar gristenien.

Ha setu danevellet an diverra eus an darvoudou marzus a c'hoarvezas gant ar sant galleoudus goude ar maro ma kuitas Koad an Naved ha war-lerc'h a varo. Abaoe oc'h astenn e warez war ar Porzoed a-bez hag e iliz kaer, savet pall bras 'zo gant hon tud koz, a zo divrall bepred en he sae, pedal e kresek ar bezin war zimentrou Iz, ar gêr villiget.

Ha n'emañ ket aze an arouez eus youl Doue a eure d'ar faiz bleu-nie e Breiz e-keit ha ma skerzas diouti tafvalijenn an Droukpered ?

x

x x

" Hag Ahoz, ar brifseer argedus ?" a c'houlenno lannerien 'zo, "ha beuzet e voe pe na voe ket, pe lavaret he c'havar a-wec'hou o tarab-predi pleg-mar Douarnenez ha froud an Hirvez ?

Setu eun dra ha ne oar den resis a-walc'h. Ar poz a zo anat eo o deus he gwelst tud poellek, ha n'eo ket brabafsorien, o kantreal dindan stumm eur vorblac'h, e-kreiz tonnou direllet ar gwasa barradou emzer.

Hegen hag ez-voe, miret ganti he neuz gwirion betek he dargreiz, e vez o tamenti er mor d'he gwall-vuhez ha d'an draog a euz war an douar, pe ne deo ar waledigez anei nemet he spes stummet evel eur valaganez kenudus, hanter-maouez hag hanter-pesk ? N'her gouezfemp lavarout.

Gwechall, p'he spuzmantad o noui etre daou zour pe o sevel he funn a-uc'h d'ar gwagennou, o save spont o kerc'hann ar verdoidi hag o raent tiz, par ma c'hellent, da zistroi d'an ast. Diougan da gerventennou drastus a veze keja gant en hini a arved Mari-Morgan, war-c'had bapred da broize korfou maro da gas ganti d'ar strad, pe n'he devoe ken nap likour war he zro.

En amzer-vremañ eo ast diskredik ar vernerien hag o raent gwap pe fae pe vez ano eus Ahez, ar poz na vir ket ouz o bagou hag o listri da c'houladi lies gwech, evel gwechall, daoust deo da veza rozet hag ijinat sazeus da daleut ouz narz ha draugioz ar mor. Ha da be lec'h ez e neuze ar c'horfou maro na vezont ket kavet ? Gant eur c'hoziad em eus klevet e vezont dastumet gant Ahez, ar vorblac'h, da c'harren etre mageriou dismantret he falez, da c'hertoz dazore'hidigez Iz a vefe tenket da adveva.

Mourvat, n'eus den, e-touez Bretoned yaouank hen amzer-ni, o vega kredonn er vojenn-se, met gouzout 'euzomp ervat ez eo niverus ar re aneo a bleustr gant dazore'hidigez haz bre gez, ar poz a hetomp a wir galon, rak Breiz, a-drugarez Doue, a zo bupred eun dra fetis, gwirion ha bee, ha nann danvez eur vojenn mat hepken d'o didui evel hini Iz, ar gêr villiget, kousket e danderiou mor glas Douarnenez.

D I V E Z

Peurechust d'an 28 a viz Mourz 1962

D I V A N K A D U R I O U

Pajenn 5,	linenn 17,	e-lec'h	: <u>annon</u>	lennit:	<u>anner.</u>
"	6,	linenn ziweza,	lamit	: ar ger diweza :	<u>ar</u>
"	7,	"	38, e-lec'h	: <u>ampuskrih</u>	lennit: <u>ampustuilh</u>
"	7,	"	43, "	: <u>anavezet</u>	" : <u>anaveze</u>
"	9,	"	10, "	: <u>re</u>	" : <u>rez</u>
"	11,	"	27, "	: <u>pe</u>	" : <u>pe</u>
"	11,	"	43, "	: <u>santell</u>	" : <u>santel</u>
"	12,	"	11, "	: <u>koc'had</u>	" : <u>koc'had</u>
"	13,	"	8, "	: <u>Gralo</u>	" : <u>Gralon</u>
"	14,	"	15, "	: <u>sivogei</u>	" : <u>sivogedi</u>
"	17,	"	9, "	: <u>daou</u>	" : <u>dadou</u>
"	21,	"	18, "	: <u>kendalc'has</u>	" : <u>kendalc'has</u>
"	23,	"	36, "	: <u>mein</u>	" : <u>lein</u>
"	25,	"	30,	lamit an tisedig hag a zo er penn kenta.	
				Ar manac'h eo a gomz.	
"	29,	"	28,	lakait eur virgulenn hepken war-lerc'h :	<u>sent</u>
"	32,	"	31,	e-lec'h	: <u>lakeas</u> lennit : <u>lakeas</u>
"	33,	"	26,	"	: <u>ma hogje</u> " : <u>ma n'o hogje</u>
"	36,	"	27,	"	: <u>ab alouberien</u> " : <u>an alouberien</u>
"	37,	"	13,	ger diweza al linennad a zo :	<u>da</u>
"	44,	"	16,	e-lec'h	: <u>vennit</u> lennit : <u>vennit</u>
"	55,	"	30,	"	: <u>d' vignoned</u> " : <u>d'a vignoned</u>
"	57,	"	1,	"	: <u>serri</u> " : <u>terri</u>
"	60,	"	7,	"	: <u>santas</u> " : <u>santel</u>
"	71,	"	32,	"	: <u>Teure</u> " : <u>Tevel</u>
"	85,	"	15,	"	: <u>ha</u> , lakait eur virgulenn
"	88,	"	30,	"	: <u>spredl</u> lennit : <u>spredel</u>
"	89,	"	15,	"	: <u>kerjont</u> " : <u>kersjont</u>
"	89,	"	27,	"	: <u>Similan</u> " : <u>Similian</u>
"	91,	"	26,	lennit	: <u>vogerioù ar goeded da gemenn...</u>
"	92,	"	9,	e-lec'h	: <u>streva</u> lennit : <u>streva</u>
"	100,	"	23,	"	: <u>da vab</u> " : <u>daou vab</u>

Pajenn	100,	linenn	28,	e-lec'h	:	<u>gaouarou</u>	lennit:	<u>gaouarou</u>
"	102,	"	19,	"	:	<u>anavezaa</u>	"	<u>anavezas</u>
"	105,	"	7,	"	:	<u>a-barz</u>	"	<u>e-barz</u>
"	106,	"	19,	lennit	:	<u>evelatoc</u> , da anzav n'az...		
"	110,	"	38,	e-lec'h	:	<u>lanje</u>	lennit:	<u>lanje</u>
"	111,	"	29,	"	:	<u>c'houlenn</u>	"	<u>c'houlennan</u>
"	112,	"	9,	"	:	<u>Pa vezoc'h</u>	"	<u>Ra vezoc'h</u>
"	112,	"	21,	"	:	<u>n'oa ket bet</u>	"	<u>n'on ket bet</u>
"	116,	"	14,	"	:	<u>c'hortoz</u>	"	<u>c'hortoz</u>
"	118,	"	24,	"	:	<u>daoulad</u>	"	<u>daoulagad</u>
"	121,	"	34,	"	:	<u>diouaz</u>	"	<u>siouaz</u>
"	131,	"	6,	"	:	<u>e digemeret</u>	"	<u>he digemeret</u>
"	131,	"	7,	"	:	<u>gristebez</u>	"	<u>gristenez</u>
"	131,	"	21,	"	:	<u>c'heneiled</u>	"	<u>c'heneilezed</u>
"	132,	"	8,	"	:	<u>e ouenn</u>	"	<u>e ouenn</u>
"	132,	"	11,	"	:	<u>dic'hourvez</u>	"	<u>dic'hourvez</u>
"	133,	"	33,	"	:	<u>koantez</u> , <u>goantez</u>	"	<u>koantiz</u> , <u>goantiz</u>
"	136,	"	8,	"	:	<u>evit me</u>	"	<u>evit ma</u>
"	137,	"	6,	"	:	<u>ha hirvoudi</u>	"	<u>da hirvoudi</u>
"	137,	"	28,	"	:	<u>Izis</u>	"	<u>Izis</u>
"	144,	"	8,	lennit	:	<u>Kle</u> e dibenn al linennad		
"	149,	"	2,	e-lec'h	:	<u>Livadenn</u>	lennit:	<u>Livadenn</u>
"	153,	"	11,	"	:	<u>peurrest</u>	"	<u>peurrest</u>
"	155,	"	24,	"	:	<u>ouzo</u>	"	<u>ouezo</u>
"	156,	"	ziweza	"	:	<u>beza afez</u>	"	<u>beza ez afez</u>
"	158,	"	38,	"	:	<u>Ouz sked</u>	"	<u>Ouz sked</u>
"	159,	"	34,	"	:	<u>enflenn</u>	"	<u>euflenn</u>
"	160,	"	4,	"	:	<u>farilhet</u>	"	<u>frailhet</u>
"	165,	"	11,	"	:	<u>E wad</u>	"	<u>E wad</u>

GERIAOUEG

AGROAZ	:	roz-ki, e galleg : églantine.
AMENI	:	Ameni a reas d'an droug : torri a reas d'e nerz.
AMPUSTUILH	:	divarrek da fiñval.
ANDUITILH	:	kriadenn ar geiz pa veze stlapet arc'hant deo da geñver eur gouel.
ANTRED	:	onguent, e galleg.
BASTA	:	roi pourvez.
BLEUKAD	:	taol roet gant an dorn sarret.
BRONNDU	:	e galleg : meurtri.
BROUST	:	an hini a zebr n'eus forz peseurt boued.
BUGA	:	moustra, gwaska, mac'ha.
KAFUNA	:	goloï an tan.
KERREIZ	:	strollad soudarded o tiwall an urz-vat e kêr.
KERZIN	:	e galleg : alises. Plant a gaver er c'hoajou, frouez ruz deo.
KIVIOUL	:	diviñs, drouk.
KLAQUIER	:	e galleg : carquois.
KLEUK	:	neuziet dister.
KODIANA	gant unan bennak :	anzav beza trec'het gantañ.
KOLOR	:	kraoñ douar.
KORBEZEN	:	e galleg : éparvins.
KOTOU	:	(an taol-mouez war ar silabenn diweza) : mestaolion.
KOUCH	:	strollad tud o labourat a-gevret.
KRUG	:	kaouad kounnar.
KULVENNOU	:	abrantou.
DAMANIA	:	ameni, kuñvaat.
DIANTEK	:	dinoaz.
DIGOUVI	:	roi an digouvi da unan bennak : kas aneañ kuit.
DIRANVET	:	e galleg : érodé.
DISAOUZAN	:	renseignement, e galleg.

DISKURLU : difurm, neuziet gros ha divalo.
 DISLANĜOUR : lontek.
 DIVIÑS : drouk
 EURVAR : aet d'an eurvar : skuiz-divi.
 EVERIANS : e galleg : apparence.
 FLAÑCHET : digor war an tu a-raok, e-giz eur roched.
 FLAO : na oar ket derc'hel war e deot.
 FLESTRENN : plac'h skañv.
 FLIÑOUIA : flipa
 FLOKENN : garenn eur bragou.
 FOUSTI : ti gisti.
 GANUZI : gwallgas eul lôn.
 GARDIS : hardis.
 GAREDON : gopr.
 GIBIN : lann-gibin., lann gouez.
 GOÑVOR : dreist-goñvor : dreist-penn, kalz meurbet.
 GORVENN : lin-trein.
 GOUBET d'eun dra bennak : c'heantik, tuet d'hen ober.
 COURVENNEK : techet da zerc'hel drougiez.
 GOUZEZA : dalea, ampella.
 GRETEILH : douar greteilh.
 GWENAER : e galleg, veneur.
 CHAFOULAT : komez kalz ha lijer diwar-benn kalz traou.
 CHEGENN : ober chegenn, dibri meuzioù eus an dibab.
 CHOULAS : gwidreüs, pilpous ha neuziet nec'hik war eun dro.
 CHOURIK : e galleg, capuchon. Kabell kougoulek.
 CHUGUDI : kaout anoued.
 JAKON : sac vailhek houarn.
 LANDOURC'HENN : gast.
 HILASTRENN : eur skourjez meur a lerenn outi.
 MOTET : difiñv
 MULOCHENN : aezenn o sevel a-uo'h d'eur ster.
 OGET : skuiz-divi, aet d'an eurvar.
 PANEZ MOC'H : louzeier korsennek a greek uhel er prajeier ; panez gouez.
 PERZA : perza a ra ar gwad : treuzi a ra ar c'hroc'hen.

PUKA : dent da goaza ; e galleg, s'affaisser.
 RASALLHAT : huchal têt ha gant droug war unan bennak.
 RUKAN, RUKAGN : douar meinek ha sec'h.
 SKIBER : lab; e galleg : apprentis.
 SKODEGET : bamet ha sourprenet war eun dro.
 STOC'H : eun dra bennak o stoc'ha, da lavarout eo, o stanka,
 o stouva.
 STRAVAGET : spontet meurbet.
 TINELL : ober tinell vat = ober chegenn.
 TINĀVET : stanket gant eur stoc'hadenn pe ar verr-anal.
 TRELONK : per trelonk : per a laka da daga.
 TREUZELLA : treuzella an dent : e galleg, agacer les dents.

Liesskrivet e ti Herve ar MEE
32, Plasenn al Lisoù
R O A Z H O N

